

AVIEL JEZUZ-KRIST

Hervez

S. Vaze

S. Mark

S. Lukaz

S. Yann

Troet e brezoneg
gand « Kenvreuriez ar brezoneg »
Eskopti Kemper ha Leon

Embannet gand « Ar Skol dre Lizer »

Tous droits de traduction, de reproduction
et d'adaptation réservés pour tous les pays.
Copyright Ar Skol dre Lizer.

ar MOR
KREIZ-DOUAR



GALILEE

LENN
JENEZARED

SAMARIA

AN
DEG-KER

JUDEA

JERUZALEM

AR MOR MARO

an
DOUAR ZANTEL

Sezarea
a 'Filip

Korazein
Kafarnaom
Jenezared

Kana
Nazared

Tiberiad
Menez
Tabor

Sezarea
a Balestin

Samaria

Menez
Garizim

Joppe

Arimati

Jeriko

Emmauz

Ain-Karem

Betleem

Hebron

Betani

Nihil obstat
Saint-Pol-de-Léon 15 Juin 1982
Pierre Guichou
Curé-archiprêtre.

Imprimatur
Quimper 10 Juillet 1982
+ Francis Barbu
Évêque de Quimper et de Léon

War argolo:
Iliz ha kalvar
Gwimilio

Skeudennou:
Jos Le Doaré, Kastellin

AVIEL JEZUZ-KRIST

Hervez S. Vaze
S. Mark
S. Lukaz
S. Yann

Troet e brezoneg
gand «Kenvreuriez ar brezoneg»
Eskopti Kemper ha Leon

Embannet gand «Ar Skol dre Lizer»

AVIEL JEZUZ KRIST

Pour une double fidélité

En fidélité à l'invitation du Concile de Vatican II, une équipe diocésaine composée de prêtres et de laïcs, dirigée et stimulée par Monseigneur Favé et Monsieur le Chanoine François Élard, a mené à bonne fin, avec les encouragements de Monseigneur Fauvel et de son successeur, la traduction en langue bretonne des textes liturgiques du missel et du rituel.

Cette traduction, qui a opté pour la langue couramment parlée en Finistère, sans pouvoir tenir compte cependant de toutes les nuances dialectales, a été très appréciée. Plus d'une fois, on m'a demandé d'insister près des membres de l'équipe pour qu'elle continue son travail, en donnant une traduction complète au moins des évangiles, travail déjà bien avancé par la traduction des textes liturgiques.

Sur mon insistance, l'équipe « Kenvreuriez ar Brezoneg », amputée, hélas ! du Chanoine Pierre-Jean Nédélec, décédé entre temps, s'est remise à l'œuvre avec persévérance. Elle a su trouver de nouveaux collaborateurs, en particulier pour la révision, pour l'édition, pour la commercialisation, et, grâce au labeur de l'Imprimerie Régionale de Bannalec, voici l'œuvre achevée.

Ceux qui l'ont menée à bonne fin ont été guidés par une double fidélité : fidélité à la parole de Dieu et fidélité à leur langue maternelle, sans sacrifier l'une à l'autre, sans chercher non plus à se situer en rivaux d'autres traductions déjà existantes, s'inspirant d'autres critères, spécialement sur le plan linguistique et littéraire.

Ce qu'ils désirent, — et c'est aussi mon souhait le plus cher —, c'est que, à travers cette traduction, un nouveau contact s'établisse entre l'Évangile et l'âme bretonne, comme il exista, il n'y a pas si longtemps, par le truchement de « Buhez ar Zent ».

A ces infatigables travailleurs, au Frère Visant Séité, aux moines de Landévennec, je dis ma reconnaissance pour avoir réalisé cet instrument d'évangélisation. Puisse la double fidélité qui a guidé les traducteurs être contagieuse, en particulier au profit de nombreux jeunes en quête de leurs racines ! Ils ne trouveront pas de guide plus authentique pour les mettre en communion avec l'âme profonde de leur peuple qui, selon la prophétie d'un de leurs plus grands poètes, perdrait sa personnalité s'il venait à perdre sa foi :

« Oh oui ! restez avec nous. Sans Vous nous ne sommes rien,

Sans Vous un peuple meurt, comme un corps sans pain.

Si Vous ne les gardez pas sur votre Cœur,
Vers qui s'en iront les Bretons ? »

(J.P. Calloc'h).

† Francis BARBU,
Évêque de Quimper et de Léon.

D'al Lenner

An Aviel a vo kavet amañ a zo kentoh eun advouladenn evid ar pez a zell ouz al lodenn vrasa anezañ.

An Aotrou 'n Eskob Barbu, eskob Kemper ha Leon, e-noa karget «Kenvreuziezh ar Brezoneg» da zavel ha da embann al levriou a oa réd kaoud evid al lidèrèz e brezoneg; overennou ar zul hag ar goueliou, ar zakramañchou.

An Aotrou Chaloni Per-Yann Nedelec a zigoras an ero hag a gemeras war e gein ar pep brasa euz ar zamm beteg e varo. Kenvreudeur all a oa bet ouz e zikour hag a gendalhas gand al labour. «Kenvreuziezh ar Brezoneg» a embannas evel-se 50 «kaier» azaleg miz Kerzu 1969. Gouzoud a reom o-deus rentet servich d'ar parreziou, sikouret al lidèrèz e brezoneg d'en em astenn.

Daoust da-ze n'oa ket bet embannet, en eul levr, Aviel Jezuz-Krist penn-da-benn hervez ar pevar avieler. An Aotrou 'n Eskob a houlennas en-dro digand «Kenvreuziezh ar Brezoneg» kas al labour-ze da benn.

Setu eñ amañ. Tro a vo kavet da rebech tra pe dra, sur a-walh, ni on-unan her goar. Trugarez a lavarom da gement hini a blijfe dezañ skriva deom e eveziadennou war boent pe boent.

Bennoz Doue a lavarom a-greiz kalon d'an Tad Mark euz Abati Landevenneg ha d'ar Frer Visant Seite euz Urz Frered Lamennais.

O-daou o-deus or zikouret da beurgempenn, al labour, hag an Tad Mark e-neus savet ar « GÉR a-raog », ar studiadennoù war bep Aviel hag an notennoù.

O-daou o-deus kemeret kalz a breder ha roet o amzer evid lakaad moullal al levr en eun doare plijuz.

Bennoz Doue d'ar « Skol dre Lizer » he-deus kemeret ar garg da embann an Aviel war he hont...

Bennoz Doue da Abati Landevenneg hag a zo plijet ganti kemer ar garg da vired al levriou moullal, d'o bruda ha d'o lakaad e gwerz.

Bennoz Doue d'an Aotrou Guichou, Person Kastell-Paol, bet kelenner war ar Skritur-Zakr e kloerdi-Braz Kemper, ha barreg war ar brezoneg. Plijet eo bet gantañ lavared deom e zoñj war al labour, hag e evezadennoù o-deus or zikouret da zigas gwellaenn en droidigez.

Kenvreuriez ar Brezoneg.

Aviel an aotrou Krist

Kelou mad Rouantèlèz Doue

Abaoe kantvejou ha kantvejou, en he 'fedennou hag en he 'feiz, Pobl Israel a hortoz gand mall Rouantèlèz an Aotrou Doue.

He gortoz a ree, ével m'ema o hortoz he 'frankiz eur bobl toull-bahet ha gwasket. Ar Brofeted eo o-doa roet da anaoud ar Rouantèlèz-se:

«Setu o tond, war goabrenn an neñv evel eur Mab dén. Roet ez eus bet dezañ impalaeriez, enor ha rouantèlèz: E impalaeriez a zo eun impalaeriez peurbadel ha ne dremeno ket, hag e rouantèlèz ne vo biken distrujet». (Dan. 7 — 13, 14).

E-kreiz ar gortoz-se a-vad, e veze kavet mesk-hamesk c'hoantegeziou speredel hag esperañsou douarel eur bobl izelleet.

AR HELOU MAD

Hogen, setu o sevel a-nevez, war lez ar Jordan, eur Profet all. Henez eo Yann. Ar pez a embann, setu just ar pez a hortoz ar bobl: «Rouantèlèz Doue a zo tost. Bezit keuz d'ho pehejou».

Hag e-keid ha m' en em lez ar bobl da veza soubet gantan e dour ar Jourdan evid pardon ar pehejou hag an distro da Zoue, Yann a ziskouez dezo gand e viz an hini a zeu war e lerh: «An hini n'eo ket din da zilasa dezan e zandalennou. An hini a vadezo er Spered hag en tan».

P'e-neus Herodez taolet Yann en toull-bah, ha lakeet troha dezan e benn, neuze, Jezuz en em ziskouez d'e dro. Mond a ra dre Vro-Halilea a-béz en eur embann Kelou Mad ar Rouantèlèz.

Rag ar Rouantèlèz bremañ a zo aze, ar Rouantèlèz Doue-ze gortozet abaoe keid-all: «An dud dall a wél, ar re gamm a gerz, an dud lor a zo purifiet, ar re vouzar a glèv, ar re varo a zav da veo, hag ar Helou Mad a zo roet da anaoud d'ar re baour».

An dra-mañ, dreist-oll, rag «Eüruz ar re 'zo paour a spered, dezo eo Raouantèlèz Doue».

ROUANTELEZ A ZANTELEZ

Med Rouantèlèz Doue a zo eur Rouantèlèz a zantèlèz. Goulenn a ra dreist pep tra ma tistroio ar halonou ouz Doue; ma vo hemañ roue enno, ha neket an arhant, ar blijadur, al lorhentez.

Rouantèlèz Doue eo ar béd nevez a lakaio Doue da ziwan, en eur gas e Spered e kalon an dud, ma teuint da veza e vugale o kaoud lod en e eürusted peurbadel.

E-doug daou vloaz leun, Jezuz a zigaso da bep hini, d'ar re baour koulz ha d'ar re binvidig, d'ar re vihan koulz ha d'ar re vraz, ar Helou Mad.

Dre e gomzou ha dre e oberou, dre e gelennadurez, e barabolennou dreist-oll ha dre e vuzudou, ha n'int nemed skeudennou euz ar wir 'frankiz, Jezuz a zisplego petra eo Rouantèlèz e Dad.

An engroez a zo en-dro dezañ, ar Pennou-Braz, ar Saduseaned, ar Farizianed, ar Bublikaned hag ar beherien, o 'fedi a raio oll da vond e-barz ar Rouantèlèz: «Distroit ouz Doue, ha kredit er Helou Mad».

Hag en-dro dezañ e vodo e ziskibien ar gwella kavet: «Deoh-c'hwi eo bet roet ar hras da anaoud Mister Rouantèlèz Doue».

Siwaz! Petra 'zo erruet? Buan, ar pennou-braz a zeuas de veza e enebourien douet. Ar Bobl, he-unan, da genta leun a dan, a zo bet a nebeudou en em dennet kuit, dirag ar haled ma kave ar pezh a houlenn Rouantèlèz Doue:

An diskibien, da vihana, daoust hag o-deus komprenet?: «Da biou ez afem, eme Bèr. Ganit eo emma komzou ar Vuez peurbaduz».

Koulskoude e vo gwerzet gand unan euz e ziskibien. Pèr, e-unan, a naho anezañ hag ar re all a deho dioutañ: «Ni a grede deom eo eñ eo e-nefe dieubet Israel, a lavaro, gand tristidigez, daou ziskibl war hent Emmaüz.

Rag, pep tra 'zo chomet a-dreuz war eur groaz: «Or Beleien-Vraz, emezo, hag or pennadureziou, o-deus e werzet hag e gondaonet d'ar maro, hag o-deus staget anezañ ouz ar groaz».

Kredi a ree dezo e oa bremañ echu evid mad gand Rouantèlèz Doue, dre varo Jezuz e-unan: «Setu tri devez dija m'eo erruet an traou-ze».

Eun aviel hepken

Hogen, da vintin Pask, e strinkas a-nevez ar Helou Mad: «Savet eo a varo da veo!»

Ya, Jezuz a zo beo hag ar béz a zo goullo. Da Vari a Vagdala, d'ar merhed, d'an diskibien bodet diouz an noz, Jezuz a zo en em ziskouezet.

An daou ziskibl, o-unan, oh ober hent war-zu Emmaüz, ne ouient ket edo aze o vale ganto en o-hichenn, d'en em rei dezo da anaoud dizale, o terri ar bara ganto ouz taol. Neuze, hepkén, e teu dezo ar sklerijenn.

E SKLERIJENN AR ZUL FASK

Evel-se ive eo bet Pask al luhedenn a bar e-kreiz an noz du. Bez' ez eo bet, en eun taol, ar goulou a sklerijen-nas kalon an diskibien.

E-doug daou vloaz leun o-doa baleet da heul Jezuz, o-doa e zelaouet, e zoujet gand dudi, e garet.

N'o-doa ket komprenet mad da genta. Bremañ a-vad, an oll eñvorennoù-ze a zistro d'o spered hag e komprenont oll tamm-ha-tamm.

«Pa oe savet a varo da veo, e ziskibien a zeuas dezo da zoñj e-noa lavaret an oll draou-ze, hag e kredjont ennañ».

Bremañ eo eh adkavont Kelou Mad Rouantélèz Doue, med eet diouti oll gaillar an douar ha leun a skéd e sklerijenn dibar an Aotrou Doue: Rouantélèz Doue, Rouantélèz a garantez hag a beoh, ha n'ez eer enni nemed dre ar baourentez a galon ha poaniou ar groaz.

Gwelloh e komprenint c'hoaz, pa ziskenno warno, deiz ar Pantekost, evel eun taol avel, ar Spered-Santel hag a jeñcho o halonou.

Ober a raio ive, anezo oll, bodet stard er feiz, e Iliz kenta.

KIT DRE AR BED

Ha kerkent, setu i o vond dre ar béd da embann Kelou Mad ar Rouantélèz : « Ar Jezuz-se hag ho-peus krusifiet, eme Sant Pèr, Doue e-neus e zavet a varo da veo. Doue e-neus greet anezañ Aotrou ha Krist. Grit pinijenn ha resevit ar Vadeziant en ano Jezuz Krist. Reseo a reoh ive donezon ar Spered-Santel ».

Hag e ziskibien a ya, niverusoh atao, da brezeg dre oll Rouantélèz Doue : Pèr, Yann ha Jakez hag ar re all ; e Jeruzalem, e Sezarea, dre ar Palestin, ha Bro-Zamaria. Pelloh c'hoaz, e Bro ar Bayaned.

Ilizou a zav dre oll. Med ive, diroll a ra warno ar reveulzi, an heskinèrèz. Jezuz e-noa henn lavaret dezo en a-raog. Med n'euz forz !

Dirag doriou Damaz, Saul a zo strinket d'an douar diwar e varh. Ha setu eñ, d'e dro, o kas pell Kelou Mad an Aotrou Krist. Ar Helou Mad n'eus nemetañ ; « Int-i, koulz ha me, setu petra ' brezegom ».

Rag n'eus nemed eur Helou Mad. Kelou Mad, e gregach, eo : « Eu angelion », e-neus roet deom « Aviel » e brezoneg hag « Evangile » e galleg.

N'eus nemed eun Aviel. Ar pez ema Pèr o prezeg eo an Aviel. Ar pez ema Yann o prezeg eo an Aviel. Ar pez ema Paol o prezeg eo an Aviel.

AR PEZ ON-EUS KLEVET

Ha petra 'zo en Aviel-se ? Petra eo ar Helou Mad-se ? Ar pez m'eo bet test an diskibien anezañ, « int-i hag o-deus bet debret hag evet gantañ ».

« Prezeg a reom deoh ar pez on-eus klevet, ar pez o-deus gwelet on daoulagad, ar pez o-deus touchet on daouarn ».

Kement-se oll, sklerijennet hiviziken gand Rezureksion Jezuz ha gras ar Spered-Santel.

An oll eñvoriou-ze, ar sklerijenn-se a-béz, an Iliz he-deus bet ezomm anezo dioustu, da brezeg d'ar Juzevien ha d'ar Bayaned, da gelenn ar gristenien genta, da respont da abegou he enebourien, da zispenn an tamallou-e-gaou. Evid pedi ive, hag evid lida mad Sakramant an Aoter, dreist-oll. Evid beza gouest atao da rei gweloh da anaoud or Zalver Jezuz-Krist.

Neuze a-vad, e-mesk an eñvoriou dispar-ze, eo bet réd ober eun dibab hervez ezommou an ilizou kenta.

Darn euz komzou Jezuz, euz e oberou, a zo bet ankounac'heet, a-dra-zur. Darn all a-vad, dre ma oa ezomm anezo, a zo bet miret da viken, da genta dre gomz ha goudeze dre skrid.

An dibab, e-touez an eñvoriou chomet er sperejou, a zo bet greet e-doug an daou-ugent vloaz kenta euz buez an Iliz. Gweled a reer mad kement-se e liziri Sant Paol, bet skrivet etre ar bloaveziou 50 ha 65.

Evel-se o-deus kemeret buez danevellou ar Basion hag ar Rezureksion, hini préd ar Gambr-lid ha kalz a re all. Dastumet eo bet ive komzou Jezuz war ar vuez kristen, war fin ar béd, e barabolennou, e vurzudou...

Hag ar skridou kenta-ze, en eur vond a iliz da iliz, a zo deuet da veza, tamm-ha-tamm, madou an oll.

Unan euz e ziskibien, eun deiz, a zo deuet dezañ ar zoñj vad da zastumm eun nebeud anezo, ha d'ober ganto eur skrid-danevell, ennañ ar pezh a zell ouz Jezuz, azaleg e vadeziant beteg e varo hag e adsao da veo.

Hag al levrig kenta-ze, a zo bet anvet, evel-just, eun «aviel».

Med, diwallom! N'ema ket aze an Aviel en e béd, ar Helou Mad a-béz euz Rouantélèz Doue.

An Aviel a zo ive Liziri Sant Paol. An Aviel a zo ive liziri Sant Pèr, Sant Yann ha Sant Jakez.

An Aviel, erfin, eo oll gemennadurez Jezuz a embann an Iliz a-béz abaoe ugent kantved hep diskrog, beteg an deiziou a-vremañ.

Ar pevar aviel

Ken founnuz eo danvez an Aviel-ze, ma ne zeuer ket a-benn, abaoe daou vil bloaz, da zuna anezañ an oll dalvoudègèz a zo ennañ.

Evel-se edo dija an traou e penn kenta an Iliz. Kement hini a glaske e brezeg a ree euz e wella.

Paol, Pèr, Yann ha re all moarvad, o-deus skrivet liziri. Mark a-vad e-neus kavet gwelloc'h skriva al leorig-se, a zo ennañ eun nebeud traou ha komzou euz buez Jezuz, evel ma vezent embannet, e pep leh d'ar mare-ze.

Greet e-neus kement-se, evel-just, en eur zoñjal er re hel lennfe, da lavared eo ar Gresianed.

Skriva e-neus greet ive, hervez e hiz dezañ, gand e galon hag e spered hag ive e karakter. Setu perag eo anvet al levrig-mañ: «An Aviel *hervez* Sant Mark».

Re all a zeuio war e lerh hag a raio eveldañ: Maze, eur hristen hag a oa Juzeo. Lukaz, eur Gresianad desket. Ar re-mañ ive a skrivo en eur zoñjal en o lennerien, ar Juzevien deuet da veza kristenien evid ar henta, ar Gresianed evid an eil. Ha pep hini, ouspenn, a raio hervez e zoare gand e galon hag e spered ha gand e karakter. Hag o levriou a vo anvet: «An Aviel *hervez* Sant Vaze» hag «An Aviel *hervez* Sant Lukaz».

Diwezatoh e teuio eur pevare Aviel. Hemañ a denn muioh c'hoaz d'an dén e-neus e skrivet.

E eñvoriou da hemañ a zeu euz mammennou all, digand tud all. Ha ne vo ano gantañ euz oberou ha kelennadurez Jezuz, nemed goude beza hir-brederiet warno.

Dre e zisplegaduriou diwar-benn Jezuz, eñ a-vad eo a ziskouezo ar gwella mister Mab Doue. E levr a vo anvet: «An Aviel *hervez* Sant Yann».

Pevar Aviel a zo eta. Med e gwirionez ne reont nemed unan. Ha koulskoude ma 'z eo fellet da Zoue e vije Pevar Aviel, n'eo ket heb abeg.

Dremm Jezuz a zo enni kement a zoareou disheñvel, ma rank beza greet ouspenn eur zell warni, evid ma ve dizoloet mad he haerder a-béz. Ha Doue a zo bet fellet gantañ or-bije ar pevar daol-lagad-se, disheñvel an eil diouz egile.

Ablamour da ze n'eo ket mad meska ar Pevar Aviel de ober unan hepken. Réd eo lenn pep hini anezo en e bart-e-unan, kompren kemennadurez disheñvel pep hini anezo.

Rei a reom amañ, a-raog pep aviel, eun nebeud eveziadennou, evid ma vezint komprenet gwelloh.

PENAOL LENN AR PEVAR AVIEL

N'eo ket hirio nemetken, a-dra-zur, eo ez eur bet kroget da lenn ar Pevar Aviel. Ha kennebeud all, n'eo ket hirio eo ez eur bet kroget da zigemer Kelou Mad ar Pevar Aviel, ha da heulia o helennadurez.

Réd eo anzav, koulskoude, ez eus bet kavet henchou nevez abaoe tregont pe zaou-ugent vloaz, hag a ro sklêrijenn d'o hompren gwelloh.

Ar pezh on-eus lavaret a-raog a dle dija rei sikour da gompren petra int. Setu amañ ouspenn eun nebeud evezriadennou hag a hellfe mired da gemer gwenojen-nou fall.

● Ar Pevar Aviel n'int ket skrivet da veza levriou Istor. Ne hellfed ket lavared anezo ez int « Buez or Zalver Jezuz-Krist ».

A-dra-zur, ar pezh a gontont a zo gwir, diazezet ma 'z eo war lavariou tud hag a zo bet test. Med an Avielou n'ema ket o 'fal konta deom dre ar munud ar pezh e-neus bet greet ha lavaret or Zalver Jezuz-Krist.

N'o-deus kén pal, nemed embann Kelou Mad Rouantèlèz Doue, digaset gand Jezuz, a-dreuz e vuez, e varo hag e Rezureksion.

Arabad klask enno piz pep darvoud ha pep komz euz buez Jezuz. Hag, evid gwir, ar pezh a gont unan, ne glot ket atao penn-da-benn gand ar pezh a gont egile, ha kennebeud all, nag er memez doare, nag er memez urz.

● M'on-eus komprenet mad penaoz eo bet savet ar Pevar Aviel, on-eus komprenet ive penaoz ne roont ket da weled na da gleved Jezuz war-eün. Hag eo gwelloh an traou evel-se.

An ebestel, an diskibien o-deus gwelet ha klevet anezañ. Ha ni her gwél e daoulagad estlammet an esbestel hag an diskibien. Ni her hlèv a-dreuz komzou an ebestel hag an diskibien.

Evel-se eo. Ne heller mond daved ar Hrist nemed a-dreuz an Iliz. Eur wirionez eo honnez hag a zo pouezuz braz. Rag, a-dreñv Mark, Maze, Lukaz ha Yann, ema an Iliz. Hi eo he-deus resevet Kelou Mad an Aotrou Krist. Hi eo a zo karget da brezeg anezañ d'ar béd. Ha diganti eo e tleom-ni reseo, d'on tro, ar Helou Mad.

Pa lennom an Aviel hervez Sant Mark, eo gand daoulagad Mark eo e sellom ouz Jezuz, gand kalon ha feiz Sant Mark.

Pa lennom an Aviel hervez Sant Yann, eo gand daoulagad Yann eo e sellom, gand e galon ha gand e feiz.

Ar memez tra evid ar pezh a zell ouz liziri Sant Paol; drezo ez eom daved ar Hrist, a-dreuz feiz ha kalon Paol.

● Arabad lenn an Aviel gand ar memez c'hoant hag an hini ne glask nemed kleved eun istor gaer.

Réd eo lenn ar Pevar Aviel evid kleved enno kelou Mad an Aotrou Doue, Kelou Mad e Rouantélèz.

An Aotrou Krist eo Mestr peb amzer ha pep dén. Dirag ar Hrist e tleer atao respont «ya» pe «nann». Ne heller ket chom hepkén war ar hoant-gouzoud.

Ouz kement dén a zigouez gantañ abaoe daou vil bloaz e ra atao ar memez goulenn e-neus bet greet ouz Pèr: «Ha te, piou a lavarez ez on?»

Just a-vad, evid ma teufem da rei eur respont a zoare d'ar goulenn-se, eo ez eo bet skrivet ar Pevar Aviel, hag embannet ar Helou Mad, rag enno eo roet deom da houzoud eo ar Hrist evidom «an Hent, ar Wirionez hag ar Vuez».


Hemañ eo ar gér diweza a gaver en diweza euz ar Pevar Aviel:

«Jezuz e-neus greet c'hoaz dirag daoulagad e ziskibien, e-leiz a vuzudou ha n'emaint ket skrivet el leormañ. Ar re-mañ a zo bet laket dre skrid evid ma teufeh da gredi eo Jezuz ar Hrist, Mab Doue, hag en eur gredi, da gaoud ennoh ar Vuez en e Ano». (Yann, 20, 20).

Tad Mark,
Abati Landevenneg.

Kalvar St-Tégoneg:

*Jezuz o tougen
e groaz.*



Aviel Jezuz-Krist

Hervez Sant Vaze

An aviel hervez Sant Vaze

A BELEH E TEU

E-doug an eilved kantved e komzer deom euz eun Aviel hag a vije bet skrivet gand an abostol Sant Vaze en arameeg, ar yéz komzet e Bro-Balestin. Ma 'z eus bet anezañ e heller lavared eo bet kollet abaoe pell 'zo.

An Aviel a reom anezañ « hervez Sant Vaze » a zo bet skrivet, moarvad, gand unan euz e ziskibien, marteze diwar an Aviel-ze bet skrivet en arameeg.

Savet eo bet en eun tu bennag e Bro-Siria war-dro ar bloaz pevar-ugent pe marteze eun tammig abretoh.

Piou eo an diskibl-se? N'ouzom ket. Med gouzoud a reom a-vad e oa eur Juzeo desket mad, eur Skrib « deuet da veza diskibl Rouantèlèz Doue », evel ma lavar e-unan (13, 52). Ha skriva 'ree e Aviel evid ar Juzevien deuet da veza kristenien eveldañ.

Ablamour da ze eo e komz dezo aliez euz al Lezenn, an Hengouniou (Traditions), ar Brofeted, euz Moizez, euz David.

PENAOZ EO BET SAVET

Tad an Aviel-mañ, war a greder, e-neus en em zervichet euz aviel Sant Mark, dég vloaz pe bemzeg vloaz kosoh.

Ennañ e kaver, koulz lavared, ar skrid-se en e béz. Med hemañ e-noa, ouspenn-se, anaoudègèz euz eur skrid all bennag, ar pez a ra dezañ beza skrivet eun Aviel hirroh.

Dreist-oll, e-neus laket ouspenn, daou bennad o komz euz ginivèlèz ha bugaleaj Jezuz (1 ha 2). Laket e-neus ive « ar Zarmon war ar Ménez » (5,6 ha 7) ha kalz traou all c'hoaz.

Daoust da ze e kavom ennañ ar memez urz hag e Sant Mark, azaleg ar Vadeziant beteg ar Rezureksion.

En eur zelled piz, e kavfed e-nije klasket — hep derhel kont euz bugaleaj Jezuz — ranna e leor e pemp lodenn, (evel ma oa pemp leor e Lezenn Moizez), e pep hini anezo eur brezegenn vraz greet gand Jezuz, hag eun nebeud oberou ha burzudou.

Hag evid gwir, kerkent ha kroget, eo evel-se e tiskouez buez publik or Zalver;

« Mond a ree dre Vro-Halilea a-béz, en eur gelenn er zinagogou, en eur embann Kelou Mad Rouantèlèz Doue, en eur barea pep kleñved ha pep langiz e-touez ar bobl. » (4,23).

KEMENNADUREZ

An Aviel hervez Sant Vaze a zo bet savet, evel m'on-eus gwelet dija, en eun Iliz a Juzevien deuet da veza kristenien.

Ablamour da ze eo an hini a jom ar fealla (an tosta) da gemennadurez an Testamant-Koz. Diskouezet eo Jezuz evel eun eil Moizez o tond da zigas al Lezenn Nevez, hag evel Mab da Zavid o tond da zigas Rouantèlèz Doue.

Evel-se en em ziskouez deom dija ar Mabig-Jezuz. Evel-se ive e varv Jezuz kondaonet, kement ha kement, evid beza lavaret e oa profet ha beza anzavet e oa roue: Lezenn Nevez Rouantèlèz Doue eo a zo displeget deom er « Zarmon war ar Menez ».

Med Israel goz n'eo ket bet chomet feal da Zoue, ha Pobl Doue bremañ eo an Iliz, bodet en-dro da Bèr, hag a zo bet roet dezañ « Alhweziou ar Rouantèlèz »; hag en Iliz-se ema enni Jezuz o chom « beteg fin ar béd ».

Poueza 'ra ive kalz an Aviel-mañ, war ziouganou an Testamant-Koz. Bep tro ma hell e tiskouez penaoz int bet sevenet gand Jezuz, azaleg e hanedigez euz eur werhez beteg e varo war ar groaz.

Er respont om pedet da ober d'an Aotrou Krist, e houlen kalz Sant Vaze diganeom senti ouz e hourhemennou. E halv diweza eo hemañ d'e ziskibien: « Kit ha badezit an oll vroïou, en eur zeski dezo senti ouz ar pez am-eus gourhemennet deoh ».

Pennad I

LIGNEZ JEZUZ-KRIST

¹ Lignez Jezuz-Krist, mab da Zavid, mab da Abraham.

² Abraham a oe tad da Izaag, Izaag da Jakob, Jakob da Juda ha d'e vreudeur.

³ Juda tad da Farez ha da Zara dre ar vaouez Tamar. Farez tad da Ebron, Ebron da Aram, ⁴ Aram tad da Aminadab, Aminadab da Naason, Naason da Zalmon.

⁵ Salmon tad da Vooz dre ar vaouez Rahab, Booz tad da Obed dre ar vaouez Ruth hag Obed da Jesse. ⁶ Jesse tad d'ar roue David, ha David, tad da Zalomon, dre an hini a oa bet gwrég da Uri.

⁷ Salomon, tad da Roboam, Roboam da Abiaz, Abiaz da Asaf. ⁸ Asaf, tad da Jozafad, Jozafad da Joram, Joram da Oziaz, ⁹ Oziaz da Joatam, Joatam da Akaz, Akaz da Ezekiaz, ¹⁰ Ezekiaz da Vanase, Manase da Amon, Amon da Joziaz.

¹¹ Joziaz da Jekoniaz ha d'e vreudeur, da vare an harlu e Babilon. ¹² Ha goude an harlu e Babilon, Jekoniaz, tad da Zalatiel, Salatiel, tad da Zorobabel. ¹³ Zorobabel, tad da Abiud, Abiud da Eliakim, Eliakim da Azor. ¹⁴ Azor, tad da Sadok, Sadok da Akim, Akim da Eliud, ¹⁵ Eliud da Eleazar, Eleazar da Vatan, Matan da Jakob, ¹⁶ Jakob tad da Jozef, pried Mari, an hini a zo bet mamm da Jezuz anvet ar Hrist.

¹⁷ Bez' ez eus eta pevarzeg rummad euz Abraham beteg David (1), pevarzeg euz David beteg an harlu e Babilon, ha pevarzeg euz an harlu e Babilon beteg Ar Hrist.

GANEDIGEZ JEZUZ-KRIST

¹⁸ Evel-henn eh erruas ganedigez Jezuz-Krist: Mari, e vamm, a oa dimezet da Jozef, med a-barz m'o-doa bevet asamblez, e tigouezas dezi beza dougéréz dre vertuz ar Spered-Santel.

¹⁹ Jozef, he 'fried, dén just anezañ, pa ne 'felle ket dezañ he dizenori, a lakeas en e benn dispartia diouti dre guz.

²⁰ Trei a ree ar zoñjou-ze en e spered pa zeuas eun êl d'an Aotrou da bara dirazañ e-kreiz e gousk, hag a lavaras dezañ :

— «Josef, mab da Zavid, arabad dit kaoud aon o kemer Mari da bried en da di, rag euz ar Spered-Santel eo ar vuez a zo diwanet enni.

²¹ «Genel a raio eur mab ; te a roio dezañ an ano a Jezuz, rag eñ eo a zalvo e bobl euz he 'fehejou».

²² «Kement-se a hoarvezas, eyid ma teuje da wir ar pez e-noa lavaret an Aotrou dre vouez ar Profet :

²³ — «Setu ma vo ar Werhez dougéréz ha ma hano eur mab a vo anvet Emmanuel, da lavared eo « Doue ganeom ».

²⁴ Goude beza savet euz e gousk, e reas Jozef evel m'e-noa lavaret dezañ El an Aotrou : kemer a reas e bried en e di hag he mired a reas gwerhez, ²⁵ beteg m'he-doa laket er béd eur mab a roas dezañ an ano a Jezuz.

Pennad II

GWELADENN AR VAJED

¹ Goude ma oe ganet Jezuz a Betleem Juda, en amzer ar roue Herodez(2), e teuas Majed euz bro ar Zao-Heol da Jeruzalem.

² Lavared e reent :

— « E peleh ema ar roue a zo ganet d'ar Juzevien? Rag gwelet on-eus e steredenn e bro ar Zao-Heol, ha deuet om d'e adori ».

³ O kleved kement-se, e oe strafuillet ar roue Herodez ha gantañ kêr Jeruzalem a-béz.

⁴ O veza bodet an oll veleien-vraz ha skribed ar bobl, e houlenas outo e peleh e tlee ar Hrist dond er béd. Respont e rejont dezañ :

⁵ — « E Betleem Juda, rag evel-henn eo skrivet gand ar profet: *6*« *Ha te, Betleem, douar Juda, n'out ket an disterra e-touez kêriou braz Juda, rag ahanout e teuo an hini a vo pastor va 'fobl Israel* ».

⁷ Neuze, Herodez a halvas ar Vajed dre guz, evid gouzoud mad diouto, pe-da-vare e oe en em ziskouezet dezo ar steredenn. ⁸ O has a reas da Vetleem en eur lavared dezo :

— « It, ha grit enklask piz diwarbenn ar bugel, ha pa vo bet kavet ganeoh, digasit kelou din, evid ma 'z in, me ive, da stoui dirazañ ».

⁹ Goude beza selaouet ar roue, ez eas ar Vajed en hent. Setu ma'z ee en o-raog ar steredenn o-doa gwelet er Zao-Heol. Chom a reas a-zav, a-uz d'al leh m'edo ar bugel.

¹⁰ O weled ar steredenn, e oent karget euz ar vrasa levenez. ¹¹ En eur vond en ti e weljont ar bugel gand Mari e vamm. Stoui a rejont dirazañ gand doujañs ha digoret ganto o houfrouigou e kinnigont dezañ aour, ezañs ha mir.

¹² Goudeze, aliët dre o housk da jom hep distrei da gavoud Herodez, e kemerjont eun hent all evid distrei d'o bro.

AR 'FAMILL ZANTEL O TEHED D'AN EJIPT

¹³ Goude ma oent eet kuit, setu m'en em ziskouezas eun el d'an Aotrou da Jozef, dre e gousk, hag e lavaras dezañ :

— «Sav, kemer ar bugel hag e vamm ha teh da Vro Ejipt, hag e chomi eno beteg ma lavar in dit, rag Herodez a zo war-nes klask ar hrouadur, evid e lakaad d'ar maro».

¹⁴ Sevel a reas, kemered gantañ ar bugel hag e vamm e-kreiz an noz, hag eh en em dennas en Ejipt. ¹⁵ Chom a reas eno beteg maro Herodez, evid ma teufe da wir komzou Doue, lavaret gand ar brofeted:

«Euz an Ejipt em-eus galvet va mab».

AN INOSANTED SANTEL

¹⁶ Neuze, o weled e oa bet touellet gand ar Vajed, ez eas Herodez e kounnar ruz, hag e roas urz da laza an oll vugale a oa en tu-mañ da zaou vloaz, hervez ar mare ma oa bet roet dezañ da anaoud gand ar Vajed. ¹⁷ Neuze e teuas da wir ar pez e-noa lavaret ar profet Jeremias:

¹⁸ *«Eur vouez a zo bet klevet e Rama,
«gouelvan hag hir glemmadenn:
«Rachel eo a zo o leñva d'he vugale,
«Ha ne 'fell ket dezi beza frealzet
«pa n'eus mui anezo».*

AN DISTRO — JEZUZ E NAZARED

¹⁹ Goude maro Herodez, setu m'en em ziskouezas eun êl d'an Aotrou da Jozef, dre e gousk, en Ejipt, hag e lavaras dezañ:

²⁰ — «Sav! Kemer ganit ar bugel hag e vamm, ha kee da Vro-Israel, rag maro int ar re a glaske lemel e vuez digand ar bugel».

²¹ Sevel a reas Jozef, kemer gantañ ar bugel hag e vamm, ha dond en-dro da Vro-Israel.

²² Med o klevet edo Arkelauz roue Bro-Israel e plas Herodez, e dad, e savas aon gantañ da vond di. Alïet dre e gousk, eh en em dennas e korn-bro Galilea.

²³ Hag e teuas da jom en eur gêr anvet Nazared, evid ma teufe da wir ar pezh a oa bet lavaret: « Nazarean a vo greet anezañ ».

Pennad III

PREZEGEREZ YANN VADEZOUR (3)

¹ En amzer-ze e tigouez Yann-Vadezour; o prezeg edo e goueleh Bro-Juda.

— «² Cheñchit buez emezañ, rag war-nes digouezoud ema Rouantèlèz Doue.

³Anezañ eo e-noa komzet ar profet Izaiaz pa lavare:

«*Eur vouez a gri er goueleh,
«Kempennit an hent d'an Aotrou,
«Eünit dezañ e wenojennou».*

⁴ Yann a zouge eur wiskamant greet gand reun kañval, hag eur gouriz lèr en-dro d'e groaz-léz. Killeien-raden ha mél gouez a oa e vevañs. ⁵ Dond a ree davetañ tud Jeruzalem, Bro-Judea ha tro-war-dro ar Jordan, ⁶ hag e vezent badezet gantañ er ster Jordan en eur anzañ o 'fehejou.

⁷ O weled kalz Farizianed ha Saduseaned (4) o tond da veza badezet, e lavaras dezo:

— «Gouenn naered, piou e-neus roet deoh ar zoñj da dehed araog ar gounnar a zo o tond? ⁸ Diskouezit 'ta dre hoh oberou eo gwirion ho keuz. ⁹ N'it ket da lavared ennoh hoh unan: « Abraham eo on tad ». Rag, m'hel lavar deoh, e hell Doue euz ar vein-mañ sevel bugale da Abraham. ¹⁰Ema dija ar vouhal gand gwrizioù ar gwez. Kement gwezenn ne daol ket frouez mad a vo trohet ha stlapet en tan.

¹¹ «Me ho padez en dour evid ma teufeh da jeñch buez, med an hini a zo o tond war va lerh a zo galloudusoh egedon

ha n'on ket din da denna dezañ e voutou. Eñ eo ho padezo er Spered-Santel hag en tan.

¹² « Ar bal-wenta a zo en e zaouarn, skuba 'ray al leur hag ar greun a vo dastumet er hrignol. Ar pell a-vad a vo taolet en tan ha ne varv ket ».

BADEZIANT JEZUZ

¹³ Neuze e teuas Jezuz euz Bro-Halilea beteg ar Jordan, da gavoud Yann, evid beza badezet gantañ.

¹⁴ Yann avad ne felle ket dezañ e vadezi.

— « Me eo, emezañ, a dle beza badezet ganit; ha Te a zeu davedon! »

¹⁵ Jezuz a respontas dezañ:

— « Gra e-giz ma lavaran dit, rag evel-se eo on-eus da gas pep justis da benn » (5).

Neuze e plég Yann d'e vennoz.

¹⁶ Kerkent ha badezet e teuas Jezuz er-mêz euz an dour hag an neñvou a zigoras. Gweled a ra Spered Doue o tiskenn evel eur goulm hag o chom warnañ. ¹⁷ Eur vouez deuet euz an neñv a lavaras:

— « Hemañ eo va Mab muia karet, a zo va dudi ».

Pennad IV

JEZUZ TOUELLET ER GOUELEH

¹ Neuze e kasas ar Spered-Santel Jezuz d'ar goueleh (6) evid beza tentet gand an droug-spered. ² E-pad daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez e chomas war yun. ³ Ha pa deuas naon dezañ e tosteas outañ an toueller:

— « Mar d-out Mab Doue, emezañ, gra d'ar vein-mañ trei e bara ».

⁴ Jezuz a respontas:

— «Skrivet eo, n'eo ket gand bara hepkén e vez maget an dén, med gand pep gér deuet euz genou Doue».

⁵ Goudeze e kasas an droug-spered anezañ d'ar gêrantel hag e savas anezañ war lein uhella an templ.

⁶ — «Mar d-out Mab Doue, emezañ, en em daol d'an traoñ rag skrivet eo: Doue e roio urz d'e êlez evidout. Da zougenn a raint en o daouarn gand aon na stokfe da droad ouz ar vein».

⁷ — «Skrivet eo ive, eme Jezuz: Ne denti ket an Aotrou da Zoue».

⁸ An droug-spered a gasas anezañ c'hoaz war çur menez uhel-uhel. Diskouez a reas dezañ oll rouanteleziou an douar gand o oll vadou:

⁹ — «Kement-se, emezañ, a roin dit, ma kouezez e-harz va zreid evid va adori».

Jezuz a respontas dezañ neuze:

¹⁰ — «Kerz kuit Satan, rag skrivet eo: An Aotrou da Zoue a adori, dezañ hepkén doujañs a renti».

¹¹ An droug-spered a lezas neuze Jezuz, hag e tosteas Elez outañ evid e zervicha.

DISTRO JEZUZ DA VRO-HALILEA

¹² Pa glevas Jezuz e oa bet laket Yann er prizon, e tistroas da Vro-Halilea. ¹³ Dilezel a reas Nazared evid dond da jom da Gafarnaom, war ribl ar mor, war harzou Zabulon ha Neftalia. ¹⁴ Evel-se e teue da wir komzou ar profet Izaiaz:

¹⁵ «*Douar Zabulon ha douar Neftalia,
«An hent a gas d'ar mor en tu all d'ar Jordan,
«Galilea ar bayaned, ¹⁶ o-deus gwelet
«eur sklerijenn lugernuz;
«war ar re a oa e bro deñval ar maro,
«eur sklerijenn a zo paret».*

- ¹⁷ Jezuz a stagas da brezeg evel-henn:
— «Cheñchit buez, rag tost eo Rouañtèlèz Doue».

AR PEVAR DISKIBL KENTA

¹⁸ O tremen 'héd ar Mor-Galilea e welas daou vreur: Simon, lesanvet Pèr, hag Andre e vreur o taoler o rouejou er mor, rag pesketerien e oant. ¹⁹ Jezuz a lavaras dezo:

— «Deuit d'am heul ha me 'ray ahanoh pesketerien tud».

²⁰ Raktal e tilezjont o rouejou hag ez ejont d'e heul. ²¹ Pelloh e welas daou vreur all: Jakez, mab da Zebede ha Yann e vreur, en o bag, gand Zebede o zad, o kempenn o rouejou.

²² Gelper a reas anezo, ha kerkent e tilezjont o bag hag o rouejou hag ez ejont d'e heul.

JEZUZ A GELENN HAG A RO AR PARE

²³ Tremen a reas dre Vro-Halilea, en eur brezeg er zina-gogou, oh embann kelou mad ar Rouañtèlèz, hag o rei ar pare d'ar re a oa taget gand ar hleñved pe ar zempladurez.

²⁴ Ar vrud anezañ a redas dre ar Siri a-béz, hag e oe digaset dezañ an oll dud gwasket gand a bep seurt kleñvejou pe boaniou: dalhet gand an droug-spered, loarieg, seizet. O 'farea 'reas.

²⁵ Eur bern tud a yee d'e heul, deuet euz Bro-Halilea hag euz an Degkêr, euz Jeruzalem, euz Bro-Judea hag euz ar vro en tu all d'ar Jordan.

Pennad V

AR ZARMON WAR AR MENEZ (7)

¹ O weled kemend-all a dud, e pignas Jezuz ouz tor ar menez; mond a reas da azeza, hag e tasteas outañ e ziskibien.

² Staga 'reas da gelenn anezo o lavared kement-mañ.

³ « Eüruz ar re 'zo paour a galon, rag dezo eo Rouantèlèz Doue (8).

⁴ « Eüruz ar re a zo leun a zouster, ragan douar a vo o lod.

⁵ « Eüruz ar re o-deus da ouela, rag frealzet e vezint.

⁶ « Eüruz ar re o-deus naon ha sehed euz ar justis, rag o gwalh a vo roet dezo.

⁷ « Eüruz ar re a zo trugarezuz, rag d'o zro e kavint trugarez.

⁸ « Eüruz ar re a zo glan a galon rag int a welo Doue.

⁹ « Eüruz ar re a labour evid ar peoh, rag anvet e vezint bugale da Zoue.

¹⁰ « Eüruz ar re o-deus da houzañv ablamour d'ar justis, rag dezo eo Rouantèlèz Doue.

¹¹ « Eüruz oh-c'hwi pa daol an dud dismegañs warnoh, pa reont brezel deoh, pa lavaront e gaou a bep seurt droug eneb deoh ablamour din-me :

¹² « Bezit laouen ha tridit gand ar joa, rag digoll kaer ho-peus da gaoud en neñvou, rag evel-se eo o-deus heskinet ar brofeted a zo bet en ho-raog.

¹³ « C'hwi a zo holen an douar. Med ma teu an holen da goll e vlaz, gand petra e vo roet dezañ e zaour? N'eo mui mad da netra, nemed da veza taolet er-mêz ha breset gand an treid.

¹⁴ « C'hwi a zo sklerijenn ar béd. Eur gêr savet war gern eur menez ne hell ket beza kuzet.

¹⁵ « Ne vez ket enaouet eur goulou evid beza lakeet dindan eur bouezell. Lakeet e vez war eur hantolor hag e skéd neuze da rei sklerijenn d'ar re oll a zo en ti.

¹⁶ « Evel-se, ra skedo ho sklerijenn dirag an dud, hag o weled ar vad a rit e rento ar re-mañ gloar da Zoue ».

AL LEZENN

¹⁷ — « N'it ket da gredi e vefen deuet da ziskar al Lezenn hag ar Brofeted (9), n'on ket deuet d'o diskar med d'o feurechui.

¹⁸ « Rag e gwirionez m'hel lavar deoh, keid ha ma pado an neñv hag an douar, na pik, na lizerenn ne vo lamet kuit euz al Lezenn, ken na vo sevenet pep tra.

¹⁹ « An hini a dorro unan euz an disterra gourhemennou, hag a zougo ar re all da ober kemend-all, a vo laket e-touez ar re zisterra e Rouantêlêz Doue. Med an hini a heuill anezo hag a zoug ar re all d'o heulia, henez a vo laket uhel e Rouantêlêz Doue.

²⁰ « M'hel lavar deoh, ma n'eo ket brasoh ho justis eged hini ar Farizianed hag ar Skribed, ne antreoh ket e Rouantêlêz Doue.

²¹ « Klevet ho-peus ez eus bet lavaret d'on tud koz: Ne lazi ket; an hini a lazo e-no da respont dirag al lezvarn.

²² « Mad, m'hel lavar deoh, an neb en em lakay e kounnar a-eneb d'e vreur a yelo dirag ar barner. An hini a lavaro gwall gomzou d'e vreur, a yelo dirag ar Huzul-Braz. Kement hini a lavaro malloz d'e vreur a yelo d'an tan goude e varo.

²³ « Pa vezi o vond da gas eur prov d'an aoter, ma teu da zoñj dit e-neus da vreur eun dra bennag a-eneb dit, ²⁴ lez aze da brov, ha kee da genta d'en em gleved gantañ. Goudeze, deus da rei da brov.

²⁵ « Pa 'z ez d'al lezvarn gand da enebour, hast buan en em gleved gantañ, e-pad ma vezi gantañ oh ober hent, gand aon da veza laket gantañ etre douarn ar barner, a lakaio krog ennout, ha da veza taolet er prizon.

²⁶ « M'hel lavar dit, ne zeui ket er-mêz a-raog beza paet ar gwenneg diweza.

²⁷ « Klevet ho-peus ez eus bet lavaret d'on Tadou: Na rit ket avoultriaj, ²⁸ med me a lavar deoh; an neb a daol sellou a

hoant war eur vaouez, e-neus dija greet ganti ar pehed en e galon.

²⁹ «Ma ra dit da lagad dehou koueza er pehed, tenn anezañ ha taol anezañ pell diouzit. Gwelloh eo dit koll eul lagad pe unan euz da izili, eged na ve kastizet da gorr a-béz e-pad an oll amzer.

³⁰ «Ma ra da zorn dehou dit koueza er pehed, troh anezañ, ha stlap anezañ pell diouzit. Gwelloh eo dit koll unan euz da izili, eged na ve kastizet da gorr a-béz e-pad an oll amzer.

³¹ «Lavaret ez eus bet ive: An hini a gas kuit e wrég a dle rei dezi eur skrid a zilez. ³² Med me 'lavar deoh: An neb a gas kuit e wrég, nemed ha serh (9 bis) e vije, a boulz anezi d'an avoultriñj. Hag an neb a zimez d'eur vaouez dilezet a zo avoultrer.

³³ «Klevet ho-peus ez eus bet lavaret d'on Tadou: Ne ri ket touadennoù faoz; gra ar pezh az-peus prometet da Zoue. ³⁴ Med me 'lavar deoh chom hep toui e doare e-béd, na dre an neñv a zo tron Doue, ³⁵ na dre Jeruzalem a zo kêr ar Roue braz.

³⁶ «Na dou ket kennebeud war da benn da unan, n'az-peus ket an disterra galloud war da vleod da zigas anezo gwenn pe zu.

³⁷ «Lavarit hepkén: Ya, mar d-eo ya! Nann, mar d-eo nann! Ar pezh a lavarer ouzpeñn a zeu a-berz an droug-spered.

³⁸ «Gouzoud a rit e veze lavaret: Lagad evid lagad, dant evid dant. ³⁹ Me 'lavar deoh chom heb enebi ouz an dén fallagr; er hontrol, tro da jod kleiz ouz an hini a sko ganit war da jod dehou.

⁴⁰ «Ma fell dezañ ober prosez dit evid kaoud da zae, lez gantañ ive da vantell. ⁴¹ Ma teu unan bennag da ober dit mond gantañ e-pad eun hanter leo, chom gantañ e-pad eul leo penn-da-benn.

⁴² « Ro d'an neb a houlenn. Na dro ket kein d'an hini a houlenn diganit presta dezañ.

⁴³ « Klevet ho-peus e veze lavaret : Karit ho nesa ha kasait hoh enebour. ⁴⁴ Med me 'lavar deoh : Karit hoh enebourien, pedit evid ar re ho-peus da houzañv ganto, ⁴⁵ evid beza evel-se gwir vugale d'ho Tad euz an neñv, Eñ hag a ra d'e heol para war an dud fall koulz ha war ar re vad, ha d'ar glao koueza war an dud a zo santel koulz ha war ar re n'int ket.

⁴⁶ « M'ho-peus karantez evid ar re ho kar, peseurt digoll a hellfeh da hortoz ? ⁴⁷ Ma ne zaludit nemed ho preudeur, petra a zisheñvel a rit ? Ar bayaned zokén a ra kemend-all. ⁴⁸ Ra vo parfet ho madèlèz evel m'eo parfet ho Tad hag a zo en neñv ».

Pennad VI

OBER ALUZENN

¹ « Diwallit da ober hoh oberou mad dirag an dud evid beza gwelet ganto, pe n'ho-pezo digoll e-béd digand ho Tad hag a zo en neñv.

² « Neuze eta, pa rit aluzenn, na zonit ket ar horn-boud dirazoh, evel ma ra ar re a vez er zinagogou ha war ar ruiou, o klask sellou an dud evid beza meulet ganto. E gwirionez m'hel lavar deoh, bez' o-deus dija o 'fae.

³ « Med c'hwi, pa rit aluzenn, ra jomo ho torn kleiz hep gouzoud petra 'ra ho torn dehou, ⁴ hag evelse e chomo kuzet hoh aluzenn, hag ho Tad a wél pep tra guzet henn talvezo deoh ».

AR BEDENN

⁵ « Pa vezit o pedi ive, na rit ket evel ar bilpouzed, a gar ober o 'fedennou en o-zav er zinagogou ha war ar plasennou, evid beza gwelet gand an dud. E gwirionez m'hel lavar deoh, bez' o-deus dija o 'fae.

⁶ « C'hwi, pa bedit, it en ho kambr, serrit an nor warnoh, ha pedit ho Tad hag a zo aze el leh kuz. Ho Tad hag a wél pep tra guzet henn talvezo deoh.

⁷ « Pa vezit o pedi, na randonit ket evel ar bayaned, a gréd dezo eo dre 'forz komzou e vezint selaouet. ⁸ Na rit ket eta eveldo. Ho Tad a oar euz petra ho-peus ezomm, a-raog m'ho-pefe greet ho koulenn ».

AR BATER

⁹ « C'hwi eta a bedo evel-henn :

« On Tad hag a zo en neñv,

« Ra vo santelleet da ano,

¹⁰ « Ra zeuio da Rouantèlèz,

« Ra vo greet da volontez war an douar evel en neñv.

¹¹ « Ro deom hirio or bara pemdezieg.

¹² « Pardon deom or pehejou,

evel ma pardonom d'ar re o-deus manket ouzom.

¹³ « Mir ouzom da goueza e tentadur,

« Med on diwall diouz an droug.

¹⁴ « Rag ma pardonit d'an dud o mankou, ho Tad euz an neñv a bardono deoh ive. ¹⁵ Med, ma ne bardonit ket d'an dud, ho Tad kennebeud ne bardono ket deoh ho pehejou ».

AR YUN

¹⁶ « Ha pa rit yun, na vezit ket evel ar bilpouzed a ziskouez o 'fennou distruj, evid ma vo sklêr d'an dud e reont yun. E gwirionez m'hel lavar deoh, bez' o-deus bet dija o 'fae.

¹⁷ « C'hwi, pa rit yun, taolit louzou c'hwez-vad war ho penn ha gwalhit ho pizach. ¹⁸ Evel-se ne vo ket anavezet gand dén e-béd emaoñ o yun, nemed gand ho Tad a zo e pep leh kuz, hag ho Tad hag a wél pep tra guzet henn talvezo deoh ».

AR GWIR DENZOR

¹⁹ « Na zastumit ket deoh teñzoriou war an douar, el leh ma teu ar preñved hag an tartouzed a-benn euz pep tra, el leh ma teu al laeron da doulla ar mogerious ha da skrapa ganto.

²⁰ « Med dastumit teñzoriou en neñv, el leh ne ra droug na tartouzed na preñved, el leh ne zeu ket al laeron da doulla ha da skrapa ganto. ²¹ Rag el leh m'ema ho teñzor ema ive ho kalon.

²² « Lamp ar horv eo al lagad. Mar d-eo sklêr da lagad, da gorr a-béz a vo er sklerijenn »!

²³ Med mar d-eo klañv da lagad, da gorr a-béz a vo en deñvalijenn. Neuze'ta mar d-eo teñvalijenn ar sklerijenn a zo ennout, pebez teñvalijenn!

DOUE PE ARHANT

²⁴ « Ne hell dén servicha daou vestr; pe e-no kasoni ouz unan ha karantez ouz egile, pe e karo unan hag e tisprijo egile. N'hellit ket servicha Doue hag an arhant.

FIZIANS E PROVIDANS DOUE

²⁵ « Setu perag e lavaran deoh: « Na vezit ket enkrezet gand ho puez, o klask gouzoud petra ho-po da zebri ha penaoz e vezoh gwisket; daoust ha ne dalv ket ar vuez muioh eged ar boued, hag ar horv hirroh eged an dillad?

²⁶ « Sellit ouz al laboused a nij a-zioh ho penn. N'ouzont nag hada na medi, na dastum er grignoliou, koulskoude e vezont maget gand ho Tad euz an neñv. Daoust ha ne dalvezit ket muioh egeto?

²⁷ « Pehini ahanoh a hell dre e nerz e-unan, astenn e vuez euz eun ilinad hepken?

²⁸ « Ha perag beza nehet diwar-benn ho tillad? Sellit penaoz e kresk lili ar mēziou, n'ouzont na labourad na neza.

²⁹ Ha me 'lavar deoh, ar Roue Salomon e-unan, e-kreiz e hloar, n'oa ket gwisket ken kaer hag hini pe hini anezo.

³⁰ « Ma teu eta Doue da wiska ken kaer yeot ar mêziou, a zo beo hirio hag a vo taolet en tan warhoaz, pegement muioh ne ray ket evidoh, tud laosk en ho feiz.

³¹ « Bezit eta dineh ha na lavarit ket : petra on-devezo da zebri, petra on-devezo da eva ? Gand petra e vezim gwisket ? ³² « An oll draou-ze ema ar bayaned war glask anezo, heb ehan. Goûd a oar mad ho Tad euz an neñv ho-peus ezomm euz an oll draou-se.

³³ « Klaskit da genta Rouantèlèz an neñv hag e zantèlèz, hag an oll draou-ze a vo roet deoh war ar marhad.

³⁴ « Na vezit ket nehet gand an deiz a warhoaz. An deiz da zond a gemero preder gantañ e-unan. Da bep devez eo a-walh e lod a boan ».

Pennad VII

AR BLOUZENN HAG AN TREUST

¹ « Na varnit ket ha ne vezoh ket barnet. ² Rag en doare ma varnoh e vezoh barnet, ha gand ar muzul ho-po muzuliet gantañ e vo muzuliet deoh ive.

³ « Petra ez-peus da zelled ouz ar blouzenn a zo e lagad da vreur ? Hag an treust a zo en da lagad da unan ne welez ket ? ⁴ Ha penaoz lavared d'az preur : Va lez da denna ar blouzenn a zo en da lagad, pa 'z eus eun treust en da hini ?

⁵ « Dén faoz 'zo ahanout ! Tenn da genta an treust a zo en da lagad, ha neuze e weli sklêr evid tenna ar blouzenn euz lagad da vreur.

⁶ « Na roit ket d'ar chas ar pez a zo sakr, ha na daolit ket perlez d'ar moh gand aon na zeufent d'o bresa ha da zistrei ouzoh d'ho trailla.

⁷ « Goulennit hag e vo roet deoh ; klaskit hag e kavoh ; skoit hag e vo digoret deoh : ⁸ Rag an neb a houlenn a reseo, an neb a glask a gav, hag an neb a sko war an nor a vez digoret dezañ.

⁹ « Piou ahanoh, ma houlenn e vab bara digantañ, a roio dezañ eur mên ? ¹⁰ Pe ma houlenn eur pesk, a roio dezañ eun naer ? ¹¹ Neuze 'ta, pegwir, c'hwi, tud fallagr ahanoh, a oar rei traou mad d'ho pugale, pegement muioh e roio ho Tad euz an neñv traou mad d'ar re a houlenn digantañ.

¹² « Setu eta, grit d'ar re all kement ho-peus c'hoant a rafent evidoh, rag aze ema al Lezenn hag ar Brofeted »,.

DAOU HENT A ZO

¹³ « Antreit dre an nor striz, rag frank ha ledan eo an hent a gas da goll ; niveruz eo an dud a gemer an hent-se. ¹⁴ Rag eñk eo an nor, ha striz an hent a gas d'ar vuez, ha rouez eo ar re a gav anezañ.

¹⁵ « Diwallit ouz ar 'falz-profeted, a zeu davedoh gwisket evel deñved, med a zo bleizi kriz anezo en diabarz. ¹⁶ Diouz o 'frouez eh anavezoh anezo : daoust hag e vez kutuillet rezin war spern ha fiez war an askol ?

¹⁷ « Kement gwezenn vad a ro frouez mad, ha kement gwezenn 'fall a ro frouez fall. ¹⁸ Ne hell ket eur wezenn vad dougenn frouez fall, nag eur wezenn 'fall dougenn frouez mad. ¹⁹ Kement gwezenn ha na zoug ket frouez mad e vez trohet ha taolet en tan. ²⁰ Diouz o 'frouez eta eh anavezoh anezo »,.

AR WIR ZISKIBIEN

²¹ « N'eo ket o lavared din : « Aotrou ! Aotrou ! » eo ez eer e Rouantèlèz an neñv, med oh ober bolontez va Zad a zo en neñv.

²² « Kalz a lavaro din en deiz-se (10) : « Aotrou ! Aotrou ! daoust ha n'eo ket en da ano eo on-eus komzet ? ha n'eo ket en

da ano eo on-eus argaset an droug-spered? ha n'eo ket en da ano eo on-eus greet burzudou?»

²³ «Neuze e respontin dezo: «N'am-eus biskoaz hoh anavezet. It pell diouzin, c'hwi hag a ra an droug. ²⁴ Evel-se eo heñvel an hini a zelaou va homzou hag a heuill anezo, ouz eun dén a skiant vad savet ti gantañ war ar garreg. ²⁵ Ar glao a zo kouezet, an dour-beuz-a zo dirollet, an avelioui o-deus c'hwez-zet gand kounnar war an ti. N'eo ket kouezet en e boull, diazezet ma oa war ar roh.

²⁶ «Med an dén a zelaou va homzou, ha na zent ket outo, a zo heñvel ouz eun dén diskiant e-neus savet e di war an trêz. ²⁷ Ar glao a zo kouezet, ar pil-dour a zo deuet, an avelioui a zo savet hag o-deus c'hwez-zet war an ti. Koueza 'ra en e boull hag e koll an dén pep tra».

²⁸ P'e-noa Jezuz echuet gand ar homzou-ze, e oe skoet an dud gand e gelennadurez. ²⁹ Rag o helenn a ree evel dén hag e-neus beli ha n'eo ket evel ar skribed.

Pennad VIII

PARE AN DEN LOR

¹ P'edo o tiskenn diwar ar menez, ez eas d'e heul eur bobl vraz a dud. ² Ha setu eun dén lor, o veza tosteet, a stouas dirazañ en eur lavared:

— «Aotrou, ma karez e hellez va farea».

³ Jezuz, oh astenn e zorn, a douchas outañ hag a lavaras:

— «Me a 'fell din, bez pareet».

Ha kerkent e oe pareet euz al lorgnez. ⁴ Hag e lavaras Jezuz dezañ:

— «Taol evez na lavarfes netra da zén, med kee d'en em ziskouez d'ar beleg, ha kinnig ar prov gourhemennet gand Moizez, ma talvezo kement-se evito da gréd. (11).

PARE SERVICHER EUR HANTENER

⁵ O veza m'edo Jezuz oh antreal e Kafarnaom, e teuas davetañ eur hantener hag a reas outañ ar bedenn-mañ :

⁶ — « Aotrou, va zervicher a zo war e wele, em zi, seizet e izili, ha diwaska 'ra poaniou kriz ».

⁷ Jezuz a lavaras dezañ :

— « Mond a rin hag e parein anezañ ».

⁸ Ar hantener a respontas :

— « Aotrou, n'on ket din e teufes em zi, med lavar eur gér hepkén hag e vo pare va zervicher. ⁹ Rag me a zo dindan galloud ar re all hag am-eus soudarded dindannon, hag e lavaran da unan mond hag ez a, da unan all dond hag e teu, d'am zervicher ober an dra-mañ, hag e ra ».

¹⁰ O kleved kement-se, e oe estlammet Jezuz hag e lavaras d'ar re a oa ouz e heul :

— « E gwirionez, m'hel lavar deoh, n'em-eus ket kavet eur seurt feiz e Bro-Israel, ¹¹ ha lavared a ran deoh e teuio kalz tud euz ar Zao-Heol, hag euz ar Huz-Heol, hag a gemero plas ouz taol gand Abraham, Izaag ha Jakob, e Rouantèlèz Doue, ¹² e-keid ha ma vo bugale ar Rouantèlèz taolet er-mêz, en deñvalijenn; eno e vo daelou ha skrignadeg dent ».

¹³ Neuze e lavaras Jezuz d'ar hantener :

— « Kee ha ra vo greet dit hervez da 'feiz ».

D'an eur-ze, end-eün, e oe pareet ar zervicher.

PARE MAMM-GAER PER

¹⁴ Jezuz a zeuas neuze da di Bèr, hag a gavas mamm-gaer hemañ, war he gwele, gand an derzienn. ¹⁵ Touch a reas ouz he dorn, hag ez eas an derzienn diouti. Sevel a reas raktal hag e serviche anezo.

¹⁶ Deuet an abardaez-noz e oe digaset dezañ kalz tud hag a oa dindan galloud an droug-spered. Kas a reas ar sperejou kuit gand eur gér hag e pareas an oll glañvourien, ¹⁷ evid ma teufe da wir komz ar profet Izaiaz: « *Kemeret e-neus warnañ e-unan or zempladurez, ha sammet or hleñvejou* ».

¹⁸ O weled eun niver braz a dud en-dro dezañ, e roas Jezuz urz da vond en tu all d'al lenn.

MOND DA HEUL JEZUZ

¹⁹ Eur skrib a dosteas hag a lavaras dezañ:

— « Mestr, heulia 'rin ahanout n'eus forz da beleh ez i ».

²⁰ Ha Jezuz da respont dezañ:

— « Al lern o-deus o zoullou, ha laboused an neñv o neiziou, Mab an Dén (12) a-vad n'e-neus leh e-béd da harpa e benn ».

²¹ Unan euz e ziskibien a lavaras dezañ:

— « Aotrou, va lez da vond da interri va zad ».

²² Med Jezuz dezañ:

— « Deus d'am heul, ha lez ar re varo da interri ar re varo ».

AR WALL-AMZER TORRET

²³ Pignad a reas er vag hag an diskibien d'e heul. ²⁴ Ha setu ma tirollas war ar mor eur gwall daol-amzer ken na oe ar vag dare da veza goloet gand an tarziou (13). Eñ a-vad a oa kousket. ²⁵ int-i a dosteas outañ hag e zihunas en eur lavared:

— « Mestr, deus d'or zikour, emaom o vond da goll ».

²⁶ Lavared a reas dezo:

— « Perag ho-peus aon, tud laosk en ho feiz? »

Neuze, en e-zav, e hourdrouzas an avelioug hag ar mor hag e teuas kalmijenn vraz. ²⁷ An dud estlammet a lavare:

— « Peseurt dén eo hemañ ma sent outañ an avelioug hag ar mor zokén! ».

PARE DAOU ZEN DALHET GAND AN DROUG-SPERED

²⁸ Pa oe digouezet en tu all d'al lenn, e Bro-Hadara, e teuas en arbenn dezañ daou zén dalhet gand an droug-sperejou, o tond er-mêz euz ar beziou. Ken kriz e oant ma ne helle dén tremen dre an hent-se. ²⁹ Setu int-i da grial:

— « Petra 'glaskez ouzom, Mab Doue, daoust ha deuet out amañ evid or bourrevia a-raog ar poent? »

³⁰ Hogen, nepell ahano e oa eur vandenn vraz a voh o peuri, ³¹ hag an droug-sperejou a aspede Jezuz en eur lavared:

— « Ma teuez da gas ahanom kuit, gra deom mond er vandenn voh-se ».

³² — « Kit, emezañ dezo ».

Hag int-i ha mond er-mêz hag antreal er moh. Ha setu ar vandenn voh a-béz en em daolas el lenn diwar an tornaod hag e oent beuzet er mor.

³³ Ar vesaerien e dehas kuit. Emgavet e kêr e rojont da anaoud pep tra ha kement a oa c'hoarvezet gand an daou zén a oa e dalh an droug-sperejou.

³⁴ Ha setu oll dud Kêr ha mond en arbenn da Jezuz. Kerkent ha beza e welet e lavarjont dezañ mond kuit diwar o douar.

Pennad IX

PARE AN DEN SEIZET

¹ Jezuz a bignas er vag, a dreuzas en-dro al lenn, hag a zeuas d'ar gêr (14). ² Digaset e oe dezañ eun dén seizet astennet

war eur gwele. O weled o 'feiz e lavaras Jezuz d'an dén seizet :

— « Bez fiziañs, va mab, pardonet eo dit da behejou ».

³ Lod euz ar skribed a lavaras enno o-unan :

— « Blasfemi a ra an dén-se ! »

⁴ — « Jezuz hag a ouie ar pezh a zoñjent a lavaras :

— « Perag ar zoñjou fall-se en ho kalonou ? ⁵ Petra eo an êsa : Lavared : Pardonet eo dit da behejou, pe lavared ; sav ha kerz ! Mad ! evid ma ouezoh e-neus Mab an Dén, war an douar, galloud da bardoni ar pehejou : ⁶ Sav ! emezañ neuze d'an dén seizet, kemer da wele ha kee d'ar gêr ».

⁷ An dén a zavas hag a yeas d'ar gêr. ⁸ O weled kemend-all, an dud a grogas spont enno hag a rentas gloar da Zoue e-neus roet eur seurt galloud d'an dud.

JEZUZ A HALV MAZE

⁹ Hag ahano, en eur dremen, e welas Jezuz eun dén anvet Maze, azezet ouz bureo, ar maltoutéréz (15), hag e lavaras dezañ :

— « Deus d'am heul ».

An dén a zavas hag a yeas d'e heul.

¹⁰ E-pad m'edo ouz taol, en ti, e teuas kalz publikaned ha peherien da gemered plas gantañ hag e ziskibien. ¹¹ O weled kement-se e lavaras ar Farizianed d'an diskibien :

— « Penaoz eta e hell ho Mestr debri gand Publikaned ha peherien ? »

¹² Jezuz a glevas hag a respontas :

— « N'eo ket an dud yah eo o-deus ezomm medisin, med ar re glañv. ¹³ It da zeski petra 'dalv ar homzou-mañ : « *N'eo ket provou eo a glaskan, med karantez* ». N'on ket deuet da helver an dud just (16) med ar beherien ».

DIWAR-BENN AR YUN

¹⁴ Neuze e teuas diskibien Yann d'e gavoud ha da lavared dezañ :

— « Perag 'ta, en-dra ma yunom, ni hag ar Farizianed, ne yun ket da ziskibien-te ? »

¹⁵ — « Ha Jezuz respont dezo :

— « Daoust hag an dud pedet d'an eured a hell beza e kañv e-keid ha m'ema ganto an dén-nevez ? Med dond a ray eur mare hag e vo lamet diganto ar pried, ha neuze eo e yunint.

¹⁶ « Dén e-béd ne gemer eur peñsel nevez da lakad war eur pez dillad koz ; rag an tamm nevez a zach war an tamm dillad koz ha ne vo nemed brasoh a ze ar rogadenn.

¹⁷ « Ne vez ket laket gwin nevez e sehier-lèr koz, a-hend-all e tarz ar zehier-lèr hag e vez skuillet ar gwin ha kollet ar zehier-lèr. Er hontrol, laket e vez ar gwin nevez e sehier-lèr nevez (17), hag e vez mired evel-se an eil hag egile ».

DASORH MERH JAIR

¹⁸ P'edo Jezuz o komz evel-se, e tosteas outañ eun dén a reñk uhel, hag en eur stoui dirazañ e lavaras dezañ :

— « Va merh a zo o paouez mervel, med deus da astenn da zorn warni heg e vevo ».

¹⁹ Jezuz a zavas hag a yeas d'e heul gand e ziskibien. ²⁰ Ha setu eur vaouez, klanv gand ar holl-gwad abaoe daouzeg vloaz, a dosteas a-dreñv dezañ, hag a douchas ouz bevenn e vantell. ²¹ Lavared a ree enni he-unan : Ma teuan a-benn, netra nemed da douch ouz e vantell, e vezin saveteet.

²² Med Jezuz o tistrei hag ouz he gweled a lavaras.

— « Bez fiziañs, va merh, da 'feiz he-deus da zaveteet ». Ha kerkent e oe saveteet ar vaouez.

²³ Pa zigouezas Jezuz e ti an dén a reñk uhel, o weled ar 'fleüterien hag an dud, difred ganto (18), e lavaras dezo :

²⁴ — « It er-mêz ! N'eo ket maro ar plahig ; kousket eo ».

Hag e reent goap anezañ. ²⁵ Pa oe laket an dud er-mêz, eh antreas. Kregi a reas e dorn ar plahig hag houmañ a zihunas.

²⁶ Dre ar vro a-béz e redas ar vrud a gement-se.

PARE DAOU ZEN DALL

²⁷ O veza m'edo Jezuz o vond gand e hent, e teuas war e lerh daou zén dall en eur grial :

— « Bez truez ouzom, Mab David ! »

²⁸ Pa oe eet Jezuz en ti, e tosteas an daou zén dall outañ hag e lavaras Jezuz dezo :

— « Ha kredi a rit e hellan ober kement-se ? »

— « Ya, Aotrou, emezo ».

²⁹ Neuze e touchas ouz o daoulagad en eur lavared :

— « Ra vo greet deoh hervez ho feiz ».

³⁰ Hag e tigoras raktal o daoulagad. Med Jezuz, rust dezo :

— « Diwallit na ve gouezet kement-se gand dén e-béd ! »

³¹ Med ar re-mañ, a-veh er-mêz, a gomzas diwar e benn dre ar vro a-béz.

PARE AN DEN MUD

³² P'edont o vond er-mêz e oe digaset dezañ eun dén mud dalhet gand an droug-spered. ³³ Eur wech argaset an droug-spered e komzas an hini mud. Estlammet e oe an dud, hag e lavarent :

— « Biskoaz n'eus bet gwelet kemend-all en Israel ».

³⁴ Med ar Farizianed a lavare;

— « Dre briñs an droug-sperejou eo e kas kuit an droug-sperejou ».

JEZUZ DIRAG AR BOBL HEP PASTOR

³⁵ Jezuz a yee dre an oll gêriou ha kêriadennou, en eur gelenn er zinagogou. Embann a ree Kelou Mad ar Rouantèlèz (19). Parea 'ree pep kleñved ha pep langis.

³⁶ O weled ar bobl tud a oa dirazañ, e-noe Jezuz truez outo, rag skuiz ha fallgalonet e oant, evel deñved hep pastor.

³⁷ Neuze e lavaras d'e ziskibien:

— « Braz eo an east. An eosterien a-vad a zo nebeud anezo. Pedit eta mestr an east, ma kaso eosterien d'e bark ».

Pennad X

AN DAOUZEG ABOSTOL

¹ Gelper a reas neuze e zaouzeg diskibl, hag e roas dezo galloud war an droug-sperejou, evid o has kuit ha rei ar pare euz n'eus forz peseurt kleñved pe zempladurez.

² Setu amañ anoiou an daouzeg abostol:

Ar henta, Simon, anvet Pèr, hag Andre e vreur, Jakez, mab Zebede hag e vreur Yann. ³ Filip ha Bartelemi, Tomaz ha Maze ar publikan, Jakez mab Alfe ha Tadde, ⁴ Simon ar Greduz (20) ha Judaz Iskariot, an hini a dlee gwerza Jezuz.

⁵ — « Goulenn a ran diganeoh, emezañ, chom hep mond war-zu ar bayaned, ha chom hep antreal e kêr e-béd euz ar Samari.

⁶ « It kentoh war-zu an deñved dianket euz pobl Israel.

⁷ « Dre ma 'z eoh, roit da anaoud eo tostig Rouantèlèz Doue. ⁸ Roit ar pare d'ar re glañv, glannait an dud lor, roit ar

vuez d'ar re varo, argasit an droug-sperejou. Resevet ho-peus evid netra, roit evid netra.

⁹ « Na gemerit ganeoh nag aour nag arhant, na moneiz en ho kouriz, ¹⁰ na sah e-béd evid an hent, na diou zae, na boutou na baz, rag al labourer eo dleet dezañ e voued.

¹¹ « Kement kêr ha kement kêriadenn ma 'z eoh enno, goulennit piou a zo din d'ho tigemer, ha chomit en e di beteg ma 'z eoh kuit.

¹² « En eur antreal en ti, saludit. ¹³ Ha mar d-eo din an ti-ze, ra ziskenno warnañ ho peoh, ha ma n'eo ket din ra zistroio warnoh ho peoh.

¹⁴ « Ma ne 'fell ket d'an dud ho tigemered, na selaou ho komzou, it er-mêz euz an ti-ze, pe euz ar gêr-ze, en eur heja ar bouldrenn euz ho treid.

¹⁵ « E gwirionez m'hel lavar deoh, ne vezor ket ken rust, da zeiz ar varn, e-keñver Sodom ha Gomor (21), hag e-keñver ar gêr-ze.

¹⁶ « Setu m'ho kasan evel deñved e-touez ar bleizi. Bezit eta leun a evez evel naered, ha didroidell a galon evel koulmed.

GWALL-GASET E VEZOH

¹⁷ « Diwallit ouz an dud ! Ho kas a raint dirag al lezvarn. Ho skourjeza 'raint en o zinagogou. ¹⁸ Kaset e vezoh dirag ar gouarnourien hag ar rouaned, ablamour din. Eun testeni e vo kement-se evito hag evid ar bayaned.

¹⁹ « Pa vezoh evel-se, laket etre o daouarn, na vezit ket enkrezet gand gouzoud petra ha penaoz respont. Ar pez ho-pezo da lavared a vo roet deoh da houzoud d'ar mare-ze. ²⁰ Ha n'eo ket c'hwi eo a gomzo, med Spered ho Tad eo a gomzo ennoh.

²¹ « Ar breur a roio e vreur evid beza laket d'ar maro, hag an tad e grouadur, ar vugale a zavo a-eneb d'o herent hag a lakaio o hondaoni d'ar maro.

²² « Kas o-dezo an oll ouzoh ablamour d'am ano, med an hini a zalho mad beteg ar fin, hennez a vo saveteet.

²³ « Ma vez klasket war ho lerh e kêr pe gêr, tehit d'eur gêr all. E gwirionez, m'hel lavar deoh, n'ho-pezo ket greet tro kêriou Israel, a-raog distro Mab an dén.

²⁴ « N'eo ket an diskibl uhelloh eged e vestr, nag ar zervicher uhelloh eged e Aotrou... ²⁵ A-walh eo d'an diskibl beza par d'e vestr, ha d'ar zervicher beza par d'e aotrou... M'o-deus greet Beelzeboul euz ar penn-tiègèz, petra ne lavarint ket euz e dud?

²⁶ « N'ho-pet ket aon razo, rag n'eus netra kuzet ha na zeufe ket da veza anavezet, netra en deñvalijenn ha na zeufe ket er sklêrijenn.

²⁷ « Ar pezh a lavaran deoh en deñvalijenn, henn lavarit er sklêrijenn; hag ar pezh a lavaran deoh e plég ho skouarn, embannit anezañ diwar an toennou (22).

²⁸ « N'ho pet ket aon rag ar re a laz ar horv ha n'hellont ket laza an ene. Ho pet aon kentoh ouz an hini a hell kas da goll ar horv koulz hag an ene.

²⁹ « Daoust ha ne vez ket kavet daou holvan evid eur gwenneg, ha koulskoude, ne gouez hini anezo war an douar, heb aotre ho Tad.

³⁰ « Ha c'hwi, kement blevenn a zo war ho penn a zo kontet. ³¹ Bezit dienkrez; talvezoud a rit muih eged oll laboused an neñv.

³² « An hini a zisklerio dirag an dud beza a-du ganin, me, d'am zro, a zisklerio dirag va Zad beza a-du gantañ. ³³ Med kement hini am naho dirag an dud, me henn naho dirag va Zad a zo en neñv.

N'EO KET AR PEOH, MED AR HLEZE

³⁴ « N'it ket da gredi e vefen deuet da zigas ar peoh war an douar; n'on ket deuet de zigas ar peoh, med ar hleze! ³⁵ Deuet

on da lakad ar mab da zével a-eneb d'e dad, ar verh a-eneb d'he mamm, ar verh-kaer a-eneb d'he mamm-gaer; ³⁶ hag enebourien pep hini a vo tud e di.

³⁷ « An neb a gar e dad pe e vamm muioh egedon, n'eo ket din ahanon. An neb a gar e vab pe e verh muioh egedon, n'eo ket din ahanon.

³⁸ « An neb ne zamm ket e groaz evid dond d'am heul, n'eo ket din ahanon. ³⁹ An neb a 'fell dezañ savetei e vuez he hollo.

⁴⁰ « An neb a ro digemer deoh, a ro digemer din va-unan; hag an neb a ro digemer din, a ro digemer d'an hini e-neus va digaset.

⁴¹ « An neb a ro digemer d'eur profet, e-giz profet, e-no digoll eur profet. An neb a zigemer eun dén just, e-giz dén just, e-no digoll eun dén just.

⁴² « An neb a roio da eva, pa ne ve nemed eur werennad dour frésk, da unan euz ar re vihanna, ablamour ma 'z eo diskibl din, ne jomo ket heb beza digollet ».

Pennad XI

JEZUZ A RO TESTENI DA YANN-VADEZOUR

¹ Echu gantañ da rei e genteliou d'e zaouzeg diskibl, ez eas Jezuz kuit ahano, evid mond da gelenn ha da brezeg en o hêriou.

² Yann-Vadezour, en e brizon, e-noa klevet ano euz ar pezh a ree ar Hrist. Kas a reas daou euz e ziskibien da houlenñ outañ:

³ « Daoust ha te eo an hini a dle dond? pe unan all eo deom gortoz? »

⁴ Jezuz a respontas dezo:

— «It da lavared da Yann ar pezh a welit hag ar pezh a glevit: ⁵ Ar re zall a wél sklêr, ar re gamm a gerz, an dud lor a gav ar pare, ar re vouzar a glêv, ar re varo a adsao da veo, ar re baour a zo prezeget dezo an Aviel (23). ⁶ Eüruz an neb ne vezin-me ket eur skoill evitañ.»

⁷ P'edont o vond kuit, e komzas Jezuz d'ar bobl diwar-benn Yann:

— «Petra oh eet da weled er goueleh? Eur raosklenn hejet gand an avel? ⁸ Petra oh eet da weled? Eun dén gwisket gand dillad kaer? Med ar re a zo gwisket gand dillad kaer a zo o chom e paleziou ar rouaned.

⁹ «Med da weled petra oh eet? Da weled eur profet? Ya, m'hel lavar deoh, hag ouspenn eged eur profet. ¹⁰ rag eñ eo an hini a zo bet skrivet diwar e benn: «*setu ma kasan va hannad en da-raog, evid ma kempenno an hent dirazout*».

¹¹ «E gwirionez, m'hel lavar deoh: E-touez bugale ar gwragez, n'eus savet hini e-béd hag a ve brasoh e-ged Yann Vadezour. Koulskoude, ar bihanna e Rouantêlêz Doue a zo brasoh egetañ.

¹² Abaoe deveziou Yann ar Badezour (24), beteg bremañ, eo dre nerz ez eer e Rouantêlêz Doue, ha gand an dud taer eo ez a. ¹³ Rag an oll brofeted hag al Lezenn beteg Yann o-deus diouganet. ¹⁴ Ha ma fell deoh intent, eñ eo, end-eün, an Eli a dle dond. ¹⁵ An neb e-neus diskouarn da gleved, ra glevo!»

BARNEDIGEZ

¹⁶ «Ouz petra eo heñvel ar rummad tud-mañ? Heñvel eo ouz bugale, azezet war ar blasenn, o krial da re all: ¹⁷ Sonet on-eus deoh gand ar fleüt, ha n'ho-peus ket dañset; kanet on-eus deoh gwerziou kañv, ha n'ho-peus ket skoet war ho peultrin.

¹⁸ «Yann a zo deuet ha ne zebre na ne eve, hag o-deus lavaret: e dalh an droug-spered ema. ¹⁹ Mab an dén a zo deuet

hag a zebre hag a eve hag e lavaront: eul lonteg a zo anezañ, eun ever gwin, eur mignon d'ar bublikaned ha d'ar beherien. Med anavezet eo bet ar 'furnez diwar he oberou ».

GWAS-A-ZE D'AR HERIOU (25)

²⁰ Neuze e stagas d'ober tamallou d'ar hêriou e-noa greet enno an darn vuia euz e vurzudou, ablamour ma n'o-doa ket cheñchet buez.

²¹ — « Gwas-a-ze dit, Korozain! Gwas-a-ze dit Bet-saida! rag ma vije bet greet e Tir hag e Sidon ar burzudou greet en ho-touez, o-dije bet greet pinijenn abaoe pell 'zo, gand sae reun ha ludu.

²² « Ya, hel lavared an ran deoh, da zeiz ar varn ne vezor ket ken rust evid Tir ha Sidon hag evidoh-c'hwi.

²³ « Ha te Kafarnaom, ha savet e vezi beteg an neñv? Izelleet eo e vezi beteg an iverniou, rag ma vije bet greet e Sodom ar burzudou a zo bet greet ennout, e vije bet c'hoaz en he-zav kirio. ²⁴ Ya, m'hel lavar deh, e-keñver Sodom ne vezor ket ken rust da zeiz ar varn hag en da-geñver ».

BENNOZ D'AN TAD

²⁵ En amzer-ze e lavaraz Jezuz:

— « Tad, Mestr an nenñ hag an douar, dit e lavaran meuleudi da veza kuzet an traou-ze ouz an dud fur ha spere-deg, ha roet anezo da anaoud d'ar re vihan. ²⁶ Ya, Tad, plijet eo bet dit ober evel-se.

²⁷ « Gand va Zad eo bet roet din kement a zo, ha ne anavez dén ar Mab nemed an Tad, ha dén ne anavez an Tad nemed ar Mab hag an hini a blij d'ar Mab her rei dezañ da anaoud.

²⁸ « Deuit davedon, c'hwi hag a zo skuiz, c'hwi hag a blég dindan ho samm, ha me roio deoh diskuiz. ²⁹ Kemerit warnoh

va yeo; deuit d'ar skol ganin, rag me 'zo douz hag izel a galon, ha c'hwi a gavo gras. ³⁰ Éz eo va lezenn da heulia ha skañv ar zamm a roan da zougenn».

Pennad XII

AR PENNOU GWINIZ KUTUILLET

¹ En amzer-ze edo Jezuz o treuzi parkajou gwiniz da zeiz ar zabat, hag e ziskibien, naon dezo, en em lakeas da gutuill pennou-éd ha d'o debri. ² O weled kement-se e lavaras dezañ ar Farizianed:

— «Da ziskibien a ra eun dra difennet da ober d'an deiz sabat» (26).

³ Med eñ a respontas:

— «Ha n'ho-peus ket lennet ar pezh a reas David p'e-noe naon, eñ hag ar re a oa gantañ? ⁴ antreal a reas e ti Doue ha debri baraennou ar hinnig ha ne oa ket aotreet dezañ debri, na dezañ na d'ar re a oa gantañ, med netra nemed d'ar veleien.

⁵ «Pe n'ho-peus ket lennet el Lezenn e torr ar veleien ar zabat, da zeiz ar zabat, en templ, heb ober pehed e-béd?

⁶ «Hogen, me 'lavar deoh, ez eus amañ brasoh eged an templ. ⁷ Ma komprenfeh ar gomz-mañ: «*An drugarez eo a 'fell din, ha n'eo ket ar zakrifis*», n'ho-pefe ket kondaonet tud didamall. ⁸ Rag mestr eo Mab an dén war ar zabat.

PARE AN DEN DIZEHET E ZORN

⁹ Eet kuit ahano, eh antreas Jezuz en o zinagog. ¹⁰ Ha setu e oa eno eun dén eun dorn dizehet dezañ, hag int-i ober eur goulenn ouz Jezuz evid kaoud tro d'e damall:

— «Hag aotre a zo da rei ar pare d'eun deiz sabat?»

¹¹ Respont a reas:

— « Pehini ahanoh, ma n'e-neus nemed eun dañvadez ha ma kouez houmañ en eur 'foz d'eun deiz sabat, ne zeuio ket da gemer krog enni ha d'he zenna ahano?

¹² « Ha pegement muioh ne dalv ket eun dén war eun dañvadez. Aotre a zo eta d'ober vad d'eun deiz sabat ».

¹³ Neuze e lavaras d'an dén-ze:

— « Astenn da zorn ».

E astenn a reas hag e teuas e zorn da veza yah evel egile.

JEZUZ SERVICHER DOUE

¹⁴ Eet er-mêz, e talhas ar Farizianed kuzul a-eneb dezañ war an doare d'e gas de goll. ¹⁵ Med bet anaoudègèz dezañ-a gement-se, eh en em dennas Jezuz ahano. Eun niver braz a dud a yeas d'e heul, hag o farea a reas oll, ¹⁶ hag e tifennas outo krenn her rei da houzoud, ¹⁷ evid ma vefe sevenet komzou ar profet Izaiaz:

¹⁸ « *Setu va zervicher, harp a roan dezañ,
« an dén dibabet ganin, a gavan va dudi ennañ,
« va Spered a lakin warnañ,
« hag e roio da anaoud ar gwir
« d'ar poblou payan.*

¹⁹ « *Ne ho-po ket, ne zavo ket uhel e vouez,
« ne vo ket klevet war ar blasenn.*

²⁰ « *Ne 'flastro ket ar raosklenn vrevet,
« ne vougo ket ar vechenn a zo c'hoaz o tivogedi,
« ken na vo kaset gantañ ar gwir beteg an treh.*

²¹ « *Ennañ e lakaio ar poblou o fiziañs* ».

JEZUZ HA BEELZEOUL

²² Neuze e oe digaset dirazañ eun dén dalhet gand an droug-spered, dall ha mud, hag e pareas anezañ en doare ma komze ha ma wele sklêr.

²³ Kroget spont enno, e lavare an dud:

— «Daoust ha n'eo ket hemañ mab David?»

²⁴ Med o kleved kement-se, e lavare ar Farizianed:

— «Hennez ne argas an droug-sperejou nemed dre Veelzeboul, priñs an droug-sperejou».

²⁵ Jezuz hag a anaveze o zoñjou a lavaras dezo:

— «Kement rouantèlèz hag a zo dizunaniez enni a ya da 'fall. Na ti na kêr, dizunaniez enno, n'hellint chom en o-zav.

²⁶ Neuze, mar d-eo Satan a argas Satan, ez a a-eneb dezañ e-unan, penaoz eta e pado e rouantèlèz?

²⁷ «Ha mar d-eo dre Veelzeboul eh argasan an droug-sperejou, ho tiskibien deoh-c'hwi, dre biou e kasont anezo kuit? Evel-se, int-i o-unan a vezo ho parnerien.

²⁸ «Med mar d-eo dre Spered Doue eh argasan an droug-sperejou, neuze 'ta eo deuet beteg ennoh Rouantèlèz Doue.

²⁹ «Pe c'hoaz, penaos e vo gellet antreal e ti an dén kreñv hag ober ar skrab war e draou, heb beza da genta ereet an dén kreñv-ze? Neuze hepkén eo e vo gellet laerez ar pezh a zo en ti.

³⁰ «An neb n'ema ket a-du ganin a zo a-eneb din hag an neb ne zastum ket ganin a zo o forani. ³¹ Setu perag e lavaran deoh: Kement pehed ha kement blasfem a vo pardonet d'an dud, med ar blasfem a-eneb ar Spered-Santel ne vo ket pardonet dezo (27).

³² «An nep e-no komzet a-eneb Mab an dén, a vo pardonet dezañ, med an neb e-no komzet a-eneb ar Spered-Santel, ne vo pardonet dezañ, nag er béd-mañ, nag er béd all».

DIOUZ HE FROUEZ EO BARN AR WEZENN

³³ «Lakit eo mad ar wézenn, mad e vo ar frouez. Lakit ez eo klañv, klañv e vo ar frouez, rag diouz he 'frouez eo eh anavezer ar wezenn.

³⁴ « Gouenn naered 'zo ahanoh ! Penaoz a hellfeh lavared traou mad, fall evel ma 'z oh ? Rag euz ar pezh a garg ar galon eo e komz ar henou ?

³⁵ « An dén mad a denn traou mad euz e deñzor mad, hag an dén fall a denn traou 'fall euz e deñzor fall.

³⁶ « Hel lavared a ran deoh : kement droug-komz lavaret ganto, o-do an dud da renta kont anezo da zeiz ar varn. ³⁷ Rag diouz da gomzou e vezi diskleriet just ha diouz da gomzou e vezi kondaonet ».

SIN JONAZ

³⁸ Neuze e lavaras lod euz ar skribed hag euz ar Farizianed :

— « Mestr, ni 'garfe gweled eur zin euz da berz ».

³⁹ Respont a reas dezo :

— « Rummad fallagr hag avoultrer ! Goulenn a ra eur zin, ha sin all e-béd ne vo roet dezañ, nemed sin ar profet Jonaz.

⁴⁰ « Rag, evel ma oe Jonaz tri devez ha teir nozvez e kov ar pesk, evel-se e vo Mab an dén, é-pad tri devez ha teir nozvez, e korv an douar.

⁴¹ « Tud Niniv a zavo da zeiz ar varn gand tud ar rummad-mañ, hag a gondaono anezo, rag m'o-deus greet pinijenn diwar prezegennou Jonas, ha setu ma 'z eus amañ brasoh eged Jonaz.

⁴² « Da zeiz ar varn e savo rouanez ar Hreñsteiz gand tud ar rummad-mañ, hag e kondaono anezo, rag ma teuas euz penn pella an douar da zelaou furnez Salomon, ha setu ma 'z eus amañ brasoh eged Salomon ».

DISTRO AR SPERED-HUDUR

⁴³ « Pa vez eet ar spered-hudur er-mêz euz eun dén ez a dre al lehiou gouez o klask diskuiz ha ne gav ket. ⁴⁴ Neuze e

lavar: distrei a rin d'am zi ez on eet er-mêz anezañ; ha pa zigouez en-dro e kav an ti goullou nêteet ha fichet.

⁴⁵ « Hag ez a neuze da gemer gantañ seiz spered all falloh egetañ, hag antreet en ti e reont ennañ o demeurañs, hag e teu stad diweza an dén-mañ da veza falloh eged ar genta. Evel-se e c'hoarvezo gand ar rummad tud fallagr-mañ ».

GWIR 'FAMILL OR ZALVER

⁴⁶ O komz d'an dud edo c'hoaz, pa zigouezas e vamm hag e vreudeur (28). Er-mêz e oant chomet hag e klaskent komz outañ. ⁴⁷ Dond a reer da lavared dezañ:

— « Aze er-mêz, ema da vamm ha da vreudeur o klask komz ganit ».

⁴⁸ D'an hini e-noa digaset ar helou-ze dezañ, e respontas Jezuz:

— « Piou eo va mamm ha piou eo va breudeur? »

⁴⁹ Hag o tiskouez e ziskibien gand e zorn e lavaras:

— « Setu va mamm ha setu va breudeur. ⁵⁰ Rag an nep a ra boloñtez va Zad a zo en neñv, hennez a zo breur ha c'hoar ha mamm din ».

Pennad XIII

PARABOLENNOU AR ROUANTÈLÈZ (29)

¹ En devez-se, eet er-mêz euz an ti, edo Jezuz azezet war ribl ar mor. ² O veza ma teue eur bern tud en-dro dezañ, e sav er vag, ³ hag eh azez enni, e-keid ha ma chom an dud war an aot, ha Jezuz a gentelias anezo war galz a draou dre barabolennou.

PARABOLENN AN HADER

⁴ — « Eun hader, emezañ, a yeas da hada. E-pad m'edo oh hada, e kouez greun war gostez an hent. Mond a reont gand al laboused.

⁵ « Lod all a gouez war ar grae ; n'oa ket kalz a gondon ; diwan a reont buan rag n'oa ket a zonder douar. ⁶ Pa zavas an heol e oent skaotet ; dizehi 'rejont, rag n'o-doa ket a wrizioù.

⁷ « Lod all a gouez e-touez ar spern ; ar spern a greskas hag a vougas ar greun.

⁸ « Eul lodenn all a gouez en douar mad hag a daolas frouez : kant, tri-ugent, tregont evid unan.

⁹ « an hini e-neus diskouarn, ra glevo ! »

PERAG KOMZ DRE BARABOLENNOU

¹⁰ An diskibien a dosteas outañ hag a houlennas :

— « Perag e komzez dre barabolennoù ? »

¹¹ — « Deoh-c'hwi, emezañ, eo roet da anaoud misterioù Rouantêlêz an neñv, med d'ar re-mañ n'eo ket. ¹² Rag roet e vo d'an neb e-neus, hag e vo puill-puill ar pez e-no, med digand an hini n'e-neus ket e vo dilamet zokén ar pez e-neus.

¹³ Setu perag e komzan dre barabolennoù, o veza ma welont hep gweled, ma klevont hep klevet na kompren.

¹⁴ « Evel-se e teu da wir evito komzou ar profet Izaiaz :

Kaer ho-po klevet, ne intentoh ket,

« kaer ho-po selled, ne weloh ket.

¹⁵ « Poud eo deuet da veza spered an dud-se,

« Stanket o-deus o diskouarn,

« serret o-deus o daoulagad,

« gand aon na zeufe o daoulagad da weled,

« o diskouarn da glevet,

« o spered da intent,

« o halon da zistrei war ar mad,

« gand aon na zeufen da rei dezo ar pare » (30).

¹⁶ « Evidoh-c'hwi, eüruz ho taoulagad, pegwir e welont, ho tiskouarn, pegwir e klevont. ¹⁷ Gwir eo m'hel lavar deoh, nag a brofeted, nag a dud santel o-deus c'hoanteet gweled ar pez a welit, ha n'o-deus ket gwelet, klevet ar pez a glevit ha n'o-deus ket klevet.

¹⁸ « Selaouit 'ta parabolenn an hader :

¹⁹ « Pa glèv an dén Komz ar Rouantèlèz hep intent anezi, e tigouez an droug-spered, hag e kas gantañ kement a zo bet hadet e kalon an dén-se. Hennez eo an hent bet hadet warnañ.

²⁰ « An hini e-neus resevet an had en eun douar meinek, eo an dén a glèv ar Gomz, a zigemer anezi raktal gand joa, ²¹ med n'eus ket a wriziou ennañ, hedro eo, ha pa zeu enkreze pe heskinèrèz warnañ, diwar goust ar Gomz, e kouez dioustu.

²² « An hini e-neus resevet an had e-touez ar spern, eo an dén a glèv ar Gomz, med tregas ar vuez, touellèrèz ar madou, a voug ar Gomz, ha ne zav netra diwarni.

²³ « An hini e-neus resevet an had en douar mad, eo an hini a glèv ar Gomz hag a intent anezi, dougenn a ra frouez, kant, tri-ugent, tregont diwar unan ».

PARABOLENN AN DREOG

²⁴ Jezuz a foas dezo da gleved eur barabolenn all:

— « Heñvel eo Rouantèlèz Doue ouz eun dén e-neus hadet greun mad en e bark. ²⁵ Med e-pad m'oa kousket an dud, e tigouezas e enebour, hag a hadas d'e dro dreog e-touez ar gwiniz, hag ez eas kuit.

²⁶ « Pa greskas ar yeot, ha pa zeuas pennou en éd, neuze e oe gwelet ive an dreog. ²⁷ Servicherien a yeas da lavared d'ar mestr:

— « Mestr, daoust ha n'eo ket greun mad eo az-poa hadet en da bark? Perag eta ez eus dreog ennañ? »

²⁸ Eñ a respontas:

— « Eun enebour eo e-neus greet kement-se ».

Ar zervicherien a lavaras dezañ :

— « Ha c'hoant az-peus ez afem d'o zenna kuit? »

²⁹ Eñ a lavaras :

— « Nann, gand aon na zeufeh, en eur denna an dreog, da denna ive ar gwiniz da heul. ³⁰ Lezit an eil hag egile da greski asamblez, beteg an east... Ha da vare an east e lavarin d'an eosterien :

« Dastumit da genta an dreog hag endrammit anezañ d'e zevi : ar gwiniz a-vad, dastumit anezañ er hriñol ».

PARABOLENN AR HREUNENN ZEZO

³¹ Eur barabolenn all a roas dezo da glevet :

— « Heñvel eo Rouantèlèz Doue ouz eur hreunenn zezo, e-neus eun dén kemeret hag hadet en e bark. ³² ar bihanna eo euz an hajou. Med p'he-devez kresket e vez ar vrasa plantenn a boulz el liorz hag e sav zokén da wezenn, ken na zeu al laboused da neizia en he skourrou ».

PARABOLENN AR GOELL

³³ Eur barabolenn all a lavaras dezo :

— « Heñvel eo Rouantèlèz an Doue ouz eun tamm goell, kemeret gand eur vaouez, da gemmesk gand tri vuzuliad bleud, beteg ma sav an toaz en e béz ».

³⁴ Kement-se a lavare Jezuz dre barabolennou d'ar bobl, ha morse ne gomze dezo nemed dre barabolennou. ³⁵ Evel-se e teue da wir ar gomz lavaret gand ar profet :

« *Komz a rin dre barabolennou,*

« *hag embann traou kuzet abaoe ar penn kenta* ».

PARABOLENN AN DREOG DISPLEGET

³⁶ Neuze e tilezas an dud hag e teuas d'ar gêr hag e ziskibien a dosteas outañ hag a lavaras :

— « Displég deom sklêr parabolenn an dreog er park ».

³⁷ Respont a reas :

— « An hini a had ar greun eo Mab an dén. ³⁸ Ar béd eo ar park. Ar re a zo bugale ar Rouantèlèz eo ar greun mad. Bugale an droug eo an dreog. ³⁹ An enebour a had eo an diaoul. An eost eo fin ar béd. An eosterien eo an êlez.

⁴⁰ « Evel ma vez eta dastumet an dreog ha laket an tan ennañ, evel-se ive e vo kont da 'fin ar béd.

⁴¹ « Kas a raio e, Mab an Dén e êlez, hag e tastumint euz e Rouantèlèz, kement skwer 'fall ha kement dén a ra an droug, ⁴² hag e taolint anezo e-kreiz an tan. Eno e vo daelou ha skrignadeg dent. ⁴³ Neuze e skedo an dud just evel an heol, e Rouantèlèz o Zad. Kleved an neb e-neus diskouarn da gleved! »

AN TENZOR HAG AR BERLEZENN

⁴⁴ — « Heñvel eo Rouantèlèz Doue ouz eun teñzor-bet kuzet en eur park ha kavet gand eun dén : E guzed a ra en-dro, ha leun a levenez, ez a da werza kement e-neus, hag e prén ar park.

⁴⁵ « Heñvel eo c'hoaz Rouantèlèz Doue ouz eur marhadour o klask perlez kaer. ⁴⁶ Kavet gantañ eur berlezenn a dalvoudegez vraz, ez a da werza kement e-neus hag e prén anezi ».

PARABOLENN AR ROUED

⁴⁷ « Heñvel eo c'hoaz Rouantèlèz Doue ouz eur roued taolet er mor hag a zeu gantân pesked a bep seurt. ⁴⁸ Pa vez leun, e sach ar besketerien anezañ war an aot, hag eh azezont da zastum ar re vad e panerou, ha da daoler kuit ar re 'fall.

⁴⁹ « Evel-se e c'hoarvezo da 'fin ar béd. An Elez a zeuio, hag a zibabo ar re 'fall a-douez ar re just, ⁵⁰ hag e taolint anezo

e-kreiz an tan. Eno e vo daelou ha skrignadeg dent. ⁵¹ Ha komprenet ho-peus kement-se?».

— «Ya, emezo».

⁵² Eñ a lavaras dezo:

— «Setu perag, kement skrib deuet da veza diskibl Rouantèlèz Doue, a zo heñvel ouz eur penn-tiègèz hag a denn euz e deñzor traou nevez ha traou koz» (31).

JEZUZ O PREZEG E NAZARED

⁵³ Echuët gantañ e barabolennou, ez eas Jezuz kuit ahano.

⁵⁴ Erruet en e vro e kelenne anezo en o zinagogou en doare ma choment souezet ha ma lavarent:

— «Euz peleh e teu dezañ ar ⁵⁵ furnez hag ar burzudouze? Ha n'eo ket eñ Mab ar halvez? Daoust ha n'eo ket Mari ano e vamm? Hag ano e vreudeur, Jozef, Simon ha Jud? ⁵⁶ Hag e hoarezed, daoust ha n'emaint ket oll en on-touez? Euz a beleh e teu dezañ eta kement-se?»

⁵⁷ Feuket e oant gantān, med Jezuz a lavaras dezo:

— «Ne vez eur profet disprijet, nemed en e vro hag en e di».

⁵⁸ Ha ne reas ket eno kalz a vuzudou ablamour ma ne gredient ket.

Pennad XIV

HERODEZ HA JEZUZ

¹ En amzer-ze, e klevas Herodez, an tetrark (32), ar pez a veze lavaret diwar-benn Jezuz. ² Hag e lavaras d'e zervicherien:

— «Yann-Vadezour eo Eñ, savet a-douez ar re varo!
Ahano ar galloudou burzuduz a gaver ennañ».

MARO YANN-VADEZOUR

³ Rag greet e-noa Herodez tapoud krog e Yann, e jadenna hag e daoler er prizon, ablamour da Herodiadez, gwrég Filip, e vreur, ⁴ rag ma lavare Yann dezañ:

— «N'az-peus ket a zroad da gaoud anezi da wrég.»

⁵Buan a-walh e-nefe lakeet e laza, med aon e-noa rag ar bobl hag a ree eur profet euz Yann.

⁶ Hogen da geñver deiz-ha-bloaz ganedigez Herodez, e tañsas merh Herodiadez dirag an oll, hag e plijas kement da Herodez, ⁷ ma prometas dre le, rei dezi kement a houlennfe. ⁸ War ali he mamm e lavaras ar verh:

— «Ro din amañ, war eur plad, penn Yann-Vadezour».

⁹ Gláharet e oe ar roue, med ablamour d'e le ha d'an dud a oa gantañ ouz taol, e roas urz d'e rei dezi, ¹⁰ ha da zibenna Yann en e brizon.

¹¹ Digaset e oe ar penn war eur plad ha roet d'ar plah yaouank. Houmañ a roas anezañ d'he mamm.

¹² Diskibien Yann a zeuas da gerhad ar horv hag e interras. Goude ez ajont da gas kelou da Jezuz.

BURZUD AR BARA KRESKET

¹³ O veza klevet kement-se ez eas Jezuz kuit ahano dre vag, evid mond d'eul leh digenvez ha distro. Med ar bobl a glevas hag a yeas d'e heul war droad, euz eun nebeud kêriadennou.

¹⁴ Pa ziskennas en douar, e welas Jezuz eun niver braz a dud. Truez a gemeras outo, hag e pareas o hlañvourien.

¹⁵ Deuet an abardaez, e tosteas e ziskibien outañ hag e lavarjont:

— «Digenvéz eo al leh-mañ, ha diweznad eo dija. Dit digouvias an dud, ma 'z aint er hêriadennou da brena, peadra da zebri».

¹⁶ Med Jezuz a lavaraz dezo:

— «N'eo ket réd dezo mond kuit; roit dezo da zebri hoh-unan».

¹⁷ Hag int-i respont:

— «N'on-eus amañ nemed pemp baraenn ha daou besk».

¹⁸ — «Digasit anezo din amañ, eme Jezuz».

¹⁹ Neuze e reas d'ar bobl azeza war ar yeot, e kemeras ar pemp baraenn hag an daou besk, hag o sevel e zaoulagad warzu an neñv, e rentas bennoz. Terri a reas ar baraennou, ha rei anezo d'an diskibien, hag an diskibien o roas d'ar bobl (33)..

²⁰ An oll a zebras ouz o naon, hag e oe dastumet an tammou a jome a zilerh. Daouzeg panerad a oe anezo. ²¹ Ar re o-doa debret a oa war-dro pemp mil anezo, hep konta ar merhed hag ar vugale.

JEZUZ O VALE WAR AR MOR

²² Raktal e reas Jezuz d'e ziskibien sevel eñ vag, ha mond en e-raog en tu all d'ar mor, e-keid ha ma vefe eñ o tigouvias ar bobl.

²³ Goude m'e-noa digouviet anezo, e pignas war ar menez, en e bart e-unan, evid pedi. Deuet an noz, edo eno e-unan-penn.

²⁴ Ar vag a oa erruet dija eur pennad mad euz an aot, hejet gand an tonnou, rag a-eneb edo an avel.

²⁵ War-dro fin an noz (34), e teuas Jezuz war-zu enno o vale war ar mor. ²⁶ Ouz e weled o vale war ar mor e oe strafuillet an diskibien hag e lavarjont: Eur spes eo! Hag e

stagjont da grial gand ar spont. ²⁷ Med kerkent e komzas Jezuz outo :

— « Ho pet fiziañs, emezañ, me eo ! N'ho-pet ket aon ! »

²⁸ Neuze e komzas Pèr :

— « Aotrou, mar d-eo te an hini eo, ro urz din da vond beteg ennout war an dour ».

²⁹ — « Deus » eme Jezuz.

Ha Pèr diskenn euz ar vag ha bale war an dour da vond beteg Jezuz. ³⁰ Med o weled an avel a oa, e kemeras aon ennañ, hag o veza ma oa kroget da ziskenn en dour e krias :

— « Aotrou, sikour din ! »

³¹ Kerkent eh astennas Jezuz e zorn, e tapas krog ennañ hag e lavaras dezañ :

— « Dén laosk en da 'feiz ! Perag az-peus bet douetanñ ? »

³² Ha pa oent pignet er vag e torras an avel. ³³ Neuze ar re a oa chomet e-barz en em daolas e-harz e dreid hag a lavaras dezañ :

— « E gwirionez, te 'zo Mab da Zoue ! »

³⁴ Treuzet ganto al lenn, e touarjont e Jenezared.

³⁵ Anavezet e oe gand tud ar vro hag e kasjont kelou tro-war-dro. Digaset e oe dezañ an oll re glañv. ³⁶ Pedi a reent Jezuz d'o lezel da douch netra nemed ouz bevenn e vantell. Kement hini a douchas outi a oe pareet.

Pennad XV

TABUT DIWAR-BENN AR GIZIOU KOZ

¹ Neuze e teuas skribed ha Farizianed euz Jeruzalem da gavoud Jezuz gand ar goulennou-mañ :

² — « Perag e torr da ziskibien boazamañchou ar re goz? Rag ne walhont ket o daouarn a-raog o 'frejou ».

³ Respont a reas dezo:

— « Ha c'hwi, perag e torrit gourhemennou Doue war zigarez ho poazamañchou? ⁴ Rag lavaret e-neus Doue: Enor da dad ha da vamm. Pe c'hoaz: An neb a valloz e dad pe e vamm, ra vo laket d'ar maro!

⁵ « C'hwi a-vad a lavar: An nep a lavar d'e dad pe d'e vamm: Ar pez a dleez reseo diganin e-giz sikour a zo laket da brov sakr; ⁶ hennez n'e-no mui da enori e dad pe e vamm. Hag evel-se ho-peus mouget Komz Doue gand ho poazamañchou koz.

⁷ « Tud faoz 'zo ahanoh! Mad kenañ e-neus diouganet Izaiaz diwar ho penn p'e-neus lavaret:

⁸ « *Gand he muzellou e ro enor din ar bobl-mañ,
« med pell ema he halon diouzin.*

⁹ « *En aner eo e reont lidou sakr em enor,
« rag n'eo o helennadurez, nemed gourhemennou
« a-berz an dud».*

GLAN HA DIHLAN

¹⁰ Hag o veza galvet an dud e lavaras dezo:

— « Selaouit hag intentit:

¹¹ — « N'eo ket ar pez a ya er henou eo a louz an dén, med ar pez a zeu er-mêz euz ar henou, setu aze ar pez a louz an dén ».

¹² Neuze e tosteas e ziskibien outañ hag e lavarjont dezañ:

— « Ha gouzoud a rez eo bet feuket ar Farizianed o kleved ar gomz-se? »

¹³ Respont a reas:

— « Kement plantenn ha n'eo ket bet plantet gand va Zad hag a zo en neñv a vo diwriennet. ¹⁴ Lezit anezo. N'int nemed tud dall o vlenia tud dall. Ha pa vez unan dall o vlenia unan dall, e kouezont o-daou en toull ».

¹⁵ Neuze e lavaras Pèr dezañ :

— « Lavar deom petra zinifi ar barabolenn-se ».

¹⁶ Jezuz a respontas :

— « Ha c'hwi ive a vije c'hoaz hirio berr a spered ? ¹⁷ Kement a ya er henou, ha ne ouezit ket ez a er hov hag ahano e vez distaolet er 'foz ?

¹⁸ « Med ar pezh a ya er-mêz euz ar henou, euz ar galon eo e teu, hag an dra-ze eo a louz an dén. ¹⁹ Rag euz ar galon eo e teu ar mennadou fall : muntrèrèz, avoultriez, gadaliez, laeroñsiou, fals-testeniou, droug-komzou. ²⁰ An traou-ze eo a louz an dén, med debri heb beza gwalhet an daouarn ne louz ket an dén ».

FEIZ AR GANANEANEZ

²¹ Eet kuit ahano, en em dennas Jezuz e kostez Tir ha Sidon. ²² Ha setu eur Gananeanez deuet diouz ar hosteziou-ze a zeuas hag a grias :

— « Bez truez ouzin, Aotrou, Mab David ! Va merh a zo gwall-gaset spontuz gand an droug-spered ».

²³ Med eñ ne respontas gér. E ziskibien a dosteas da lavared dezañ :

— « Ro dezi he goulenn, rag terri a ra deom or penn gand he youhadennou ».

²⁴ Ha Jezuz respont :

— « N'on bet kaset nemed evid deñved dianket euz ti Israel » (35).

²⁵ Houmañ a zeuas da stoui dirazañ en eur lavared.

— «Aotrou, deus war va zikour»!

²⁶ Med eñ a respontas:

— «N'eo ket mad kemer bara ar vugale evid e daoler d'ar chas bihan».

²⁷ — «Gwir eo, emezi, med ar chas bihan o-unan a zèbr ar bruzunou a gouez diwar daol o mistri».

²⁸ Neuze e respontas Jezuz.

— «O! maouez! Braz eo da 'feiz. Ra zigouezo ganit hervez da hoant».

Hag e oe pareet he merh, d'ar mare-ze end-eün.

PAREANSOU NIVERUZ E-TAL AL LENN

²⁹ Ahano e teuas Jezuz war ribl mor Galilea. Pignad a reas war ar menez, hag eno eh azezas.

³⁰ Eun niver braz a dud a zeuas davetañ, ganto tud kamm, tud dall, tud mahagnet, tud mud ha kalz re all. O lakaad a rejont e-harz e dreid hag eñ a bareas anezo. ³¹ Ma oa estlammet an dud o weled ar re vud o komz, ar re gamm o vale, ar re zall deuet da weled sklêr, ar re vahagnet pare. Hag e rentent gloar da Zoue Israel!

EIL BURZUD AR BARA KRESKET

³² Jezuz a halvas e ziskibien hag a lavaras dezo:

— «Truez am-eus ouz ar bobl-se, rag tri devez 'zo emaint ouz va heul, ha n'o-deus netra da zebri. Ne 'fell ket din o has kuit war yun, gand aon na zeufent da zempla en hent».

³³ An diskibien a lavaras dezañ:

— «E peleh e kavim, en eur goueleh, a-walh a vara da derri o naon da gemend-all a dud?»

³⁴ Ha Jezuz a houlenn outo:

— « Péd baraenn ho-peus? »

— « Seiz, emezo, hag eun nebeud peskedigou ».

³⁵ Gourhemenn a reas neuze d'an dud azeza war an douar. ³⁶ Hag o veza kemeret ar seiz baraenn hag ar pesked, e reas eur bedenn a drugarez, e torras anezo, hag o roas d'e ziskibien; ar re-mañ o roas d'an dud.

³⁷ An oll a zebras ouz o naon. Ar pez a jomas a oe dastumet: seiz panerad leun a oe anezo.

³⁸ Hogen, ar re o devoa debret a oa anezo pevar mil dén hep konta ar merhed hag ar vugale. ³⁹ Ha goude beza digou-viet an dud, e pignas Jezuz er vag, evid mond da gorn-bro Magadan.

Pennad XVI

SINOU AN AMZERIOU

¹ Ar Farizianed hag ar Saduseaned a zeuas d'e gavoud, hag evid e douella e houlenjont digantañ rei dezo eur zin euz an neñv. ² Respont a reas dezo:

— « Diouz an abardaez e lavarit; « Brao e vo! Ruz-tan eo an oabl »! ³ Ha diouz ar mintin: « Amzer 'fall a vo! Ruz-moug eo an oabl ».

⁴ « C'hwi a oar eta lenn e doareou an oabl, ha n'oh ket gouest d'henn ober evid sinou an amzeriou! (36) Rummad fallagr hag avoultrer hag a houlenn eur zin! E-giz sin ne vo roet hini all e-béd deoh nemed sin Jonaz ».

O lezel a reas eno hag ez eas kuit.

GOELL AR FARIZIANED

⁵ O treiza d'an tu all, o-doe an diskibien ankounac'heet kemer bara ganto. ⁶ Jezuz a lavaras dezo:

— « Taolit evez ! Diwallit ouz goell ar Farizianed ».

⁷ Int-i a zoñje enno o-unan :

— « O veza n'on-eus ket digaset bara ganeom eo e lavar an dra-ze ».

⁸ Jezuz a ouezas hag a lavaras :

— « Tud a 'feiz laosk, perag e soñjit eo ablamour n'ho-peus ket digaset bara ganeoh ? ⁹ Ne intentit ket c'hoaz ? N'ho-peus ket a zoñj euz ar pemp baraenn evid ar pemp mil dén ? Ha péd panerad ho-poa dastumet war-lerh ? ¹⁰ Nag euz ar zeiz baraenn evid ar pevar mil dén, ha péd panerad ho-poa kaset ganeoh ? ¹¹ Penaoz ne intentit-hu ket, n'eo ket euz ar bara eo e komzen deoh p'am-eus lavaret : Diwallit ouz goell ar Farizianed hag ar Saduseaned ? »

¹² Neuze eh intenjont n'e-noa ket lavaret en em ziwall ouz ar goell a vez laket er bara, med ouz kelennadurez ar Farizianed hag ar Saduseaned.

PER A LAVAR E 'FEIZ E JEZUZ MAB DOUE (37)

¹³ Jezuz deuet e korn-bro Sezare-Filip a houlennas ouz e ziskibien :

— « Piou eo Mab an dén, hervez lavar an dud ? »

¹⁴ Int-i respont :

— « Evid lod eo Yann-Vadezour, evid re all Eliaz, evid re all c'hoaz Jeremias pe unan euz ar brofeted ».

¹⁵ — « Ha c'hwi petra 'lavarit ? Evidoh, piou ez on-me ? »

¹⁶ Simon Pèr o kemer ar gaoz a lavaras :

— « Te eo ar Mesiaz, Mab an Doue beo-buezeg ! »

¹⁷ Jezuz o kemer ar gaoz d'e dro a respontas :

— « Eüruz out, Simon, mab da Jonaz, rag n'eo ket ar hig nag ar gwad (38) eo o-deus roet dit da anaoud an dra-ze, med va Zad hag a zo en neñv. ¹⁸ Ha me 'lavar dit : te' zo roh ha

war ar roh-ze e savin va Iliz, ha ne vo biken galloudegeziou ar maro treh dezi. ¹⁹ Dit e roin alhweziou Rouantèlèz Doue ha kement az-po liammet war an douar, a vo liammet en neñv, ha kement az-po diliammet war an douar a vo diliammet en neñv ».

²⁰ Neuze e roas urz d'e ziskibien da jom hep lavared da zèn e oa eñ ar Mesiaz.

DIUGAN KENTA AR BASION

²¹ Azaleg ar mare-ze e stagas ar Hrist da lavared d'e ziskibien e vefe réd dezañ mond da Jeruzalem, gouzañv kalz a-berz pennou-braz ar bobl, priñsed ar veleien hag ar skribed, beza lakeet d'ar maro, ha sevel da veo d'an trede deiz.

²² Neuze e tenn Pèr anezañ gantañ a-gostez hag e stag d'ober rebechou dezañ :

— « Doue ra viro, Aotrou ! Ne c'hoarvezo ket kemend-all ganit ! »

²³ Med Jezuz a zistroas hag a lavar da Bèr :

— « Kerz a-dreñv din Satan, eur skoill out din. N'ema ket ganit skiant Doue, med skiant an dén. »

HEULIA JEZUZ

²⁴ Neuze e lavaras Jezuz d'e ziskibien :

— « An neb a 'fell dezañ dond war va lerh, a dle trei kein dezañ e-unan, kemer e groaz ha dond d'am heul. ²⁵ Rag an neb a 'fell dezañ savetei e vuez a gollo anezi. Hag an neb a gollo anezi ablamour dín he zaveteio.

²⁶ « « Petra 'dalvezo d'an dén gounid ar béd oll, ma teu dezañ koll e vuez ? Ha petra 'hello an dén rei evid kavoud e vuez en-dro ? ²⁷ Rag Mab an dén a zo o tond gand e êlez e gloar e Dad, neuze e roio da bep hini diouz e oberou.

²⁸ « E gwirionez m'hel lavar deoh : darn euz an dud a zo amañ ne varvint ket, a-raog beza gwelet Mab an dén o tond en e Rouantèlèz » (39).

Pennad XVII

JEZUZ TREUZFURMET

¹ C'hweh devez diwezatoh, e kemeras Jezuz gantañ Pèr, Jakez ha Yann e vreur, hag ez eas ganto en eul leh distro, war lein eur menez uhel.

² Neuze, dirag o daoulagad, e cheñchas Jezuz doare. Dond a reas da veza lugernuz evel an heol, e zillad a zeuas da veza gwenn-kann evel ar sklêrijenn.

³ Moizez hag Eliaz (40) a baras dirazo, o komz gantañ. ⁴ Pèr neuze a lavaras :

— « Aotrou, kaer eo deom beza amañ. Ma karez me 'zo o vond da zével teir deltenn, unan evidout, unan all evid Moizez hag e-bén evid Eliaz ».

⁵ O komz edo c'hoaz pa zeuas eur goabrenn lugernuz d'o gelei, hag euz kreiz ar goabrenn e teu eur vouez o lavared : « Hemañ eo va Mab muia kared, ennañ e kavan va dudi : selaouit anezañ ».

⁶ O kleved kement-se, e kemeras spont en diskibien hag e kouezjont d'an douar.

⁷ Jezuz a dosteas hag a douchas outo hag a lavaras :

— « Savit en ho-sav ! emezañ. N'ez it ket da gaoud aon ! »

⁸ Sevel a rejont o daoulagad, ha ne weljont mui nemed Jezuz, ha dén nemetañ. ⁹ En eur ziskenn diwar ar menez e lavaras Jezuz dezo :

— « Na gomzit da zén euz ar pezh ho-peus gwelet ken na vo savet Mab an dén a-douez ar re varo ».

DIWAR-BENN ELIAZ

¹⁰ Hag an diskibien ha goulenn outañ :

— « Perag eta e lavar ar skribed e tle Eliaz dond da genta? » (41).

¹¹ Respont a reas :

— « Gwir eo e tle Eliaz dond evid reñka pep tra. ¹² Med, m'hel lavar deoh, Eliaz a zo deuet dija, ha n'o-deus ket e anavezet, ha greet o-deus gentañ ar pez a garent. Med Mab an dén, eñ ive, a zo o vond da houzañv euz o 'ferz ».

¹³ Neuze eh intentas an diskibien e komze dezo euz Yann-Vadezour.

PARE AR BUGEL LOARIEG

¹⁴ O veza ma tigoueze tost d'an dud, e teuas eun dén davetañ hag o koueza war e zaoulin dirazañ e lavaras :

¹⁵ — « Aotrou, bez truez ouz va mab, loarieg eo (42) ha gouzañv kalz a ra. Koueza 'ra aliez, en tan pe en dour. ¹⁶ Digaset am-eus anezañ d'az tiskibien, med n'o-deus ket gallet e barea ».

¹⁷ Jezuz a lavaras :

— « Rummad tud diskredig ha fallagr, beteg pegoulz e vezin-me ganeoh? Beteg pegoulz am-bo d'ho kouzañv? Digasit ar bugel din amañ ».

¹⁸ Jezuz a hourdrouzas an droug-spered, hag ez eas hemañ er-mêz euz ar bugel. D'an ampoent e oe pareet...

¹⁹ Neuze e tosteas an diskibien ouz Jezuz, hag e lavarjont dezañ, en o fart o-unan :

— « Ha ni, perag n'on-eus ket gallet e argas? »

²⁰ Respont a reas :

— « Ablamour ma'z oh laosk en ho feiz. Hag e gwirionez m'hel lavar deoh : Ma vez eun devez ho feiz ken braz hag

eur hreunenn zezo, c'hwi a lavaro d'ar menez-se : Tremen euz amañ da aze, hag e tremeno. Ne vo netra ouspenn deoh... ²¹ Ha neuze ne hell ar seurt droug-sperejou-ze beza argaset nemed dre ar bedenn hag ar yun ».

E BASION ADARRE

²² O veza m'edont bodet e Bro-Halilea, e lavaras Jezuz dezo :

— « Mab an dén a zo o vond da veza laket etre daouarn an dud. ²³ E laza 'raint, ha d'an trede deiz e savo a varo da veo ».

Glaharet braz e oent o kleved kement-se.

DINER AN TEMPL

²⁴ Pa oent digouezet e Kafarnaom, e teuas da gavoud Pèr paotred ar gwir war an templ, hag e lavarjont dezañ :

— Daoust hag ho mestr ne bae ket ar gwir war an templ? »

²⁵ — « Paea 'ra, emezañ ».

Pa oe digouezet Pèr er gêr, ez eas Jezuz d'e gavoud da genta, hag e lavar :

— « Petra eo da zoñj, Simon? Rouaned an douar, diwar goust piou e savont gwiriou ha trujou? Diwar goust o bugale pe diwar goust an estrañjourien? »

²⁶ — « Diwar goust an estrañjourien, emezañ ».

— « Neuze 'ta, eme Jezuz, o-deus ar vugale diskarg anezo? (43) ²⁷ Koulskoude evid ne vo ket gwall-skweriet an dud-se, kerz d'ar mor, taol an higenn, kemer ar pesk kenta a grogo ha digor e henou. Kavoud a ri ennañ eur stater, kemer anezañ hag her ro evidon hag evidout ».

Pennad XVIII

AR BRASA ER ROUANTELEZ

¹ Eun devez e tosteas an diskibien ouz Jezuz hag e lavarjont dezañ:

— « Piou 'ta eo ar brasa e Rouantèlèz Doue? »

² Jezuz o helver davetañ eur bugel, a laka anezañ en o-zouez en eur lavared dezo:

³ — « E gwirionez m'hel lavar deoh, ma ne jeñchit ket ha ma ne deuit ket da veza heñvel ouz bugale vihan, ne 'z eoh ket e Rouantèlèz Doue. ⁴ An hini en em izellaio evel ar bugel-mañ, hennez a zo ar brasa e Rouantèlèz Doue. ⁵ Hag an hini a zigemer, em ano, eur bugelig evel hemañ, me va-unan eo a zigemer. ⁶ Med an neb a ro skwer-'fall da unan euz ar re vihan-mañ a gréd ennon, eo gwelloh dezañ e ve staget ouz e houzegou eur mên-milin ha stlapet e goueled ar mor.

⁷ « Gwas-a-ze d'ar béd, en abeg d'e wall-skweriou! Gwall-skweriou a rank beza, med gwas-a-ze d'ar re a zo kirieg anezo.

⁸ « Mar d-eo da zorn pe da droad pennabeg dit da goueza, troh anezo ha taol anezo pell diouzit, rag gwelloh eo dit antreal er vuez, mogn pe vahagnet, eged kaoud da zaou zorn ha da zaou droad, ha beza taolet en tan peurbaduz.

⁹ « Mar d-eo da lagad pennabeg dit da goueza, tenn anezañ, ha taol anezañ pell diouzit, rag gwelloh eo dit antreal born er vuez, eged beza taolet gand da zaou lagad e jehenn an tan.

¹⁰ « Na zisprijit nikun euz ar re vihan-mañ, rag m'hel lavar deoh, dalhmad, en neñv, ema o êlez o daoulagad o para war va Zad hag a zo en neñvou » ¹¹ (43 bis).

AN DANVAD DIANKET

¹² « Petra 'zoñjit? M'è-neus eun dén kant dañvad, ha ma teu unan da zianka, daoust ha ne lezo ket an naonteg ha

pevar-ugent all war ar menez, evid mond war glask an hini dianket?

¹³ « Ha ma teu a-benn d'e gavoud en-dro, e gwirionez m'hel lavar deoh, e-no muioh a joa a-berz hennez eged a-berz an naonteg ha pevar-ugent ha n'int ket bet dianket.

¹⁴ « Evel-se e fell d'ho Tad a zo en neñv n'ez afe da goll nikun euz ar re vihan-se.

ETRE BREUDEUR

¹⁵ « Ma teu d'az preur mankoud en da geñver, kee da repren anezañ, te hag eñ, etrezoh ho taou. Ma selaou ahanout ez-po e hounezet. ¹⁶ Med ma ne zalh kont e-béd, kemer c'hoaz da vond ganit unan pe zaou, evid ma vo reñket an afer, war lavar daou pe dri dest.

¹⁷ « Ma ne 'fell ket dezañ, lavar d'ar vreudeur, ha ma ne 'fell ket dezañ zokén selaou ar vreudeur, ra vo evidout evel eur payan hag eur publikan.

¹⁸ « E gwirionez m'hel lavar deoh, kement ho-po liammet war an douar, a vo liammet en neñvou ha kement ho-po diliammet war an douar a vo diliammet en neñvou.

PEDI A-GEVRED

¹⁹ « E gwirionez m'hel lavar deoh, ma teu da zaou ahanoh en em glevet, evid goulenn war an douar eun dra bennag, e vezo roet dezo gand va Zad a zo en Neñvou. ²⁰ Rag pa vez daou pe dri bodet em ano, e vezan eno ganto ».

PARDONI D'AR RE ALL

²¹ Neuze e tosteas Pèr ouz Jezuz hag e lavaras dezañ :

— « Aotrou, péd kwech, ma teu d'am breur mañkoud ouzin, e tlean pardoni dezañ? Beteg seiz kwech? »

²² Jezuz a respontas :

— « Ne lavaran ket dit beteg seiz kwech, med beteg seiteg ha tri-ugent kwech seiz kwech.

PARABOLENN AR ZERVICHERIEN DIDRUEZ

²³ « Heñvel eo Rouantêlêz an Neñvou ouz eur roue hag a 'fellas dezañ reñka e goñchou gand e zervicherien.

²⁴ « pa oe staget da reñka e goñchou, e oe digaset dirazañ eun dén hag a oa dleour dezañ a zég mil talant (44)

²⁵ « O veza n'e-noa ket peadra da baea e zle, e roas ar mestr urz d'e werza, eñ, e wrég hag e vugale ha kement e-noa, da veza evel-se diskarg euz e zle.

²⁶ « Neuze e kouezas ar zervicher e-harz e dreid ha stouet dirazañ e lavare :

— « Aotrou, ro din amzer hag e paein dit kement a dlean ».

²⁷ « Kroget an druez ennañ, e lezas ar mestr e zervicher da vond kuit en eur rei dezañ an distaol euz e zle.

²⁸ « Med en eur vond er-mêz, e kavas hemañ unan euz e genzervicherien hag a oa dleour dezañ euz a gant diner. Paka 'reas krog ennañ ha waska war e houzoug beteg war-nes e vouga, en eur lavared :

— « Pae da zle ! »

²⁹ « Neuze e kouezas ar zervicher e-harz e dreid en eur bedi anezañ :

— « Ro amzer din hag e paein va dlê ».

³⁰ « Egile ne 'fellas ket dezañ. Mond a reas da lakaad e daoler er prizon beteg m'e-nefe paeet e zle.

³¹ « O weled kement-se e oe glaharet braz ar zervicherien all, hag e teujont da gonta d'o mestr kement a oa bet c'hoarvezet.

³² « Neuze e lakeas ar mestr e helver, hag e lavaras dezañ :

— « Servicher fallagr, an distaol euz kement e oas dleour din am-eus roet dit, o veza m'az-poa aspedet ahanon.

³³ Daoust ha n'oa ket dleet dit d'az-tro, kaoud truez ouz da genzervicher, evel m'am-eus bet truez ouzit? »

³⁴ « Hag ar mestr, kounnar braz ennañ, a lakeas anezañ etre daourn ar vourrevien, beteg m'e-nefe paeet e zle penn-dabenn.

³⁵ « Evel-se e raio en ho-keñver va Zad hag a zo en neñv, ma ne bardonit ket a-greiz-kalon, pep hini ahanoh, an eil d'egile. »

Pennad XIX

DIWAR-BENN AN TORR-DIMEZI

¹ P'e-noa Jezuz echu ar prezegennou-ze, e kuitas Bro-Halilea hag e teuas war douar Bro-Judea en tu all d'ar Jordan. ² Eun niver braz a dud a yeas d'e heul hag eno e pareas anezo.

³ Farizianed a zeuas d'e gavoud evid klask e amproui, hag e lavarjont dezañ :

— « Daoust hag aotre e-neus ar gwaz da gas kuit e wrég evid abeg pe abeg? »

⁴ Jezuz a respontas :

— « Ha n'ho-peus ket c'hwi lennet e-neus Doue krouet er penn kenta ar gwaz hag ar vaouez, ha lavaret dezo : ⁵ « Ablamour da gement-se, e kuitaio ar gwaz e dad hag e vamm, evid beza d'e wrég, hag e teuint da veza o-daou eur horv kepkén. ⁶ Evel-se n'int mui daou, med eur horv kepkén. Arabad eo d'an dén dispartia ar pez a zo bet unanet gand Doue ».

⁷ — « Perag eta, emezo dezañ, e-neus Moizez roet urz da rei eur paper a dorr-dimezi, pa gaser kuit ar wrég? »

⁸ Respont a reas :

— « En abeg d'ar haledet m'eo ho kalon, eo e-neus Moizez roet an aotre deoh da gas kuit ho kwragez, med er penn kenta n'edo ket an traou evel-se.

⁹ « Hel lavared an ran deoh : an neb a gas kuit e wrég, nemed ha serh e vefe, hag a zimez gand unan all, a ra ar pehed a avoultriez ».

¹⁰ An diskibien a lavaras dezañ :

— « Mar d-ema kont evel-se evid ar gwaz e-keñver e wrég eo gwelloc'h chom dizimez ».

¹¹ — « An oll, emezañ dezo, ne intentont ket kement-se, nemed ar re a zo bet roet dezo d'her hompren.

¹² « Bez' ez eus tud hag a zo dihalloud da zimezi, o veza m'int bet ganet evel-se gand o mamm, re all bet laket er stad-se gand an dud, ha re all hag a zo chomet dizimez ablamour da Rouantèlèz Doue. An neb a hell intent, dezañ da intent ».

JEZUZ HAG AR VUGALIGOÙ

¹³ Neuze e oe digaset dezañ bugale, evid ma'h astennfe e zaouarn warno gand eur bedenn. Med an diskibien o diarbennas krenn.

¹⁴ Jezuz a lavaras :

— « Lezit 'ta ar vugale vihan da zond davedon, ha na virit ket outo, rag d'ar re a zo heñvel outo eo e vo roet Rouantèlèz Doue ».

¹⁵ Ha goude beza astennet warno e zaouarn, ez eas kuit ahano.

AR PAOTR YOUANK PINVIDIG

¹⁶ Ha setu eun dén o tostaad outañ hag o lavared dezañ :

— « Petra a vad am-eus da ober evid kaoud ar vuez peurbaduz? »

¹⁷ Respont a reas dezañ :

— « Perag e rez goulennou ouzin diwar-benn ar mad? N'eus nemed Doue hag a ve mad. Ma fell dit antreal er Rouantèlèz, mir ar gourhemennou ».

¹⁸ — « Pere, emezañ? »

Ha Jezuz respont :

« Ne lazi ket, ne vezi ket avoultrer, ne laeri ket, ne lavari ket falz-testeniou. ¹⁹ Da dad ha da vamm a enori, ha da nesa a garì eveldout da unan ».

²⁰ Ar paotr yaouank a respontas dezañ :

— « An dra-ze am-eus miret penn-da-benn. Petra 'vank din c'hoaz? »

²¹ Jezuz a respontas dezañ :

— « Ma fell dit beza parfet, kee, gwerz kemend a zo dit, hag her ro d'ar paour, ha neuze ez-po eun teñzor en neñvou, ha goudeze, deus d'am heul ».

²² O kleved kement-se ez eas kuit ar paotr yaouank pounner e galon, rag pinvidig braz e oa.

²³ Jezuz a lavaras d'e ziskibien :

— « E gwirionez m'hel lavar deoh : Eun dén pinvidig a vo diêz braz dezañ antreal e Rouantèlèz Doue. ²⁴ Hel lavared a ran deoh, eur wech c'hoaz : Esoh eo d'eur hañval tremen dre hraouenn eun nadoz eged d'eun dén pinvidig mond e Rouantèlèz Doue.

²⁵ War ar geriou-ze e oe souezet maro an diskibien hag e lavarent :

— « Piou eta a hell beza salvet? »

²⁶ Jezuz en eur zelled outo a lavaras :

— « An dud a zo an dra-ze dreist d'o galloud, med Doue n'eus netra dreist d'e halloud ».

DIGOLL AR RE A GUITA PEP TRA

²⁷ Neuze e lavaras Pèr :

— « Ha ni hag on-eus dilezet pep tra evid mond d'az heul, petra 'dalvezo an dra-ze deom ?

²⁸ Jezuz a lavaras dezo !

— « E gwirionez m'hel lavar deoh : Pa vo renevezet ar béd a-béz, pa azezo Mab an dén war e dron a hloar, e vezoh, c'hwi ive hag a zo deuet d'am heul, azezet war daouzeg tron evid barn daouzeg meuriad Israel.

²⁹ « Ha kement hini e-no dilezet tiez, breudeur, c'hoarezed, tad ha mamm, bugale pe barkeier, ablamour d'am ano, a resevo kalz muioh, ha da lod ar vuez peurbaduz. ³⁰ Ha kalz euz ar re genta a vo da ziweza, hag ar re ziweza da genta ».

Pennad XX

LABOURERIEN AN EUR ZIWEZA

¹ « Rag heñvel eo Rouantèlèz Doue ouz eur penn-tiègèz, a yeas er-mêz kerkent ha tarz an deiz da hopra labourerien evid e winieg.

² « Marhad a reas ganto evid eun diner an devez hag e kasas anezo d'e winieg.

³ « Eet er-mêz war-dro nav eur diouz ar mintin (45) e welas re all aze, war ar blasenn⁴, dilabour, ha dezo e lavaras :

— « Kit, c'hwi ive, d'am gwiniég, hag e roin deoh ar pez a zo just ».

« Hag ez ejont.

⁵ « Deuet adarre war-dro kreisteiz, ha war-dro teir eur goude kreisteiz, a reas ar memez tra. ⁶ War-dro pemp eur e teuas c'hoaz er-mêz hag e kavas re all eno, ha dezo e lavaras :

— « Perag ez oh chomet aze dilabour e-pad an deiz ?

⁷ « Hag int-i a respont dezañ :

— « N'eus deuet dén e-béd d'or gopra ».

« Hag e lavaras dezo :

— « Kit c'hwi ive d'am gwiniég ».

⁸ « Pa oe deuet an abardaez, e lavaras mestr ar winieg d'e verour :

— « Galv al labourerien ha ro dezo o 'fae, en eur vond euz ar re ziweza d'ar re genta ».

⁹ « Pa zeuas ar re a oa kroget da labourad war-dro pemp eur, e resevas ar re-mañ beb a ziner. ¹⁰ Pa zeuas tro ar re genta, ar re-mañ a zoñje dezo kaoud muioh, med reseo a rejont, int ive, beb a ziner. ¹¹ En eur reseo o 'fae, e hrosmolent en eur lavared :

¹² « Ar re-mañ, digouezet da ziweza, n'o-deus greet nemed eun eurvez labour, hag ho-peus roet dezo kement ha deom-ni hag on-eus bet da houzañv beh an deiz hag an dommder ».

¹³ « Ar mestr a respontas da unan anezo :

— « Va mignon, ne ran ket a haou ouzit. Daoust ha n'eo ket evid eun diner eo ez-poa greet marhad ganin ? ¹⁴ Kemer ar pez a zo dit ha kerz en da hent. Me a 'fell din rei d'an diweza kement ha dit. ¹⁵ Daoust ha ne hellan ket ober ar pez a garan gand ar pez a zo din ? Pe gwarizi a vefe en da galon ablamour ma 'z on mad ? »

¹⁶ « Evel-se e vo ar re ziweza da genta, hag ar re genta da ziweza ».

DIOUGAN AR BASION EVID AN TREDE GWECH

¹⁷ War-nes pignad da Jeruzalem, e kemeras Jezuz an daouzeg en o 'fart o-unan, hag en hent e lavaras dezo :

¹⁸ — « Setu ma pignom da Jeruzalem, hag e vo laket Mab an dén etre daouarn Priñsed ar Veleien hag ar Skribed, ha ganto e vo kondaonet d'ar maro. ¹⁹ Hag e lakaint anezañ etre daouarn ar bayaned, evid beza goapaet ganto, skourjezet ha staget ouz ar groaz, ha d'an trede deiz e savo a varo da veo ».

GOULENN MAMM MIBIEN ZEBEDE

²⁰ Neuze, mamm mibien Zebede, Yann ha Jakez, a dosteas ouz Jezuz gand he mibien. Stoui a reas dirazañ evid ober outañ eur goulenn. ²¹ Lavared a reas Jezuz dezi :

— « Petra 'fell dit ? »

— « Gourhemenn, emezi, ma vo en da Rouantèlèz, va daou vab a zo amañ, azezet, unan en tu dehou dit hag egile en tu kleiz ».

²² Respont a reas Jezuz :

— « N'ouzoh ket petra 'houlennit ! Ha gouest oh da eva ar halirad ez an da eva ? » (46)

— « Ya, emezo, gouest om ! »

²³ Ha Jezuz dezo :

— « Va halirad, hen eva 'reoh, med, beza azezet a-zehou pe a-gleiz din, n'eo ket din-me eo her rei. Kement-se a vo roet d'ar re e-neus va Zad henn preparet evito ».

²⁴ O kleved kement-se, ez eas an dég all en egar a-eneb an daou vreur. Med Jezuz o galvas hag a lavaras dezo :

²⁵ — « Her gouzoud a rit, ar re a zo e penn ar poblou a ra o mistri warno, hag ar Pennou-Braz a laka da boueza warno o galloud. ²⁶ Ganeoh a-vad ne vo ket kont evel-se. Er hontrol, an hini a glask beza braz en ho touez, ra vo ho servicher deoh. ²⁷ Hag an neb a glask beza ar henta, a dle beza sklavour deoh.

²⁸ «Evel-se, n'eo ket deuet Mab an Dén evid beza servichet, med evid servicha ha rei e vuez evel dasprén evid an dud».

DAOU ZEN DALL JERIKO

²⁹ P'edont o kuitaad Jeriko ez oa eun niver braz a dud ouz o heul. Daou zén dall a oa azezet war bord an hent. O klevet edo Jezuz o tremen, en em lakejont da grial :

— ³⁰ «Aotrou, Mab David, bez truez ouzom!»

³¹ An dud a lavare dezo dicheg chom sioul, med kreñvoh a ze e youhent :

— «Aotrou, Mab David, bez truez ouzom!»

³² Jezuz a jomas a-zav, o galvas hag a lavaras dezo :

— «Petra 'fell deoh a rafen evidoh?»

³³ — «Rei deom ar gweled, Aotrou, emezo!»

³⁴ Truez e-noe Jezuz outo hag e touchas ouz o daoulagad. Kerkent e teuas ar gweled dezo, hag ez ejont d'e heul.

Pennad XXI

JEZUZ OH ANTREAL E JERUZALEM

¹ Pa oent dija tost de Jeruzalem, digouezet e Betfaje war Menez an Olived (47), e kasas Jezuz daou euz e ziskibien en eur lavared dezo.

² — «It d'ar vourhadenn a zo dirazoh, c'hwi a gavo dioustu ouz ar stag eun azenez ha ganti eun azenig, distagit anezo hag o digasit din.

³ Ma vez lavaret eun dra bennag deoh, respontit : An Aotrou e-neus ezomm anezo, med dioustu goude e vezint digaset deoh en-dro».

⁴ Kement-mañ a zigouezas evid ma teufe da wir komzou ar profet:

⁵ « *Lavarit da verh Sion:*

« *Setu ma teu da roue davedout,*

« *dilorh, azezet war eun azenez, eun azenig,*

« *hini bihan al loen a zoug ar yeo* ».

⁶ Mond a reas an diskibien da ober ar pez e-noa Jezuz kemennet dezo. ⁷ Digas a rejont ganto an azenez hag e azenig. O gelei a rejont gand o mantilli ha Jezuz a azezas warno.

⁸ Eur bobl tud a astenne o mantilli war an hent, lod all a drohe skourrou gwez hag o lede war an hent. ⁹ Hag oll, koulz ar re a gerze a-raog hag ar re a zeue warlerh a grie a bouez-penn:

« *Hozanna da Vab David!*

« *Benniget an hini a zeu en ano Doue!*

« *Hozanna e barr an neñvou!* »

¹⁰ Pa antreas e Jeruzalem, e oe strafuillet an oll e kêr, ¹¹ hag e lavared:

— « *Piou eo hennez?* »

Hag e responte an oll:

— « *Ar profet Jezuz eo, euz a Nazared e Bro-Halilea* ».

MARHADOURIEN AN TEMPL

¹² Neuze eh antreas Jezuz en templ hag e kasas er-mêz ar re oll a oa o werza pe o prena en templ. Tumpa 'reas taoliou an eskemmerien arhant ha kadoriou ar varhadourien goulmed. ¹³ Hag e lavaras dezo:

— « *Skrivet eo, anvet e vo va zi ti ar bedenn, c'hwi a-vad a ra anezañ eun toull laeron* ».

¹⁴ Tud dall ha tud kamm a zeuas davetañ en templ hag e pareas anezo.

¹⁵ O weled an traou burzuduz e-noa greet, hag o kleved ar vugale o youhal en templ: «Hozanna da Vab David!» Priñsed ar Veleien hag ar skribed a yeas e kounnar, ¹⁶ hag e lavarjont dezañ:

— «Ha kleved a rez ar pez a lavaront?»

— «Ya, eme Jezuz. Daoust ha n'ho-peus ket bet lennet biskoaz: Diwar genou ar vugaligou vihan pe vihannoh, -ez peus preparet evidout eur veuleudi?»

¹⁷ O lezel a reas eno hag ez eas er-mêz euz kêr evid mond da Vetania el leh ma tremenas an noz.

AR WEZENN FIEZ DIFROUEZ

¹⁸ O tistrei e kêr, a-bréd antronoz, e teuas naon dezañ. ¹⁹ Gweled a reas eur wezenn 'fiez tost d'an hent, hag e tasteas outi, med ne gavas enni netra nemed deliou, hag e lavarás dezi:

— «Biken mui ne zougi frouez!»

Ha kerkent e tizehas ar wezenn 'fiez. ²⁰ O weled kement-se e oe souezet braz an diskibien hag e lavarjont dezañ:

— «Perag eo bet dizehet ar wezenn 'fiez d'an ampoent zokén?»

²¹ Jezuz a respontas:

— «E gwirionez m'hel lavar deoh: M'ho-pefe feiz eun devez hep tamm douetañs e-béd, n'eo ket hepkén ar pez am-eus greet d'ar wezenn 'fiez eo a rafeh, med ha goude ma lavarfeh d'ar menez-se: Kerz alese hag en em daol er mor, an dra-ze a zigouezfe. ²² Kement tra a houlennoh gand feiz dre ar bedenn a vo roet deoh».

GALLOUD JEZUZ

²³ Pa oe antreet Jezuz en templ, ez eas beteg ennañ Priñsed ar Veleien ha Pennou-Braz ar bobl, e-pad m'edo o

kelenn, hag e lavarjont dezañ: «A-berz peseurt galloud e rez-te kement-se? Ha piou e-neus roet dit ar halloud-se?»

²⁴ Jezuz a respontas:

— «Me ive a zo o vond da ober eur goulenn ouzoh, unan hepken; ma roit respont din e lavarin deoh d'am zro a-berz peseurt galloud e ran an dra-ze.

²⁵ «Badeziant Yann euz peleh e teue? Pe a-berz an dud pe euz an neñv?»

Soñjal a reent enno o-unan: ma lavarom euz an neñv e lavaro deom: Perag eta n'ho-peus ket kredet ennañ? ²⁶ Ha ma lavarom a-berz an dud, on-eus da ziwall ouz ar bobl, rag an oll a gemer Yann evid eur profet. ²⁷ Neuze e respontjont da Jezuz:

— «N'ouzom ket».

— «Na me, eme Jezuz, ne lavarin ket deoh kennebeud a-berz peseurt galloud e ran an dra-ze».

PARABOLENN AN DAOU VAB

²⁸ — «Petra 'zoñjit euz kement-mañ?: Eun dén e-noa daou vab. Mond a reas da gavoud ar henta hag e lavaras dezañ: Va mab, kee da labourad hirio d'am gwiniég».

²⁹ Respont a reas:

— «Ne 'fell ket din».

Med goudeze, savet keuz gantañ, ez eas.

³⁰ An tad a yeas da gavoud egile hag e lavaras ar memez tra dezañ. Hemañ a respontas:

— «Mond a ran, Aotrou!»

Med n'ez eas ket (48)

³¹ — «Pehini anezo e-neus greet bolontez e dad?»

Respont a rejont: «An hini kenta!»

Jezuz a lavaras dezo :

— « Ar bublikaned hag ar merhed a vuez fall a ya en ho-raog e Rouantèlèz Doue. ³² Rag deuet eo Yann d'ho kavoud o veva hervez ar Justis, ha n'ho-peus ket kredet ennañ. Ha c'hwil, goude beza gwelet ar pezh ho-peus gwelet, n'oh ket deuet da jeñch buez evid kredi ennañ ».

AR WINIERIEN VUNTRER

³³ « Selaouit eur barabolenn all :

« Eur penn-tiègèz a blantas eur winieg ; kaea 'reas tro-war-dro, kleuza enni eur waskéréz ha sevel eun tour (49). Goudeze e roas anezi diouz feurm da winierien hag ez eas da veaji.

³⁴ « Pa zeuas ar mare da gutuill ar rezin e kasas servicherien daved ar winierien evid kaoud diganto frouez ar winieg. ³⁵ Med ar re-mañ a grogas en e zervicherien, a skoas gand unan, a lazas unan all, hag a stlapas mein ouz an trede.

³⁶ « Kas a reas c'hoaz servicherien all, niverusoh eged ar re genta. Resevet e oent en hevelep doare. ³⁷ A-benn ar fin e kasas dezo e vab en eur lavared :

— « Va mab o-do doujañs evitañ »,

³⁸ « Med o weled ar mab e lavaras ar winierien kenetrezo :

— « An heritour eo hemañ ; deom ! Lazom anezañ hag e vo deom an heritaj ».

³⁹ « Paka krog a rejont ennañ, e daoler er-mêz euz ar winieg hag e laza. ⁴⁰ Ahanta ! pa zeuio mestr ar winieg, petra raio d'ar winierien-ze ? »

⁴¹ Respont a rejont :

— « Eur maro kriz a roio d'an dud fallagr-se. Ar winieg a roio diouz feurm da winierien all hag a roio dezañ ar frouez anezi d'ar poent ».

⁴² Ha Jezuz respont dezo :

— «N'ho-peus ket lennet biskoaz er Skrituriou?: «*Ar mên taolet kuit gand ar re a zave ti, a zo deuet da veza ar mên-korn. Kement-se eo labour an Aotrou, hag eun dra vurzuduz eo evidom*». ⁴³ Setu perag e lavaran deoh: tennet e vo diganeoh Rouantèlèz Doue, evid beza fiziet en eur bobl hag a raio dezi taoler frouez.

⁴⁴ «An neb a gouezo war ar mên-ze a vo brevet, hag an neb a gouezo ar mên-ze warnañ a vo flastret gantañ».

⁴⁵ Priñsed ar Veleien hag ar Skribed (50) a intentas e oa diwar o 'fenn eo e-noa komzet. ⁴⁶ Klask a rejont lakad an dorn warnañ, med aon o-doa, rag an dud a gemere anezañ evid eur profet.

Pennad XXII

PARABOLENN AL LEIN-EURED

¹ Hag e stagas Jezuz adarre da gomz dezo dre barabolennou:

² — «Heñvel eo Rouantèlèz Doue ouz eur roue oh ober lein-eured e vab. ³ Kas a reas da helver d'al lein ar re a oa bet pedet, med ne 'fellas ket dezo dond. ⁴ Kas a reas c'hoaz servicherien all en eur lavared dezo:

— «Lavarit d'ar re a zo pedet: Setu, pourchaset eo ar préd, prést eo pep tra, deuit d'ar friko!»

⁵ «Med ne rejont ket a van, hag ez ejont, unan d'e bark, unan all d'e genwerz. ⁶ Ar re all a bakas krog er zervicherien, a wallgasas anezo hag o lazas.

⁷ «Ar roue a yeas droug ennañ, kas a reas e zoudarded gand urz da laza ar vuntrerien ha da lakad an tan en o hêriadennou.

⁸ «Lavared a reas neuze d'e zervicherien:

— «Prést eo al lein-eured, med ar re a oa kouviet n'oant ket din da zond. ⁹ It eta dre ar hroaz-henchou, hag ar re oll a gavoh war hoh hent, pedit anezo da zond».

¹⁰ «Ar zervicherien a yeas dre an heñchou, a zastumas ar re oll a zigouezas ganto, mad ha fall, hag ar zal-eured a oe leuniet a gouvidi.

¹¹ «Ar roue a antreas da weled ar re a oa ouz taol. Gweled a reas unan ha ne zouge ket e zae-eured hag e lavaras dezañ :

¹² — «Penaos 'ta ez out antreet amañ hep kaoud war-nout da zae-eured?»

«Ne lavaras grig. ¹³ Neuze e lavaras ar roue d'ar zervicherien :

— «Liammit dezañ e zaouarn hag e dreid, ha taolit anezañ er-mêz, en deñvalijenn. Eno e vo daelou ha skrignaded dent. ¹⁴ Rag kalz a zo galvet, ha nebeud a-vad a zo dibabet».

PAEA AN TAILLOU DE ZEZAR

¹⁵ Neuze e klaskas ar Farizianed an tu kenetrezo da lakaad anezañ d'en em zislavared en e gomzou. ¹⁶ Kas a rejont dezañ, diskibien dezo, ha ganto re all euz kostezenn Herodez (51).

— «Mestr, emezo da Jezuz, ni 'oar ez out eun dén just hag e kelennez henchou Doue gand lealded, hep delher kont euz an dud nag euz ar pez a zeblantont beza. ¹⁷ Petra 'zoñjez : Daoust hag aotre 'zo pe get da baea taillou da Zezar?»

¹⁸ Jezuz a-vad, o weled o fallagriez, a respont :

— «Tud faoz ma 'z oh, perag e klaskit paka ahanon? ¹⁹ Diskouezit din peziou mouneiz an taillou».

Diskouez a rejont dezañ eun diner. ²⁰ Ha Jezuz da lavarred dezo :

— «Skeudenn piou a zo war ar pezh mouneiz?»

²¹ — «Skeudenn Sezar, emezo».

Neuze e respontas dezo:

— «Rentit eta da Zesar ar pezh a zo da Zesar, ha da Zoue ar pezh a zo da Zoue».

²² O klevet kement-se e oent souezet braz. E lezel a rejont ha mond kuit.

DASORH AR RE VARO

²³ En deiz-se e teuas Saduseaned (52) d'e gavoud. Ar re-mañ a lavar n'eus ket a adsao a varo da veo. Ober a rejont outañ ar goulenn-mañ:

²⁴ — «Mestr, Moizez a lavar: ma varv unan bennag hep bugale, e timezo e vreur gand an intañvez, evid sevel lignez d'e vreur.

²⁵ «Hogén, bez' e oa ganeom seiz breur. Ar henta a zimezas hag a varvas. O veza ma n'e-noa ket a vugale e lezas e wrég d'e vreur. ²⁶ Evel-se ive evid an eil, an trede ha beteg ar seizved.

²⁷ «War o lerh e varvas ive ar wrég. ²⁸ Ahanta! Da vare an dasorh, da behini euz ar seiz breur e vo gwrég, pegwir o-deus bet anezi da wrég an eil hag egile anezo?»

²⁹ Jezuz a respontas dezo:

— «Fazia 'rit, o veza ne anavezit ket ar skrituriou na galloud Doue: ³⁰ D 'an dasorh, ne vo kemeret na gwrég na gwaz, med evel êlez an neñv e vo an dud.

³¹ «Evid ar pezh a zell ouz dasorh ar re varo, hag eñ n'ho-peus ket lennet ar gomz e-neus Doue lavaret deoh:

³² «*Me eo Doue Abraham, Doue Izaag, Doue Jakob?* ha n'eo ket Doue tud maro, med Doue tud beo».

³³ O klevet kement-se e oe souezet braz an dud gand e gelennadurez.

AR BRASA GOURHEMENN

³⁴ O veza klevet e-noa Jezuz klozet o genou d'ar Saduseaned, eh en em vodas ar Farizianed. ³⁵ Unan anezo, doktor war al Lezenn, a reas outañ ar goulenn-mañ evid e amproui :

³⁶ — « Mestr, pehini eo ar brasa euz ar gourhemennou el Lezenn? »

³⁷ Jezuz a respontas :

— « *Kared a ri an Aotrou da Zoue, a-greiz da galon, gand da oll ene ha da oll spered* ». ³⁸ Henez eo ar brasa hag ar henta euz ar gourhemennou. ³⁹ Hag an eil a zo par dezañ : « *Kared a ri da nesa eveldout da-unan* ». ⁴⁰ D'an daou hourhemenn-se e tenn kement a zo er Skritur, el Lezenn hag er Brofeted ».

MAB DAVID

⁴¹ O veza m'oa bodet ar Farizianed e reas outo ar goulenn-mañ :

— ⁴² « Pehini eo ho soñj diwar-benn ar Mesiaz? » Da biou eo mab? »

— « Da Zavid, emezo ».

⁴³ Jezuz a lavaras dezo :

— « Perag eta e ro dezañ David, sklerijennet gand ar Spered-Santel, an ano a Aotrou, pa lavar :

⁴⁴ « *An Aotrou e-neus lavaret d'am Aotrou :*

« *Azez en tu dehou din*

« *beteg m'am-bo lakeet da enebourien*

« *dindan da dreid* ».

⁴⁵ « Ma ra David Aotrou anezañ, penaoz eo mab dezañ? »

⁴⁶ Ne oe dén gouest da respont netra dezañ, hag azaleg an deiz-se ne gredas mui dén ober goulennou outañ.

Pennad XXIII

PILPOUZEREZ HA LORHENTEZ AR FARIZIANED

¹Jezuz a zisplegas kement-mañ d'ar bobl ha d'e ziskibien:

² — «Ar Skribed hag ar Farizianed a gelenn diwar gador Voizez. ³Grit eta ha mirit kement a lavaront deoh. N'it ket a-vad da gemer skwer diwar o oberou, rag lavared a reont ha ne reont ket. ⁴Liamma 'reont sammou pounner ha karga anezo war ziskoaz an dud, int-i a-vad, o-unan, ne 'fell ket dezo o diblas gand penn o biz.

⁵ «Kement a reont a zo evid beza gwelet gand an dud. Dougenn a reont warno rubanou ledan, enno pennadou skrid al Lezenn, hag eo hir-kenañ ar fleñch euz o mantilli.

⁶ «Klask a reont ar plasou a enor er prejou, hag ar plasou kenta er zinagogou. ⁷Plijoud a ra dezo beza saludet gand an dud war ar plasennou ha beza anvet «rabbi» ganto.

⁸ «C'hwi a-vad, n'it ket da rei deoh an ano a «rabbi», rag breudeur ez oh oll, ha n'ho-peus nemed eur mestr evid ho kelenn.

⁹ «Na roit da zén war an douar an ano a dad, rag n'ho-peus nemed eun Tad: an hini a zo en neñvou. ¹⁰Na rit ket kennebeud rei deoh an ano a zoktor, rag n'ho-peus nemed eun doktor: ar Hrist.

¹¹ «An hini brasa en ho-touez, ra vo servicher deoh. ¹²Rag an nep en em uhella a vo izelleet, hag an nep en em izella a vo uhelleet.

AR ZEIZ MALLOZ

¹³ «Gwas-a-ze deoh Skribed ha Farizianed faoz, c'hwi hag a zerr ouz an dud dor Rouantèlèz Doue. Rag c'hwi hoh-unan ne antreit ket, ha ne lezit ket da antreal ar re a garfe henn ober.

(14) ¹⁵ «Gwas-a-ze deoh Skribed ha Farizianed faoz, c'hwi hag a rêd ar mor hag an douar evid gounid unan hepkén d'ho kredennou, ha pa ho-peus e hounezet e rit anezañ eur mab-ivern diou wech gwasoh egedoh.

¹⁶ «Gwas-a-ze deoh, blenierien zall hag a lavar: Ma touer dre ar zantual, an dra-ze ne gont ket, med ma touer dre aour ar zantual, neuze ez eur dalhet. ¹⁷ Tud diboell ha dall, petra 'zo dreist egile, pe an aour pe ar zantual a ra d'an aour-ze beza sakr?

¹⁸ «C'hwi a lavar c'hoaz: Ma touer dre an aoter, an dra-ze ne gont ket, med ma touer dre ar brovadenn lakeet war an aoter, neuze ez eur dalhet. ¹⁹ Tud dall, petra 'zo dreist egile, pe ar brovadenn, pe an aoter a ra d'ar brovadenn beza sakr?

²⁰ «Mad, an neb a dou dre an aoter a dou dre an aoter ha dre gement a zo warni. ²¹ An neb a dou dre ar zantual a dou drezañ ha dre an hini a zo o chom ennañ. ²² Hag an neb a dou dre an neñv, a dou dre dron Doue, ha dre an hini a zo azezet warnañ.

²³ «Gwas-a-ze deoh, Skribed ha Farizianed faoz, c'hwi hag a bae an deog war ar vent, an aned hag ar humin, e-keid ha ma tilezit ar pez a zo ar grevusa el Lezenn: ar justis, an drugarez hag al lealded. Kement-mañ a oa da ober heb dilezel kement-se. ²⁴ Blenierien zall hag a ziwall da lonka eur 'fubuenn e-keid ha ma lonkit eur hañval.

²⁵ «Gwas-a-ze deoh Skribed ha Farizianed faoz, c'hwi hag a nêta an diavêz euz ar werenn pe euz ar plad, e-keid ha m'eo leun an diabarz euz frouez al laeroñsi hag al lontègèz. ²⁶ Farizianed dall! Nêtaït da genta diabarz ar werenn evid ma teuo an diavêz ive da veza nêt.

²⁷ «Gwas-a-ze deoh, Skribed ha Farizianed faoz! C'hwi hag a zo heñvel ouz beziou gwennet, kaer da weled diouz an diavêz, med hag a zo leun an diabarz anezo a eskern tud varo hag a bep seurt loustoni.

²⁸ « Evidoh eo ar memez tra. Diouz ho kweled e seblantit beza tud just, e-keid ha ma 'z oh leun a 'falzentez hag a 'fallagriez.

²⁹ Gwas-a-ze deoh, Skribed ha Farizianed faoz, c'hwi hag a zav beziou d'ar brofeted, hag a gaerra beziou an dud just ³⁰ hag a lavar: En amzer on Tadou, ma vijem bet war an douar, n'or-bije ket kemeret perz ganto da skuill gwad ar brofeted. ³¹ Evel-se e tougit testeni a-eneb deoh hoh-unan: mibien oh d'ar re o-deus lazet ar brofeted. ³² Mad! c'hwi a gas da benn ar pezh o-doa komañset ho Tadou ».

AR HASTIZ A GOUEZO WARNOH

³³ « Sarpanted, naered-wiber, penaoz e hellfeh mired da veza kondaonet d'ar Jehenn? ³⁴ Setu perag e kasan deoh profeted, tud fur ha Skribed. Lod anezo a vo lazet ganeoh pe staget ouz ar groaz. Lod all a vo skourjezet ganeoh hag argaset a gêr da gêr.

³⁵ « Hag evel-se e kouezo warnoh toud ar gwad digabluz, bet skuillet war an douar, azaleg gwad Abel beteg gwad Zakariaz, mab Barakiaz, bet lazet ganeoh etre ar zantual hag an aoter.

³⁶ « E gwirionez m'hel lavar deoh, an traou-ze oll a gouezo war ar rummad tud-mañ.

³⁷ « Jeruzalem! Jeruzalem! Te hag a laz ar brofeted hag a labez ar re a vez kaset dit, péd kwech am-eus-me klasket dastum da vugale, evel ma tastum ar vamm -yar he yér-bihan dindan he diwaskell ha n'eo ket bet felleñ dit.

³⁸ « Mad! Lezet e vo ganeoh ho ti, goullo (53). ³⁹ Rag hel lavared a ran deoh, diwar vremañ ne weloh mui ahanon beteg ma lavaroh: « Ra vo benniget an Hini a zeu en ano an Aotrou ».

Pennad XXIV

DISTRUJ AN TEMPL (54)

¹ Deuet er-mêz euz an templ, edo Jezuz o vond gand e hent. E ziskibien a dennas e evez war zavaduriou an templ. ² Jezuz a lavaras dezo :

— « Gweled a rit an oll draou kaer-ze neketa ! E gwirionez m'hel lavar deoh, ne jomo ket amañ mên war vên. Distrujet e vo pep tra ».

³ Jezuz a oa azezet war ar Menez Olived. E ziskibien a zeuas d'e gavoud, a gostez, hag a lavaras :

— Lavar deom peur e tigouezo an traou-ze, ha petra 'vo ar zin euz da zonedigez hag euz fin ar béd ».

⁴ Jezuz a respontas :

PENN KENTA AR POANIOU

— « Diwallit na zeufe dén d'ho touella. ⁵ Rag kalz a zeuio o kemer va ano hag o lavared : « Me eo ar Mesiaz ! » Hag e touellint kalz a dud.

⁶ « Ano a glevoh euz a vrezel hag euz a drouz brezel. Taolit evez ! N'it ket da gaoud aon. Kement-se a rank beza, med ne vo ket c'hoaz ar fin.

⁷ « Rag enebiez a zavo, pobl a-eneb da bobl, rouantèlèz a-eneb da rouantèlèz. E meur a leh e vo kernez ha krén-douar. ⁸ Ne vo aze nemed poaniou-gwilioud eur béd nevez o tigeri.

⁹ « Neuze e vezoh heskinet, e vezoh lazet, e vezoh kasaet gand ar bayaned ablamour d'am ano. ¹⁰ ha neuze e kouezo eun niver braz a dud. En em werza, en em gasaad a raint an eil egile.

¹¹ « Falz profeted a zavo stank hag a douello kalz a dud. ¹² Dre ma kresko ar 'fallagriez e tigrisko ar garantez e-touez

an dud. ¹³ Med an hini a zalho mad beteg penn, hennez a vo salvet.

¹⁴ « Embannet e vo kelou mad ar Rouantèlèz dre ar béd a-béz. Eun testeni a vo aze evid ar bayaned. Ha neuze e teuio ar fin.

AN DRUBUILL VRAZ

¹⁵ « Pa weloh eta o rén el leh santel an « heugadenn spontuz » e-neus komzet anezañ ar profet Daniel, ra gompreno an neb a lenn,

¹⁶ « Neuze, an dud a vo e Bro-Judea, dezo tehed d'ar menezioù, ¹⁷ Hag an hini a vo war al leur-doenn, dezañ chom hep diskenn da gerhad ar pezh e-neus en e di. ¹⁸ An hini a vo er park, dezañ chom hep distrei war e giz da gerhad e vantell.

¹⁹ « Gwas-a-ze d'ar gwrahez a vo o tougenn pe o vaga en devezioù-ze! ²⁰ Pedit evid n'ho-po ket da dehed er goañv pe d'eun deiz sabbat. ²¹ Rag neuze e vo eun diénez ken braz ma n'eus ket bet gwelet kemend-all abaoe penn kenta ar béd beteg bremañ ha ne vo gwelet biken mui... ²² Ha ma ne vefe ket berreet an deizioù-ze ne vefe saveteet dén e-béd, med ablamour d'ar re zibabet gand Doue e vezint berreet.

²³ « Neuze, ma lavar unan bennag deoh : « Amañ ema ar Mesiaz ! » pe : « aze ema ! » n'it ket da gredi. ²⁴ Rag sevel a raio meur a Vesiaz faoz ha meur a brofet faoz. Ober a raint sinou braz ha burzudou, peadra da douella ar re zibabet gand Doue zokén, ma vefe posubl henn ober.

²⁵ « Setu ! Roet am-eus deoh da houzoud en a-raog ».

DONEDIGEZ MAB AN DEN

²⁶ « Ma vez lavaret deoh eta : « Setu eñ er goueleh. N'it ket da vond. « Setu eñ el lehiou kuz ». N'it ket da gredi. ²⁷ Evel ma strink al luhedenn, ha ma skéd euz ar zao-heol beteg ar huz-heol, evel-se e vo ive donedigez Mab an dén. ²⁸ E leh pe leh ma vez ar horv maro eno en em vod ar guped.

DARVOUDOU SPONTUZ

²⁹ « Raktal goude an deveziou-ze a ziénéz (55) e teñvalaio an heol, ne skedo mui al loar, ar stered a gouezo euz an neñv, hag e vo brallet galloudegeziou an neñvou.

³⁰ « Neuze eh en em ziskouezo en neñv sin Mab an dén. Oll veuriadou an douar a laosko gouelvanou. Gweled a raint Mab an dén o tond war goabrennou an neñv, gánd kalz a halloud hag a hloar.

³¹ « Hag e kaso e êlez gand an drompill vraz, da zastum euz ar pevar-avel, euz eur penn d'egile d'an neñvou ar, re zibabet gantañ.

PARABOLENN AR WEZENN FIEZ

³² « Diwar ar wezenn 'fiez intentit an heñvededigez-mañ : Kerkent ha ma teu he skourrou da veza tener hag he deliou da boulza, e ouezit ema tost an hañv. ³³ Evel-se ive, pa weloh an traou-ze oll, c'hwi a ouezo ema tost Mab an dén, e-tal an nor.

³⁴ « E gwirionez m'hel lavar deoh, ne dremenno ket ar rummad tud-mañ ken na vo tremenet an oll draou-ze. ³⁵ Tremeno a raio an neñv hag an douar, va homzou a-vad ne dremenint ket. ³⁶ Med an deiz hag an eur, dén n'o anavez, nag êlez an neñvou nag ar Mab, dén, nemed an Tad hag Eñ hepkén ».

BEZIT WAR EVEZ

³⁷ « Evel ma oe kont en amzer Noe, evel-se e vo ive da zonedigez Mab an dén.

³⁸ « En deziou a-raog an dour-beuz, an dud a zebre hag a eve ; dimezi a reent, paotred ha merhed, beteg an deiz ma'h antreas Noe en arh. ³⁹ Ha n'o-doa douetañs a netra, beteg ma teuas an dour-beuz d'o zamma oll. Evel-se e vo kont ive da zonedigez Mab an dén.

⁴⁰ « Neuze, euz daou zén a vo er park, e vo kemeret unan ha lezet egile. ⁴¹ Euz diou vaoueza vo o vala gand ar vreo, e vo kemeret unan ha lezet e-bén.

⁴² « Bezit war evez eta, rag n'ouzoh ket pe da zeiz e teuio ar Mestr.

⁴³ « Komprenit mad, m'e-nefe gouezet mestr an ti, da beseurt mare euz an noz e vefe deuet al laer, e vefe chomet war héd, ha n'e-nefe ket lezet toulla moger e di. ⁴⁴ Bezit eta prést, c'hwi ive, rag dond a raio Mab an dén d'an eur na zoñj ket deoh.»

AR ZERVICHER FEAL

⁴⁵ Pehini eo eta ar zervicher feal ha fur, karget gand ar mestr da rén war dud e di, ha da rei dezo o boued d'ar mare?

⁴⁶ « Eüruz ar zervicher a vo kavet war e labour gand e vestr pa zigouezo. ⁴⁷ E gwirionez m'hel lavar deoh, rei a raio dezañ ar garg euz e oll vadou.

⁴⁸ « Mar d-eo eur zervicher fall, ha ma lavar ennañ e-unan: « Dale a ra va mestr ». ⁴⁹ Ha ma teu da skei gand e gompagnuned, da zebri ha da eva gand ar vezvierien, ⁵⁰ e tistroio mestr ar zervicher-ze d'an deiz n'ema ket o hortoz ha d'an eur ne oar ket, ⁵¹ e kaso anezañ kuit, hag e raio dezañ evel d'an dud faoz. Eno e vo gouelvan ha skrinadeg dent.»

Pennad XXV

PARABOLENN AN DEG PLAH YAOUANK

¹ « Neuze e vo heñvel Rouantèlèz Doue, ouz dég plah yaouank pedet d'eur préd-eured, hag a gemeras lampeier evid mond da ziambroug an dén-nevez (56).

² « Pemp anezo a oa diskiant ha pemp a oa fur. ³ Ar pemp diskiant o-doa kemeret lampeier med hep kemered eoul. ⁴ Ar re 'fur a gemeras eoul e podou da heul o lampeier.

⁵ « O veza ma talee an dén-nevez e teujont oll da voredi ha da gousked. ⁶ E-kreiz an noz e savas eur hopadenn:

— « Setu an dén-nevez! It er-mêz d'e ziambroug! »

⁷ « Neuze e tihunas an oll blahed yaouank hag e preparjont o lampeier. ⁸ Ar re ziskiant a lavaras d'ar re 'fur:

— « Roit deom euz hoh eoul, rag on lampeier a zo war-nes mervel ».

⁹ « Ar re 'fur a respontas:

— « Nann, rag ne vefe ket a-walh evidom hag evidoh. It kentoh da brena evidoh da di ar marhadour ».

¹⁰ « Med en-dra m'edont o vond da brena e tigouezas an dén-nevez. Ar re a oa prést a yeas tre gantañ er zal-eured, hag e oe serret an nor. ¹¹ Diwezatoh eh erruas ive ar plahed diskiant, hag e lavarjont:

— « Aotrou! Aotrou! digor deom! »

¹² « Med eñ a respôntas:

— « E gwirionez me 'lavar deoh, n'hoh anavezan ket ».

¹³ « Bezit war evez eta, rag n'ouzoh nag an deiz nag an eur ».

PARABOLENN AN TALANCHOU

¹⁴ « An traou a vo evel m'emaj kont gand eun dén o vond da bell-bro. Gelper a reas e zervicherien hag e fizias enno e vadou.

¹⁵ « Da unan e roas pemp talant (57). Da unan all daou, ha da unan all, unan; da bep hini hervez ar gouest ma oa. Hag ez eas kuit.

¹⁶ « Raktal, an hini e-noa resevet pemp talant a yeas d'o lakaad da dalvezoud hag a houezas pemp all. ¹⁷ En hevelep doare, an hini e-noa bet daou dalant a houezas daou all. ¹⁸ Med an hini n'e-noa bet nemed unan a yeas d'ober eun toull en douar, hag a guzas ennañ arhant e vestr.

¹⁹ « Pell amzer goude e teuas en-dro mestr ar zervicherien hag e reas e gonchou ganto.

²⁰ « An hini e-noa bet pemp talant a dosteas hag a zigasas pemp talant all ouspenn, en eur lavared :

— « Mestr, pemp talant az-poa fiziet ennon, setu pemp all am-eus gounezet ».

²¹ « Lavared a reas e vestr dezañ :

— « A zo mad-tre, servicher mad ha feal ! Feal out bet war nebeud a dra, fizioud a rin kalz ennout. Deus da gemer perz e levenez da vestr ».

²² « An hini e-noa bet daou dalant a dosteas ive hag a lavaras :

— « Mestr, daou dalant az-poa roet din, setu daou all gounezet ganin ».

²³ « Lavared a reas dezañ e vestr :

— « A zo mad ! Servicher mad ha feal. Feal out bet war nebeud a dra, fizioud a rin kalz ennout. Deus da gemer perz e levenez da vestr ».

²⁴ « O tostaad d'e dro, an hini n'e-noa bet nemed eun talant, a lavaras :

— « Mestr, gouzoud a ran ez out eur rust a zén. Eosti a rez el leh n'az-peus ket hadet, ha dastum el leh n'az-peus ket strewet. ²⁵ Aon a zo kroget ennon hag ez on eet da guzad da dalant en douar. Setu-eñ amañ, kemer da dra ».

²⁶ Med ar Mestr a respontas :

— « Servicher fall ha lezireg, gouzoud a rez eh eostan el leh n'am-eus ket hadet, hag e tastuman el leh n'am-eus ket

strewet. ²⁷ Mad ! e tlees neuze beza laket va arhant war gampi, hag o tond en-dro em-befe kavet va 'feadra gand an interest diwarnañ.

²⁸ Lamit eta digantañ an talant e-neus, ha roit anezañ d'an hini e-neus dég. ²⁹ Rag an hini e-neus a vo roet dezañ hag e-no kalz, med an hini n'e-neus ket a vo lamet digantañ ar pez e-neus zokén. ³⁰ Evid ar zervicher didalvez, stlapit anezañ er-mêz, en deñvalijenn. Eno e vo daelou ha skrignadeg dent ».

AR VARN ZIWEZA

³¹ « Pa zeuio Mab an dén en e hloar, gantañ an oll êlez, eh azezo war e dron a hloar. ³² Dastumet e vo dirazañ an oll boblou, hag e tispario an dud an eil diouz egile, evel ma tisparti ar pastor an dañvadezed diouz ar givri (57 bis). ³³ Hag e lakaio an dañvadezed en tu dehou dezañ hag ar givri en tu kleiz. ³⁴ Neuze e lavaro ar roue d'ar re a vo en tu dehou :

— « Deuit, tud benniget gand va Zad, resevit da lod ar Rouantêlêz a zo bet pourchaset evidoh azaleg krouidigez ar béd. ³⁵ Rag, naon am-eus bet, hag ho-peus roet din da zebri; sehed am-eus bet, hag ho-peus roet din da eva; estrañjour on bet hag ho-peus va digemeret. ³⁶ En noaz edon hag ho-peus va gwisket; klañv e oan hag ez oh deuet d'am gweled; er prizon edon hag ez oh deuet beteg ennon ».

³⁷ « Neuze e responto dezañ an dud just :

— « Peur on-neus ni da welet o kaoud naon, hag on -eus-ni roet dit da zebri? O kaoud sehed hag on-eus -ni roet dit da eva? ³⁸ Pe vare on-eus-ni da welet estrañjour hag on-eus-ni da zigemeret? En noaz hag on-eus-ni da wisket? ³⁹ Pe vare on-eus-ni da welet klañv pe er prizon, hagez om eet davedout? »

⁴⁰ « Hag e responto ar roue :

— « E gwirionez m'hel lavar deoh, bewech m'ho-peus greet kement-se d'an disterra euz va breudeur, d'in-me vunan eo ho-peus her greet. »

⁴¹ « Neuze e lavaro d'ar re a vo en tu kleiz :

— « It pell diouzin, tud villiget ahanoh, it d'an tan a bado da viken, bet c'hwezet evid an diaoul hag e êlez. ⁴² Rag, naon am-eus bet ha n'ho-peus ket roet din da zebri; sehed am-eus bet ha n'ho-peus ket roet din da eva; ⁴³ Estrañjour e oan ha n'ho-peus ket va digemeret; En noaz edon, ha n'ho-peus ket va gwisket, klañv hag er prizon ha n'oh ket deuet d'am gweled ».

⁴⁴ Neuze int-i a lavaro :

— « Aotrou, peur on-eus-ni da welet, naon dit pe zehed, estrañjour pe en noaz, klañv pe er prizon ha n'om ket deuet war da zikour? »

⁴⁵ « Hag e responto dezo :

— « E gwirionez m'hel lavar deoh: Bewech ma n'ho-peus ket greet kement-se evid unan pe unan euz ar re vihanze, din-me kennebeud n'ho-peus ket her greet.

⁴⁶ « Hag ez aio ar re-mañ d'an tan a bado da viken, hag ar re just d'ar vuez ne vo fin e-bed dezi ».

Pennad XXVI

DROUG-KUZUL A-ENEB JEZUZ

¹ P'e-noa Jezuz echuet gand an oll brezegennou-ze, e lavaras d'e ziskibien :

² — « Gouzoud a rit ema ar Pask a-benn daou zevez amañ, hag e vo gwerzet Mab an Dén da veza staget ouz ar groaz ».

³ Neuze en em vodas Priñsed ar Veleien ha Pennou-Braz ar bobl e palez ar Beleg-Braz, Kaifaz e ano. ⁴ A -du e oent da

baka Jezuz dre finesa ha d'e lakaad d'ar maro. ⁵ Koulskoude e lavarent :

— « Arabad eo e vefe e-pad ar gouel, gand aon na zavfe freuz gand ar bobl ».

AR PRED E BETANIA

⁶ Jezuz a oa e Betania e ti Simon al lor, ⁷ pa dosteas outañ eur vaouez ganti eur podig alabastr leun a louzou c'hwez-vad a briz braz. E skuill a reas war benn Jezuz e-keid' ha m'edo ouz taol. ⁸ O weled kement-se e oe feuket braz an diskibien hag e lavarjont :

— « Perag, emezo, eur seurt koll ? ⁹ Gellet e vefe bet e werza kër-kenañ, ha rei ar priz d'ar beorien ».

¹⁰ O houzoud kement-se e lavaras Jezuz dezo :

— « Perag ober poan d'ar vaouez-se ? Eun dra vad eo he-deus greet em-heñver, ¹¹ Peorien ho-pezo bepréd en hotouez, me a-vad n'ho-peus ket evid atao. ¹² En eur skuill al louzou c'hwez-vad war va horv eo er gwél euz va zebeliadur eo he-deus her greet.

¹³ « E gwirionez m'hel lavar deoh, e kement leh ma vo embannet an Aviel-mañ, dre ar béd a-béz, e vo koniet ive, gand ar zoñj anezi, ar pez he-deus greet.

JEZUZ GWERZET GAND JUDAZ

¹⁴ Neuze, unan euz an daouzeg, Judaz Iskariot, a yeas da gavoud Priñsed ar Veleien, ¹⁵ hag a lavaras dezo :

— « Pegement e rooh din ma lakan Jezuz etre ho taouarn ? »

Ar re-mañ a ziviz tregont pez arhant (58).

¹⁶ Azaleg ar mare-ze, e klaske Judaz an tu da rei Jezuz dezo.

POURCHASOU AR PRED-PASK (59)

¹⁷ Da geñver an deiz kenta euz Gouel ar Bara-Dihoell e teuas an diskibien da lavared da Jezuz:

— «E peleh e fell dit e pourchafem dit préd ar Pask?»

¹⁸ Jezuz a respontas:

— «It e kêr da di an hemañ 'n-henn ha lavarit dezañ: «ar Mestr a lavar: «Va eur a zo tost. En da di eo ez an da ober ar Pask gand va diskibien».

¹⁹ Ober a reas an diskibien evel m'e-noa Jezuz gourhemnet dezo hag e preparjont ar Pask.

²⁰ Deuet an noz, edo Jezuz ouz taol gand an Daouzeg
²¹ hag e-pad m'edont o tebri e lavaras:

— «E gwirionez, m'hel lavar deoh, unan ahanoh am gwerzo».

²² Glaharet braz é oent, ha pep hini da lavared dezañ:

— «Daoust ha me e vefe, Aotrou?»

²³ Med eñ a respontas:

— «Laket e-neus e zorn er plad ganin an hini am gwerzo. ²⁴ Mond a ra kuit Mab an dén, evel m'eo skrivet diwar e benn, med gwas-a-ze d'an dén m'eo gwerzet gantañ Mab an dén. Gwelloh e vefe bet dezañ ne vefe ket bet ganet».

²⁵ Judaz, an hini a werze anezañ, a lavaras:

— «Daoust ha me e vefe, rabbi?»

Jezuz a respont:

— Henn lavaret az-peus».

JEZUZ A ZAV SAKRAMANT AN AOTER

²⁶ E-pad ar préd e kemeras Jezuz bara, e rentas bennoz, e torras ar bara hag her roas d'e ziskibien en eur lavared: «Kemerit ha debrit euz hemañ, va Horv eo».

²⁷ Goudeze e kemeras eur halirad, e rentas bennoz hag her roas dezo en eur lavared : ²⁸ « Evit oll anezañ, rag va Gwad eo hemañ, Gwad an Emgleo (60), skuillet evid eun niver braz a dud, evid ar pardon euz ar pehejou.

²⁹ « Henn lavared a ran deoh : ne evin mui hiviziken euz ar frouez-mañ euz ar winienn, beteg ma'h evin anezañ, nevez, ganeoh e Rouantèlèz va Zad ».

³⁰ Kana 'rejoint salmou ha mond etrezeg ar menez Olived. ³¹ Neuze e lavar Jezuz dezo :

— « Eur skoill e vezin, en noz-mañ, evidoh oll. Rag skrivet eo : Skei a rin gand ar mēsaer hag e vo strewet an deñved. ³² Med goude ma vezin savet da veo, e vezin en ho-raog e Bro-Halilea ».

PER A NAHO TEIR GWECH E VESTR

³³ Neuze e savas Pèr e vouez hag e lavaras :

— « Ha goude ma teufent oll da goueza ablamour dit, evidon-me ne gouezin ket ».

³⁴ Ha Jezuz a zisklerias dezañ :

— « E gwirionez, me 'lavar dit, en noz-mañ, a-raog m'e-no ar hillog kanet, ez-po va nahet dre deir gwech ».

³⁵ Ha Pèr dezañ :

— « Ha goude ma rankfen mervel ganit, nann, ne nahin ket ahanout ! »

Hag an oll ziskibien a lavaras kemend-all.

AN ANGONI E LIORZ JETSEMANI (61)

³⁶ Neuze e teujont, Jezuz ganto, en eun domani anvet Jetsemani hag e lavaras Jezuz dezo !

— « Chomit amañ, e-keid ha ma 'z in pelloh da bedi ».

³⁷ Kas a reas gantañ Pèr, Jakez ha Yann, hag e krogas ennañ tristidigez hag anken. ³⁸ Lavared a reas dezo:

— « Doaniet da vervel eo va ene, chomit amañ ha beillit ganin ».

³⁹ Hag eet eun tammig pelloh, e kouezas, e benn pleget beteg an douar o pedi, hag e lavare:

— « Va Zad, mar d-eo posubl, ra 'z aio ar halirad -mañ e-biou din. Koulskoude, n'eo ket evel ma fell din, med evel ma fell dit ».

⁴⁰ Dond a ra war-zu e ziskibien hag e kav anezo kousket. Lavared a reas da Bèr:

⁴¹ — « Evel-se n'ho-peus ket gellet beilla eun eurvez ganin? Beillit ha pedit, kuit da goueza e tentadur. Prim eo ar spered, ar horv a-vad a zo gwan ».

⁴² Neuze ez eas da bedi evid an eilved gwech:

— « Va zad, emezañ, ma ne hell ket ar halirad-mañ mond e-biou din, heb beza evet ganin, da volonte bezet greet ».

⁴³ O veza deuet en-dro beteg enno, e kav anezo adarre kousket, rag pounner 'oa deuet da veza o daoulagad.

⁴⁴ O lezel a reas hag ez eas endro da bedi evid an trede gwech, o lavared c'hoaz ar memez komzou. ⁴⁵ Dond a reas neuze a-nevez war-zu e ziskibien hag e lavaras dezo:

— « Kouskit bremañ ha diskuizit! Deuet eo an eur ma vo lakeet Mab an dén etre daouarn ar beherien... ⁴⁶ Savit! Deom! Setu m'ema tost an hini am gwerz ».

TRUBARDEREZ JUDAZ

⁴⁷ O kaozeal edo c'hoaz pa erruaz Judaz, unan euz an Daouzeg, ha d'e heul eur vandennad vad a dud, klezeier ha bizier ganto, kaset gand Priñsed ar Veleien ha Pennou-Braz ar bobl.

⁴⁸ Lavaret e-noa an trubard dezo:

— «An hini a bokin dezañ, hennez eo, pakit krog ennañ!»

⁴⁹ Ha kerkent ez eas war-zu Jezuz hag e lavaras:

— «Salud! Rabbi».

Hag e roas eur pok dezañ. ⁵⁰ Jezuz a lavaras dezañ:

— «Va mignon, gra da labour».

Neuze e teujont hag e lakejont o daouarn war Jezuz hag e kemerjont krog ennañ.

⁵¹ Unan euz ar re a oa gand Jezuz a astennas e zorn da denna e gleze. Skei a reas war zervicher ar Beleg-Braz ha troha dezañ e skouarn. ⁵² Neuze e lavaras Jezuz dezañ:

— «Laka da gleze en e blas, rag ar re a hoari gand ar hleze, a varvo dre ar hleze. ⁵³ Kavoud a ra dit ne hellfen ket goulenn sikour digand va Zad, hag e tigasfe din dioustu ouspenn daouzeg strollad êlez? ⁵⁴ Med penaoz e teufe neuze da wir ar skrituriou hag a lavar e tle beza kont evel-se».

⁵⁵ D'ar mare-ze e lavaras Jezuz d'ar bobl:

— «Deuet oh evel d'eul laer, gand klezeier ha bizier, d'am 'faka... Bemdez e vezen en templ, azezet, o kelenn, ha n'ho-peus ket va 'faket. ⁵⁶ Med c'hoarvezet eo kement-se evid ma vo sevenet skridou ar brofeted. Neuze an oll ziskibien e zilezas hag a dehas kuit.

JEZUZ DIRAG KAIFAZ

⁵⁷ Ar re o-doa paket krog e Jezuz a gasas anezañ ganto da di Kaifaz, ar Beleg-Braz, el leh m'oa bodet Skribed ha Pennou-Braz ar bobl.

⁵⁸ Pêr a yee d'e heul euz a bell, beteg porz ar Beleg-Braz. Antreal a reas da azeza e-touez ar zervicherien, evid gweled peseurt fin a vefe d'an abadenn.

⁵⁹ Koulskoude, Priñsed ar Veleien hag ar Huzul-Meur en e béz a glaske eur falz-testeni bennag a-eneb Jezuz, evid kaoud abeg d'e lakaad d'ar maro.

⁶⁰ Ne gavjont ket, daoust ma oa deuet meur a dest faoz.

⁶¹ A-benn ar fin e teuas daou hag a lavaras :

— « An dén-ze e-neus diskleriet ; « Me a hell diskar an templ hag e zevel e tri devez ».

⁶² Sevel a reas ar Beleg-Braz en e-zav hag e lavaras da Jezuz :

— « Ne respontez netra d'eur seurt testeni a zoug ar re-ze a-eneb dit ? »

⁶³ Jezuz ne lavare grik. Ar Beleg-Braz a lavaras dezañ :

— « Da aspedi a ran, en ano an Doue beo, da lavared deom ha bez' ez out ar Mesiaz, Mab Doue ?

⁶⁴ Jezuz a respontas :

« Henn lavaret az-peus. Ouspenn, me 'lavar deoh, hiviziken e weloh Mab an dén, azezet en tu dehou d'an Oll-Halloudeg, hag o tond war goabrennou an neñv ».

⁶⁵ Neuze e rogas ar Beleg-Braz e zillad (62), en eur lavared :

— « Blasfemet e-neus ! Petra 'zoñjit ? »

⁶⁶ Hag int-i da respont :

— « Meritoud a ra ar maro ! »

⁶⁷ Neuze e tufont outañ war e vizaj ha lod a sko gantañ. ⁶⁸ Lod all a ro dezañ kravanajou en eur lavared :

— « C'hoari da brofet, Mesiaz ! Piou eo an hini e-neus skoet ganit ? »

PER A NAH E VESTR

⁶⁹ Hogen, Pèr a oa azezet er-mêz e-barz ar porz hag e tosteas outañ eur vatez en eur lavared :

— « Te ive a oa gand Jezuz ar Galilean. »

⁷⁰ Med nah a reas dirag an oll en eur lavared :

— « N'ouzon ket petra 'fell dit lavared ».

⁷¹ O veza m'edo o vond war-zu an nor, eur vatez all her gwelas : hag e lavaras d'ar re a oa war al leh :

— « Hemañ a oa gand Jezuz an Nazarean ».

⁷² Hag adarre e nahas en eur doui :

— « Ne anavezan ket an dén-ze ».

⁷³ Prestig goude, e tasteas ar re a oa eno, hag e lavarjont da Bèr :

— « Difazi eo ! Te ive a zo euz an dud-se. Diouz da zoare komz eo sklêr ».

⁷⁴ Neuze eh en em ro da vallozi ha da doui : « Ne anavezan ket an dén-ze ».

Raktal e kan ar hillog, ⁷⁵ ha Pèr a zeu da zoñj dezañ er pez e-noa lavaret Jezuz :

« A-raog ma kano ar hillog, ez-po va nahet dre deir gwech ».

Mond a reas Pèr er-mêz hag e skuillas daelou c'hwero.

Pennad XXVII

MARO JUDAZ

¹ Deuet ar mintin, Priñsed ar Veleien ha Pennou-Braz ar bobl a zalhas kuzul a-eneb da Jezuz, evid e lakaad d'ar maro.

² E liamma 'rejont hag e gas ganto evid e lakaad etre daouarn Pilat ar gouarnour (63).

³ Neuze, Judaz, an hini e-noa e werzet, a zavas keuz gantañ hag a rentas an tregont pez arhant da Briñsed ar Veleien ha da Bennou-Braz ar bobl, ⁴ en eur lavared:

— «Pebet am-eus o werza eur gwad didamall!»

Int-i a lavaras:

— «Petra 'ra an dra-ze deom? An dra-ze a zell ouzit!»

⁵ Stlepel a' reas ar peziou arhant e diabarz an templ ha mond kuit, hag ez eas d'en em grouga.

⁶ Hogen, goude beza dastumet ar peziou arhant e lavaras Priñsed ar Veleien:

— «Ne heller ket o lakaad e teñzor an templ pegwir ez int priz ar gwad.» ⁷ Ha goude beza dalhet kuzul e prenjont gând an arhant-se park eur poder, da ober anezañ eur vered evid an diavêzidi. ⁸ Setu perag, beteg-henn, eo bet anvet ar park-se park ar gwad. ⁹ Evel-se e oe sevenet komzou Jeremiaz:

«Hag e kemerjont an tregont pez arhant,

«ar priz o-doa, bugale Israel,

«divizet paea evitañ.

¹⁰ *«Hag e rojont anezo, evid park eur poder,*

«hervez m'e-noa gourhemennet an Aotrou».

JEZUZ DIRAG PILAT

¹¹ Kaset e oe Jezuz dirag ar gouarnour. Hemañ a houlen-nas outañ:

— «Ha bez' ez out-te roue ar Juzevien?»

¹² Jezuz a respontas:

— «Henn lavaret az-peus».

Med ne respontas netra d'an tamallou greet dezañ gand Priñsed ar Veleien ha Pennou-Braz ar bobl. ¹³ Neuze e lavaras Pilat dezañ:

— Ne glevet ket kement a lavaront a-eneb dit?»

¹⁴ Med ne respontas mui war boent e-béd, ken na oe souezet braz ar gouarnour.

BARABBAZ

¹⁵ Da geñver pep gouel, edo ar hiz gand ar gouarnour da rei, war houlenn ar bobl, e 'frankiz d'eur prizoniad, d'an hini a garent.

¹⁶ Hogen bez' e oa d'ar mare eur prizoniad brudet, Barabbaz e ano.

¹⁷ Pa oe bodet an dud e lavaras Pilat dezo:

— « Pehini euz an daou-mañ a garfeh e ve roet dezañ e 'frankiz?»

¹⁸ Rag gouzoud a ree e oa dre warizi oa bet gwerzet. ¹⁹ En-dra m'edo Pilat el lezvarn e kasas e wrég dezañ eun dén, da lavared:

— « Arabad eo e vefe tra pe dra etrezout hag an dén just-se, rag hirio em-eus bet kalz poan spered, en eun huñvre, ablamour dezañ ».

²⁰ Priñsed ar Veleien ha Pennou-Braz ar bobl a boulzas an dud da houlenn Barabbaz ha da gas Jezuz d'ar maro. ²¹ Ar gouarnour a lavaras dezo:

— « Pehini eta, euz an daou-mañ, a 'fell deoh e rofen dezañ e 'frankiz?»

Hag e lavarjont:

— « Barabbaz ! »

²² Ha Pilat dezo:

— « Ha petra 'rin 'ta euz Jezuz anvet ar Mesiaz?»

An oll neuze da lavared:

— « Ouz ar groaz!»

Ha Pilat adarre:

²³ — « Peseurt droug e-neus greet? »

Hag e youhent c'hoaz kreñfoh:

— « Ouz ar groaz! »

²⁴ Pilat o weled e kolle e amzer hag e kreske kentoh an trouz, a gemeras dour da walhi e zaouarn, dirag an dud, en eur lavared:

— « Direbech on, euz maro an dén-ze! Deoh da weled! »

²⁵ Ar bobl a-unan da lavared:

— « Ra gouezo e wad warnom ha war or bugale! »

²⁶ Neuze e lezas ganto Barabbaz, hag e lakeas skourjeza Jezuz, hag e roas anezañ evid beza staget ouz ar groaz.

JEZUZ DISMEGANSET

²⁷ Neuze soudarded ar gouarnour a gasas Jezuz ganto en ti-lezvarn, hag en-dro dezañ ar gompagnunez en he 'fêz.

²⁸ Diwiska 'rejont anezañ ha taoler warnañ eur vantell ruz-moug. ²⁹ Blañsona 'rejont eur gurunenn spenn hag he lakaad war e benn hag eur vaz korz en e zorn debou. Daoulina 'rejont dirazañ, en eur lavared dre hoapèrèz:

— « Salud, roue ar Juzevien! »

³⁰ Hag en eur dufa outañ, e kemerent ar vaz korz da skei war e benn.

³¹ Goude beza greet goap anezañ, e tennont diwarnañ e vantell, e wiskont dezañ en-dro e zillad, hag e kasont anezañ ganto da veza staget ouz ar groaz.

JEZUZ STAGET OUZ AR GROAZ

³² En eur vond er-mêz, e kavjont eun dén euz kêr Siren, Simon e ano. Urz a rojont dezañ da zougenn kroaz Jezuz.

³³ Digouezet el leh anvet Golgota, da lavared eo leh ar hlopenn, ³⁴ e rojont dezañ da eva gwin mesket gand bestl (64). Jezuz a dañvas, med ne 'fellas ket dezañ eva.

³⁵ P'o-doa e staget ouz ar groaz, e lodennjont e zillad kenetrezo, hag e tennjont anezo d'ar zort. ³⁶ Hag ez edont eno azezet, evid e ziwall. ³⁷ A-uz d'e benn o-doa laket eur skritell merket warni perag e oe kondaonet, skrivet evel-henn: «Jezuz eo hemañ, roue ar Juzevien».

³⁸ Daou laer a zo staget ouz ar groaz war eun dro gantañ, unan a zehou, egile a-gleiz.

JEZUZ DISMEGANSET OUZ AR GROAZ

³⁹ An dremenidi a zismegañse anezañ en eur heja o 'fenn ⁴⁰ hag o lavared:

— «Te hag a ziskar an templ hag a laka anezañ en e-zav e tri devez, en em zavete da unan mar d-out Mab Doue ha diskenn euz ar groaz».

⁴¹ En hevelep doare, e lavare Priñsed ar Veleien, ar Skribed, Pennou-Braz ar bobl:

— ⁴² «Saveteet e-neus re all ha n'hell ket en em zavetei e-unan. Roue Israel eo. Dezañ bremañ diskenn diwar e groaz hag e kredim ennañ. ⁴³ War Zoue e-neus kontet. Ra zeuio Doue bremañ d'henn delivra m'e-neus karantez evitañ, rag lavaret e-neus: «Mab Doue on!»

⁴⁴ En hevelep doare, al laeron ive, staget ouz ar groaz eveldañ, a oe ken dimegañsuz en e geñver.

MARO JEZUZ

⁴⁵ Azaleg kreisteiz beteg teir eur, e oe goloet ar vro a-béz gand teñvalijenn. ⁴⁶ War-dro an eur-ze e lez Jezuz eur griadenn:

— «Eli! Eli! lama sabaktani», da lavared eo: «Va Doue! Va Doue! Perag beza va dilezet?»

⁴⁷ Ouz e gleved, e lavare lod euz an dud a oa war al leh :

— « Setu ema o helver Eliaz »

⁴⁸ Raktal e redas unan anezo da gemer eun tamm spoue. E garga 'reas a winègr hag e lakaad e bég eur vaz korz da rei dezañ da eva. ⁴⁹ Ar re all a lavare :

— « Lez 'ta ! ha gwelom ha dond a raio Eli d'e zavetei ! »

⁵⁰ Med Jezuz, goude beza lezet adarre eur griadenn vraz a rentas e spered.

⁵¹ Neuze e rogas gouel an templ e daou, euz an neh d'an traoñ, an douar a grenas, ar rehier a 'faoutas, ⁵² ar beziou a zigoras, meur a zant eet da anaon a zavas da veo.

⁵³ Deuet er-mêz euz o beziou, goude adsao Jezuz da veo, e teujont er gêr zantel, hag eh en em ziskouezjont da veur a zén.

⁵⁴ An ofiser roman hag ar re a oa gantañ o tiwall Jezuz, pa weljont ar hrén-douar hag ar pezh e dremene, a grogas spont enno hag a lavaras :

— « E gwirionez, Mab Doue 'oa hemañ ! »

⁵⁵ Bez' e oa eno ive meur a vaouez o selled euz a-bell. Deuet e oant d'e heul azaleg Bro-Halilea hag ez edont ouz e zervicha.

⁵⁶ En o-zouez edo Mari-Madalen, Mari, mamm Jakez ha Jozef, ha mamm mibien Zebede.

JEZUZ LAKET ER BEZ

⁵⁷ Deuet an abardaez, e teuas eun dén pinvidig euz Arimati, anvet Jozef, eñ ive diskibl da Jezuz.

⁵⁸ Mond a reas da gavoud Pilat da houlenn korv Jezuz. Pilat a roas urz d'her rei dezañ.

⁵⁹ Jozef a gemeras ar horv hag her gronnas en eul liñser nêt. ⁶⁰ Lakaad a reas anezañ en eur bég nêvez flamm, e-noa

greet toulla evitañ e-unan, er roh. Ruill a reas eur mên braz da stanka ar béz hag ez eas kuit.

⁶¹ Hogen, Mari-Madalen a oa eno hag ar Vari all, azezet dirag ar béz.

AR BEZ DIWALLET

⁶² Antronoz hag a oa eun deiz sabat, eh en em vodas e ti Pilat Priñsed ar Veleien hag ar Skribed.

⁶³ — « Aotrou, emezo dezañ, deuet eo deom ar zoñj e-neus lavaret an toueller-ze, pa oa c'hoaz beo: « Goude tri devez eh adsavin da veo ». ⁶⁴ Ro urz eta ma vo diwallet ar béz beteg an trede devez, gand aon na zeufe e ziskibien d'e gas ganto, ha da lavared d'ar bobl: « Savet eo a-douez ar re varo », hag an touellèrèz-se a vefe gwasoh eged ar henta ».

⁶⁵ Pilat a lavaras:

— « Gwarded ho-peus, it ha lakit diwall ar béz evel ma karoh ».

⁶⁶ Mond a rejont da lakaad ar béz e savete en eur ziella ar mên ha lakaad gwardou.

Pennad XXVIII

AR BEZ GOULLO

¹ Goude ar zabat, kerkent ha goulou-deiz, d'an deiz kenta euz ar zizun, e teuas Mari-Madalen, hag ar Vari all, da weled ar béz.

² Ha setu ma oe eur hrén-douar braz. Eun êl d'an Aotrou, diskennet euz an neñv, a zeuas da ruill ar mên ha da azeza warnañ.

³ Eun doare luhedenn e-noa, hag e wiskamant a oa gwenn evel an erh. ⁴ Ouz e weled, ar gwardou a grogas spont

enno hag a zeuas da veza evel maro. ⁵ An êl, o komz ouz ar merhed, a lavaras:

— «N'ho pet ket aon. Gouzoud a ran e klaskit Jezuz bet staget ouz ar groaz. ⁶ N'ema ket amañ; savet eo a varo da veo, evel m'e-noa lavaret. Deuit da weled al leh m'eo bet astennet an Aotrou. ⁷ Hag hastit buan da vond da lavared d'e ziskibien eo savet a-douez ar re varo. Mond a ra en ho-raog da Vro-Halilea. Eno e weloh anezañ. Setu ar pezh am-boa da lavared deoh».

⁸ Kerkent e teujont er-mêz euz ar béz. Aon ha levenez o-doa, hag ez ejont d'ar réd da gas ar helou d'an diskibien.

⁹ Ha setu ma teuas Jezuz en arbenn dezo ha ma lavaras:

— «Salud deoh!»

Tostaad a rejont ha pokad d'e dreid en eur stoui dirazañ. ¹⁰ Neuze e lavaras Jezuz dezo:

— «N'ho pet ket aon. It da lavared d'am breudeur mond da Vro-Halilea. Eno eo e welint ahanon».

¹¹ E-keid ha m'edont en hent, setu ma teuas gwarded e kêr da gemenn d'ar veleien kement a oa c'hoarvezet. ¹² Ar re-mañ, goude beza en em vodet gand Pennou-Braz ar bobl, ha greet kuzul kenetrezo, a roas d'ar gwarded eur yalhad vad a arhant, ¹³ en eur lavared dezo:

— «C'hwi 'lavaro kement-mañ: «E ziskibien a zo deuet e-pad an noz, hag o-deus laeret e gorr e-pad m'edom kousket». ¹⁴ Ha ma teu ar gouarnour da houzoud, ni eo a raio dezañ terri warnañ hag a viro na vefeh tregaset».

¹⁵ Kemer a rejont an arhant hag ober hervez ar pezh a oa bet lavaret dezo. Ar gont-se he-deus redet e-touez ar Juzevien beteg bremañ.

JEZUZ EN EM ZISKOUEZ E BRO-HALILEA

¹⁶ An unneg diskibl a yeas da Vro-Halilea, beteg ar menez merket dezo gand Jezuz.

¹⁷ Ouz e weled e stoujont dirazañ. Koulskoude, lod a jomas diskredig. ¹⁸ Jezuz a dosteas outo hag a lavaras dezo :

— « Pep galloud a zo bet roet din en neñv ha war an douar. ¹⁹ It eta ! An oll boblou, grit anezo diskibien din. Roit dezo ar vadeziant, en ano an Tad ar Mab hag ar Spered-Santel. ²⁰ Deskit dezo mired kement am-eus gourhemennet deoh, ha setu emañ ganeoh a-héd an oll deziou, beteg fin ar béd ».

Notennoù War aviel Sant Vaze

(1) An aviel e-neus rannet ligned Jezuz e teir lodenn a bevarzeg strollad, dre ma talvez pevarzeg teir lizerenn ano David skrivet en hebreeg. Ha Jezuz a zo Mab da Zavid.

(2) Herodez, anvet ar « Meur », a zo bet Impalaer, euz ar bloaz 37 beteg ar bloaz 4 a-raog Jezuz-Krist. Kontet eo bet fall ar bloaveziou kenta euz on doare da niveri ar bloaveziou. Ar Vajed ne oant ket rouaned, med tud desket braz.

(3) Amañ eo e krog da vad Aviel or Zalver Jezuz-Krist, (Mark 1,1), gand e Vadeziant hag embannidigez ar Helou Mad: « Rouantèlèz Doue a zo tost ». Aviel ha Kelou Mad a lavar ar memez tra.

(4) Ar Farizianed, gand lorch, a ziskoueze e heulient penn-da-benn al Lezenn. Ar Saduseaned a oa, dreist-oll, tud e karg, muioh darbarek gand o interest o-unan, eged gand ar bedenn.

(5) Ar « justis » en daou Destamant eo kemend a zo a-du gand bolontez Doue. Beza « just » a zo beza santel.

(6) A-veh eet kuit euz traoñienn ar Jòrdàn, e vezer en eul leh gouez anvet « Goueleh Bro-Juda ».

(7) An aviel e-neus dastumet er pennadou 5,6 ha 7 hag a zo enno, evel ma lavarfed, al Lezenn Nevez, ar gelennadurez dre vraz roet gand Jezuz en e brezegennou. Ar « Menez » amañ a zigas da zoñj euz « Menez Sinai ».

(8) Houmañ eo an « Eürusted » dreist pep hini: ar re a zo izel-a-galon eo ar re a zo prest da vond e Rouantèlèz Doue.

(9) Al « Lezenn hag ar Brofeted », da lavared eo an Testament-koz en e béz.

(9 bis) Serh: « concubine » e galleg.

(10) « En deiz-se »: deiz ar varn.

(11) An dud-lor a veze dispartiet diouz an dud all. Evid distrei en o-zouez en-drö, e veze réd dezo kaoud eun testeni digand ar veleien hag ober da Zoue eun donezon.

(12) « Mab an Dén »: an ano-ze a veze roet gand ar Juzevien d'an hini a hortozent hag a vefe kaset gand Doue da varn ar béd, ha da ziazeza da vad e Rouantèlèz da fin an amzeriou.

(13) Lenn Jenezared (21 km war 12) a zigouez warni a-wechou gwall daoliou avel, dreist-oll pa c'hwéz euz an hanter-noz.

(14) « E gêr », da lavared eo « Kafarnaom », el leh m'edo o chom (4, 13).

(15) « Maze »: eur publikan eta (anvet Levi gand Sant Lukaz). Ar publikaned a oa karget da zastum an taillou. Aliez e vezent digoustiañs ha gwelet fall gand ar bobl.

(16) An dud «just»: ya, war o meno.

(17) Evel-se, kelennadurez nevez Jezuz a houlenñ kalonou nevezet.

(18) Neuze edo ar hiz, evel m'ema atao e broiou 'zo euz an Afrik, evid dougenn kafiv, da zeni ha d'ober trouz.

(19) «Kelou Mad ar Rouantèlèz»: setu petra eo an Aviel. «Rouantèlèz Doue a zo tost», n'eus netra all en Aviel. Dre Jezuz eo e teu «Rouantèlèz Doue».

(20) «Ar Greduz»: da lavared eo e oa unan euz ar Juzevien-ze hag a glaske rei ar frankiz d'o Bro.

(21) «Sodom ha Gomor»: diou gêr goz e kreisteiz ar Mor-Mar, hag a oa bet kaset da goll gand Doue en abeg d'ar vuez fall a renet enno.

(22) War doenn blad an tiez (terrasse) en em vode an dud aliez evid marvaillad.

(23) Ar re-ze eo ar merkou roet gand ar Profet Izaiaz (35,5) (61,1) euz donedigez Rouantèlèz Doue.

(24) Yann-Vadezour eo ar «spég» etre an amzeriou koz hag an amzeriou nevez, a zo digoret gand Mab an Dén d'ar re oll a laka o 'foan da vond e-barz.

(25) Korozain, Betsaida, Kafarnaom: kêriou war lez lenn Jenezared, Tir ha Sidon, daou borz-mor war ar Mor-Kreizdouar, er vro bayan, en hanternoz d'ar Palestin.

(26) Difennet e oa labourad deiz ar zabat; war an disterra labouriou zokén, hervez ar Farizianed; ne helle digarez e-béd terri al Lezenn-se.

(27) Pehi a-eneb ar Spered-Santel a zo serri an ene da zonezon Doue, hag ouz Doue e-unan, da viken.

(28) «E vreudeur»: da lavared eo e gendirvi, evel m'ema ar hiz gand ar Juzevien. Ha gand an Arabed, hirio c'hoaz, ema kont evel-se.

(29) E-doug ar wech, e broiou ar Zao-Heol, ne veze greet ar gelennadurez nemed dre ar pez a zache an evez: krenn-lavariou, divinadennoù, parabolennoù... Jezuz a ra evel-se ive evid displega Mister Rouantèlèz Doue. Amañ, e-neus an avieler dastumet a-nevez en eur brezegenn ar re bouezusa euz parabolennoù Jezuz.

(30) Doue, evel-just, ne zigas ket dallentez d'an dud. Anaoud a ra pep tra, ha dizelei a ra ar pez a zo da zigouezoud... Sklêr a-walh eo ar parabolennoù d'an neb a glaşk o hompren.

(31) Kalz a gréd ema amañ sinatur an avieler deuet e-unan da veza «diskibl Rouantèlèz Doue».

(32) «Herodez an Tetrark», mab da Herodez ar Meur hag a zigemeraz ar Vajed. Pep Tetrark a oa mestr, en ano Rom, war ar bederved lodenn euz ar Palestin. Hemañ a oa mestr war Vro-Halilea. An tad a oa eun dén kriz. Ar mab eun dén hag a gare ar plijadureziou.

(33) Amañ e santer dija ez eus meneg gand an avieler euz Sakramant an Aoter.

(34) « D'ar bederved beilladenn » : Ar Juzevien a ranne an deiz e daouzeg eur, hag an noz e peder beilladenn. Emaom amañ, eta, e fin an nozvez.

(35) Bro Tir ha Sidon, en Hanter-noz d'ar Palestin, a oa eur vro bayan, hag an Aviel ne dlee beza roet da anaoud d'ar bayaned, nemed goude Pask.

(36) Bez e heller anaoud an amzer a raio. Êz e vez ive gouzoud peur e vez an nevez-amzer o tond dre an natur. Evel-se ive, merkou a zo hag a ziskouez eo tost Rouantêlêz Doue.

(37) Diwar neuze, tonkadur Jezuz a gemer eur plég. Nahet gand Pennou-Braz ar bobl ha gand ar bobl he-unan, e tro Jezuz ouz e ziskibien hag e ro da anaoud e Basion.

(38) « Ar hig hag ar gwad », da lavared eo kemend a zell ouz ar béd-mañ, laket keñver-ha-keñver gand ar pezh a zell ouz ar pezh a zeu euz Doue.

(39) Azaleg an Dasorhidigez ha beteg fin an amzeriou e vo gwelet o sevel a nebeudou Rouantêlêz Doue. « Ho Rouantêlêz deuet deom » a lavarom er Bater.

(40) « Moizez hag Eliaz » : al Lezenn hag ar Brofeted.

(41) Géd a oa da Eliaz e-touez ar Juzevien evid renka pep tra a-raog ma teufe Mab an dén. Jezuz a ziskouez amañ penaoz eo deuet Yann Vadezour evel eun eil Eliaz.

(42) « Loarieg » da lavared, eo « epileptique ». Kalz a gleñvejou misteriu evel-se a veze laket war gont an droug-spered.

(43) Mab Doue, evel-just, n'e-neus ket a daillou da baea d'e Dad.

(43 bis) Amañ eur werzenn ha n'ema ket er gwella skridou. An dra-mañ a hoarvez beb an amzer.

(44) Deg mil talant a dale war-dro tri-ugent milion a luriou aour. Kant diner a-veh kant lur aour.

(45) « D'an drede eur » : Daouzeg eur a oa en eun devez. Eurvez genta an deiz a oa 6 eur diouz on eur-ni (eur an heol).

(46) Eur halirad a boaniou.

(47) Menez an Olived a zo just a-zioh Jeruzalem, e tu ar Zao-Heol. Dre eno e tremene hent ar berhirined hag ar hiz a yoa da zond euz Jeruzalem d'o diambroug.

(48) An eil mab, amañ, eo ar Farizianed. War o meno e sentont ouz Doue, ha padal ne reont nemed dizenti.

(49) Eun tour a veze savet da helloud ober géd a-eneb al laeron.

(50) Ar re-mañ 'oa ar Pennou-Braz ha renerien speredel ar bobl. Dezo, da genta, eo e oa da zigemer Rouantêlêz Doue.

(51) Tud e servich Herodez, a-du eta gand ar Romaned.

(52) « Ar Zaduseaned », gwas a enebourien Jezuz, o veza ma oant tud e karg (Beleien-Vraz, dreist-oll) hag aon dezo da goll o' flas.

(53) « Lezet e vo ganeoh ho ti goullou » : Doue en em denno euz an Templ, el leh m'edo o chom e-kreiz ar bobl.

(54) Amañ, a-nevez, e-neus an avieler dastumet meur a boent euz kelennadurez Jezuz e sell ouz fin ar béd ha dismantr Jeruzalem. N'eo houmañ nemed eur skeudenn euz e-bén. A-wechou e komz anezo o-diu mesk-ha-mesk.

(55) N'eo an darvoudou-mân nemed skeudennoù da ziskouez pegen dreist-ordinal e vo donedigez Raouantèlèz Doue. Eur Rouantèlèz hag a zo dija en hent (gwelad uhellou, 36) evel ma tigouez an nevez-amzer en eun doare misteriu.

(56) Ar hiz a oa d'ober an eurejou en noz. Ar plahed yaouank gand ar plah-nevez a yea da ziambroug ar gwaz-nevez.

(57) Eun talant a boueze war-dro tri-ugent lur, pe aour pe arhant.

(57 bis) Lod a laka « bouhed » e-leh « givri ».

(58) « Tregont pezh arhant » : priz eur sklavour.

(59) Abaoe meur a gantved, ne ree ar Juzevienn euz daou houel nemed unan : Gouel ganedigeziou kenta an tropell, ha gwiniz-heiz kenta an east. —D'an abardaez kenta a veze lazet an Oan-Pask, hag e-pad eiz devez e veze debret bara dihoell.

(60) An Emgleo kenta a oa bet siellet e gwad ar « viktimou » kinniget e sakrifis gand Moizez. An Emgleo Nevez a zo siellet e gwad Jezuz.

(61) « Jetsemani » : e traoñ Menez an Olived goude beza treuzet traoñienn ar Sedron en eur zond euz Jeruzalem.


(62) « ... a rogas e zillad » : n'oa an dra-ze nemed evid heulia ar hiz koz da ziskouez e oa droug ennañ.

(63) Pilat, eur roman, a oa Gouarnour Bro-Judea en ano an Impalaer Tiber, beteg ar bloaz 36.

(64) « Gwin mesket gand bestl » : eur seurt louzou hag a veze kinniget d'ar re a veze war ar groaz da vihannaad o 'foaniou. Jezuz ne 'fellas ket dezañ eva.

Kalvar Pleiben:

*Jezuz o sevel
euz ar béz.*



Aviel Jezuz-Krist

Hervez Sant Mark

An aviel hervez Sant Mark

A BELEH E TEU

Ma ne zalhomp ket kont euz an Aviel arameeg, Mark eo bet an hini kenta a skrivas eun « Aviel », en eur zastum eun nebeud oberou ha komzou euz buez Jezuz, evid ober anezo eun diverra euz ar Helou Mad.

Sant Mark a zo anavezet ganeomp. Kenderv 'oa da Zant Barnabe; O chom edo e Jeruzalem, hag eno, ti e vamm Mari a zervichas d'ar gristenien genta.

Heulia 'reas Sant Paol da genta, ha goude e teuas da veza kenlabourer da Zant Pèr.

Kredi 'reer e skrivas e Aviel, marteze e Rom, war-dro ar bloaz 65, hag a-dra-zur, a-raog dismantr Jeruzalem gand ar Romaned er bloaz 70.

Skriva 'ree evid ar gristenien deuet diwar ar baganiez, setu perag e tisplég dezo, beb an amzer, gizioù ar Juzevien.

PENAOZ EO BET SAVET

N'eo ket, evel-just, diwar netra eo e savas Sant Mark e Aviel. Disgleget on-eus kement-se en on « Digoradur ».

Abaoe ouspenn tregont vloaz e veve an Iliz gand an eñvor euz Jezuz, eñvor e oberou hag eñvor e gomzou.

Dija, meur a dra a oa bet laket dre skrid hag a-wechou dastumet. Sant Mark e-neus en em zervichet euz an danvez-se, hag ive euz ar prezegennoù, karget ma oa anezo, prezegennoù Sant Pèr dreist-oll.

Greet e-neus da genta eur skeudenn dre vraz euz labour Jezuz, e-doug an daou vloaz euz e vuez publik: badeziant, prezegèrèz ha burzudou e Bro-Halilea. Goudeze, Jezuz, disme-gañset ha dilezet, troet war-zu e ziskibien, hag erfin, ar bale da Jeruzalem ha d'ar maro.

War ar skeudenn-se, Sant Mark e-neus reñket gwella ma helle, oberou ha komzou Jezuz, hep taoler re a gont euz an amzer... Darbaret e oa gand traou all.

Eur marvailler dispar a heller ober euz Sant Mark, plijuz da lenn. Ampart eo da rei buez d'e zanevellou, ha n'e-neus aon e-béd da ziskouez deom e oa Jezuz eun dén e gwirionez. Med don a-vad eo ive e vennoziou.


KEMENNADUREZ

Sant Mark, kristen euz ar re genta, diskibl da Zant Paol ha da Zant Pèr, a zo unan euz gwella testou amzer genta an Iliz.

Ar pep pouezusa euz kemennadurez e Aviel, a gaver dija er 'frazenn genta: « Penn kenta euz Aviel Jezuz Krist Mab Doue ».

Jezuz eo ar Hrist, ar Mesiaz gortozet, hag ez eo Mab Doue, rag-se ez eo ive ar Sklêrijenn hag ar Zilvidigez evid an oll. Bez ez eo a-vad eur sklêrijenn guzet beteg e Rezureksion — Difenn a ra ouz an oll embann eo Eñ ar Mesiaz — hag eur zilvidigez gounezet dre ar maro: « Mab an dén a zo deuet evid rei e vuez da zavetei eun niver divent a dud ». Neuze hepkén eo e vo kaset ar sklêrijenn hag ar zilvidigez-se d'ar broiou payan.

Ar respont m'eo pedet al lenner da ober amañ d'an Aotrou Krist, eo hini e'feiz: « N'eus netra dreist galloud an neb a gréd ». Hag hini ar groaz: « Ra zammo e groaz ha ra zeuio d'am heul ».



Pennad I

YANN AR BADEZOUR

¹Penn kenta Kelou Mad (1), Jezuz-Krist, Mab da Zoue,
²hervez ar pezh a zo skrivet e levr ar profet Izaiaz:

«Setu ma kasan va hannad en da raog,

«eñ a gempenno dit an hent,

³*«mouez an dén o krial er goueleh:*

«Kempennit an hent d'an Aotrou,

«eünit dezañ e wenojennou».

⁴Evel-se e oe gwelet Yann ar Badezour er goueleh, o prezeg eur vadeziant a binijenn evid kaoud ar pârdon euz ar pehejou.

⁵Direded a ree davetañ Bro-Judea a-béz hag oll dud Jeruzalem; en eur anzañ o 'fehejou e vezent badezet gantañ er Ster-Jordan.

⁶Yann a oa gwisket gand dillad reun kañval, hag eur gouriz lèr en-dro d'e zargreiz. E voued a oa killeien-raden ha mél gouez.

⁷Embann a ree:

— «Erru eo war va lèr an hini a zo kreñvoh egedon, ha n'on ket dîn, en eur blega, da ziskoulma lèrenn e zandalennou. ⁸Me am-eus ho padezet en dour; Eñ ho padezo er Spered-Santel».

BADEZIANTE JEZUZ

⁹En amzer-ze e teuas Jezuz euz Nazared, kêriadenn euz Bro-Halilea, da veza badezet gand Yann e ster ar Jordan.

¹⁰Kerkent ha ma teuas er-mêz euz an dour, e welas an Neñv o tigeri hag ar Spered-Santel o tiskenn warnañ evel eur goulm. ¹¹Eur vouez a zeuas euz an Neñv o lavared: « Te eo va Mab muia kared, ennout e kavan va dudi ».

JEZUZ ER GOUELEH

¹²Kerkent e oe kaset Jezuz d'ar goueleh gand ar Spered. ¹³E-pad daou-ugent devez e oe tentet gand Satan. Loened gouez a oa en-dro dezañ hag an Elez a jome d'e zervicha.

¹⁴Goude ma oe bet laket Yann er prizon, e teuas Jezuz da Vro-Halilea. ¹⁵Embann a ree ar Helou Mad a-berz Doue hag e lavare:

« Deuet eo an amzer d'e boent, tost eo Rouantêlêz Doue. Cheñchit buez ha kredit er Helou Mad » (2).

¹⁶O tremen war ribl ar mor Galilea, e welas Simon hag e vreur Andre o taoler o rouejou er mor, rag pesketerien e oant, ¹⁷Jezuz a lavaras dezo:

— « Deuit d'am heul, me raio ahanoh pesketerien tud ».

¹⁸Kerkent e tilezont o rouejou evid mond d'e heul.

¹⁹Eun tammig pelloh e welas Jezuz Jakez mab Zebede hag e vreur Yann, int-i ive en eur vag, o kempenn o rouejou. ²⁰O gelver a reas kerkent. Neuze, o tilezel o zad gand e vevelien er vag, ez ejont d'e heul.

JEZUZ E KAFARNAOM

²¹Antreal a rejont e Kafarnaom. Kerkent eet er zinagog da zeiz ar zabad, e stagas da gelenn.

²²Souezet braz e oe an dud ouz e glevet, rag komz a ree evel eun dén galloud dezañ, ha n'eo ket evel ar Skribed (3). ²³Hogen er zinagog e oa eun dén trubuillet gand eur spered hudur, hag a stagas da grial:

²⁴— «Petra' glaskez ouzom, Jezuz a Nazared? Deuet out da goll ahanom? Gouzoud a ran piou out: Sant Doue».

²⁵Jezuz a hourdrouzas anezañ:

— «Peoh! Kerz er-mêz euz an dén-ze».

²⁶Ar spered hudur a hêjas taer an dén, hag a yeas kuit en eur youhal forz. ²⁷Ken souezet e oent ma houlenent an eil ouz egile:

— «Petra eo kement-mañ? Setu eur gelennadurez nevez embannet gand galloud. Gourhemenn a ra d'an droug - sperejou o-unan hag e sentont outañ».

²⁸Kerkent e redas ar vrud anezañ a-dreuz Bro-Halilea a-béz.

PARE MAMM-GAER SIMON

²⁹O kuitaad ar zinagog, Jezuz, gantañ Jakez ha Yann, a yeas da di Simon hag Andre. ³⁰Mamm-gaer Simon a oa war he gwele gand an derzienn. Kerkent e oe greet ano anezi da Jezuz.

³¹Eñ a dosteas, hag a reas dezi sevel en eur gregi en he dorn. An derzienn a gouzas hag eh en em lakeas d'o zervicha.

³²Diouz ar pardaez, goude ar huz-heol (4), e oe digaset dezañ an oll glañvourien hag ar re a oa e dalh an droug-spered. ³³Kêr a-béz a oa bodet dirag an nor. ³⁴Ar pare a roas da galz a dud taget gand a bep seurt kleñvejou. Argas a reas kalz droug-sperejou, ha n'o leze ket da gomz, rag gouzoud a reent piou oa.

JEZUZ A GUITA KAFARNAOM DA VOND DA VRO-HALILEA

³⁵Antronoz, pell a-raog goulou-deiz, ez eas Jezuz er-mêz, hag eh en em dennas en eul leh distro. Hag eno e pede.

³⁶Simon hag ar re a oa gantañ a yeas d'e glask. ³⁷O veza e gavet e lavaront dezañ:

— «An oll a zo ouz da glask».

³⁸Med Jezuz a respontas:

— «Deom a-hann d'ar hêriadennou tro-war-dro, ma prezegin enno ive, rag evid an dra ze eo ez on deuet».

³⁹Hag e kerzas dre Vro-Halilea a-béz, en eur embann an Aviel er zinagogou hag en eur argas an droug-sperejou.

PARE AN DEN LOR

⁴⁰Eun dén lor a zeu da gavoud Jezuz. Aspedi a ra anezañ, hag o koueza d'an daoulin e lavar:

— «Ma karez e hellez rei din ar pare».

⁴¹Jezuz, leun a druez outañ, a astennas e zorn, a douchas outañ hag a lavaras:

— «Me a 'fell din! bez pareet».

⁴²Raktal ez eas al lorgnez kuit dioutañ hag e oe pareet.

⁴³Dioustu e kasas Jezuz anezañ kuit, en eur lavared rust:

⁴⁴— «Taol evez! Na lavar grik da zén. Med kee d'en em ziskouez d'ar beleg, ha kinnig, evid da bareañs, ar pezh a hórhemenn Moizez el Lezenn, ma talvezo kement-se da desteni evito» (5).

⁴⁵Med eur wech eet kuit e stagas da embann ha da vruda ar helou, en doare ma ne helle mui Jezuz antreal, a wél d'an oll, e kêr pe gêr. Chom a ree war ar-mêz, el lehiou digenvez. Hag euz a bep tu e teued d'e gavoud.

Pennad II

PARE AN DEN SEIZET

¹Eun nebeud deveziou goudeze e tistroas Jezuz da Gafarnaom, hag e oe klevet edo er gêr, ²hag e tiredas kement a dud ma n'oa ket a blas dezo, dirag an nor zokén, Prezeg a ree dezo ar Gomz.

³Setu e oe digaset dezañ eun dén seizet e izili douget gand pevar dén. ⁴O veza ma ne hellent ket tostaad outañ ablamour d'an engroez, e rejont eun toull en doenn a-zioh al leh m'edo (6), ha goudeze e tiskennjont dre an toull ar hrvavaz ma oa astennet warni an dén seizet.

⁵Jezuz o weled o 'feiz a lavaras d'an dén seizet:

— « Va mab, pardonet eo dit da behejou ».

⁶Bez' e oa eno war o azez eun nebeud Skribed hag a lavaras enno o-unan:

⁷— « Penaoz e hell an dén-ze komz evel-se? » Blasfemi a ra! Piou a hell pardonni ar pehejou nemed Doue hepken? »

⁸Kerkent Jezuz, o lenn dre e spered ar zoñjou a droent en o halonou, a lavaras dezo:

⁹— « Perag e vagit seurt soñjou en ho kalon? Petra eo an êsa? Lavared d'an dén seizet: Da behejou a zo pardonet dit, pe lavared: Sao en da-zav, kemer da hrvavaz ha kerz? ¹⁰Mad! evid ma ouezoh e-neus Mab an Dén galloud da bardoni ar pehejou war an douar, ¹¹e lavaran d'an dén seizet: Sao en da-zav, kemer da hrvavaz ha kee d'ar gêr ».

¹²An dén a zavas en e-zav, a gemeras kerkent e hrvavaz hag a yeas er-mêz a-wêl d'an oll, ma oe ar bobl a-béz estlammet, ha ma rentent gloar da Zoue, en eur lavared.

— « Biskoaz n'on-eus gwelet kemend-all! »

LEVI GALVET GAND JEZUZ

¹³Mond a reas Jezuz en-dro war ribl ar mor, An oll a zirede davetañ hag Eñ o helenne.

¹⁴En eur vond e-biou, e welas Levi (7), mab Alfe, azezet e bureo ar maltoutèrèz. Lavared a reas dezañ:

— «Deus d'am heul».

Hag eñ sevel ha mond d'e heul.

¹⁵Ha setu Jezuz ouz taol en e di. Kalz publikaned ha peherien a oa ive gantañ hag e ziskibien, rag kalz tud a oa deuet d'e heul, ¹⁶Skribed zokén a-du gand ar Farizianed (8).

Ar re-mañ o weled anezañ o tebrì gand ar beherien hag ar bublikaned a lavare d'e ziskibien:

— «Petra! Debrì hag eva 'ra gand ar bublikaned hag ar beherien!»

¹⁷Jezuz o veza klevet a lavaras dezo:

— «N'eo ket an dud yah eo o-deus ezomm euz ar medisin med ar re glañv. Deuet on da helver, n'eo ket an dud just, med ar beherien.

DIWAR-BENN AR YUN

¹⁸Devez yun a oa gand diskibien Yann hag ar Farizianed, hag e teujont da houlenn ouz Jezuz:

— «Perag ne yun ket da ziskibien dit-te, p'ema o yun diskibien Yann ha re ar Farizianed?»

¹⁹Jezuz a respontas:

— «Daoust ha deread eo da gompagnuned an dén nevez yun e-keid ha m'ema ganto? Endra m'ema an dén nevez ganto n'eus tu e-béd dezo da yun.

²⁰«Eun amzer a zeuio a-vad hag e vo lamet an dén nevez diganto; en deiz-se e yunint.

²¹« Ne zeu nikun da beñselia eur wiskamant koz gand eun tamm peñsel nevez; a-hend-all, ar peñsel nevez a zach war an danvez koz hag a rog anezañ gwasoh.

²²« Pe c'hoaz, ne laka nikun gwin nevez e sehier-lèr koz, a-hend-all, ar gwin a laka ar zehier-lèr da darza; ar gwin a vez kollet koulz hag ar zehier-lèr. Evid gwin nevez, sehier-lèr nevez » (9).

AR PENNOU-ED KUTUILLET EUN DEIZ SABAT

²³Eun devez sabat edo Jezuz o tremen dre barkajou gwini. E ziskibien, dre ma 'z eent, a gutuille pennou. ²⁴Ar Farizianed a lavare:

— «Gwel 'ta petra 'reont da zeiz ar zabat! Eun dra difennet».

²⁵Jezuz a respontas dezo:

— «Ha n'ho-peus ket lennet morse ar pez a reas David, p'edo en diénéz ha naon dezañ ha d'an dud a oa gantañ?»

²⁶Mond a reas e ti Doue, en amzer Abiatar ar Beleg-Braz hag e tebras baraennou ar hinnig ha ne oa nemed ar veleien hag a helle debri anezo, hag e roas ive d'an dud a oa gantañ».

²⁷Jezuz a gendalhas:

— «Greet eo ar zabat evid an dud ha n'eo ket an dud evid ar zabat, ²⁸en doare ma 'z eo Mab an Dén mestr war ar zabat zokén».

Pennad III

PARE AN DEN A OA DIZEHET E ZORN

¹Jezuz a yeas adarre en eur zinagog. Bez' e oa eno eun dén, dezañ eun dorn dizehet.

²War evez edo an dud da weled ha rei a rafe ar pare da zeiz ar zabat. Evid kaoud tro vrao d'e damall.

³Jezuz a lavaras d'an dén dizeh e zorn:

— «Sav amañ dirag an oll».

⁴Neuze e lavaras d'an dud:

— «Hag aotre a zo d'eun deiz sabat da ober ar mad, pe da ober an droug, da zavetei e vuez da unan bennag pe d'e laza?»

Sioul e choment.

⁵Neuze, o taoler warno eur zell a gounnar, doaniet gand ar hriz ma oa o halonou, e lavaras d'an dén:

— «Astenn da zorn».

Henn astenn a reas hag e zorn a oe pareet.

⁶Eet er-mêz, eh en em glevas ar Farizianed gand ar re a oa a-du gand Herodez (10) a-eneb Jezuz, evid klask an tu d'e lakaad d'ar maro.

JEZUZ WAR RIBL AR MOR

⁷Jezuz en em dennas gand e ziskibien war ribl ar mor. Eun niver braz a dud a oa deuet euz Bro-Halilea, euz Bro-Judea ive ⁸hag euz Jeruzalem; euz Bro-Idumea hag euz an tu all d'ar Jordan, euz war-dro Tir ha Sidon ive e teuas eun niver braz a dud beteg ennañ diwar ar vrud euz kement a ree.

⁹Goulenn a reas digand e ziskibien delher eur vag prést evitañ, rag kement a dud a oa ma venne beza eñket. ¹⁰Ken niveruz e oa an dud e-noa pareet, m'en em daole warnañ evid touch outañ ar re a oa taget gand kleñved pe gleñved. ¹¹Ar sperejou hudur pa welent anezañ en em daole e-harz e dreid hag a grie:

— «Mab Doue out».

¹²Med Eñ a roe groñs urz dezo da jom heb e ziskulia.

AN DAOUZEG ABOSTOL

¹³Pignad a ra neuze war ar menez hag e péd da vond gantañ ar re a 'felle dezañ. Dond a rejont davetañ. ¹⁴Dibaba 'reas daouzeg da jom gantañ ha da veza kaset da brezeg, ¹⁵gand galloud da argas an droug-sperejou.

¹⁶Dibaba 'reas eta daouzeg: Pèr, an ano roet gantañ da Zimon. ¹⁷Jakez mab Zebede, ha Yann breur Jakez anvet gantañ Boanergez, da lavared eo paotred ar gurun. ¹⁸Andre, Filip, Bartelemi, Maze, Tomaz, Jakez mab Alfe, Simon ar gredeg, ¹⁹ha Judas Iskariot, hennez end-eün an hini her gwerzas.

JEZUZ HA BELZBOUL

²⁰Jezuz a zeuas d'ar gêr, hag adarre eun engroez tud war e dro, ken ne hellent ket debri eun tamm bara zokén.

²¹Pa glevas e dud kement-se, e teujont evid e gas ganto, rag lavared a reent: « Kollet eo e benn gantañ ».

²²Ar Skribed, diskennet euz Jeruzalem a lavare ive:

— « Belzeboul (11) a zo ennañ. Dre vestr braz an droug-sperejou eo eh argas kuit an droug-sperejou ».

²³Jezuz o galvas d'e gavoud, hag a lavaras dezo dre barabolenn:

— « Penaoz e hell Satan argas Satan? ²⁴Eur Rouantèlèz hag a zo dizunaniez enni, ne hell ket padoud. ²⁵Eun ti hag a zo dizunanet outañ e-unan, ne hell ket chom en e-zav.

²⁶« Neuze mar d-eo eta en em zavet Satan a-eneb dezañ e-unan, ha ma 'z eo dizunanet outañ e-unan, n'eo ket evid padoud; echu eo gantañ ».

²⁷« Ne hell nìkun mond tre e ti an dén kreñv ha laerez e vadou, nemed ha liammet e-nefe da genta an dén kreñv-ze. Neuze e hello skrapa e draou.

²⁸E gwirionez, an dud a vo pardonet dezo an oll behejou, hag an oll gomzou dizakr bet lavaret ganto, ²⁹Med an nep e-no komzet dizakr a-eneb ar Spered-Santel, hennez ne vo biken pardon e-béd evitañ, kabluz a behed eo evid atao » (12).

³⁰Evel-se e komze, ablamour m'o-doa lavaret : « Eur spered hudur a zo ennañ ».

JEZUZ HAG E GERENT

³¹Neuze e tigouezas e vamm hag e vreudeur (13). Chomet e oant er-mêz euz an ti hag e lakjont goulenn anezañ. ³²Kalz tud a oa azezet en-dro dezañ pa oe lavaret dezañ :

— « Setu da vamm, da vreudeur ha da hoarezed a zo er-mêz ouz da glask ».

³³Hag Eñ da respont dezo :

— « Piou eo va mamm ha piou va breudeur ? »

³⁴Hag o taoler e zellou war an dud azezet en-dro dezañ, e lavaras :

³⁵— « Setu va mamm ha va breudeur. An neb a ra bolontez Doue, hennez a zo breur din, ha c'hoar, ha mamm ».

Pennad IV

PARABOLENN AN HADER

¹Jezuz en em roas adarre da gelenn war ribl ar mor. Kalz tud a ziredas en-dro dezañ, ken niveruz, ma pignas da azeza en eur vag war ar mor. Ar bobl a oa dirazañ, en douar, troet war-zu ar mor.

²Kalz traou a zeske dezo dre barabolennoù (14). Lavared a ree dezo en e gelennadurez :

³— «Selaouit! Setu an hader eet da hada. ⁴E-pad m'edo oh hada, e kouezas greun e kostez an hent. Al laboused a deuas hag o debras.

⁵Lod all a gouezas war eun dachenn veineg, el leh ne oa ket kalz a goundoun. Sevel a rejont dioustu dre ma n'oa ket kalz a zouar. ⁶Med pa zavas an heol e oent devet, hag o veza ma oent dibourvez a wriziou e tizehjont.

⁷«Lod all a gouezas e-touez ar spern. Ar spern a greskas hag o mougas. Frouez e-béd ne zavas diwarno.

⁸«Lod all e gouezas en douar mad, a zavas, a greskas hag a daolas frouez, o rei tregont, tri-ugent ha kant evid unan».

⁹Hag e lavare Jezuz:

— «An neb e-neus diskouarn da gleved, ra glevo!».

PERAG PARABOLENNOU

¹⁰P'en em gavas e-unan, e stagas ar re a oa en-dro dezañ gand an Daouzeg, da ober goulennou outañ war ar parabolennoù. ¹¹Hag e lavare dezo:

— «Deoh-c'hwi eo bet roet da anaoud mister Rouantèlèz Doue. Med evid ar re a zo er-mêz e teu pep tra dezo dre barabolennoù (15), ¹²*evid ma ne weljent ket daoust ma sellont, ha ma ne intentjent ket daoust ma klevont, gand aon na zistrojent ouz Doue ha na vefent pardonet*».

DISPLEG PARABOLENN AN HADER

¹³Hag e lavaras dezo: «Ne intentit ket ar barabolenne-se? Penaoz neuze eh intentfeh an oll barabolennoù?»

¹⁴«An hader a had ar Gomz. ¹⁵An dud a zo war bord an hent el leh m'eo hadet ar Gomz, p'o-deus klevet, e teu kerkent Satan, hag e lam kuit ar Gomz bet hadet enno.

¹⁶« En hevelep doare, ar re a zo bet hadet e tachennou meinek, ar re-ze, p'o-deus klevet ar Gomz, o-deus kerkent he resevet gand levez. ¹⁷Med n'eus ket a wriziou enno, n'int ket tud da badoud. Ha pa zav diénéz pe heskinèrèz ablamour d'ar Gomz e vezont skoillet.

¹⁸Re all a zo hadet e-touez an spern: ar re-ze eo ar re o-deus klevet ar Gomz. ¹⁹Med prederiou ar béd, touellèrèz ar binvidigez ha c'hoantegeziou all, en em zil en o hreiz, hag a voug ar Gomz hag houmañ a jom difrouez.

²⁰« Ha setu ar re a zo bet hadet en douar mad: ar re-ze a glèv ar Gomz, a reseo anezi hag a daol frouez: tregont evid unan, tri-ugent evid unan, kant evid unan ».

PENAOZ RESEO HA REI

²¹Lavared a reas dezo:

— « Daoust hag e tigaser al lamp evid e lakaad dindan ar bozell pe dindan ar gwele? Daoust ha n'eo ket evid e lakaad war eur zichenn? »

²²« Rag n'eus netra guzet ha ne dle ket beza dizoloet, netra sekret ha ne dle ket beza anavezet.

²³« Ma 'z eus unan bennag hag e-neus diskouarn da gleved, ra glevo! »

²⁴Lavared a ree dezo:

— « Taolit evez mad ouz ar pez a glevit: Ar muzul a vuzulit gantañ a zervicho da vuzula deoh, ha zokén e vo laket deoh ouspenn.

²⁵Rag an hini e-neus a vo roet dezañ, hag an hini n'e-neus ket a vo lamet digantañ ar pez e-neus zokén,

AR GREUN A ZAV O-UNAN

Lavared a ree Jezuz:

²⁶— «Gand Rouantèlèz Doue ema kont evel gand eun dén taoleñ gantañ had en douar. ²⁷Pe 've kousket, pe 've dihun, 'en noz pe en deiz, e tiwan hag e kresk an had hep gouzoud dezañ.

²⁸« An douar, anezañ e-unan, a daol e 'frouez, da genta ar yeotenn, goudeze ar penn-éd, hag erfin greun leun ar penn. ²⁹Ha pa vez dare an éd, dioustu e vez medet, o veza ma vez deuet-amzer an eost ».

AR HREUNENN ZEZO

³⁰Lavared a ree c'hoaz:

— «Ouz petra eo heñvel Rouantèlèz Doue? Gand peseurt parabolenn rei anezi da intent?

³¹« Heñvel eo ouz eur hreunenn zezo. Pa vez taolet en douar e vez anezi ar bihanna euz an oll hajou a zo er béd, ³²med pa vez bet hadet e sav, hag e teu da veza brasoh eged an oll blant all. Skourrou braz a zav dezi, ken ma hell laboused an neñv kaoud ar goudor dindan he skeud ». ³³Ha gand seurt parabolennou e roe d'an dud e gelennadurez e kement ha ma oant gouest da intent.

³⁴Ne gomze outo nemed dre barabolennou, med pa veze gand e ziskibien en o fart o-unan, e tisplege dezo pep tra.

AR BARR-AMZER SIOULLEET

³⁵En deiz-se, deuet ar pardaez-noz, e lavaras Jezuz dezo:

— «Treizom da vond en tu all».

³⁶Goude beza digouviet ar bobl, e kemerjont Jezuz, evel m'edo, ganto er vag; ha bez e oa bagou all ouz e heul.

³⁷Eur barr avel diroll a zav. An tarziou a lamme er vag beteg he hargha (16).

³⁸Jezuz a oa e penn a-dreñv ar vag, kousket war eun dorchenn. Dihuna 'reont anezañ en eur lavared:

— « Mestr, ne ra netra dit e vefem o vond da goll?

³⁹Eur wech dihunet e hourdrouzas an avel, hag e lavaras d'ar mor:

— « Chom sioul! Ro peoh! »

Ha setu torret an avel ha peoh kaer o rén. ⁴⁰Lavared a reas Jezuz dezo:

— « Perag kaoud aon evel-se? Penaoz! n'ho-peus ket a 'feiz? »

⁴¹Aon a grogas enno hag e lavarjont kenetrezo:

— « Piou 'ta eo hemañ, pa zent outañ koulz an avel hag ar mor? »

Pennad V

PARE EUN DEN A OA E DALH AN DROUG-SPERED

¹Digouezoud a rejont en tu all d'ar mor e bro ar Jerazeaned. ²P'edo o tiskenn euz ar vag, e teuas en arbenn dezañ eun dén dalhet gand eur spered louz, o tond euz ar beziou. ³Er beziou edo o chom ha ne helle mui dén e-béd e staga gand eur jadenn zokén. ⁴Rag aliez e oa bet staget gand hualou ha chadenou, med torret e-noa ar chadenou ha brevet an hualou, ha n'oa dén e-béd gouest da zond a-benn anezañ.

⁵Noz ha deiz e veze er beziou pe war ar menezioù, o krial pe o tispenn e gorv gand mein.

⁶O weled Jezuz a ziabell, e tiredas hag e stouas dirazañ. ⁷A vouez kreñv e krias:

— « Petra 'glaskez ouzin, Jezuz, Mab Doue Uhel-Meurbéd? Da aspedi 'ran, en ano Doue, ne d-a ket de ober poan din ».

⁸Rag Jezuz a lavare dezañ:

— « Kerz er-mêz euz an dén-ze, spered hudur ».

⁹Goulenn a ree outañ :

— « Pe ano out ? »

— « Va ano, emezañ, eo strollad, rag kalz a zo ahanom ».

¹⁰Pedi hag aspedi a ree anezañ da jom heb o has euz ar vro. ¹¹Eno e oa, diouz kostez ar menez, eur vandenn vraz a yoh o peuri (17). ¹²Ar sperejou hudur a aspedas Jezuz en eur lavared :

— « Kas ahanom er moh evid ma 'z aim enno ».

¹³Aotre a roas dezo, hag ez ejont er-mêz euz an dén evid mond er moh, hag eh en em daolas ar vandenn er mor diwar an tornaod. Eun daou vil bennag a oa anezo, hag e oent beuzet er mor.

¹⁴Ar re a oa ouz o diwall a dehas kuit, hag a gontas, e kêr ha war ar-mêz, ar pez a oa c'hoarvezet. An dud a zeuas da weled petra 'oa erruet.

¹⁵Dond a reont beteg Jezuz, hag e welont an dén dalhet gand an droug-spered, war e azez, gwisket, hag e skiant vad gantañ, eñ hag a oa bet an droug-spered « strollad » ennañ. Hag e krogas ar spont enno.

¹⁶Ar re o-doa gwelet a gontas ar pez a oa c'hoarvezet gand an dén dalhet, ha diwar-benn ar moh. ¹⁷Aspedi 'rejont anezañ da bellaad diouz o bro.

¹⁸P'edo o pignad er vag, an hini a oa bet dalhet gand an droug-spered a bede anezañ d'e lezel da jom gantañ. ¹⁹Jezuz a-vad ne roas ket aotre dezañ, med lavared a reas :

— « Kee d'ar gêr da gavoud da dud, ha ro dezo da houzoud kement e-neus greet an Aotrou evidout, hag an drugarez e-neus diskouezet en da geñver ».

²⁰Mond a reas kuit an dén hag en em lakaad da embann e bro an Degkêr (18), kement e-noa greet Jezuz evitañ, hag e oe sebezet an oll.

PARE EUR VAOUEZ

²¹Jezuz a oa distroet gand ar vag en tu all d'ar mor. Eur bobl tud a oa diredet d'e gavoud. War ribl ar mor edo.

²²Dond a reas beteg ennañ unan euz renerien ar zinagog, Jaïr e ano, hag ouz e weled, e kouez d'an douar e-harz e dreid, ²³hag e péd anezañ dalhmad da zond d'e di, en eur lavared:

— «Va merhig a zo war he zremenvan, deus da astenn an dorn warni, ma vo pareet ha ma chomo beo».

²⁴Mond a reas Jezuz gantañ. Kalz a dud a yeas d'e heul hag a eñke stard anezañ.

²⁵Bez' e oa eur vaouez, klañv gand ar holl-gwad abaoe daouzeg vloaz. ²⁶Kalz he-doa bet da houzañv a-berz e-leiz a vedisined; dispignet he-doa kement he-devoa hep kaoud gwellaenn e-béd, med kentoh o vond war wasaad.

²⁷O veza klevet ano euz Jezuz, e teuas e-touez an dud a-dreñv dezañ hag e touchas ouz e vantell. ²⁸Lavared a ree enni heh-unan:

— «Ha pa ne rafen nemed touch ouz e zillad, e vin pareet».

²⁹Ha kerkent eh ehanas da goll gwad, hag e santas en he horv e oa pareet euz he hleñved.

³⁰Kerkent e ouezas Jezuz e oa eet eur vertuz kuit anezañ. Trei a ra war-zu ar bobl en eur houlen:

— «Piou e-neus touchet ouz va dillad?»

³¹E ziskibien a lavare dezañ:

— «Gweled a rez an engroez tud a wash ahanout, hag e houlennez piou e-neus touchet ouzit?»

³²Eñ a zelle en-dro dezañ evid gweled an hini he-doa greet kement-se. ³³Ar vaouez neuze, kroget aon enni, o krena, o veza ma ouie Jezuz petra 'oa c'hoarvezet ganti, a zeuas da goueza e-harz e dreid, hag a lavaras dezañ ar wirionez penn-da-benn.

³⁴Jezuz a lavaras dezi:

— « Va merh, da 'feiz he-deus da zaveteet. Kerz e peoh ha bez pareet euz da gleñved ».

DASORH MERH JAIR

³⁵E-pad m'edo o komz e tigouezas tud euz ti ar rener sinagog da lavared dezañ:

— « Da verh a zo maro. Perag tregasi c'hoaz ar Mestr? »

³⁶Med Jezuz o veza klevet ar homzou-ze, a lavaras d'ar rener sinagog:

— « Arabad dit kaoud aon. Bez feiz nemetkén ».

³⁷Ne roas aotre da zén e-béd da vond gantañ, nemed da Bêr, da Jakez ha da Yann breur Jakez. ³⁸Dond a reont beteg ti ar rener sinagog. Jezuz a wél an dud, trouz braz ganto, o ouela hag o krial forz.

³⁹O veza eet en ti e lavar dezo:

— « Perag an trouz hag ar gouelvan-ze? Ar plahig n'eo ket maro. Kousket eo! »

⁴⁰Hag an dud a ree goap anezañ. Med Eñ a ra dezo oll mond er-mêz, a gemer gantañ tad ha mamm ar plahig hag an diskibien deuet d'e heul hag a antre el leh m'edo ar plahig. ⁴¹Kregi 'ra en he dorn hag e lavar dezi:

— « Talita koum! Da lavared eo: « Plahig, me 'lavar dit: sao! »

⁴²Kerkent edo ar plahig en he-zav hag e stagas da vale, rag daouzeg vloaz e oa. Kerkent ive, setu an dud-se er-mêz anezo o-unan ken souezet e oant. ⁴³Jezuz a zifenn stard outo na vefe gouezet gand dén e-béd, hag e lavaras rei dezi da zebri.

Pennad VI

JEZUZ E NAZARED

¹Jezuz a yeas kuit ahano. Dond a reas d'e vamm-vro, e ziskibien ouz e heul. ²Da geñver deiz ar zabat ez eas da gelenn er zinagog. Kalz a dud ouz e gleved a jome bamet hag a lavare:

— «Euz peleh e teu dezañ kement-se? Pebez furnez a zo bet roet dezañ! Ha pebez burzudou a hoarvez dre e zouarn! ³Daoust ha n'eo ket eñ ar halvez, mab Mari, breur da Jakez, da Jozef, da Jud ha da Zimon? Daoust ha n'ema ket ive e hoarezed, amañ, en on-touez?» Hag e oent skoillet diwar e benn.

⁴Ha Jezuz lavared dezo:

— «Eur profet ne vez disprijet nemed en e vro, en e gerentiaj hag en e di e-unan».

⁵Ha n'oa ket evid ober eno burzud e-béd. Eun nebeud klañvourien a bareas koulskoude, en eur astenn e zaouarn warno. ⁶Souezet e chome gand o diouer a feiz.

MISION AN DAOUZEG

Tremen a ree dre ar hêriadennou tro-war-dro en eur rei e gelennadurez.

⁷Jezuz a halv an Daouzeg d'e gavoud. Kregi a reas da gas anezo daou-ha-daou en eur rei dezo galloud war an droug-sperejou.

⁸Gourhemenn a reas dezo chom hep kemer netra ganto nemed eur vaz hepkén, na tamm bara, na bisah, na moneiz en o gouriz.

⁹— «Lakit en ho treid, emezañ, eur re zandalennou ha na gemerit ket diou zae».

¹⁰Lavared a reas dezo c'hoaz:

— «E kement leh ma 'z eoh, pa vezoh antreet en ti chomit eno beteg ma 'z eoh kuit euz al leh-se. ¹¹Ma ne vezit ket digemeret na selaouet e leh pe leh, it kuit en eur heja ar boultrenn diouz ho treid, ma vo eun testeni en o eneb.

¹²Mond a rejont en hent, hag e prezegent d'an dud e oa réd dezo cheñch buez. ¹³Argas a rejont diaoulou e-leiz hag olevi kalz klañvourien, hag e vezent pareet ganto (19).

HERODEZ HA JEZUZ

¹⁴Ar roue Herodez a glevas ano euz Jezuz, rag brudet e oa deuet e ano da veza. Lavaret e veze: Yann ar Badezour eo, adsavet a-douez ar re varo, setu perag e labour ennañ ar halloud da ober burzudou.

¹⁵Re all a lavare: Eli eo; lod all: eur profet eo, heñvel ouz unan euz or profeted.

¹⁶O klevet kement-se e lavare Herodez: «Yann, an hini am-eus lakeet dibenna, hennez eo a zo adsavet da veo».

¹⁷Evid gwir, Herodez e-noa laket paka Yann hag e jadenna er prizon, ablamour da Herodiadez, gwrég e vreur Filip, e-noa kemeret da wrég. ¹⁸Rag Yann a lavare da Herodez: «N'az-peus ket ar gwir da zelher ganit gwrég da vreur».

¹⁹Kasoni he-doa eta Herodiadez outañ, ha c'hoant he-doa d'e lakaad d'ar maro, med ne helle ket, ²⁰rag aon e-noa Herodez ouz Yann, o houzoud e oa eun dén just ha santel; e zifenn a ree. P'e-neze e glevet e veze nehet braz, ha koulskoude e plije dezañ e zelaou.

²¹Med eun dro vad a zigouezas, pa roas Herodez, da geñver e zeiz-ha-bloaz, eur bañvez d'e dud e karg, d'e ofiserien ha d'an dud a reñk euz Bro-Halilea.

²²Merh Herodiadez e zeuas da zañsal hag a blijas da Herodez ha d'e gouvidi. Ar roue a lavaras d'ar plah yaouank:

— «Goulenn diganin ar pezh a gari hag e roin dit».

²³Hag e touas dezi:

— « Kement a houlenni diganin a roin dit ha pa ve an hanter euz va rouantèlèz ».

²⁴Er-mêz ez eas hag e lavaras d'he mamm:

— « Petra 'houlennin? »

Hi a respontas:

— « Penn Yann, ar Badezour ».

²⁵Gand mall a tistroas da gavoud ar roue, hag e lavaras dezañ:

— « Me a 'fell din, emezi, e rofez din dioustu, war eur plad, penn Yann-Vadezour ».

²⁶Trist meurbéd ez eas ar roue, med ablamour d'e le ha d'e gouvidi, ne 'fellas ket dezañ nah he goulenn outi.

²⁷Dioustu e kasas ar roue eur gward, o hourhemenn dezañ digas penn Yann. Mond a reas ar gward da zibenna Yann en e brizon. ²⁸Digas a reas ar penn war eur plad, her rei a reas d'ar plah yaouank, hag ar plah yaouank her roas d'he mamm.

²⁹Pa glevas diskibien Yann kement-se, e teujont de gemer e gorv hag e lakejont anezañ en eur béz.

KENTA BURZUD AR BARA KRESKET

³⁰An ebestel, bodet en-dro da Jezuz, a zisplegas dezañ kement o-doa greet ha kelennet. ³¹Hag Eñ a lavaras dezo:

— « Deuit en eul leh distro diouz an dud, evid kemer eun tamm diskuiz ».

Ken stank e oa an dud o vond hag o tond en-dro dezo, ma n'o-doa ket zokén amzer da zebri. ³²Gand ar vag ez ejont kuit, da gavoud eul leh distro, evid beza en o fart o-unan.

³³Med gwelet int bet o vond kuit, ha kalz tud o-deus komprenet da behel ez eent. War o zroad e tiredont di, euz an oll gêriadennou, hag e oent erruet en o-raog.

³⁴En eur ziskenn euz ar vag, e welas Jezuz eun niver braz

a dud, hag e kemeras truez outo, ablamour m'edont evel deñved ha n'o-deus pastor e-béd. Staga 'reas neuze da gelenn anezo war galz a draou. ³⁵Hag o veza ma oa dija diwezed e tosteas outañ e ziskibiñ da lavared dezañ:

— «Digenvéz eo an andread-mañ, ha diwezed eo dija. ³⁶Gra dezo mond en o hent, ma 'z aint en tiez hag er hêriaden-nou trô-war-dro, da brena peadra da zebri».

³⁷Eñ a respontas dezo:

— «Roit dezo da zebri, c'hwi hoh-unan».

Lavared a rejont:

— «Daoust ha réd eo mond ba brena, ha rei dezo da zebri evid daou hant pezh arhant a vara?»

³⁸Lavared a reas dezo:

— «Péd baraenn ho-peuz? It da weled».

Goude beza gwelet e lavarjont »

— «Pemp baraenn ha daou besk».

³⁹Gourhemenn a reas dezo reñka an oll a strolladou war ar yeot glaz. ⁴⁰Gourvez a rejont a reñkadou a gant hag a hanter-kant.

⁴¹Jezuz neuze a gemeras ar pemp baraenn hag an daou besk, hag o sevel e zaoulagad war-zu an Neñv, e lavaras trugarez, e torras ar baraennou hag o roas d'an diskibien evid o rei d'an dud. Lodenna 'reas ive an daou besk etre an dud.

⁴²An oll a zebras hag o-doa o hont. ⁴³An tammou a oe dastumet, daouzeg panerad anezo, hag ar restachou pesket ive. ⁴⁴Pemp mil a dud a oa euz ar re o-doa debret ar baraennou.

JEZUZ O VALE WAR AR MOR

⁴⁵Raktal goude e reas Jezuz d'e ziskibien pignad er vag ha treuzi en e-raog da Vetsaida, endra ma chomfe Eñ e-unan da zigouvia an dud.

⁴⁶Goude beza o lezet, ez eas war ar menez da bedi.
⁴⁷Deuet ar zerr-noz, edo ar vag e-kreiz ar mor hag Eñ e-unan en douar.

⁴⁸O weled o-doa beh braz o roeñvi a-eneb d'an avel hag a oa a-benn, e teu daveto, war-dro fin an noz (20), en eur gerzed war ar mor, hag edo o vond da dremen e-biou dezo.

⁴⁹O weled anezañ o kerzed war ar mor, e kredas dezo e oa eur spes hag en em lakejont da grial. ⁵⁰Rag e weled o-doa oll, hag e oent spontet. Med dioustu e komzas outo hag e lavaras dezo:

— «Bezit fiziañs, me an hini eo! N'ho-pet ket aon!»

⁵¹Pignad a reas ganto er vag, hag e torras an avel. Int-i a oe strafuillet braz, ⁵²rag n'o-doa ket intentet burzud ar baraennou, dallet ma oa o halon.

⁵³Goude beza treizet, e teujont da Jenezared hag e tis-kennjont en douar. ⁵⁴Raktal ma oant dilestret e oe anavezet Jezuz gand an dud. ⁵⁵Mond a rejont dre ar vro a-béz, ha digas ar re glañv war o gweleou, e kement leh ma klevet e veze.

⁵⁶E kement leh ma 'z ee: kêriadennou, pe gêriou, pe diegeziou war ar-mêz, e lakaed ar re glañv war ar plasennou, hag e veze pedet da lezel ar re-mañ da douch ha pa ne ve nemed ouz bevenn e vantell. Ha kement hini a douche outañ a veze pareet.

Pennad VII

DIWAR-BENN BOAZIOU KOZ AR FARIZIANED

¹Ar Farizianed hag eun toullad Skribed deuet euz Jeruzalem a en em vod en-dro da Jezuz.

²Gweled a reont lod euz e ziskibien o tebri o 'fréd gand o daouarn dihlan, da lavared eo heb beza o gwalhet.

³Ar Farizianed hag an oll Juzevien zoken a zalh da voaziou deuet dezo euz o zud-koz, ha ne zebront ket heb beza gwalhet mad o daouarn. ⁴O tistrei d'ar gêr euz plasenn ar marhad, ne zebront ket heb beza strinket dour warno o-unan, ha meur o voazamant all c'hoaz a heuliont deuet dezo a-berz o zud-koz, pa vez kont da walhi hanafou, podou, listri arem. ⁵Goulenn a ra eta ar Farizianed hag ar Skribed ouz Jezuz:

— «Perag ne heuill ket da ziskibien giziou on tud-koz, hag e kemeront o 'frejou gand o daouarn dihlan?»

⁶Respont a reas Jezuz dezo:

— «Re vad e-neus Izaiaz greet e brofet diwar ho penn, tud faoz ma 'z oh, evel m'eo merket er Skritur:

«Va enori a ra ar bobl-mañ

«diwar bég he muzellou;

«o halon a-vad a zo pell diouzin.

⁷*«N'o-deus priz e-béd al lidou a reont*

«en enor din,

«rag o helennadurez n'eus anezi

«nemed gourhemennou-dén.

⁸*«Lezel a rit a gostez gourhemennou Doue,*

«evid mired boazamañchou an dud».

Hag e lavare dezo:

⁹— «C'hwi a dorr Lezenn Doue evid mired ho poazamañchou koz! ¹⁰Rag Moizez e-neus lavaret:

— «*Da dad ha da vamm a enori».*

Ha c'hoaz:

«An hini a vallozo e dad pe e vamm:

«Ra vo laket d'ar maro».

¹¹Ha c'hwi a lavar: «Ma lavar unan bennag d'e dad pe d'e vamm: Ar zikour a oa dit reseo diganin a zo «korban», da lavared eo «prov sakr», ¹²c'hwi a ro aotre dezañ da jom heb ober netra evid e dad pe e vamm (21). ¹³Hag evel-se e kasit da 'fall komz Doue, gand ar boazamañchou koz a virit a rumm da rumm. Hag e-leiz a draou all a rit euz ar seurt-se.

WAR AR PEZ A ZO GLAN HA DIHLAN (22)

¹⁴Neuze e halvas Jezuz an dud da dostaad outañ:

— «Va zelaouit oll, emezañ, hag intentit mad: ¹⁵N'eo ket ar pez a zo er-mêz euz an dén a hell e lakaad da veza dihlan en eur vond ennañ; med ar pez a zeu er-mêz euz an dén, setu ar pez a ra dezañ beza dihlan».

⁽¹⁶⁾¹⁷Pa oe antreet en ti, pell diouz an dud, e houlennas e ziskibien petra 'zinifie ar barabolenn-se. ¹⁸Hag e lavaras dezo:

— «Ha c'hwj ive a vefe 'ta berr a spered? Ha ne ouezit ket n'eus netra euz ar pez a ya en dén a gement a hellfe e lakad d'hlan, ¹⁹rag an dra-ze ne d-a ket en e galon, med en e gov da veza distaolet er 'foz».

Hag evel-se e tisklerie e oa glan kement boued a zo. ²⁰Hag e lavarç:

— «Ar pez a zeu euz an dén, setu ar pez a louz an dén. ²¹Rag euz diabarz an dén, euz e galon eo e teu dezañ ar zoñj da ober an droug evel ma 'z eo: gadaliez, laeroñsi, muntrèrèz, avoultriez, ²²karantez direiz ouz ar madou, fallagriez, tromplèrèz, hudurnez, avi, droug-komz, ourgouill, follentez dall. ²³An oll draou 'fall-se a zeu euz an diabarz hag a ra d'an dén beza dihlan».

FEIZ AR GANANEANEZ

²⁴Mond a reas kuit ahano evid mond da vro Tir (23). Antreal a reas en eun ti ha ne 'felle ket dezañ e vefe gouezet, med ne hellas ket chom heb beza anavezet.

²⁵Rag, kerkent, e klevas ano anezañ eur vaouez hag a oa he merh dalhet gand eur spered hudur hag a zeuas d'en em daoler e-harz e dreid.

²⁶Ar vaouez a oa eur bayanez, Sirofenisianez a ouenn, hag e bedi a ree da gas kuit an droug-spered euz he merh. ²⁷Jezuz a lavaras dezi:

— «Lez da genta ar vugale da zebri ouz o hoant, rag n'eo ket deread kemer bara ar vugale d'e daoler d'ar chas bihan».

²⁸Hi a respontas:

— «Gwir eo Aotrou, med ar chas bihan, e stern an daol, a zebr bruzun ar vugale».

²⁹Ha Jezuz da lavared dezi:

— «Ablamour d'ar gomz-se, kee, eet eo an droug-spered er-mêz euz da verh».

³⁰Distrei a reas d'ar gêr, hag e kavas ar hrouadur gourvezet war ar gwele, hag an Droug-Spered eet kuit.

PARE EUN DEN BOUZAR HA MUD

³¹Jezuz a guiteas Bro-Tir, hag en eur dremen dre gêr Sidon, e teuas etrezeg mor Bro-Halilea e bro an Dégkêr.

³²Digas a reer dezañ eun dén bouzar ha mud, hag e oe goulennet digantañ astenn warnañ e zaouarn.

³³Jezuz a gemeras anezañ gantañ a-gostez, er-mêz euz an engroez. Lakaad a reas e vizied en e ziskouarn hag euz e halo war e deod.

³⁴O veza savet e zaoulagad war-zu an Neñv eh huanadas hag e lavaras dezañ:

— «Effata! da lavared eo: Digor!»

³⁵Kerkent e tigoras e ziskouarn hag e komze frêz; distagellet 'oa e deod. ³⁶Difenn a reas Jezuz outo ranna gêr da zén. Med seul-vui e tifenne, seul-vui eh embannet ar helou.

³⁷Estlammët dreist-muzul e oa an dud hag e lavarent:

— «Mad e-neus greet pep tra: Ar hleved a ro d'ar re vouzar hag ar prezeg d'ar re vud».

Pennad VIII

EIL BURZUD AR BARA KRESKET

¹En deziou-ze, o veza m'oa adarre eun niver braz a dud, ha ma n'o-doa ket peadra da zebri, e halvas Jezuz e ziskibien hag e lavaras dezo:

²— «Truez am-eus ouz an dud-se, rag tri devez 'so m'emañt ganin, ha n'o-deus netra da zebri. ³Ma kasan anezo d'ar gêr war yun, e teuint da zempla en hent, ha lod anezo a zo deuet euz a bell».

⁴E ziskibien a respontas dezañ:

— «E peleh kavoud a-walh a vara evito, amañ, er goueleh?»

⁵Hag e houlennas outo:

— «Péd baraenn ho-peus?»

— «Seiz, emezo».

⁶Urz a roas d'an dud da hourvez war an douar. Neuze e kemeras ar seiz baraenn, e lavaras eur bedenn a drugarez, e torras anezo, hag o roas d'e ziskibien evid o rei d'an dud.

⁷Bez' o-doa ive eun nebeud peskedigou. Jezuz o bennigas hag a lavaras ive o ingala. ⁸Debri a rejont hervez o hoant. An tammou a jome a oe dastumet; seiz panerad a oe anezo, ⁹Hag e oant eur pevar mil bennag a dud, ha Jezuz o hasas en o hent. ¹⁰Raktal e pignas er vag gand e ziskibien hag ez eas war-zu Dalmanouta.

AR FARIZIANED

A HOULENN EUR ZIN EUZ AN NENV

¹¹Ar Farizianed a zeuas hag a en em lakeas da dabutal gantañ. Evid e douella e houlennjont digantañ eur zin euz an neñv.

¹²En eur huanadi hir, e lavaras Jezuz:

— «Perag e houlenn ar rummad tud-mañ eur zin? E gwirionez ne vo roet d'ar rummad-mañ sin e-béd».

¹³Kuitaad a reas anezo, pignad er vag, ha treiza da vond en tu all d'ar mor.

GOELL AR FARIZIANED

¹⁴Ankounac'heet o-doa an diskibien kemer bara ganto, ha n'o-doa nemed eur varaenn hepkén er vag. ¹⁵Jezuz a roas dezo an ali-mañ:

— «Bezit war evez! Diwallit ouz goell ar Farizianed hag ouz hini Herodez» (24).

¹⁶Hag e savas trouz etrezo ablamour n'o-doa ket a vara. ¹⁷Jezuz, o houzoud kement-se, a lavaras:

— «Perag e sav trouz etrezoh en abeg n'ho-peus ket a vara? Ne intentit-hu ket c'hoaz ha ne gomprenit ket? Daoust ha kaledet e ve ho kalon? ¹⁸Daoulagad ho-peus ha ne welit ket? Diskouarn ho-peus ha ne glevit ket? Ha dizonjet ho-pefe, ¹⁹p'am-eus torret ar pemp baraenn evid pemp mil dén, péd panerad tammou ho-peus kaset ganeoh?»

— «Daouzeg, emezo!».

²⁰— «Ha p'am-eus torret ar zeiz baraenn evid ar pevar mil dén, péd panerad tammou ho-peus kaset ganeoh?»

— «Seiz, emezo!»

²¹Hag e lavare dezo:

— «Ha ne intentit ket c'hoaz?»

PARE EUN DEN DALL E BETSAIDA

²²Erruoud a rejont e Betsaida. Eun dén dall a oe digaset dezañ, hag e oe pedet da douch outañ.

²³Jezuz a grogas e dorn an dén dall hag a renas anezañ er-mêz euz ar gêriadenn. Halo a lakeas war e zaoulagad, hag astenn a reas zaouarn warnañ, hag e houlennas outañ:

— « Ha gweled a rez eun dra bennag? »

²⁴E zaoulagad a zigoras hag e lavaras:

— « Gweled a ran an dud; o gweled a ran evel gwez, med kerzed a reont ».

²⁵Neuze e laka Jezuz e zaouarn, en-dro, war e zaoulagad, hag an dén a wél sklêr. ²⁶Jezuz a gasas anezañ d'ar gêr en eur lavared:

— « Na antre ket zokén er gêriadenn ».

FEIZ AN ABOSTOL PER

²⁷Gand e ziskibien ez eas Jezuz etrezeg kêriadennou Sezare-Filip. En eur vond e reas ar goulenn-mañ ouz e ziskibien:

— « Piou on-me, hervez an dud? »

²⁸Int-i respont:

— « Yann-Vadezour. Re all a lavar Eliaz. Re all c'hoaz, unan euz ar brofeted ».

²⁹— « Ha c'hwi, emezañ adarre, piou a lavarit ez on-me? »

Pèr a gomzas hag a lavaras:

— « Ar Hrist out-te! »

³⁰Hag e hourhemennas dezo chom hep komz da zén diwar e benn (25).

JEZUZ A GOMZ EUZ E BASION

³¹Hag e stagas neuze da gelenn dezo e tle Mab an Dén gouzañv kalz, beza dianzavet gand ar bobl, Priñsed ar Veleien hag ar Skribed, beza lakeet d'ar maro, ha tri devez goude, adsevel da veo.

³²Gand asurañs e lavare kement-se. Pèr, neuze, a dennas anezañ a-gostez hag a stagas da ober rebechou dezañ.

³³Med Eñ o tistrei hag o weled e ziskibien a hourdrouzas Pèr, en eur lavared :

— « En em denn a-dreñv-din, Satan, rag n'ema ket ganit skiant Doue, med skiant an dén ».

PENAOZ MOND DA HEUL JEZUZ

³⁴Goudeze e halvas an dud da zond d'e gavoud gand e ziskibien, hag e lavaras dezo :

— « An neb a 'fell dezañ dond war va lerh a dle trei kein dezañ e-unan, kemer e groaz ha dond d'am heul. ³⁵Rag an neb a 'fello dezañ savetei e vuez a gollo anezi, med an neb a gollo e vuez ablamour din ha d'an Aviel, a zaveteio anezi.

³⁶Petra 'dalv d'an dén gounid ar béd a-béz diwar goust e vuez? ³⁷Petra 'hellfe eun dén rei hag e-nefe talvoudégéz e vuez? ³⁸Rag m'e-neus unan bennag méz ahanon hag euz va homzou, e-touez ar rummad-mañ a dud avoultrer ha peher, Mab an Dén, ive, e-no méz anezañ, pa zeuio e gloar e Dad gand an Elez santel ».

Pennad IX

TREUZFURMADUR JEZUZ

¹Hag e lavare dezo :

— « E gwirionez m'hel lavar deoh, e-touez an dud a zo amañ, ez eus lod ha ne varvint ket a-raog beza gwelet Rouan-tèlèz Doue deuet gand galloud » (26).

²Seiz devez goudeze, e kemeras Jezuz gantañ a-gostez, Pèr, Jakez ha Yann, hag o hasas gantañ, int-i nemed-kén, war eur menez uhel, pell diouz pep tra. Ha dirazo e teuas da jeñch-furm.

³E zillad a zeuas da veza gwenn-kann, ken gwenn ma ne hell kanner e-béd war an douarn kanna evel-se.

⁴Dirazo e weljont Eliaz ha Moizez o komz gand Jezuz. Pèr, neuze, a lavaras da Jezuz:

⁵— « Mestr, eun dra gaer eo deom beza amañ. Savom eta teir deltenn: unan evidout, unan all evid Moizez hag unan all evid Eliaz ».

⁶Ne ouie ket petra da lavared, ken braz 'oa e strafuill. ⁷Dond a reas eur goabrenn d'o gelei, hag euz ar goabrenn e teuas eur vouez:

— « Va mab muia karet eo hemañ, selaouit anezañ ».

⁸Kerkent, o veza sellet en-dro dezo, ne weljont dén all e-béd, nemed Jezuz e-unan ganto.

⁹En eur ziskenn diwar ar menez e tifennas Jezuz outo ranna gér da zén euz ar pez o-doa gwelet, nemed pa vo bet Mab an Dén savet a-douez ar re varo.

¹⁰Senti a rejont ouz an urz-se, en eur houlenñ kenetrezo petra e-noa c'hoant da lavared gand: « Sevel a-douez ar re varo ».

GOULENN DIWAR-BENN ELIAZ

¹¹Neuze e houlenñjont outañ:

— « Perag e lavar ar Skribed e tle Eliaz dond da genta? »

¹²Respont a reas dezo:

— « Ya, gwir eo, Eliaz a zeu da genta hag a laka en-dro pep tra en e stad, med penaoz neuze ez eus bet skrivet diwar-benn Mab an Dén, e rañko gouzañv garo ha beza disprijet? »

¹³« Mad! M'hel lavar deoh, deuet eo dija Eliaz (27) hag o-deus greet dezañ ar pez a garent, hervez er pez a zo bet skrivet diwar e benn ».

PARE EUR BUGEL DALHET
GAND AN DROUG-SPERED

¹⁴O tond war-zu an diskibien, e weljont eur bobl a dud war o zro, ha skribed o tabutal ganto. ¹⁵Kerkent ha ma weljont Jezuz, e oe sebezet an oll hag e teued da zaludi anezañ.

¹⁶Goulenn a reas outo:

— «Diwar-benn petra e tabutit ganto?».

¹⁷Unan a respontas dezañ euz a-douez an dud:

— «Mestr, digaset am-eus va mab hag a zo dalhet gand eur spered mud. ¹⁸Ar spered a grog ennañ, n'eus forz e peleh, e daoler a ra d'an douar, hag ar paotr a zeu an eonenn euz e henou, a skrign e zent, hag a zeu da veza reud. Lavaret am-eus d'az tiskibien e argas kuit, med n'o-deus ket gellet».

¹⁹Jezuz a lavaras dezo:

— «Gouenn diskredig ma 'z oh! Beteg pe vare e vezin-me ganeoh? Beteg pe vare am-bo d'ho kouzañv? Digasit anezañ din».

²⁰E zigas a rejont. Kerkent ha ma welas Jezuz e stagas ar spered da heja ar bugel gand glizi. Hemañ, kouezet d'an douar, en em ruille, an eonenn en e henou.

²¹Jezuz a houlennas ouz an tad:

— «Pegeid a zo e c'hoarvez an dra-ze gantañ?»

— «Abaoe e vugaleaj, emezañ. ²²Aliez e-neus ar spered e daolet en tan pe en dour evid ober dezañ mervel. Med ma hellez ober eun dra bennag, deus d'or zikour dre druez ouzom!»

²³«Mar gellez? eme Jezuz. Evid an hini a gréd pep tra a hell c'hoarvezoud».

²⁴Kerkent e youhas tad ar bugel:

— «Kredi a ran! Deus war zikour al laosk m'eo va feiz».

²⁵Jezuz, o weled an dud o tiredeg, a hourdrouzas ar spered hudur:

— «Spered mud ha bouzar, me her gourhemenn dit: Kerz er-mêz euz ar bugel-mañ, ha na zistro mui ennañ».

²⁶Gand yôhadennou ha glizi ez eas ar spered er-mêz. Ar bugel a zeuas da veza evel maro, ken na lavare an dud: « Maro eo! »

²⁷Jezuz a-vad a grogas en e zorn, a reas dezañ sevel hag e chomas en e-zav. ²⁸Pa oe antreet Jezuz en ti, an diskibien, a-gôstez, a houlennas outañ:

— « Perag n'on-eus-ni ket gellet kas kuit ar spered-se? »

²⁹Lavared a reas dezo:

— « Ne hell eur seurt spered beza argaset nemed dre ar bedenn ».

JEZUZ A GOMZ A NEVEZ EUZ E BASION

³⁰Eet ahano, e rejont hent a-dreuz Bro-Halilea, ha ne 'felle ket da Jezuz e vije gouezet. ³¹Rag bez' e-noa da gelenn e ziskibien hag e lavare dezo:

— « Mab an Dén a zo o vond da goueza etre daouarn an dud. Laket e vo ganto d'ar maro, ha tri devez goudeze eh adsavo da veo ».

³²Hogen, ne gompene ket an diskibien ar homzou-ze, ha ne gredent ket ober goulennou outañ.

PIOU EO AR BRASA

³³Erruoud a rejont e Kafarnaom. Eur wech eet en ti e houlennas Jezuz outo:

— « Diwar-benn petra e oa kaoz ganeoh a-hed an hent? »

³⁴Chom a rejont dilavar, rag a-hed an hent e oa tabut etrezo da houzoud pehini 'oa ar brasa.

³⁵Jezuz a azezas hag a halvas an Daouzeg d'e gavoud. Lavared a reas dezo:

— «Ma fell da unan bennag beza ar henta, dezañ beza an diweza ha servicher an oll».

³⁶Kemer a reas eur bugel hag e lakaad dirazo. O veza stardet anezañ etre e zivreh e lavaras dezo:

³⁷— «An neb a zigemer, em ano, eur bugel evel hemañ, am digemer me va-unan, hag an neb am digemer, n'eo ket me eo a zigemer med an hini e-neus kaset ahanon».

DRE ANO JEZUZ

³⁸Yann a lavaras dezañ:

— «Mestr, gwelet on-eus eun dén ha ne zeu ket ganeom o kas kuit an droug-sperejou dre da ano, hag on-eus mired outañ».

³⁹Respont a reas Jezuz:

— «Arabad mired outañ, rag n'eus dén a gement a rafe eur burzud dre va ano, hag a yafe buan da gomz fall diwar va 'fenn.

⁴⁰«An neb n'ema ket a-eneb deom a zo a-du ganeom.

⁴¹«Piou bennag a roio deoh da eva eur werennad dour, ablamour ma 'z oh diskibien d'ar Hrist, e gwirionez m'hel lavar deoh, ne gollo ket e rekompans».

AR GWALL-SKWER

⁴²«An hini a zo eur skoill evid unan bennag euz ar re vihan a gréd ennon, gweloh e ve dezañ beza staget ouz e houzoug eur mên-milin, ha beza stlapet er mor.

⁴³«Ha ma vez da zorn o tougenn ahanout d'ar pehed, troh anezañ, rag gweloh eo dit antreal mougner er vuez, kentoh eged koueza gand da zaou zorn er «jehenn», en tan ne vary ket.

⁽⁴⁴⁾ ⁴⁵« Ma vez da droad o tougenn ahanout d'ar pehed, troh anezañ, rag gwelloc'h eo dit mond kamm d'ar vuez peurbaduz, eged beza stlapet gand da zaou droad er « jehenn ».

⁽⁴⁶⁾ ⁴⁷« Ha ma vez da lagad o tougenn ahanout d'ar pehed, tenn anezañ kuit, rag gwelloc'h eo dit mond born e Rouantêlêz Doue, eged beza stlapet gand da zaou lagad er « jehenn », ⁴⁸el leh|m'ema ar|preñv na varv|ket hag an|tan na heller ket mouga. ⁴⁹Rag pep dén a zo da veza sallet en tan.

⁵⁰« Eun dra vad eo an holer, med ma teu da goll e zaour, gand petra e vo roet dezañ en-dro? Ho-pet holer ennoh ha bezit e peoh kenetrezoñ ».

Pennad X

DIMEZI HA TORR-DIMEZI

¹Jezuz a yeas kuit ahano da vond da Vro-Judea, en tu all d'ar Jordan. An dud a zeuas adarre en-dro dezañ, hag e kelenne anezo, eur wech c'hoaz, hervez ma oa kustum d'henn ober.

²Farizianed a dosteas outañ, hag evid e baka en e gomzou e houlennjont outañ:

— « Daoust hag e hell eur gwaz kas kuit e wrég? »

³Jezuz a respontas dezo:

— « Petra e-neus Moizez gourhemennet deoh? »

⁴— « Moizez, emezo, e-neus aotreet rei eul lizer a zisparti ha kas kuit ar wrég ».

⁵Jezuz a lavaras dezo:

— « Ablamour d'ar haledet m'eo ho kalonou, e-neus Moizez skrivet al lezenn-se. ⁶Med e penn kenta ar béd e-noa Doue greet anezo gwaz ha maouez. ⁷Ha rag-se ar gwaz a

guitaio e dad hag e vamm hag en em stago ouz e wrég. ⁸Ha ne vint o-daou nemed unan; evel-se, n'eus ket mui daou anezo, med unan hepkén.

⁹« Arabad d'an dén eta dispartia ar pez e-neus Doue unanet ».

¹⁰Eur wech deuet en ti, e reas an diskibien goulennoù outañ adarre war ar poent-se. ¹¹Hag e respontas dezo:

— « An neb a gas kuit e wrég hag a gemer unan all a ra avoultriez en he-heñver. ¹²Hag ar vaouez, ma kas kuit he gwaz evid dimezi da unan all, a ra avoultriez ive ».

JEZUZ HAG AR VUGALE

¹³Tud a oa hag a zigase dezañ bugaligoù da douch outo. Med an diskibien a ree gourdroù dezo.

¹⁴Ouz o gweled, Jezuz a yeas droug ennañ hag a lavaras »

— « Lezit ar vugaligoù da zond davedon, ha na virit ket outo, rag d'ar re a zo heñvel outo eo Rouantèlèz Doue.

¹⁵« E gwirionez m'hel lavar deoh, an neb na zigemer ket Rouantèlèz Doue evel ma ra eur bugelig, ne antreo ket e-barz » (28).

¹⁶O starda a ree neuze etre e zivreh hag o benniga en eur lakaad e zaouarn warno.

AN DEN PINVIDIG

¹⁷O veza m'edo o vond en hent, e tiredas eun dén d'e gávoud. Daoulinet dirazañ, e houlenas outañ:

— « Mestr mad, petra am-eus da ober evid gounid ar vuez peurbaduz? »

¹⁸Jezuz a lavaras dezañ:

— « Perag e lavarez « mad » din? Dén e-béd n'eo mad nemed Doue hepkén! ¹⁹Anaoud a rez ar gourhemennou: « Ne

lazi ket. Ne ri ket avoultriez. Ne laeri ket. Ne lavari ket falz-testeni. Ne ri gaou ouz dén. Da dad, da vamm a enori ».

²⁰An dén a respont dezañ :

— « Mestr, kement-se am-eus miret abaoe va yaou-ankiz ».

²¹Jezuz, o veza paret e zell warnañ, a garas anezañ hag a lavaras :

— « Eun dra a ra diouer dit c'hoaz: Kee, gwerz da oll vadou, ro anezo d'ar beorien hag ez-po eun teñzor en Neñv, ha neuze, deus d'am heul ».

²²Deuet teñval e benn o kleved kement-se, ez eas kuit, glaharet e galon, rag braz oa e beadra.

²³O selled en-dro dezañ, e lavaras Jezuz d'e ziskibien :

— « Pegen diêz e vo d'ar re o-deus madou antreal e Rouantèlèz Doue! »

²⁴Sebezet e chome an diskibien gand e gomzou, ha Jezuz a lavaras dezo startoh c'hoaz :

— « Na pegen diêz, va bugale, eo antreal e Rouantèlèz Doue! ²⁵Esoh eo d'eur hañval tremen dre doull eun nadoz eged d'eun dén pinvidig antreal e Rouantèlèz Doue ».

²⁶Sebezet muioh-mui, e houlenne an diskibien an eil ouz egile :

— « Piou 'ta neuze a hell beza salvet? »

²⁷Jezuz o veza paret e zell warno a lavaras dezo :

— « Evid an dud ez eo dreist d'o galloud, med evid Doue n'eo ket, rag Doue n'eus netra ousspenn dezañ ».

DIGOLL AR RE A ZILEZ PEP TRA

²⁸Pèr neuze a lavaras dezañ :

— « Setu on-eus-ni kuiteet pep tra, hag ez om eet d'az heul ».

²⁹Ha Jezuz da respont dezo :

— «E gwirionez m'hel lavar deoh, neus dén e-béd, kuiteet gantañ eun ti, breudeur, c'hoarezed, tad, mamm, bugale, parkeier, ablamour din ha d'an Aviel, ³⁰ha ne resevo ket dija kant kwech muioh er béd-mañ: tiez, breudeur, c'hoarezed, tad, mamm, bugale, parkeier, hag heskinou ouspenn, hag er béd da zond ar vuez peurbaduz».

³¹«Kalz euz ar re genta a vo da ziweza hag euz ar re ziweza a vo da genta».

EVID AN TREDE GWECH E KOMZ JEZUZ EUZ E BASION

³²En hent, edont o sevel da Jeruzalem, ha Jezuz a gerze en o-raog. Spontet e oant hag ar re a zeue da heul o-doa aon.

Jezuz a gemeras gantañ adarre an Daouzeg hag en em lakeas da lavared dezo ar pez a oa da zigouezoud gantañ :

³³— «Setu ma savom da Jeruzalem, hag e vo Mab an Dén lakeet etre daouarn Priñsed ar Veleien hag ar Skribed. E varn a raint d'ar maro hag e lakaad etre daouarn ar bayaned.

³⁴Goap a raint outañ, tufa outañ, e skourjeza, e laza ha tri devez goude eh adsavo da veo».

GOULENN JAKEZ HA YANN

³⁵Jakez ha Yann a dosteas ouz Jezuz hag a lavaras dezañ :

— «Mestr, ni or-befe c'hoant e rafez evidom ar pez on-eus da houlenn»

³⁶Respont a reas dezo :

— «Petra 'fell deoh e rafen evidoh?»

³⁷— «Gra, emezo, ma vezim laket da azeza, unan en tu dehou, egile en tu kleiz dit en da hloar».

³⁸Jezuz a-vad a lavar dezo:

— «N'ouzoh ket petra 'houlennit. Ha gouest oh da eva ar halirad am-eus-me da eva? pe da reseo ar vadeziant am-eus-me da gaoud?» (29).

³⁹Respont a rejont:

— «Gouest om!»

Jezuz a lavaras dezo:

— «Ar halirad am-eus da eva ho-po da eva ive, hag ar vadeziant am-eus da gaoud e vezoh badezet enni. ⁴⁰Evelato, azeza en tu dehou pe en tu kleiz din, n'eo ket din-me her rei deoh. Bez' e vo evid ar re m'eo miret ar plasou-se evito».

⁴¹An dég abostol all o veza klevet ar gaoz a yeas droug enno ouz Jakez ha Yann. ⁴²Jezuz a halvas anezo d'e gavoud hag a lavaras dezo:

— «Her gouzoud a rit, ar re a weler e penn ar poblou a ra o mistri warno hag ar pennoù braz a lak o galloud da boueza. ⁴³Ganeoh-c'hwi ne dle ket beza evel-se, er hontrol eo: an neb e-no c'hoant dond da veza braz, ra vo servicher deoh. ⁴⁴Hag an neb e-no c'hoant beza ar henta, ra vo servicher d'an oll. ⁴⁵Rag Mab an dén e-unan n'eo ket deuet evid beza servichet, med evid servicha ha rei e vuez da brena an oll dud».

PARE AN DEN DALL BARTIME

⁴⁶Digouezoud a reont e Jeriko. D'ar mare m'edo Jezuz o kuitaad Kêr gand e ziskibien hag eur boblad mad a dud, e oa azezet, war bord an hent, o houlenn aluzenn, eun dén dall anvet Bartime.

⁴⁷O veza klevet e oa o tremen Jezuz a Nazared, e stagas da grial:

— «Jezuz, Mab David, bez truez ouzin!»

⁴⁸Kalz tud a hourdrouze anezañ evid e lakaad da jom peoh. Med eñ a grie gwasoh-gwaz:

— « Mab David, ho pet truez ouzin! »

⁴⁹Chomet a-zav, Jezuz a lavaras:

— « Galvit anezañ da zond ».

Galvet e oe an dén dall hag e oe lavaret dezañ:

— « Kemer fiziañs. Sav! Galvet out gantañ ».

⁵⁰An dén dall a daol kuit e vantell hag en eul lamm e teu da gavoud Jezuz. ⁵¹Jezuz a houlennas outañ:

— « Petra 'fell dit a rafen evidout? »

— « Rabbouni, emezañ, gra din gweled sklêr ».

⁵²Jezuz neuze a lavaras dezañ:

— « Kee! Gand da 'feiz out salvet ».

Raktal e kav en-dro ar gweled, hag ez ee da heul Jezuz war an hent.

Pennad XI

JEZUZ DIGEMERET E JERUZALEM EVEL EUR ROUE

¹Pa oent erruet tost de Jeruzalem, e-kichenn Betfaje ha Betania, dirag Menez an Olived, e kasas Jezuz daou euz e ziskibien, en eur lavared dezo:

²— « It d'ar vourhadenn a zo dirazoh. Kerkent hag eet e-barz e kavoh eun azen yaouank ouz ar stag, ha n'eus bet c'hoaz dén azezet warnañ. Distagit anezañ hag henn digasit ganeoh.

³« Ma houlenn unan bennag ouzoh: « Petra 'rit aze? » Respontit: « An Aotrou e-neus ezomm anezañ ». Ha dioustu e lezo anezañ da zond ganeoh ».

⁴Mond a reont eta, hag e kavont eun azen yaouank stag e-kichenn eun nor, er-mêz euz an ti, hag e tistagont anezañ.

⁵Tud a oa eno hag a houlennas outo:

— «D'ober petra e tistagit an azenig-se?»

⁶Int-i da respont evel m'e-noa lavaret Jezuz, hag e lezer anezo da ober. ⁷Digas a reont an azen yaouank da Jezuz. Taoler a reont o mantilli war e geñ ha Jezuz a azezas warnañ.

⁸Kalz tud neuze a léd o mantilli war an hent ha lod all bodou trohet ganto er parkeier. ⁹Ar re a gerze a-raog koulz hag ar re a zeue warlerh a youhe a-bouez-penn:

«Hozanna!

«Benniget an hini a zeu en ano Doue!

¹⁰«Benniget ar Rouantélèz a zo o tond,

«hini David on Tad.

«Hozanna e barr an Neñvou!»

¹¹Hag eh antreas e Jeruzalem, en templ. Goude beza greet eur zell war bep tra en-dro dezañ, o veza m'oa dija ar zerr-noz, ez eas ahanu da Vetania gand an Daouzeg.

AR WEZENN FIEZ DIZEHET

¹²Antronoz, o veza m'edont o vond kuit euz Betania, Jezuz a zeuas naon dezañ. ¹³O weled euz a bell eur wezenn 'fiez, deliou dezi, ez eas da weled ha kavoud a rafe enni eun dra bennag.

Tostaad a reas ha ne gavas nemed deliou. N'edod ket e mare ar fiez. ¹⁴Neuze e komzas hag e lavaras d'ar wezenn 'fiez:

— «Biken mui ne zebro dén euz da 'frouez» (30).

An diskibien a zelaoue.

AR VARHADOURIEN KASET ER-MEZ EUZ AN TEMPL

¹⁵Digouezoud a reont e Jeruzalem. Eet en templ, en em lakeas Jezuz da gas er-mêz an dud a oa o werza hag o prena en

templ. Tumpa 'reas taoliou an eskemmerien arhant ha kado-riou ar varhadourien goulmed.

¹⁶Ne leze dén e-béd da dreuzi an templ sammet gand tra pe dra. ¹⁷Kelenn a ree ha lavared:

— «Daoust ha n'eo ket skrivet:

«*Va zi a vo anvet ti ar bedenn*

«*evid an oll boblou,*

«*ha c'hwi ho-peus greet anezañ*

«*eun toull laeron*».

¹⁸Priñsed ar Veleien hag ar Skribed a glevas, hag a glaske an tu d'e lakaad d'ar maro, rag aon o-doa razañ, ablamour m'oa estlammet ar bobl gand e gelennadurez. ¹⁹Deuet an abardaez e kuiteas kêr gand e ziskibien.

AR WEZENN FIEZ DIZEHET

²⁰En eur vond e-biou, antronoz vintin, e weljont ar wezenn 'fiez dizehet beteg he gwriziou. ²¹Pèr, deuet da zoñj dezañ, a lavaras:

— «Rabbi! Sell ta! Seh-korn eo ar wezenn 'fiez az-poa milliget».

²²Jezuz a respontas:

— «Ho-pet feiz e Doue. ²³E gwirionez, m'hel lavar deoh: ma lavar unan bennag d'ar menez-se: «Sav alese hag en em daol er mor», ma n'eus ket douetañs en e galon, ha ma kréd e tigouezo ar pezh a lavar, e vo sevenet e vennad.

²⁴«Setu perag e lavaran deoh: Kement a houlennoh en ho pedennou, kredit ho-peus e resevet, hag e vo roet an dra-ze deoh.

²⁵«Ha pa vezit en ho-sav o pedi, m'ho-peus tra pe dra a-eneb da unan bennag, pardonit, evid ma pardono ive deoh ho pehejou ho Tad hag a zo en Neñvou».

GOULENNOU AR JUZEVIAN WAR HALLOUD JEZUZ

(26)²⁷Distrei a reont da Jeruzalem. Jezuz a oa en templ o tond hag o vond. Priñsed ar Veleien, ar Skribed ha Pennou-Braz ar bobl a dosteas outañ, ²⁸hag a lavaras dezañ:

— «A-berz peseurt galloud e rez-te an dra-ze? Piou e-neus roet dit galloud d'henn ober?»

²⁹Respont a reas dezo:

— «Ne rin nemed eur goulenn ouzoh. Respontit din hag e lavarin deoh a-berz peseurt galloud e ran kement-se: ³⁰Badeziant Yann, daoust hag euz an Neñv e teue, pe a-berz an dud? Respontit din.»

³¹Soñjal a rejont enno o-unan: «Ma lavarom euz an Neñv e responto: Perag'ta n'ho-peus ket kredet ennañ? ³²Ha lavared e raim: a-berz an dud?»

Aon o-doa, rag an oll a grede e oa, e gwirionez, Yann eur profet. ³³Neuze e respontjont da Jezuz:

— «N'ouzom ket!»

Ha Jezuz dezo:

— «Me, kennebeud, ne lavarin ket deoh a-berz peseurt galloud e ran kement-se.»

Pennad XII

AR WINIERIEN DORFETOUR

¹Hag e stagas da gomz dezo dre barabolennou:

— «Eun dén e-neus plantet eur winieg (31), laket eur harz en-dro dezi, kleuzet eur'foz ha savet eun douribell. Feurmet e-neus anezi da winierien hag eet kuit.

²«Deuet ar mare, e kasas eur zervicher da gavoud ar winierien, da houlenn diganto e lod euz frouez ar winieg.

³Med ar re-mañ a bakas krog ennañ, a skoas gantañ hag e gasas en e hent gand netra.

⁴«Eur zervicher all a gasas dezo c'hoaz. Hemañ ive o-deus skoet gantañ war e benn ha dismegañset anezañ.

⁵«Unan all a gasas c'hoaz hag hemañ a oe lazet ganto zokén; ha goude, kalz re all; lod a oe skoet ganto ha lod all lazet. ⁶Ne jome gantañ nemed e vab muia karet. E gas a reas daveto da ziweza kannad, en eur lavared ennañ e-unan: «Douja 'raint va mab».

⁷«Ar winierien-ze a-vad a lavaras kenetrezo:

— «Ar pennher eo hemañ, deom, lazom anezañ, hag e vo deom an hêrèz».

⁸«Kroget o-deus ennañ, e lazet hag e stlapet er-mêz euz ar winieg.

⁹«Petra 'raio mestr ar winieg? Dond a raio, kas ar winierien d'ar maro ha fizioud ar winieg e tud all.

¹⁰«Ha n'ho-peus ket lennet ar pennad-mañ er Skritur?

*«Ar mên taolet a-gostez gand saverien an ti,
«hennez eo a zo deuet da veza ar mên-korn».*

¹¹«An dra-ze eo e-neus greet an Aotrou, tra estlammuz evid on daoulagad. ¹²Hag e klaskent an tu da gregi ennañ, med aon o devoa rag an dud. Intentet mad o-doa eo evito eo e-noa lavaret ar barabolenn-se. Neuze e lezjont anezañ hag ez ejont kuit.

AN TAILLOU DLEET DA ZEZAR

¹³Kas a rejont d'e gavoud eun nebeud Farizianed ha Saduseaned evid e dapa war gomz pe gomz. ¹⁴Dond a rejont da lavared dezañ:

— «Mestr, gouzoud a reom ez out eun dén eün ha ne lezez dén da gaoud levezon warnout. Ne zellez ket ouz reñk an dud, ha kelenn a rez hent Doue hervez ar wirionez... Hag aotre a zo, pe n'eus ket, da baea taillou da Zezar?»

¹⁵Med Eñ, anad dezañ o zrubardèrèz, a lavaras dezo:

— «Perag e klaskit paka ahanon? Digasit din eur pez arhant ma welin!»

¹⁶Digas a rejont unan dezañ. Neuze e lavaras dezo:

— «Euz piou eo ar skeudenn hag an enskrivadur?»

— «Euz Sezar, emezo».

¹⁷Jezuz a lavaras dezo:

— «Rentit da Zezar ar pez a zo da Zezar, ha da Zoue ar pez a zo da Zoue».

Chom a rejont souezet braz gand ar homzou-ze.

ADSAO AR RE VARO DA VEO

¹⁸Saduseaned a zeu d'e gavoud. Ar re-ze a lavar n'eus ket a adsao da veo, hag e rejont outañ ar goulenn-mañ:

¹⁹— «Moizez e-neus skrivet evidom: «Setu eun dén. Ma teu eur breur dezañ da vervel o lezel e wrég, med heb bugale, eñ a zimezo gand an intañvez hag a zavo ligned d'e vreur».

²⁰— «Bez' e oa seiz breur. Ar henta a zimezas hag a varvas dízhèr. ²¹An eil a zimezas gand an intañvez hag a varvas hep lezel bugale. An trede, ar memez tra. ²²Ha ne lezas, hini e-béd euz ar zeiz, bugale war e lerh.

«Da ¹fin an dro, e varvas ive ar wrég. ²³Da vare an dasorh, pa adsavint a varo da veo, da behini anezo e vo-hi gwrég? Pegwir, o zeiz, o-deus bet anezi da wrég».

²⁴Jezuz a respontas dezo:

— «Ma faziit, daoust ha n'eo ket ablamour ne anavezit ket ar Skrituriou na galloud Doue? ²⁵Rag pa adsaver a varo da veo, ne gemerer na gwrég na gwaz, med heñvel e vezer ouz êlez en Neñvou.

²⁶« Ha diwar-benn adsao ar re varo da veo, ha n'ho-peus ket lennet e levr Moizez, e pennad ar « bod entanet », penaoz e-neus lavaret Doue dezañ :

« *Doue Abraham on, Doue Izaag ha Doue Jakob* ». ²⁷N'eo ket Doue tud maro, med Doue tud beo. Fazia a rit a-grenn ».

AR HENTA EUZ AR GOURHEMENNOU

²⁸Eur skrib a dosteas. Klevet e-noa an divizou a oa bet etrezo ha kavet mad ar pez e-noa respontet Jezuz, hag e houlennas outañ :

— « Pehini eo ar henta euz ar gourhemennou? »

²⁹Respont a reas Jezuz :

— « An hini kenta eo : « Selaou Israel, an Aotrou on Doue, n'eus Aotrou e-béd nemetañ. ³⁰Kared a ri an Aotrou da Zoue, a-greiz da galon, gand da oll ene, da oll spered ha da oll nerz. ³¹Hag an eil eo hemañ : Kared a ri da nesa eveldout da unan. N'eus ket brasoh gourhemenn eged ar re-ze ».

³²Ar skrib neuze a lavaras dezañ :

— « Mad-tre, Mestr ! Gwir eo ar pez az-peus lavaret : N'ez eus nemed eun Doue, ha n'eus hini all e-béd nemetañ. ³³Kared anezañ a-greiz kalon gand an oll nerz hag an oll spered ha kared an nesa eveldor an unan a dalv muioh eged an oll brovou ha sakrifisou ».

³⁴Jezuz, o weled e-noa an dén-ze greet eur respont fur, a lavaras dezañ :

— « N'emaout ket pell diouz Rouantélèz Doue ».

Ha ne grede mui dén e-béd ober goulennoù outañ.

AR MESIAZ HA DAVID

³⁵Jezuz a gomzas hag a gelenne en templ.

— «Penaoz, emezañ, e hell ar Skribed lavared ez eo ar Hrist mab da Zavid? ³⁶David e-unan, sklerijennet gand ar Spered-Santel e-neus lavaret:

*«An Aotrou e-neus lavaret d'am Aotrou:
«Azez en tu dehou din,
«beteg m'am-bo greet euz da enebourien
«eur skabell dindan da dreid».*

³⁷«David e-unan a ra Aotrou anezañ, penaoz neuze ez eo Mab dezañ?»

An dud, niveruz, a zelaoue anezañ gand plijadur.

AR SKRIBED BARNET GAND JEZUZ

³⁸En e gelennadurez e lavaras Jezuz:

— «Diwallit ouz ar Skribed, a blij dezo mond ha dond, gwisket gand saeou kaer, ha beza saludet war ar plasennou; ³⁹mond da azeza war ar hadoriou kenta er zinagogou ha kaoud ar reñkou kenta er prejou. ⁴⁰Debri a reont madou an intañvezed, ha pedennou hir a reont evid beza gwelet: seul rustoh e vo evito ar varnedigez».

PROF AN INTANVEZ

⁴¹Azetet dirag kéf ar provou, e selle Jezuz penaoz e taole an dud peziou mounreiz e-barz, ha kalz re binvidig a daole kalz.

⁴²Dond a reas eun intañvez paour hag a lakeas daou bezig. ⁴³Jezuz a halvas e ziskibien d'e gavoud hag e lavaras dezo:

— «E gwirionez, m'hel lavar deoh, an intañvez paour-mañ he-deus laket er héf muioh eged an oll dud all. ⁴⁴Ar re-ze o-deus laket euz ar pez o-doa da zioueri, med hi he-deus kemeret war he diénéz, ha roet kemend he-doa, kemend a jome ganti da veva».

Pennad XIII

DISMANTR JERUZALEM (32)

¹P'edo Jezuz o vond kuit euz an templ; e lavaras dezañ unan euz e ziskibien:

— « Mestr, sell peseurt mein! Peseurt savaduriou »!

²Jezuz a lavaras dezañ:

— « Gweled a rez ar savaduriou braz-se? Ne jomo ket mên war vên anezo. Distrujet e vo pep tra ».

³Jezuz a oa azezet war ar Menez Olived dirag an templ. Pêr ha Yann, gantañ a-gostez, a houlenne outañ:

⁴— « Lavar deom, pe vare e tigouezo kement-se, ha petra 'vo ar zin ema an oll draou-ze o vond da echui ».

⁵Jezuz a lavaras dezo:

— « Taolit evez na zeufe dén d'ho touella. ⁶Kalz a zeuio en eur gemer va ano hag a lavaro: « Me eo ! » Ha kalz tud a vo touellet ganto.

⁷« Pa glevoh ano euz brezeliou, pe euz kelou a vrezeliou, n'it ket 'ta da gaoud aon. An dra-ze a dle c'hoarvezoud, med ne vo ket c'hoaz ar fin.

⁸« Brezel a zavo, pobl a-eneb pobl, rouantêlêz a-eneb rouantêlêz. Krén-douar a vo e meur a leh, ha kernez. Aze e vo ar penn kenta euz poaniou ar gwilioud.

⁹« Bezit war evez! Laket e vezoh etre daouarn ar varnerien, ha skourjezet er zinagogou. Kaset e vezoh dirag ar houarnourien hag ar rouaned ablamour din-me. Eun testeni a vo aze evito.

¹⁰« Rag réd eo da genta e vefe embannet an Aviel d'an oll boblou. ¹¹Ha pa gasint ahanoh evid beza roet ganto n'ho-pet ket nehamant, en a-raog, evid gouzoud petra da lavared. Med ar pez a vo roet deoh da houzoud d'ar mare-ze, c'hwi henn lavaro, rag n'eo ket c'hwi eo a gomzo, med ar Spered-Santel.

¹²« Ar breur a roio e vreur d'ar maro hag an tad e grouadur. Ar vugale en em zavo a-eneb d'o zud hag a lakaio o hondaoni d'ar maro.

¹³« Kasoni o-do an oll ouzoh ablamour d'am ano, med an hini a zalho mad beteg penn, hennez a vo salvet.

MEZ HA REUZ SPONTUZ

¹⁴« Pa weloh eta an heugadenn spontuz (33) o chom el leh na dle ket beza — ra intento an neb a lenn — neuze ar re a vo e Bro-Judea, dezo tehed d'ar meneziou. ¹⁵An hini a vo war al leurenn-doenn, arabad e vo dezañ diskenn, nag antreal en e di evid kas gantañ tra pe dra. ¹⁶An hini a vo er park, arabad dezañ dond war e giz da gemered e vantell, ¹⁷Gwas-a-ze d'ar gwraze a vo o tougenn pe o vaga en deziou-ze.

¹⁸« Pedit evid na zigouezo ket kement-se er goañv. ¹⁹Rag deveziou a enkrez e vo an deveziou-se, evel ma n'eus ket bet o 'far abaoe ar penn kenta euz ar béd krouet gand Doue beteg bremañ hag evel na vo mui.

²⁰« Ha ma 'nefe ket an Aotrou berreet an deveziou-ze, ne vefe saveteet dén e-béd. Med o berreet e-neus ablamour d'an dud santel dibabet gantañ.

²¹« Neuze, ma lavar unan bennag deoh:

— « Sell! Amañ ema ar Mesiaz! Sell! Aze ema! » Na gredit ket! ²²Sevel a raio Kristed faoz ha falz-Profeted. Ober a raint sinou ha burzudou: peadra da zeseo an dud santel o-unan ma vefe posubl. ²³C'hwí eta, taolit evez. Lavaret em-eus deoh pep tra en a-raog».

DONEDIGEZ MAB AN DEN

²⁴« Med en deveziou-ze, goude trubuillou spontuz, e teñvalaio an heol. Al loar ne roio mui he sklêrder. ²⁵Ar stered a gouezo euz an oabl, hag an neñvou a vrañsello (34).

²⁶« Neuze e vo gwelet Mab an Dén o tond er houmoul gand galloud ha gloar dispar. ²⁷Kas a raio neuze e êlez da zastum ar re dibabet gantañ euz pevar horn ar béd, euz penn pella an douar beteg penn pella an neñv.

PARABOLENN AR WEZENN FIEZ

²⁸« Kemerit kentel diwar ar wezenn 'fiez. Pa vez deuet tener ar skourrou anezi ha digor an deliou, c'hwi a oar ema tost an hañv.

²⁹« Evel-se, c'hwi ive, a-benn m'ho-po gwelet an traou-ze o c'hoarvezoud, gouezit ema Mab an Dén deuet da gichenn, e-tal an nor.

³⁰« E gwirionez, m'hel lavar deoh, ne vo ket tremenet ar rummad tud-mañ, a-barz ma tigouezo an oll draou-ze. ³¹An neñv hag an douar a dremenno, va homzou-me ne dremenint ket.

³²« Med evid ar pez a zell ouz an deiz pe an eur, ne oar dén e-béd, nag an êlez en Neñv, nag ar Mab zokén. N'eus nemed an Tad hag a oar ».

BEZIT WAR EVEZ

³³« Diwallit! Bezit war evez! Rag n'ouzoh ket pegoulz e vo ar mare.

³⁴« An dra-ze a zo heñvel ouz eun dén hag a ya da veaji. Lezet e-neus e di, roet karg d'e zervicherien, ha labour da bep hini, ha gourhemennet d'ar porzier beza war evez.

³⁵« Bezit war evez eta, rag n'ouzoh ket pe da vare e tistroio mestr an ti, pe da hanter noz, pe da gan ar hillog, pe diouz ar mintin. ³⁶Gand aon na zigouezfe a-greiz pep kreiz ha n'ho kavfe kousket.

³⁷« Ar pez a lavaran deoh, eo d'an oll hel lavaran. Bezit war evez! »

Pennad XIV

AR BASION

¹Ar Park, ha gouel ar Bara Dihoell (35) a oa da veza a-benn daou zevez, hag edo Pennou-Braz ar Veleien hag ar Skribed o klask dre beseurt tro-blég tapa krog e Jezuz, evid e lakaad d'ar maro, ²hag e lavarent kenetrezo:

— «Arabad e vefe e-pad ar gouel gand aon na zavfe trouz e-touez ar bobl».

JEZUZ E BETANIA

³Jezuz a oa e Betania, e ti Simon al Lor. E-pad m'edo ouz taol e teuas eur vaouez, ganti eur podad louzou c'hwez-vad pur ha talvouduz braz... Terri a reas ar pod ha skuill ar c'hwez-vad war benn Jezuz. ⁴Ouspenn unan a oe feuket hag e lavarent kenetrezo:

— «Da betra koll evel-se al louzou c'hwez-vad? ⁵Gellet e vije bet e werza ouspenn tri hant diner ha rei ar priz d'ar beorien».

Hag e hrosmolent a-eneb dezi. ⁶Jezuz a lavaras:

— «Lezit anezi. Perag ober poan dezi? Eun dra vad he-deus greet em-heñver. ⁷Rag ar beorien ho-peus atao en ho-touez, ha pa garit e hellit ober vad dezo. Me a-vad n'ho-pezo ket atao. ⁸Ar pez e oa gouest da ober he-deus greet, ar vaouez-mañ. A vremañ he-deus balzamet va horv a-benn ma vo sebeliet. ⁹E gwirionez, m'hel lavar deoh, e kement leh ma vo prezeget an Avel dre ar béd, e vo displeget ive, en eñvor dezi, ar pez he-deus greet.

TAOL TREIZ JUDAZ

¹⁰Judas Iskariot, unan euz an daouzeg abostol a yeas neuze da gavoud Pennou-Braz ar Veleien, da ginnig lakaad Jezuz etre o daouarn. ¹¹Ouz e glevet e oent laouen-kenañ,

hag e rejont marhad gantañ, hag eñ, azaleg neuze, a glaske an tu d'e lakaad etre o daouarn.

POURCHASOU AR PASK

¹²Da zeiz kenta gouel ar Bara-Dihoell, ma veze lazet an Oan-Pask, an diskibien a houlenn outañ :

— « Peleh e fell dit ez afem da bourchas an traou evid ma tebri ar Pask ? »

¹³Kas a reas daou euz e ziskibien hag e lavaras dezo :

— « It e kêr ; erruoud a raio ganeoh eun dén o tougenn eur podad dour. ¹⁴Kerzit d'e heul, hag en ti ma 'h antreo, lavarit d'ar perhenn : « Ar Mestr a houlenn ouzoh : E peleh ema ar zal ma hellin debri enni ar Pask gand va diskibien ? »

¹⁵« Diskouez a raio deoh eur zal war al laez, frank ha kempenn. Eno, pourchasiñ pep tra evidom ».

¹⁶Setu ma 'z eas an diskibien e kêr ; kavoud a rejont an traou evel m'e-noa Jezuz lavaret hag e preparjont ar Pask.

AR GOAN ZIWEZA

¹⁷Deuet an abardaez, e teu Jezuz gand an Daouzeg. ¹⁸E-pad m'edont ouz taol, o tebri, e lavaras Jezuz :

— « E gwirionez, m'hel lavar deoh, unan ahanoh am gwerzo, hag ema o tebri ganin ».

¹⁹Trist e teujont da veza, hag an eil goude egile e houlennjont outañ :

— « Ha me e vefe ? »

²⁰Lavared a reas Jezuz :

— « Unan euz an Daouzeg eo, hag a lak e zorn er plad asamblez ganin. ²¹Evid gwir, o vond kuit ema Mab an Dén, hervez m'eo skrivet diwar e benn, med an hini, siwaz dezañ !

hag a zo o werza Mab an Dén : gwelloh d'an dén-ze ne vije ket bet ganet ».

SAKRAMANT AN AOTER

²²E-pad ar préd, e kemeras Jezuz bara, hag o veza lavaret ar vennoz, e torras anezañ hag her roas d'e ziskibien, en eur lavared:

— « Kemerit, va Horv eo hemañ ».

²³Kemer a reas ive eur halirad gwin, O veza lavaret ar vennoz, her roas dezo, hag oll eh evont dioutañ. ²⁴Lavaret e-noa dezo:

— « Va Gwad eo hemañ, Gwad an Emgleo nevez (36), skuillet evid e-leiz a dud. ²⁵Nann! m'hel lavar deoh, ne evin mui euz ar frouez gwinienn-se, beteg an deiz ma 'h evin anezañ, nevez, e Rouantèlèz Doue ».

PER A NAHO E VESTR

²⁶Goude beza kanet ar Salmou, ez ejont kuit evid mond da Venez an Olived. ²⁷Jezuz a lavaras dezo:

— « C'hwi oll a vo laket da goueza, rag merket eo er Skritur-Zakr:

— « *Skei a rin gand ar pastor
« hag an deñved a vo strewet a bep tu ».*

²⁸« Hogen, pa vin savet da veo en-dro, me 'yelo en ho-raog da Vro-Halilea ».

²⁹Pèr neuze a lavaras dezañ:

— « Ha goude ma teufe an oll da veza skoillet me ne vezin ket ».

³⁰Respont a reas Jezuz dezañ:

— «E gwirionez, m'hel lavar dit, te, hirio, en noz-mañ, a-barz m'e-no kanet ar hillog diou wech, te az-po va nahet teir gwech».

³¹Med eñ a zalhe da lavared startoh c'hoaz:

— «Ha pa ve réd din mervel ganit, ne nahin ket ahanout».

Hag oll e lavarent kemend-all.

E JETSEMANI

³²Digouezoud a rejont en eul leh anvet Jetsemani. Hag e lavaras d'e ziskibien:

— «Azezit amañ e-pad ma vin o pedi».

³³Kas a ra gantañ Pèr, Jakez ha Yann, hag e teu da goueza warnañ spont hag anken. ³⁴Lavared a reas dezo:

— «Trist da vervel eo va ene; chomit amañ, ha beillit».

³⁵Eet eun tammig pelloh, e kouez d'an douar. Goulenne a ra en e bedenn pellaad dioutañ an eur-ze, ma hell beza pelleet. ³⁶Lavared a ree:

— «Abba, Tad! Te a hell pep tra: Pella diouzin ar halirad-mañ. Evelato, ra vo greet da volonteze-te, nann va hini-me».

³⁷Dond a ra en-dro, hag e kav e ziskibien kousket. Lavared a ra da Bèr:

³⁸«Simon, kousked a rez? N'az-peus ket gellet beilla eun eurvez zokén? Beillit ha pedit evid diwall da goueza en tentadur. Ar spered a zo prim, med natur an dén a zo gwañ».

³⁹Pellaad a reas adarre ha pedi gand an hevelep komzou. ⁴⁰Pa zistro d'o havoud e kav anezo kousket c'hoaz, rag pounner oa eet o daoulagad, ha ne ouient ket petra da respont dezañ.

⁴¹Evid an trede gwech e teu evel-se hag e lavar dezo :

— « Kouskit bremañ ha diskuizit... A-walh eo ! Deuet eo an eur ! Ema Mab an dén o vond da goueza etre daouarn ar beherien. ⁴²Savit ! Deom ! An hini a zo ouz va gwerza a zo tost ».

⁴³Komz a ree c'hoaz pa zigouezas Judaz, unan euz an Daouzeg, ha gantañ eur vandennad tud, klezeier ha bizier en o daouarn, kaset gand Priñsed ar Veleien, ar Skribed ha Pennou-Braz ar bobl. ⁴⁴Eur zin e-noa roet an treitour dezo :

— « An hini a roin eur pok dezañ, hennez eo, krogit ennañ ha bezit war evez evid kas anezañ ganeoh ».

⁴⁵Kerkent ha ma oe digouezet e tosteas ouz Jezuz hag e lavaras dezañ :

— « Rabbi ! »

Hag e roas eur pok dezañ. ⁴⁶Ar re all neuze a daol o daouarn warnañ hag a zalh mad dezañ.

⁴⁷Unan euz ar re a oa eno a dennas e gleze hag a skoas eun taol gand mevel ar Beleg-Braz hag a drohas dezañ e skouarn. ⁴⁸Jezuz a gomzas hag a lavaras dezo :

— « Evel pa vefen eul laer oh deuet gand klezeier ha bizier da baka ahanon. ⁴⁹Bemdez e vezen, en ho touez en templ, o rei kelennadurez, ha n'ho-peus ket kroget ennon. Med bremañ eo evid ma teuio da wir ar pez a zo merket er Skritur-Zakr ».

⁵⁰Oll neuze e tilezjont anezañ hag e tejont kuit. ⁵¹Eur paotr yaouank, koulskoude, a yeas da heul Jezuz, netra war e gorr nemed eul liñser. Kregi a reer ennañ, ⁵²med eñ en em zispég euz e liñser hag a deh kuit en noaz (37).

JEZUZ DIRAG AR SANHEDRIN

⁵³Digaset e oe Jezuz dirag ar Beleg-Braz. En em zastum a ra eno oll Briñsed ar Veleien, Pennou braz ar bobl hag ar Skribed.

⁵⁴Pèr euz a bell e-noa heuliet Jezuz beteg ti ar Beleg-Braz; e diabarz ar porz, azezet e-touez ar zervicherien, e oa eet da domma e-kichenn an tan.

⁵⁵Ar Veleien-Vraz hag ar Huzul a-béz a glaske a-eneb Jezuz eun testeni bennag evid e gondaoni d'ar maro, ha ne gavent ket. ⁵⁶Meur a hini a zouge falz-testeni a-eneb dezañ, med n'oa ket heñvel an testeniou an eil ouz egile. ⁵⁷Sevel a ree hiniennou da zougen testeniou faoz evel-henn:

⁵⁸— «E glevet on-eus o lavared: «Me a ziskaro an templ-mañ, savet gand dorn an dud, hag e tri devez e savin unan all ha ne vo ket diwar dorn an dud».

⁵⁹Ha war ar poent-se zokén, n'oa ket heñvel o zosteniou.

⁶⁰Ar Beleg-Braz neuze a zav en e-zav e-kreiz an dud bodet eno hag a houlenn ouz Jezuz:

— «N'az-peus netra da respont d'an tamallou greet dit gand ar re-mañ?»

⁶¹Jezuz a jom dilavar ha ne respont netra. Ar Beleg-Braz a houlenn outañ neuze:

— «Ha bez' ez out-te ar Mesiaz, Mab an Doue benniget?»

⁶²Respont a reas Jezuz:

— «Ya, bez' ez on! Ha c'hwj a welo Mab an Dén azezet en tu dehou d'an Doue oll halloudeg, hag o tond war goa-brennou an neñv».

⁶³Ar Beleg-Braz goude beza roget e zillad a lavaras:

— «Peseurt ezomm on-eus c'hoaz da gaoud testou?»

⁶⁴E glevet ho-peus o vlasfemi. Petra 'zoñj deoh?»

Hag e oe barnet d'ar maro gand an oll.

⁶⁵Lod neuze en em lakeas da dufa outañ, da voucha dezañ e zaoulagad, da skei gantañ en eur lavared dezañ:

— «C'hoari da brofet!»

Hag ar zervicherien a skoe taoliou gantañ.

PER A NAH E VESTR

⁶⁶En-dra m'edo Pèr en traoñ, er porz, e tigouezas eur vatez d'ar Beleg-Braz. ⁶⁷O weled Pèr o tomma ouz an tan, o selled outañ e lavaras:

— « Te ive a oa gand Jezuz a Nazared ».

⁶⁸Pèr a nahas:

— « N'ouzon ket ha ne intentan ket petra lavarez ».

Hag eñ mond er-mêz war-zu ar porched.

⁶⁹Ar vatez ouz e weled a lavaras a-nevez d'ar re a oa eno:

— « Hennez a zo unan anezo ».

Ha Pèr a nahe en-dro.

⁷⁰Nebeud amzer goude, ar re a oa eno a lavare da Bèr eur wech muioh:

— « A-dra-zur ez out unan euz ar re-ze, rag euz Bro-Halilea out ».

⁷¹Med eñ neuze da doui ha da vallozi:

— « Ne anavezan ket an dén-ze a gomzit anezañ din ».

⁷²Raktal, evid an eilved gwech, e kanas ar hillog.

Pèr neuze a zeuas da zoñj dezañ e komzou Jezuz:

— « A-barz m'e-no ar hillog kanet diou wech ez-po va nahet teir gwech ».

Hag e stagas da ouela.

Pennad XV

JEZUZ DIRAG PILAT

¹A-bréd diouz ar mintin e reas ar Veleien-Vraz boda Pennou-Braz ar bobl hag ar Skribed, gand ar Huzul-Meur a-béz. Goude beza chadennet Jezuz, e kasjont anezañ da di Bilat, ar gouarnour. ²Goulenn a reas Pilat outañ:

— «Ha bez' ez out-te roue ar Juzevien?»

Respont a reas Jezuz:

— «Te eo henn lavar».

³Tamallou e-leiz a zave ar Veleien-Vraz a-eneb dezañ. ⁴Pilat a houlennas outañ adarre:

— «N'ez-peus netra da respont? Sell pegen braz tamallou a reont dit?»

⁵Med Jezuz ne respontas mui netra, ar pezh a lakeas Pilat da veza souezet.

⁶Hogen, da geñver gouel Pask, edo ar hiz gantañ da rei dezo, war o goulenn, ar frankiz d'eur prizoniad, an hini a houlennent.

⁷An den anvet Barabbaz a oa neuze er prizon gand an dispaherien all, lazet ganto eun dén e-pad an taol-dispah.

⁸Pignet beteg ennañ, e houlennas ar bobl digand Pilat ar pezh e oa kustum da rei dezo; ⁹Pilat a respontas:

— «Ha c'hoant ho-peus e laosken ganeoh roue ar Juzevien?»

¹⁰Gouzoud a ree tra-walh e oa dre warizi o-doa ar Veleien-Vraz laket Jezuz etre e zaouarn. ¹¹Med ar veleien-Vraz a boulzas ar bobl da houlenn kentoh ma ve laosket Barabbaz.

¹²Pilat neuze a gomzas hag a lavaras dezo:

— «Petra 'rin neuze euz an hini a anvit roue ar Juzevien?»

¹³A-bouez-penn e respontjont:

— «Stag anezañ ouz ar groaz!»

¹⁴Ha Pilat:

— «Peseurt droug e-neus greet eta?»

Kreñvoh c'hoaz e youh an dud:

— «Stag anezañ ouz ar groaz!»

¹⁵Pilat neuze, c'hoant dezañ plijoud d'ar bobl, a laoskas ganto Barabbaz. Ober a reas skourjeza Jezuz hag e lezel ganto da veza staget ouz ar groaz.

¹⁶Ar zoudarded a gasas anezañ e diabarz ar pretordi, e palez ar gouarnour, ha boda 'reont ar gompagnunez a-béz.

¹⁷Gwiska 'reont dezañ eur vantell ruz-moug ha war e benn e lakont eur gurunenn spern greet ganto. ¹⁸Hag e teujont d'e zaludi:

— «Salud, roue ar Juzevien!»

¹⁹Hag e skoent war e benn gand eur gorzenn, e tufent outañ, e plegent o daoulin evid stoui dirazañ.

²⁰Goude beza greet goap anezañ, e tennont digantañ ar vantell ruz-moug hag e lakont dezañ e zillad. Neuze e kasont anezañ er-mêz evid mond d'e staga ouz ar groaz

JEZUZ STAGET OUZ AR GROAZ

²¹Kemer a reont, evid dougenn ar groaz, eun dén hag a dremene dre eno, o tond d'ar gêr euz ar park: Simon a Zyren, tad Alexandr ha Rufuz.

²²E gas a reont beteg al leh anvet Golgota, da lavared eo «leh ar hlopenn». ²³Kinnig a reont dezañ da eva gwin mesket gand mir, med ne 'fellas ket dezañ kemer.

²⁴E staga 'rejont ouz ar groaz, ha goudeze e lodennjont e zillad kenetrezo en eur denna ar zord warno, evid lakaad e lod da bep hini.

²⁵Nav eur e oa p'o-doa e staget ouz ar groaz. ²⁶Ar skritell hag a verke perag e oa bet kondaonet a oa merket warni ar geriou-mañ: «Roue ar Juzevien».

²⁷Asamblez gantañ, a lakjont daou laer e kroaz unan a-zehou dezañ hag egile a-gleiz. ²⁸Evel-se e teue da wir komzou ar Skritur-Zakr: «*E reñk an dorfetourien eo bet laket*».

²⁹An dremenidi a wall-gomze dezañ oh heja o 'fenn hag o lavared:

— «Ahanta! Te hag a ziskar an templ, hag a zav anezañ a nevez dindan tri devez, ³⁰en em zavete da-unan! diskenn euz ar groaz!»

³¹Ar Veleien-Vraz ive, kenetrezo, gand ar Skribed, a hoarze goap hag a lavare:

— «Re all e-neus saveteet, ha ne hell ket en em zavetei e-unan! ³²Eñ, ar Mesiaz, roue Israel, ra ziskenno bremañ euz ar groaz, ma welim ha ma kredim!»

Ar re zoken a oa staget ouz ar groaz, en e gichenn, a zistage outañ gwall-gomzou.

MARO JEZUZ

³³Da greisteiz, an deñvalijenn a holoas an douar a-béz, beteg teir eur. ³⁴Da deir eur e lez Jezuz eur griadenn gand eur vouez kreñv:

— «Eloi! Eloi! Lama sabaktani!»

Da lavared eo: «Va Doue! Va Doue! perag az-peus va dilezet?»

³⁵Lod euz ar re a oa en-dro dezañ a lavare ouz e gleved:

— «Setu m'ema o helver Eliaz».

³⁶Redeg e reas unan anezo da zouba eur spoueenn e gwin treñk hag e sav anezi e bég eur gorzenn evid rei dezañ da eva, en eur lavared:

— «Lezit 'ta! Gwelom hag eñ e teuio Eliaz d'e zistaga alese».

³⁷Jezuz, goude beza taolet eur griadenn vraz, a rentas e spered. ³⁸Neuze, ar ouel euz an templ a oe roget dre an hanter, euz an neh d'an traoñ. ³⁹An ofiser a oa dirazañ, o weled penaoz e oa marvet, a lavaras:

— «E gwirionez, Mab da Zoue e oa an dén-ze».

⁴⁰Bez e oa ive merhed o sellad euz a bell, en o zouez Mari-Madalen, Mari, mamm Jakez vihan ha mamm da Joze, ha Salome.

⁴¹Ar re-mañ, pa veze Jezuz e Bro-Halilea, a veze ouz e heul d'e zervicha, ha kalz merhed all pignet d'e heul beteg Jeruzalem.

⁴²Deuet an abardaez, o veza ma edod da zerhent ar zabat, ⁴³e teuas Jozef a Arimati, ezel brudet, euz ar Huzul-Meur, —eñ ive a hortoze Rouantêlêz Doue — mond a reas hardis da gavoud Pilat, da houlenn rei dezañ korv Jezuz.

⁴⁴Souezet e oa Pilat e vefe marvet ken buan. Ouz an ofiser e-noa galvet davetañ e houlennas hag abaoe pell e oa maro. ⁴⁵Sklêrijennet gand an ofiser, Pilat a roas ar horv da Jozef.

⁴⁶O veza prenet eul liñser, e tiskennas Jozef ar horv euz ar groaz, e lakas al liñser en-dro dezañ, hag e tougas anezañ en eur béz toullet er roh, hag e ruillas eur mên da stanka ar béz.

⁴⁷Mari-Madalen ha Mari mamm Joze a oa o sellad e peleh e oa bet laket korv Jezuz.

Pennad XVI

AR MERHED EET D'AR BEZ

¹Tremenet ar zabat, Mari-Madalen, Mari mamm Jakez ha Salome, a brenas louzeier c'hwez-vad, evid mond da valzami kory Jezuz.

²Mintin mad, da zeiz kenta ar zizun (38), ez eont d'ar béz d'ar zao-heol. ³Hag e lavarent kenetrezo:

— « Piou a ruillo deom ar mên diwar toull ar béz? »

⁴Gand eur zell e welont ar mên ruillet a gostez, braz koulskoude an tamm anezañ.

⁵En eur vond tre er béz e welont, azezet en tu-dehou, eun dén yaouank, gwisket e gwenn, hag e oent spontet. ⁶Med eñ a lavaras dezo:

— « N'it ket da sponta. Jezuz a Nazared emaoñ o klask, an hini a zo bet staget ouz ar groaz: adsavet eo da veo. N'ema ket amañ. Setu al leh m'oa bet laket e gory. ⁷Bremañ, it da lavared d'e ziskibien ha dreist-oll da Bêr: « En ho-raogez a da Vro-Halilea, hag eno c'hwi her gwelo evel m'e-neus lavaret deoh ».

⁸Mond a rejont er-mêz ha tehed pell diouz ar béz rag krena 'reent ha strafuillet e oant. Ne lavarjont netra da zén gand ar spont a oa warno... (39).

JEZUZ EN EM ZISKOUEZ BEO

⁹Adsavet da veo diouz ar mintin, da zeiz kenta ar zizun, en em ziskouezas Jezuz da genta da Vari-Madalen, e-noa argaset seiz droug-spered anezi.

¹⁰Houmañ a yeas da gas ar helou d'ar re a oa bet gantañ hag a oa e kañv hag en daelou. ¹¹Med o kleved e oa beo hag he-doa-hi e welet, ne grédjont ket.

¹²Goudeze en em ziskouezas en eur stum all de zaou anezo a oa oh ober hent da vond war ar-mêz (40). ¹³Hag ar

re-mañ a zeuas da gonta d'ar re all. Int-i kennebeud ne oent ket kredet.

¹⁴Goude en em ziskouezas d'an unneg p'edont ouz taol hag e rebechas dezo beza bet diskredig ha kaled a galon, ablamour n'o-doa ket kredet ar re o-doa e welet savet a varo da veo.

AN DISKIBIEN KASET DA BREZEG AN AVIEL

¹⁵Lavared a reas dezo:

— « It dre ar béd ar-béz, embannit Kelou Mad an Aviel d'an oll dud. ¹⁶An neb e-no feiz hag a resevo ar vadeziant, a vo salvét. An neb a zinaho kredi a vo kondaonet.

¹⁷Setu amañ ar zinou burzuduz a vo da heul ar re o-devo kredet: dre va ano e kasint kuit an droug-sperejou. Yezou nevez a gomzint. Kregi a raint en naered, ¹⁸ha goude m'o-defe evet eur poezon marvel bennag, n'o-devo diêz e-béd. Astenn a raint o daouarn war ar re glañv, hag a re-mañ a wellaio dezo ».

¹⁹Neuze, an Aotrou Jezuz, echu gantañ e gomz, a oe douget d'an Neñv. Azeza 'reas en tu dehou da Zoue.

²⁰Int-i a-vad a yeas da brezeg e pep leh. A-unan ganto e laboure an Aotrou. Hemañ 'roe nerz d'ar Gomz dre ar burzudou a zeue d'he heul.

Notennoù war Aviel Sant Mark

- (1) « Aviel » : da lavared eo « Kelou-Mad » ar Zilvidigez, roet da anaoud dre ar Brofeted, sevenet gand Jezuz-Krist.
- (2) Evid digemered Rouantèlèz Doue e tleer cheñch buez, distrei ouz Doue. An Aviel eo a brezeg Rouantèlèz Doue: setu aze ar helou mad roet deom da anaoud.
- (3) Ar Skribed a oa tud desket war ar Skrituriou Santel.
- (4) Devez ar Juzevien a groge hag a echue gand ar huz-heol. Beteg ar mare-ze e oa difenn, deiz ar zabat, da zougenn d'eul leh all dén klañv e-béd.
- (5) Gweled notenn 11 Aviel Sant Vaze.
- (6) Toennou plad an tiez a oa êz da freuza, greet ma oant gand raoskl ha douar laket war an treustou. Mond a reed warno dre skalierou diavêz.
- (7) Levi, pe Maze, a oa eun dastumer taillou, eur publikan eta, gwelet fall gand ar bobl.
- (8) Gweled notenn 4 e Aviel Sant Vaze.
- (9) Evel-se ive, Lezenn nevez an Aviel a houlenn kalonou nevezet.
- (10) Herodianed: Tud e servich Herodez Tetrark Bro-Halilea. Ar re-mañ a oa a-du gand gouarnamant Rom.
- (11) « Belzeboul »: ano leun a zismegañs roet gand ar Juzevien da Vestr an diaoulou.
- (12) Komz dizakr a-eneb ar Spered-Santel a zo nah gweled ar pez a ra Doue evid silvidigez an dud, hag ive nah ouz Doue beza salvet gantañ.
- (13) « E vreudeur », da lavared eo e gendirvi, hervez giz ar Juzevien.
- (14) « Parabolennou »: gweled notenn 29, St Vaze.
- (15) D'ar re ha n'eo ket prest o halon da gompren mister Rouantèlèz Doue, ar parabolennou a hello rei dezo eun tamm sklêrijenn, nemed ha serri a rafent o daoulagad.
- (16) « Lenn Jenezared »: gweled not. 13 Aviel St Vaze.
- (17) « Eur vandenn vraz a voh »: hervez Lezenn ar Juzevien, ar moh a zo loened « dihlan ». Difennet 'oa o debri ha rag-se o zevel.
- (18) « An Déjkêr »: eur Rann-Vro hag a oa en tu-all d'ar Jordan.

- (19) « Olevi » (rei an oleo-sakr) kalz klañvourien; Ahalese eo e teu Sakramant an nouenn (Sakramant ar re glañv).
- (20) An noz, gand ar Juzevien, a oa rannet e peder beilladenn. « Ar bederved beilladenn »: da lavared eo war-dro teir eur diouz ar mintin.
- (21) Kement-se 'oa mond a-dreuz gand ar pevare gourhemenn a Zoue: « Da dad, da vamm a enori » dre 'n abeg ma oa konsakret da Zoue kemend a oa deor an-unan.
- (22) Dre 'forz ober reolennoù diwar-benn ar pezh a zo glan ha dihlan, dén ne helle mui en em zibab ganto. Jezuz a lavar em ar hlanded wirion e diabarz an dén.
- (23) Gweled notenn 35 e St Vaze.
- (24) « Goell ar Farizianed »: Al lorchentez o houlen burzudoù digand Doue. « Goell Herodez »: An trabas gand kudennoù ar politikêrez.
- (25) « Chom hep komz da zén e-béd »: E Sant Mark e kaver an urz-se aliez. Arabad eo e kredfe ar bobl eo deuet Jezuz d'he has da hloar ar béd-mañ. Dre e boaniou ha dre e groaz eo e saveteio ar béd.
- (26) Rouantêlêz Doue a zeu tamm ha tamm. Dasorh Jezuz he diskouezo dija, hag ive pa grogo an Aviel d'en em astenn evid ar wech kenta, « gand galloud ».
- (27) Jezuz a ro da gompren d'e ziskibien eo deuet Yann-Vadezour evel eun eil Eliaz.
- (28) « Evel eur bugel »: da lavared eo didroidell evel eur bugel, gand eur galon ken eun ha ken anaoudeg. (Gweled an notenn 2).
- (29) « Ar halirad », ar « vadeziant » a boaniou a ranko Jezuz gouzañv, evel ma vo ive lod pep hini euz e ziskibien.
- (30) Ar wezenn 'fiez a zo amañ ar skeudenn euz pobl Israel, dibabet gand Doue evid rei frouez a zantêlêz; med chom a ra difrouez dre ma ne 'fell ket dezi digemer Jezuz.
- (31) Ar winieg a zo eur skeudenn all euz pobl Israel. Beleien-Vraz, Skribed ha Pennou-Braz ar bobl 'oa ar Benn-Renerien. En eur zistaoler Jezuz int deuet da veza renerien 'fall. Ha Doue a zigoro e Iliz d'ar poblou payan.
- (32) Rouantêlêz Doue a zeuio evel ma teu eur bugel er béd, e-kreiz ar boan. Distruj Jeruzalem, hag ar brezel greet d'ar gristenien, a zo dija ar penn kenta euz ar poaniou-ze, da hortoz fin ar béd. Ablamour da ze e kaver amañ, kemmesket, an darvoudou-ze.
- (33) Lev'r ar Profet Daniel eo a gomze evel-se: evel eur vez spontuz meurbéd, pa zeufe ar bayaned da gemer an Templ ha da adori ennañ o doueou faoz.
- (34) Ar skeudennoù-ze ne glaskont nemed rei da intent an doare dreist-ordinal m'en em ziskouezo da vad Rouantêlêz Doue. « Dén ne oar nag an deiz nag an eur ».
- (35) « ... ar Bara-Dihoell »: Gweled not. 59 Aviel St Vaze.

- (36) «... Gwad an Emgleo»: Gweled not. 60 St Vaze.
- (37) Meur a hini a gréd eo an dén yaouank-se Sant Mark e-unan, rag gouzoud a reer edo o chom e Jeruzalem.
- (38) An devez kenta-ze euz ar zizun, ar zul, eo a zo bet dibabet gand ar gristenien genta da veza an devez gouestlet da Zoue en eñvor euz adsao ar Hrist a varo da veo.
- (39) Amañ ema penn diweza Aviel Sant Mark. Ar pezh a zo ouspenn a zo bet skrivet war e lerh, evel eun diverra euz diskouezadegou or Zalver. Med an dra-mañ ive e-neus e blas er Skritur-Zantel.
- (40) An danevell euz kement-mañ a gaver e Aviel Sant Lukaz (24, 13-35).

Kalvar Plougastell:

Ginivèlèz or Zalver.



Aviel Jezuz-Krist

Hervez Sant Lukaz

An aviel hervez Sant Lukaz

A BELEH E TEU

Sant Lukaz, e-unan, a lavar deom, penaoz ha perag e-neus savet e Aviel:

« Meur a hini o-deus dija klasket reñka istor ar pez a zo bet digouezet en on touez,² hervez ar pez a zo bet lavaret deom gand a re a zo bet test a gement-se abaoe ar penn kenta, hag a zo deuet da veza servicherien ar Gomz. ³Me, d'am zro, goude beza greet enklask piz war bep tra, abaoe ar penn kenta, am-eus kavet mad o skriva diouz reñk, evidout, Aotrou enoruz Teofil (1), dit da weled sklêr pegen stard eo diazezet war ar wirionez ar gelennadurez az-peus bet. » (1/1-4).

Anaoud a reom Sant Lukaz. Eur Gresian 'oa euz kêr Antioch e Bro-Siria, deuet da veza kristen. Marteze e oa medisin. Eun dén desket eta, med dreist-oll eun diskibl da Zant Paol hag eur henlabourer dezañ.

Ar pez e-neus klasket ober, moarvad war-dro ar bloaz 80, n'eo ket hepkén skriva eun Aviel, med konta Istor an Iliz kenta, ar pez e-neus roet deom daou leor: an Aviel hervez Sant Lukaz hag Oberou an Ebestel.

E Aviel a zo bet skrivet gantañ evid ar Hresianed anavezet mad gantañ hag e gelennadurez a zo warni ar merk-se.

Netra nemed an draig-mañ henn diskouez mad: el leh ma komz Mark euz eun doenn blad greet gand bodou ha gand douar, êz da doulla, Lukaz a gomz euz teol pe brikennou (5,19).

Hag ar pez a zo pouezusoh, el leh ma ra Maze eur brezegenn hir war al Lezenn nevez (ar Zarmon war ar Menez) Lukaz ne zalho nemed ar pez a zell ouz ar garantez (6,17-49).

PENAOZ EO BET SAVET

Lukaz ive, evel Maze, a dle beza bet anavezet an Aviel hervez Sant Mark, hag e-neus bet ive greet e vad anezañ.

Med ne anavez ket Aviel Sant Vaze, ha ne oa ket skrivet c'hoaz d'ar mare-ze, marteze. Bez' e-neus avad ar memez skridou hag eñ, ha re all ouspenn.

Evel-se, evid bugaleach Jezuz, e-neus mammennou disheñvel diouz re Sant Vaze.

Heulia 'ra ive an urz bet digemeret gand Sant Mark, med o veza m'e-neus muñoh a draou da gonta, e laka anezo amañ hag a-hont, dreist-oll azaleg 9,51 betek 18, 14, e kont eur bern traou diwar-benn eur veach greet gand Jezuz e Jeruzalem.

Lukaz a zo eur skrivagner ampart. Plijoud a ra dezañ skriva evel ma veze skrivet en Testamant-Koz, (dreist-oll er pennadoù diwar-benn bugaleach Jezuz).

A-wechou ive e ra heñvel ouz an Istorourien hresianeg. Klask a ra floura doare skriva Sant Mark.

KEMENNADUREZ

Aviel Sant Lukaz a zo anad mad warnañ karakter an oberour: dén desket, habask, douget da veza hegarad en e varnedigeziou war an dud ha war an darvoudou, evezieg ouz ar paour hag ouz ar re zister.

Diskibl eo da Zant Paol ha douget da heulia e gelennadurez.

Ar Helou Mad a zo laket gantañ evel en eur hrenn-lavar p'en em ziskouez an élez da bastored Betlehem: «Kelou, a zigasan deoh euz eul levenez vraz a vo evid ar vro a-béz: eur zalver evidoh 'zo ganet hirio e kêr David, ar Mesiaz eo, an Aotrou». 2, 10-11.

Krist Sant Lukaz a vo dreist-oll an diskouez euz madelez Doue evid an dud, euz e drugarez.

E Sant Lukaz eo e kavom parabolenn ar Mab Prodig (15,11-32), danevell ar behérez pardonet (7,36-50) dasorh mab intañvez Naim (7,11-17) ha meur a istor all ken kaer.

Ar respont a houlenn Sant Lukaz diganeom ober, eo respont eur feiz leun a fiziañs e madelez an Aotrou Doue Salver an dén. Respont eur garantez kristen eienenn a beoh etre an dud: «Bezit trugarezuz evel m'eo trugarezuz ho Tad». Sant Vaze a lavare: «Bezit peurvad evel m'eo peurvad ho Tad».

Dre-ze e skedo war an douar levenez Nedeleg: «Gloar da Zoue e barr an Neñvou ha peoh war an douar d'an dud a blij dezañ».

Pennad I

RAKLAVAR

¹ Meur a hini o-deus dija klasket reñka istor ar pezh a zo bet digouezet en on touez, ² hervez ar pezh a zo bet lavaret deom gand ar re a zo bet test a gement-se abaoe ar penn kenta, hag a zo deuet da veza servicherien ar Gomz. ³ Me, d'am zro, goude beza greet enklask piz war bep tra, abaoe ar penn kenta, am-eus kavet mad o skriva diouz reñk, evidout, Aotrou enoruz Teofil (1), ⁴ dit da weled sklêr pegen stard eo diazezet war ar wirionez ar gelennadurez az-peus bet.

GANEDIGEZH YANN-VADEZOUR KEMENNET DA ZAKARIAZ

⁵ En amzer Herodez, roue Bro-Judea, e oa eur beleg anvet Zakariaz, euz rummad Abia; e wreg euz lignez Aaron a oa Elizabed heh ano.

⁶ O daou e oant just dirag Doue. Heulia 'reent direbech oll lezennou ha gourhemennou an Aotrou.

⁷ N'o-doa ket a vugale, difrouez ma oa Elizabed, ha deuet e oant o-daou war an oad.

⁸ Ha setu eun devez m'edo Zakariaz, diouz tro e rummad (2), gand e garg a veleg, dirag Doue, ⁹ e oe galvet dre ar zord, hervez ar hiz miret gand ar veleien, da vond e santual an Aotrou da ginnig an ezañs.

¹⁰ Hag ar bobl a oa er-mêz o pedi, d'an eur m'edo o kinnig an ezañs.

¹¹ Eun êl d'an Aotrou a zeu da bara dirazañ, en e-zav en tu dehou da Aoter an ezañs. ¹² Strafuillet e oe Zakariaz ouz e weled hag e oe spontet.

¹³ Med an êl a lavaras dezañ:

— « Na gemer ket aon, Zakariaz, rag selaouet eo bet da bedenn. Da wreg Elizabed a roio dit eur mab hag e laki Yann e ano. ¹⁴ Bez 'e vo evidout leh da gaoud joa ha levez, ha kalz tud a vo laouen euz e hanedigez; ¹⁵ rag braz e vo-eñ dirag an Aotrou; ne evo ket a win nag a evach mezvuz, rag azaleg korb e vamm e vo karget euz ar Spered-Santel. ¹⁶ Lakaad a ray da zistrei ouz Doue kalz euz bugale Israel. ¹⁷ Eñ e-unan a gerzo dirag an Aotrou, gantañ spered ha galloud Eliaz, evid distrei kalonou an tadou war-zu o bugale, hag an dud dizent war-zu furnez an dud just, evid prepari d'an Aotrou eur bobl prest d'e zigemer ».

¹⁸ Zakariaz a lavaras d'an êl:

— « Penaoz e ouezin an dra-ze? rag me 'zo koz ha va gwreg a zo deuet war an oad ».

¹⁹ An êl a respontas:

— « Me eo Gabriel a zo dalhmad dirag Doue. Kaset on bet da gomz dit ha da gemenn dit ar helou mad-se. ²⁰ Ha setu ma vezi dilavar, hep gelloud mui komz, beteg an deiz ma tigouezo an traou-ze, ablamour n'az-peus ket kredet d'am homzou hag a zeuio da wir d'o amzer ».

²¹ An dud a oa o hortoz Zakarias hag a oa souezet o weled e talee er zantual. ²² Pa zeuas er-mêz, n'oa ket evid komz outo, Intent a rejont e-noa bet eur weledigez er zantual: Ober a ree sinou dezo, med mud e chome.

²³ Pa oe echu gantañ e zeveziou-servich ez eas d'ar gêr. ²⁴ Eur pennag goude e oe dougéréz e wreg. E-pad pemp miz e kuzas he stad hag e lavare outi heh-unan:

²⁵ — « Setu ar pezh e-neus greet an Aotrou em heñver, en amzer m'e-neus taolet eur zell warnon, evid lakad fin d'ar pezh a oe eun dismegañs (3) evidon dirag an dud.

GINIVELEZ JEZUZ KEMENNET DA VARI (4)

²⁶ D'ar c'hwehved miz e oe kaset an êl Gabriel gand Doue d'eur gêr a Vro-Halilea, anvet Nazared, ²⁷ da gavoud eur plah yaouank dimezet d'eun dén anvet Jozef, euz lignez David, hag ano ar plah yaouank a oa Mari.

²⁸ Erruet beteg enni, e lavaras an êl:

— « Me da zalud, leun a hras, an Aotrou 'zo ganit » (5).

²⁹ Hi a oe strafuillet o kleved seurt komzou. Soñjal a ree enni heh-unan petra 'helle beza ar zalud-se. ³⁰ An êl a lavaras dezi:

— « Na gemer ket aon, Mari, rag plijet out da Zoue. ³¹ Setu emaut o vond da goñsevi, hag e vezi mamm d'eur mab. Te a roio dezañ an ano a Jezuz (6). ³² Hennez a vo braz, hag anvet e vo Mab da Vestr an Neñv. An Aotrou Doue a roio dezañ tron David e dad. ³³ Roue e vo war lignez Jakob da viken, hag e rouantêlêz ne vo fin e-béd dezi ».

³⁴ Mari a lavaras d'an êl:

— « Penaoz e c'hoarvezo kement-se pegwir on gwerhez? »

³⁵ An êl a respontas dezi:

— « Ar Spered-Santel a ziskenno warnout, ha galloud Mestr an Neñv a holoio ahanout. Dre-ze, ar hrouadur a vo santel ha Mab da Zoue e vo anvet. ³⁶ Ha setu Elizabed da geniterv, he-deus koñsevet ive daoust d'he oad, hag ar c'hwehved miz eo eviti, hi hag a oe lesanvet ar « vaouez dizeh ». ³⁷ rag Doue n'eus netra dreist e halloud ».

³⁸ Mari a lavaras neuze:

— « Setu amañ servichêrez an Aotrou, ra zigouezo din hervez da lavar ».

Hag an êl a yeas kuit diouti.

MARI E TI ELIZABED

³⁹ En amzer-ze, Mari a yeas buan en hent war-zu bro ar meneziou, d'eur gêr a Vro-Juda.

⁴⁰ Antreal a reas e ti Zakariaz ha saludi Elizabed.

⁴¹ Kerkent ha ma klevas Elizabed salud Mari, e tridas he hrouadur en he hreiz hag e oe karget Elizabed euz ar Spered-Santel. ⁴² Sevel a reas he mouez ha lavared:

— « Benniget out dreist an oll gwrazez ha benniget ar frouez euz da gorv. ⁴³ Hag a beleh e teu din kement-mañ: Mamm va Aotrou o tond beteg ennon? ⁴⁴ Rag kerkent ha m'he-deus da vouez skoet va diskouarn, e-neus va hrouadur tridet em hreiz gand al levenez. ⁴⁵ Eüruz an hini he-deus kredet e vo sevenet ar homzou lavaret dezi a-berz an Aotrou Doue ».

⁴⁶ Ha Mari d'he zro a lavare:

— « Kana a ra va ene meuleudi d'an Aotrou, ⁴⁷ ha tridal a ra va spered e Doue va Zalver, ⁴⁸ ablamour m'e-neus taolet e zellou war e zervichéréz dister.

« Diwar vremañ, e lavarø an oll dud, a rumm da rumm, ez on eüruz, ⁴⁹ ken kaer eo an traou e-neus greet evidon an hini a zo braz e halloud ha santel e ano,

⁵⁰ « hag e skuill e vadèlèz, a vare da vare, war ar re a zouj dezañ.

⁵¹ « Dispaka 'ra nerz e vreh, ha skuba an dud lorhuz.

⁵² « Diskar a ra ar rouaned diwar o zron hag uhellaad an dud izel.

⁵³ « Ar re o-deus naon a garg a vadou, ar re binvidig a gas kuit hep netra.

⁵⁴ « E skoazell a ro da Israel e zervicher, rag ne zizoñj ket e vadèlèz, ⁵⁵ evel m'e-neus bet lavaret d'on Tadou, e-keñver Abraham hag e lignez da viken ».

⁵⁶ Mari a jomas neuze gand Elizabed war-dro tri miz ha goudeze e tistroas d'ar gêr.

GINIVELEZ YANN-VADEZOUR

⁵⁷ Deuet d'he amzer, e lakeas Elizabed eur mab er béd. ⁵⁸ Amezeien ha kerent, klevet ganto e-noa an Aotrou Doue diskouezet e drugarez en he-heñver, a zeuas da ober dezi o gourhemennou.

⁵⁹ D'an eizved devez e teujont evid amdrouh ar hrouadur hag e felle dezo rei dezañ ano e dad: Zakariaz. ⁶⁰ Med e vamm a zisklerias:

— «Nann, emezi, Yann a vo e ano».

⁶¹ Ar re all a lavar dezi:

— «N'eus dén all e-béd euz da dud o tougenn an ano-ze».

⁶² Dre jestou e houlennjont ouz e dad pe ano e felle dezañ rei d'ar hrouadur. ⁶³ Eñ a houlenn eun dablezenn hag a skriv warni: «Yann eo e ano». Hag an oll a oe souezet.

⁶⁴ D'an ampoent e tigoras e henou hag e teuas e deod da zistagella. Kaozeal a reas ha meuli Doue.

⁶⁵ Gand an doujañs e oe skoet neuze an amezeien, ha dre veneziou Bro-Judea e rede ar vrud euz an oll draou-ze. ⁶⁶ Ha kement hini a gleve ano anezo o dalhe en o spered hag a lavare:

— «Petra ' zeuio ar hrouadur-ze da veza?»

Hag e gwirionez dorn Doue a oa gantañ.

KANTIK ZAKARIAZ

⁶⁷ Zakariaz, e dad, a oe karget euz ar Spered-Santel hag a ziouganas en eur lavared:

⁶⁸ — «Ra vo benniget an Aotrou, Doue Israel, rag m'eo deuet da weled e bobl ha d'he zalvi,

⁶⁹ « ha da lakad da zewel evidom eur Zalver leun a nerz, e tiègèz David e zervicher, »

⁷⁰ « hervez m'e-noa lavaret dre henou e brofeted santel en amzer a wechall,

⁷¹ « Eur zilvidigez d'on dieubi diouz on enebourien ha diouz ar re oll o-deus kasoni ouzom.

⁷² « Diskouezet e-neus e vadèlèz e-keñver on Tadou, soñj e-neus bet euz an emgleo santel e-noa greet ganto,

⁷³ « Al le e-noa greet da Abraham on Tad da rei deom ar hras, ⁷⁴ goude beza on diframmet euz a dre daouarn on enebourien, d'e zervicha heb aon, ⁷⁵ santel ha just dirazañ a-hed or buez penn-da-benn.

⁷⁶ « Hag evidout-te, bugelig, te a vo anvet profet an Uhel-Meurbéd, rag te a gerzo en a-raog, dindan lagad Doue, evid kempenn e henchou,

⁷⁷ « evid rei da anaoud d'e bobl ar zilvidigez dre ar pardon euz ar pehejou.

⁷⁸ « Kement-se a zeu diwar madèlèz dreist-muzul on Doue, gras dezi eo deuet beteg ennom ar steredenn deuet euz an uhel,

⁷⁹ « evid sklerijenna ar re a oa en deñvalijenn hag e skeud ar maro, evid or rén war hent ar peoh ».

⁸⁰ Kreski a ree ar hrouadur ha digeri a ree e spered. Mond a reas da veva el lehiou digenvez beteg an deiz ma tlee en em ziskouez da bobl Israel.

Pennad II

GINIVELEZ JEZUZ

¹ En amzer-ze e teuas urz a-berz an impalaer Aogust da niveri oll dud ar béd.

² An niveradur kenta-ze a oe greet pa oa Kirinuz gouarnour Bro-Siria. ³ Mond a ree an dud da rei o ano pep hini en e gêr.

⁴ Jozef euz Nazared e Bro-Halilea, eñ ive, a bignas da Vro-Judea, beteg kêr David, anvet Betleem, o veza ma oa euz ti ha famill David, ⁵ evid rei e ano, gand Mari e bried hag a oa dougêrez.

⁶ E-pad m'edont eno, setu ma teuas an amzer dezi da henel he bugel.

⁷ Neuze e lakeas er béd he mab kenta-ganet (7); maillura 'reas anezañ hag e lakaad da hourvez en eur hraou, o veza ma ne oa ket a blas evito en ostaleri.

⁸ Pastored a oa er mêziou tro-war-dro o veilla 'hed an noz da ziwall o deñved. ⁹ Ha setu eun El a-berz Doue en em ziskouezas dirazo ha gloar Doue a skedas en-dro dezo, hag e oent spontet. ¹⁰ An El a lavaras dezo:

— «N'ho pet ket aon, rag kelou a zigasan deoh euz eul levenez vraz a vo evid ar bobl a-béz: ¹¹ Eur Zalver evidoh 'zo ganet hirio e kêr David, ar Mesiaz (8) eo, an Aotrou.

¹² «Ha setu ar pez a ray deoh e anaoud: c'hwi 'gavo eur hrouadurig mailluret ha gourvezet en eur hraou».

¹³ Ha neuze, en eun taol, e teuas da heul an êl eun niver braz a Elez euz an neñv, oll o veuli Doue en eur lavared:

¹⁴ — «Gloar da Zoue e barr an neñvou, ha peoh war an douar d'an dud a blij dezañ».

¹⁵ Goude ma oe eet kuit an Elez diwar o zro, e lavaras ar bastored kenetrezo:

— «Deom beteg Betleem da weled ar pez a zo c'hoarvezet, ar pez a zo bet diskleriet deom gand an Aotrou».

¹⁶ Mond a rejont buan, hag e kavjont Mari ha Jozef hag ar hrouadur gourvezet er hraou.

¹⁷ Goude beza gwelet, e rojont da houzoud ar pez a oa bet lavaret dezo diwar-benn ar hrouadur-ze. ¹⁸ ha kement hini o hleve a veze souezet gand ar pez a gonte dezo ar bastored.

¹⁹ Mari a-vad a zalhe an oll draou-ze en he halon hag a zoñje enno.

²⁰ Ar bastored, en eur vond kuit, a rente gloar ha meuleudi da Zoue, evid kement o-doa gwelet ha klevet hervez ma oa bet lavaret dezo.

²¹ Tremenet an eizteiz, e teuas ar mare da amdrouh ar hrouadur, ha neuze e oe anvet Jezuz, ano bet roet dezañ gand an El, a-raog ma oe koñsevet.

JEZUZ KINNIGET EN TEMPL

²² Pa oe deuet an deiz merket, hervez Lezenn Voizez, evid beza glanneet, e oe Jezuz kaset gand e dud da Jeruzalem, evid beza kinniget d'an Aotrou, ²³ rag skrivet eo el Lezenn: « *Pep paotr kenta-ganet a zo da veza gouestlet d'an Aotrou* ».

²⁴ Deuet e oant ive evid rei eur zakrifis, hervez m'eo lavaret e Lezenn an Aotrou, eur houblad turzunelled pe diou goulmig.

²⁵ Bez' e oa e Jeruzalem eun dén anvet Simeon, dén just ha doujuz da Zoue. Gortoz a ree ar 'frealzidigez da zond (9) evid pobl Israel, hag ar Spered-Santel a oa gantañ.

²⁶ Roet 'oa bet dezañ da anaoud gand ar Spered-Santel, ne welje ket ar maro a-raog beza gwelet Mesiaz an Aotrou.

²⁷ Poulzet gand ar Spered e teuas d'an Templ, pa edo tad ha mamm ar Mabig Jezuz o tigas anezañ evid ober en e-geñver kement a oa hervez al Lezenn. ²⁸ Kemer a reas ar hrouadur etre e zivreh hag e lavaras bennoz evel-henn da Zoue:

²⁹ « *Bremañ, ô Mestr, e hellez lezel da servicher
« da dremen e peoh, hervez da bromesa,*

³⁰ « *rag gwelet o-deus va daoulagad da zilvidigez*

³¹ « *an hini bet preparet ganit,*

— «*da ziskouez d'an oll vroïou*
³² «*sklerijenn war boblou ar bayaned*
 «*da daoler sklerder ha gloar*
 «*evïd Israel da bobl*».

³³ Estlammi 'ree e dad hag e vamm, gand kemend a glevent lavared diwar-benn ar bugel. ³⁴ Simeon a ro dezo e vennoz hag a lavar da Vari e vamm:

— «Setu m'ema ar hrouadur-mañ er béd evid ma 'z ay da goll pe da veza salvet kalz a dud en Israel; bez' e vo eur zin hag a zavo enebiez war e dro, ³⁵ ken na vo da galon dit treuzet gand eur hleze, e seurt ma vo diskuliet ar zoñjou kuzet e kalonou eur halz a dud».

³⁶ Bez' e oa eno ive eur brofetez: Anna, merh da Fanuel, euz rummad Azer. Oajet braz e oa. Seiz vloaz hepken he-doa bevet er briedèlèz.

³⁷ Chomet intañvez goudeze, e oa deuet d'he'fevar bloaz ha pevar-ugent. Ne guitee ket an templ, o servicha Doue noz-deiz er yun hag er bedenn.

³⁸ Digouezoud a reas d'an eur-ze, ha d'he zro en em lakeas da veuli Doue ha da gomz euz ar bugel d'an oll dud a oa o hortoz silvidigez Jeruzalem.

³⁹ Eur wech echu kemend a oa hervez Lezenn an Aotrou, ez ejont en-dro da Vro-Halilea, da Nazared o hêr. ⁴⁰ Hag e kreske ar bugel hag e teue nerz dezañ; leun e oa a 'furnez ha gras Doue a oa warnañ.

JEZUZ E-TOUEZ AN DOKTORED

⁴¹ Bep ploaz e ree kerent Jezuz beaj Jeruzalem evid gouel Pask.

⁴² Pa oe deuet Jezuz d'e zaouzeg vloaz, e pignjont da Jeruzalem, evel kustum, evid ar gouel.

⁴³ Pa oe echu ganto ar gouel e kemerjont hent ar gêr, Med ar paotrig Jezuz a jomas e Jeruzalem hep gouzoud d'e dud.

⁴⁴ Soñjal a reent edo gand ar re all euz ar gompagnunez, hag evel-se e rejont eun deveziad hent, ha neuze e klaskjont war e lerh e-touez o herentiez hag o anaoudêgêz. ⁴⁵ Ne gavjont ket anezañ, hag e teujont neuze war o giz da Jeruzalem, evid e glask.

⁴⁶ A-benn tri devez e kavjont anezañ en Templ azezet e-kreiz an Doktored, ouz o zelaou hag oh ober goulennou outo. ⁴⁷ Kement hini a gleve anezañ a jome souezet gand e skiant hag e responchou. ⁴⁸ Ouz e weled e oe sebezet e dud, hag e vamm a lavare dezañ:

— «Va mab, perag beza greet deom kement-se? Setu m'edo da dad ha me, leun a enkrez, ouz da glask».

⁴⁹ Eñ a lavaras dezo:

— «Perag beza va hlasket? Ha ne ouieh ket e tlean beza e ti va Zad?»

⁵⁰ Med ne intentjont ket ar pez e-noa lavaret dezo.

BUEZ KUZET NAZARED ADARRE

⁵¹ Diskenn a reas Jezuz ganto, evid distrei da Nazared, hag e oe dalhmad sentuz outo, hag e vamm a vire an oll draou-ze en he halon.

⁵² Jezuz, eñ, a greske e pep doare: furnez, korv ha gras, dirag Doue ha dirag an dud.

Pennad III

PREZEGEREZ YANN-VADEZOUR (10)

¹ Tiber Sezar a oa impalaer pempzeg vloaz a oa. Poñs Pilat a oa gouarnour Bro-Judea, Herodez Tetrark (11) Bro-Halilea. Filip, e vreur, Tetrark Bro-Iturea ha Trakonitz.

Lisaniaz Tetrark Bro-Abilen. ² D'ar mare m'edo Annaz ha Kaifaz evel Beleien-Vraz, neuze e oe roet Komz Doue da gleved da Yann, mab Zakariaz, er goueleh.

³ Mond ha dond a reas a-dreuz bro ar Ster-Jordan en eur brezeg eur vadeziant a binijenn evid pardon ar pehejou, ⁴ evel m'eo skrivet e levr ar profet Izaiaz:

« *Mouez eun dén o krial er goueleh:*

« *Kempennit an hent d'an Aotrou,*

« *eünit dezañ e wenojennou.*

⁵ « *Pep traoñienn a vo stanket,*

« *Pep menez ha pep torgenn a vo izelleet,*

« *an henchou kamm a vo eünet,*

« *hag ar re skoselleg kompezet.*

⁶ « *Hag e welo pep dén silvidigez Doue* ».

⁷ Eun niver braz a dud a zeue da veza badezet gantañ. Yann a lavare dezo:

— « Gouenn naered-wiber, piou e-neus desket deoh tehed a-raog ar gounnar a zo o tond? ⁸ Taolit eta frouez hag a ziskouezo e cheñchit buez. N'it ket da lavared ennoh hoh-unan: Ni on-eus Abraham da dad. Rag m'hel lavar deoh: Doue a hell, euz ar vein-mañ, lakad da zewel bugale da Abraham.

⁹ « Bremañ dija eo prést ar vouhal da daga gwriziou ar gwez. Kement gwezenn eta ha ne zougo ket frouez mad a vo trohet ha stlapet en tan ».

¹⁰ Tud e-leiz a houlenne ouz Yann:

— « Petra on-eus da ober? »

¹¹ Yann a responte dezo:

— « An neb e-neus daou bez dillad, rei unan d'an hini a zo hep ket, hag an neb e-neus bevañs, ober kemend-all ».

¹² Dond a reas Publikaned (12) ive evid beza badezet hag e lavarent dezañ:

— « Mestr, petra on-eus-ni da ober? »

¹³ Hag e respontas dezo:

— «Na rit netra en tu all d'ar pezh a zo merket deoh».

¹⁴ Soudarded ive a houlenne outañ:

— «Ha ni, petra 'raim?»

Eñ a lavare dezo:

— «Diwallit da wall-gas dén e-béd, pe da ziskuill e gaou, ha deoh da dremen gand ho pae».

¹⁵ O veza m'edo ar bobl war héd, ha ma houlenne an oll outo o-unan, daoust ha ne vije ket Yann ar Mesiaz, ¹⁶ e lavare Yann d'an oll:

— «Me eo gand dour e vadezan ahanoh, med ema o tond an hini a zo kreñvoh egedon, ha n'on ket din da ziskoulma lèrenn e zandalennou. Eñ ho padezo er Spered-Santel hag en tan. ¹⁷ En e zorn ema ar bal-wenta evid nêtaad e leuriad éd ha dastum ar gwiniz en e hrignol. Ar pell a-vad a daolo da zevi en eun tan ha ne varv ket».

¹⁸ Gand kalz a genteliou euz ar seurt-se, ha re all c'hoaz, eh embanne ar Helou Mad d'ar bobl.

YANN TAOLET EN TOULL-BAH

¹⁹ Med ar priñs Herodez, bet tamallet gand Yann en abeg da Herodiadez, gwreg e vreur, hag en abeg d'an oll dorfejou e-noa greet, ²⁰ a reas muioh c'hoaz: lakad Yann er prizon.

BADEZIANT JEZUZ

²¹ Echu e oa da vadezi an oll, ha Jezuz, bet badezet ive, a oa o pedi. Neuze e tigoras an neñv.

²² Diskenn a reas ar Spered-Santel warnañ; dezañ, da weled, e-noa furm eur goulm, hag e oe klevet eur vouez euz an Neñv o lavared: «Te eo va Mab muia karet, ennout e kavan va dudi».

LIGNEZ JEZUZ (13)

²³ Jezuz, pa stagas da brezeg a oa wardro tregont vloaz, war a greded e oa mab da Josef, mab Héli ²⁴ mab Mazat, mab Levi, mab Melki, mab Yannaï, mab Josef, ²⁵ Mab Mataziaz, mab Amos, mab Nahoum, mab Ezli, mab Nagai, ²⁶ mab Maaz, mab Mataziaz, mab Semein, mab Yozeu, mab Yoda, ²⁷ mab Yoanan, mab Resa, mab Zorobabel, mab Salaziel, mab Neri, ²⁸ mab Melhi, mab Addi, mab Kôsam, mab Elmadam, mab Er, ²⁹ mab Jezuz, mab Eliezer; mab Yorim, mab Mazat, mab Levi, ³⁰ mab Simeon, mab Youda, mab Josef, mab Yônam, mab Eliakim, ³¹ mab Melea, mab Menna, mab Mataza, mab Nazam, mab David, ³² mab Yese, mab Yobed, mab Booz, mab Sala, mab Naason, ³³ mab Aminadab, mab Admin, mab Arni, mab Ezrom, mab Farez, mab Youda, ³⁴ mab Jakob, mab Izaaq, mab Abraham, mab Tara, mab Nahor, ³⁵ mab Serouk, mab Ragau, mab Faleq, mab Eber, mab Sala, ³⁶ mab Kainam, mab Arfaksad, mab Sem, mab Noé, mab Lameh, ³⁷ mab Mazousala, mab Enoh, mab Yared, mab Maleleel, mab Kaïnam, ³⁸ mab Enoz, mab Sez, mab Adam, mab Doue.

Pennad IV

JEZUZ TOUELLET ER GOUELEH

¹ Jezuz, karget euz ar Spered-Santel, a zistroas euz ar Ster-Jordan, hag e oe bleniet gand ar Spered er goueleh.

² Daou-ugent devez eo bet eno, tentet gand an diaoul; ne zebras netra e-béd en deziou-ze, ha pa oent echu e teuas naon dezañ. ³ Neuze e lavaras dezañ an diaoul:

— «Ma 'z out Mab Doue, lavar d'ar mên-mañ trei e bara».

⁴ Respont a reas Jezuz dezañ:

— «Skrivet eo: *N'eo ket diwar ar bara hepkén e vevo an dén*».

⁵ O veza kaset anezañ uhelloh, e tiskouezas an diaoul dezañ oll rouanteleziou ar béd en eur berr amzer ⁶ hag e lavaras dezañ:

— «Me da lakaio da vestr war an oll vroiu-ze hag o gloar, rag etre va daouarn int bet laket, ha d'an neb a 'fell din e roan anezo. ⁷ Te eta, ma stouez dirazon, e vezint dit oll».

⁸ Respont a reas Jezuz:

— «Skrivet eo: *An Aotrou da Zoue a stoui dirazañ ha ne adori nemetañ*».

⁹ Neuze e kasas an diaoul anezañ da Jeruzalem, hel lakeas war gern an Templ hag e lavaras dezañ:

— «Ma 'z out Mab Doue, en em daol a-hann d'an traoñ, ¹⁰ rag skrivet eo e-neus roet urz d'e Elez da ziwall ahanout, ¹¹ ha c'hoaz: war o daouarn e tougint ahanout da vired na stokfe da droad ouz ar mên».

¹² Jezuz a respontas dezañ:

— «Lavaret eo: *ne denti ket an Aotrou da Zoue*».

¹³ Echu gantañ klask touella Jezuz e pep doare, e pellaas an diaoul dioutañ, da hortoz e vare.

JEZUZ A GROG DA BREZEG

¹⁴ Jezuz a zistroas da Vro-Halilea, ennañ nerz ar Spered-Santel, hag ar vrud anezañ a redas dre ar vro a-béz.

¹⁵ Kelenn a ree en o zinagogou; an oll a ree e veuleudi.

JEZUZ E NAZARED

¹⁶ Dond a reas da Nazared el leh m'oa bet savet, hag ez eas d'ar zinagog, evel m'oa boaz d'ober da zeiz ar zabat. Sevel a reas en e-zav evid ober al lennadenn.

¹⁷ Levr ar Profet Izaiaz a oe roet dezañ. O veza digoret al levr e kavas ar pennad m'eo skrivet ennañ:

¹⁸ « *Spered an Aotrou a zo warnon, ablamour m'e-neus sakret ahanon.* ¹⁹ *Kaset on gantañ evid prezeg ar Helou Mad d'ar beorien, evid embann d'ar brizonidi e vezint dijadennet, d'ar re zall e welint sklêr, d'ar re 'zo gwasket e vezint tennet a boan,* ¹⁹ *hag evid embann eur bloavez a hras a-berz an Aotrou.* ».

²⁰ Serri a reas al levr, e rei d'ar zervicher hag azeza. An oll dud er zinagog a zo o daoulagad o para warnañ. ²¹ Neuze e lavaras dezo:

— « Hirio eo deuet da wir evid ho tiskouarn ar homzouze euz ar Skritur ».

²² An oll a rente testeni dezañ, ha bamet e oant gand ar homzou leun a hras a zeue euz e henou. Ha e lavarent:

— « Ha n'eo ket hemañ mab Jozef? »

²³ Jezuz a lavaras dezo:

— « Moar-vad emaoñ o vond da lavared din: medisin, ro ar pare dit da-unan! Klevet on-eus pebez traou kaer az-peus greet e Kafarnaom; gra kemend-all amañ en da vro ».

²⁴ Lavared a reas ouspenn:

— « E gwirionez m'hel lavar deoh, profet e-béd ne vez digemeret mad en e vro... ²⁵ E gwirionez m'hel lavar deoh, kalz intañvezed a oa e Bro-Israel, en amzer Eliaz, pa jomas kloz an oabl e-pad tri bloaz hanter, ha pa oe eur gernez vraz e pep leh.

²⁶ « Ne oe ket kaset Eliaz daved nikun anezo, med d'eun intañvez estren euz kêr Sarepta e Bro-Zidon.

²⁷ « Ha kalz tud lor a oa en Israel en amzer Elizeaz, ha koulskoude, nikun anezo n'eo bet pareet, nemed Naaman, eur Siriad. »

²⁸ Oll, er zinagog, ez ejont e kounnar, o klevet ar homzou-ze. ²⁹ Sevel a rejont ha bounta anezañ er-mêz euz kêr.

Kas a rejont anezañ beteg penn eun tarroz euz ar menez m'eo savet kêr warnañ, evid e stlepel d'an traoñ.

³⁰ Med Jezuz a dremenas dre o-zouez hag a yeas gand e hent.

JEZUZ E KAFARNAOM

³¹ Diskenn a reas neuze e Kafarnaom, kêr euz Bro-Halilea; o helenn a ree d'an deziou sabat. ³² Estlammet braz e oant gand e gelennadurez, rag gand galloud eo e komze.

³³ Bez e oa er zinagog eun dén hag a oa ennañ spered eun diaoul hudur. Krial a reas a-bouez e benn:

³⁴ — « Ah! Petra 'glaskez ouzom, Jezuz a Nazared? Ha deuet out d'or has da goll? Goud a ouzom piou out-te: Sant Doue ».

³⁵ Jezuz her gourdrouzas:

— « Ro peoh ha kee er-mêz euz an dén-ze ».

An diaoul a daolas an dén d'an douar e-kreiz an dud, hag a yeas er-mêz anezañ heb ober droug e-béd dezañ. ³⁶ Ar spont a grogas enno oll, hag e lavarent an eil d'egile:

— « Petra eo komz an dén-ze? Gourhemenn a ra gand nerz ha galloud d'ar sperejou hudur hag ez eont er-mêz ».

³⁷ Hag ar vrud anezañ en em skigne e pep leh dre ar vro.

PAREANS MAMM-GAER SIMON

³⁸ Jezuz a guiteas ar zinagog hag a antreas e ti Simon. Mamm-gaer Simon a oa gand an derzienn vraz. Pedi a rejont anezañ da ober eun dra bennag eviti.

³⁹ Stoui a reas a-uz dezi ha gourdrouz an derzienn. An derzienn a yeas kuit. Kerkent e savas ar vamm-gaer hag en em lakeas d'o zervicha.

PAREANSOU NIVERUZ

⁴⁰ Da vare ar huz-heol (14), ar re oll o-doa klañvourien, gwasket gand kleñved pe gleñved, a zigasas anezo davetañ, hag eñ, oh astenn e zaouarn war bep hini, a roe dezo ar pare.

⁴¹ Droug-sperejou ive, a yee er-mêz euz kalz a dud en eur grial hag en eur lavared:

— «Te eo Mab Doue».

Eñ a-vad o gourdrouze hag a zifenne outo komz, rag gouzoud a reent e oa ar Hrist.

JEZUZ A GUITA KAFARNAOM DRE GUZ

⁴² Pa oe deuet an deiz, ez eas er-mêz beteg eul leh distro. Kalz tud a oa war glask anezañ. Deuet beteg ennañ, e klaskent e zerhel, gand aon n'ez afe kuit diouto. ⁴³ Med eñ a lavaras dezo:

— «Ar heriou all ive, a rankan embann dezo Kelou Mad Rouantèlèz Doue, rag evid an dra-ze eo on bet kaset.

⁴⁴ Hag e prezege e sinagogou Bro-Judea.

Pennad V

PESKETEREZ VURZUDUZ.
AR PEVAR DISKIBL KENTA

¹ Eun devez, eñket gand engroez an dud en em starde en-dro dezañ evid kleved komzou Doue, edo Jezuz war ribl lenn Jenezared.

² Gweled a reas diou vag, diskennet anezo ar besketerien evid gwalhi o rouejou.

³ O veza pignet en unan anezo a oa bag Simon, e houlenas digantañ pellaad eun tammig diouz an douar. Azeza 'reas hag e krogas da brezeg d'ar bobl euz ar vag.

⁴ Pa oe echu gantañ e brezegenn, e lavaras Jezuz da Zimon:

— «Sko d'an don-vor ha taol da rouejou da besketa».

⁵ Ha Simon a respont dezañ:

— «Mestr, goude beza poaniet e-pad an noz penn-dabenn, n'on-eus paket netra. Koulskoude, pa lavarez henn ober, e taolin va rouejou».

⁶ Henn ober a rejont, hag e pakjont kemend a besked, ma oe dare o rouejou da regi.

⁷ Ober a rejont sin d'o henseurtes euz ar vag all, da zond d'o zikour. Dond a rejont, hag an diou vag a oa ken karget ma oant war-nes beza goueledet.

⁸ O weled kement-se, Simon Pèr a gouezas ouz daoulin Jezuz en eur lavared:

— «Aotrou, pella diouzin, rag eun dén peher on».

⁹ Evid gwir, kroget e oa ar spont ennañ hag er re oll a oa gantañ, o weled ar besketèrèz vurzuduz o-doa greet.

¹⁰ Ken spontet all e oe Jakez ha Yann, mibien Zebede, kompagnuned da Zimon. Med Jezuz a lavaras da Zimon:

— «Ne d-a ket da gaoud aon! Hiviziken e vezi pesketaer tud».

¹¹ Neuze, goude beza digaset o bagou d'an douar ha dilezet pep tra, ez ejont da heul Jezuz.

PAREANS EUN DEN LOR

¹² Eun devez m'edo en unan euz ar hêriadennou-ze, setu ma oa eno eun dén goloet a lorgnez. Pa welas Jezuz e stouas d'an douar dirazañ, hag e reas outañ ar bedenn-mañ:

— «Aotrou, ma karez e hellez va farea».

¹³ Jezuz a astennas e zorn, a douchas outañ hag a lavaras:

— «Me a 'fell din, bez pareet».

Ha raktal ez eas al lorgnez kuit dioutañ, ¹⁴ Ha Jezuz a zifennas outañ henn lavared da zén.

— «Kee kentoh d'en em ziskouez d'ar beleg, ha ro ar prov evid da bareañs, hervez gourhemenn Moizez; aze o-do eun destenn».

¹⁵ Muioh mui e veze ano anezañ, hag e tirede tud a-vernioù d'e zelaou ha da veza pareet euz o hleñvejou. ¹⁶ Eñ a-vad en em denne el lehiou distro hag e pede.

PAREANS EUN DEN SEIZET

¹⁷ Eun deiz m'edo o kelenn, e oa azezet ouz e zelaou Farizianed ha Doktored war al Lezenn deuet euz oll geriadennou Bro-Halilea, Bro-Judea ha Jeruzalem. Ha galloud an Aotrou a oa gantañ da barea ar re glañv.

¹⁸ Erruoud a reas tud o tougenn war eur gwele eun dén seizet. Klask a reent e zigas en ti evid e lakaad dirazañ.

¹⁹ En abeg d'an engroez, ne gavent tu e-béd da gas tre an dén, hag e pignont war al leurenn doenn, hag en eur lemel an teol e tiskennont anezañ, gand e wele, e-kreiz an dud dirag Jezuz.

²⁰ O weled e'feiz Jezuz a lavaras dezañ:

— «Da behejou a zo pardonet dit».

²¹ Ar Skribed hag ar Farizianed a zeuas d'en em zoñjal:

— «Piou eo hemañ gand e gomzou dizakr? Piou a hell pardoni ar pehejou nemed Doue hepkén?»

²² Med Jezuz hag a ouie petra 'oa en o spered a respontas dezo:

— «Perag maga seurt soñjou en ho kalonou? ²³ Petra eo an êsa da lavared: «Da behejou a zo pardonet dit», pe lavared: «Sav ha kerz»? ²⁴ Ahanta! evid ma ouezoh e-neus Mab an dén galloud war an douar da bardoni ar pehejou: me

'lavar dit, emezañ d'an dén seizet, sav en da-zav, kemer da wele ha distro d'ar gêr».

²⁵ Kerkent e savas hemañ en e-zav dirazo, e kemeras e wele hag ez eas d'ar gêr en eur veuli Doue.

²⁶ Ar spont a grogas neuze enno oll hag e veulent Doue. Leun a zoujañs e lavarent:

— «Traou estlammuz on-eus gwelet hirio».

LEVI GALVET GAND JEZUZ

²⁷ Goudeze ez eas er-mêz hag e welas eur publikan, e ano Levi, azezet e bureo ar maltoutèrèz, hag e lavaras dezañ:

— «Deus d'am heul».

²⁸ O tilezel pep tra, e savas hag ez eas d'e heul.

O LEINA E TI LEVI GAND AR BEHERIEN

²⁹ Levi (15) a reas eur préd braz da Jezuz en e di. Bez' e oa eun nebeud mad a druajerien hag a dud all ouz taol ganto.

³⁰ Ar Farizianed hag ar Skribed a hros mole hag a lavare d'e ziskibien:

— «Perag e tebrit hag eh evit-c'hwi gand ar bublikaned hag ar beherien?»

³¹ Jezuz a lavaras dezo:

— «N'eo ket an dud yah eo o-deus ezomm euz ar medisin, med ar re glañv. ³²N'on ket deuet da helver an dud just med ar beherien, ma teuint da jeñch buez».

DIWAR-BENN AR YUN

³³ Int a lavaras dezañ:

— «Diskibien Yann a oar yun aliez ha pedi, diskibien ar Farizianed kemend-all, e-leh da re-te a zèbr hag a év».

³⁴ Jezuz a respontas dezo:

— «Daoust hag e hellit lakad da yun mignoned an dén-nevez, e-keid ha m'ema hemañ ganto? ³⁵ Med dond a raio deziou ma vo bet lamet an dén-nevez diganto; neuze e yunint en deziou-ze».

³⁶ Eur barabolenn a lavaras c'hoaz dezo:

— «Dén e-béd ne rog eun tamm euz eur pezh dillad nevez evid peñselia eur pezh dillad koz; a-néz e vezo bet roget an hini nevez, hag ar peñsel tennet anezañ ne vo ket a-zere gand an hini koz.

³⁷ «Dén kennebeud ne laka gwin nevez e sehier-lèr koz, a-néz, ar gwin nevez a lako ar zehier koz da darza, ar gwin a vo skuillet hag ar zehier kollet.

³⁸ Ar gwin nevez a dle beza laket e sehier-lèr nevez.

³⁹ Nep piou bennag a év gwin koz n'e-neus c'hoant e-béd da gaoud hini nevez, rag lavared a ra: gwelloc'h eo an hini koz (16).

Pennad VI

AR PENNOU-GWINIZ KUTUILLET

¹ D'eun deiz sabat, ma kerze Jezuz a-dreuz parkajou gwiniz, e kutuille e ziskibien pennou-éd, e tizillent anezo e-tre o daouarn hag e tebrent anezo.

² Lod Farizianed a lavaras:

— «Perag e rit-hu ar pezh n'eo ket aotreet ober da zeiz ar zabat?»

³ Jezuz a respontas dezo:

— «N'ho-peus ket lennet petra 'reas David pa c'hoarvezas dezañ kaoud naon, eñ hag e gompagnuned? ⁴ Mond-tre e ti Doue, kemered bara ar hinnig, e zebri ha rei lod d'ar re a oa

gantañ; ar bara-ze ha n'eus dén aotreet d'e zebri nemed ar veleien, ha dén all e-béd».

⁵ Hag e lavaras dezo:

— «Mestr war ar zabat eo Mab an dén».

PAREANS DORN DIZEHET EUN DEN

⁶ Eun deiz sabat all ez eas tre er zinagog hag e kentelias. Bez' e oa eno eun dén seizet e zorn dehou. ⁷ Ar skribed hag ar Farizianed a zelle gand evez ouz Jezuz, da weled hag ober a rafe eur bareañs da zeiz ar zabat, evid kaoud peadra d'e damall. ⁸ Eñ a-vad a anaveze o zoñjou. Lavared a reas d'an dén seizet e zorn:

— Sav en da-zav ha deus amañ e-kreiz».

Sevel a reas en e-zav. ⁹ Jezuz a lavaras dezo:

— «Goulenn a ran ouzoh hag aotre a zo da zeiz ar zabat da ober ar mad pe da ober an droug, da zavetei eur vuez pe d'he distruja?»

¹⁰ Hag en eur zelled outo tro-war-dro e lavaras d'an dén:

— «Astenn da zorn».

Henn ober a reas, hag e zorn a oe pareet.

¹¹ Int-i a-vad a oe fuloret, hag e komzent kenetrezo euz ar pez a hellfent ober da Jezuz.

DIBAB AN DAOUZEG

¹² En deiziou-ze Jezuz en em dennas war ar menez da bedi hag e tremenas an noz o pedi Doue.

¹³ Deuet an deiz, e halvas e ziskibien, hag e tibabas daouzeg anezo, a anvas ebestel:

¹⁴ Simon, a roas dezañ an ano a Bèr, Andre e vreur, Jakez, Yann, Filip, Bartolome, ¹⁵ Maze, Tomaz, Jakez mab Alfe, Simon, lesanvet ar «Greduz», ¹⁶ Jud, mab Jakez, ha Judaz Iskariot an hini a yeas da drubard.

AR BOBL O HEULIA JEZUZ

¹⁷ O tiskenn ganto e chomas a-zav en eul leh plên, gand eun niver braz euz e ziskibien, hag eur boblad vraz a dud euz Bro-Judea a-béz, hag euz Jeruzalem, hag euz arvor Tir ha Sidon.

¹⁸ Deuet e oant d'e gleved ha da gaoud ar pare euz o hleñvejou. Ar re a oa gwasket gand sperejou hudur a veze pareet. ¹⁹ Hag e klaske an oll touch outañ, rag eun nerz a zeue anezañ hag o 'faree oll.

EVURUZ!

²⁰ O veza savet e zaoulagad war-zu e ziskibien e lavaras:

— « Evuruz oh, c'hwi ar re baour, rag deoh eo Rouantèlèz Doue.

²¹ « Evuruz oh, c'hwi hag ho-peus naon bremañ: Ho kwalh a vo roet deoh.

« Evuruz oh, c'hwi hag a ouel bremañ: C'hoarzin a reoh.

²² « Evuruz e vezoh, p'o-devo an dud kas ouzoh, pa daolint ahanoh er-mêz, pa vo hoh ano dismegañset, hag argaset ganto evel eun dra 'fall, ablamour da Vab an dén.

²³ « Bezit laouen en deiz-se, ha tridit gand ar joa, rag digoll kaer ho-peus da gaoud en neñvou.

« Evel-se ive e ree o zadou d'ar brofeted».

MALLOZ!

²⁴ « Med gwas-a-ze deoh! tud pinvidig, o veza m'ho-peus dija ho frealzidigez.

²⁵ « Gwas-a-ze deoh! c'hwi hag ho-peus ho kwalh bremañ, rag bez' ho-po naon. Siwaz deoh! Bremañ o c'hoarzin: doan ha daelou a vo ho lod.

²⁶ « Gwas-a-ze deoh! pa gomzo brao an oll dud diwar ho penn, rag evel-se e ree o zadou d'ar falz-brofeted».

KARED AN ENEBOURIEN

²⁷ « Med deoh-c'hwi a zo ouz va zelaou e lavaran: Karit hoh enebourien, grit vad d'ar re o-deus kasoni ouzoh.

²⁸ « Goulennit bennoz Doue war ar re a houlenn malloz warnoh; pedit evid ar re ho tamall e-gaou.

²⁹ « D'an hini a sko ganeoh war eur jod, astennit e-bén, hag an hini a lam diganeoh ho mantell, lezit anezañ da gemer ive ho sae.

³⁰ « Roit d'an neb a houlenn diganeoh, ha d'an neb a gemer ho traou n'it ket da houlenn restaol digantañ.

³¹ « Evel m'ho-peus c'hoant e rafe deoh an dud, grit dezo ive.

³² « Ma karit ar re ho kar, peseurt grad a zo dleet deoh? Ar beherien o-unan a gar an neb o har.

³³ « Ma rit vad d'ar re a ra vad deoh, peseurt grad a zo dleet deoh? Ar beherien o-unan a ra kement-se.

³⁴ « Ma prestit arhant d'ar re a esperit reseo diganto en-dro, peseurt grad a zo dleet deoh? Ar beherien o-unan a brést d'ar beherien evid ma vo restaolet dezo kemend-all.

³⁵ « Er hontrol, karit hoh enebourien, grit vad ha prestit hep gortoz netra en-dro. Neuze e vo braz ho tigoll, hag e vezoh bugale da Zoue, Mestr an neñv, rag eñ a zo mad ouz an dud dianaoudeg ha fallagr.

TRUGAREZ HA MADELEZ

³⁶ « Bezit trugarezuz evel m'eo trugarezuz ho Tad.

³⁷ « Na varnit ket ha ne vezoh ket barnet.

« Na gondaonit ket ha ne vezoh ket kondaonet.

« Pardonit hag e vo pardonet deoh.

³⁸ « Roit hag e vo roet deoh: eur muzuliad réz ar bord, stardet, hejet, leun-barr a vo skuillet deoh en ho pruched, rag diouz ar muzul a rooh gantañ evid ar re all e vo muzulet deoh d'ho tro.

ALIOU MAD ALL

³⁹ Jezuz a lavaras ive dezo ar barabolenn-mañ:

— « Daoust hag e hell eun dén dall hencha eun dén dall? Daoust ha ne gouezint ket o-daou en eur poull? »

⁴⁰ « N'ema ket an diskibl uhelloh eged e vestr, med an diskibl peurzesket a vo par d'e vestr. »

⁴¹ « Perag e sellez ouz ar blouzenn a zo e lagad da vreur ha ne daolez ket evez ouz an treust a zo en da hini? »

⁴² « Pe c'hoaz, penaoz e hellez lavared d'az-preur: « Va breur, va lez da lemel ar blouzenn a zo en da lagad », te ha ne welez ket an treust a zo en da hini? Dén faoz ma 'z out, tenn da genta an treust a zo en da lagad, ha goude e weli sklêr da denna ar blouzenn a zo e lagad da vreur. »

⁴³ « N'eus ket a wezenn vad o rei frouez fall, nag a wezenn 'fall o rei frouez mad. »

⁴⁴ « Pep gwezenn a vez anavezet diouz he 'frouez. Ne vez ket kutuillet fiez war ar spern na rezin war an dréz. »

⁴⁵ « An dén mad a denn ar mad euz teñzor mad e galon, hag an dén fall a denn ar fallentez euz e deñzor fall, rag euz ar galon eo e tarz ar homzou a zeu war ar muzellou. »

⁴⁶ « Perag va anvit-hu Aotrou! Aotrou! ha ne rit ket ar pezh a lavaran? »

⁴⁷ « Kement dén a zeu davedon hag a glêv va homzou hag a vév hervezo, ez an da ziskouez deoh ouz piou eo heñvel: »

⁴⁸ « Heñvel eo ouz eun dén o sevel ti: kleuzet e-neus, eet eo don ha lakeet an diazez war ar roh. Deuet eo an doureier braz, en em daolet ar froud-dour ouz an ti-ze, med n'e-neus ket gellet e vralla, rag mad 'oa savet an ti. »

⁴⁹ « An hini a-vad a glêv va homzou ha ne zent ket outo a zo heñvel ouz eun dén e-neus savet e di war an douar, hep diazez e-béd. Ar froud-dour a zo en em daolet outañ, ha kerkent ez eo dizahet: distrujet krenn eo bet an ti-ze ». »

Pennad VII

PAREANS SERVICHER EUR HANTENER

¹ Goude beza komzet d'ar bobl, eh antreas Jezuz e Kêr Gafarnaom.

² Eur hantener e-noa eur zervicher hag a oa klañv ha dare da vervel; e gared a ree kenañ.

³ O veza klevet ano euz Jezuz, e kasas d'e gavoud eun nebeud euz pennou-braz ar Juzevien, d'e bedi da zond da zavetei e zervicher.

⁴ Digouezet e-kichenn Jezuz, ar re-mañ a bedas anezañ stard en eur lavared; « Meritoud a ra e rafes kement-se evitañ, ⁵ rag kared a ra or pobl. Eñ eo e-neus savet deom ar zinagog ».

⁶ Jezuz a reas hent ganto, ha n'edo mui pell diouz an ti pa zeuas mignoned d'ar hantener da lavared dezañ euz e berz:

— « Aotrou n'eo ket dao dit kemer ar boan-ze, rag n'on ket din e teufes dindan va zoenn. ⁷ Me va unan n'am-eus ket kredet mond beteg ennout, med lavar eur gêr hepkén hag e vo pare va zervicher. ⁸ Me hag a zo dindan galloud unan all, am-eus soudarded dindannon, ha pa lavaran da unan; Kee! ez a, ha da unan all: Deus! e teu, d'am zervicher: Gra an dra-mañ hag her gra ».

⁹ O kleved kement-se e oe estlammet Jezuz, trei a reas ouz ar bobl a oa ouz e heul:

— « Hel lavared a ran deoh, e Israel zokén n'am-eus ket kavet ken braz feiz ».

¹⁰ Distro d'ar gêr, ar re a oa bet kaset a gavas ar zervicher pare.

DASORH MAB INTANVEZ NAIM

¹¹ Jezuz a yeas d'eur gêr anvet Naim, e ziskibien hag eur bobl tud oh ober hent gantañ. ¹² Digouezoud a reas tost da zor kêr, d'ar mare m'edod o kas eun dén maro d'an douar. E

vamm a oa intañvez ha n'he-doa nemetañ. Kalz tud a oa ouz he heul. ¹³ O weled an intañvez, e kemeras Jezuz truez outi, hag e lavaras dezi:

— «Ne d-a ket da ouela!»!

¹⁴ Tostaad a reas hag e touchas ouz ar hravaz. Ar re a zouge ar horv a jomas a-zav, ha Jezuz a lavaras:

— «Paotrig, me 'lavar dit, sao!».

¹⁵ Neuze an dén maro a zavas, a azezas war e hoazez hag a gomzas, ha Jezuz a roas anezañ d'e vamm.

¹⁶ An oll a grogas aon enno, hag e veulent Doue en eur lavared:

— «Eur profet braz a zo savet en on-touez ha Doue a zo deuet da weled e bobl».

¹⁷ Ar vrud a gement-se a redas dre Vrö-Judea a-béz hag er broiou tro-war-dro.

DIWAR-BENN YANN-VADEZOUR

¹⁸ Diskibien Yann a roas dezañ da houzoud an oll draouze. Eñ a halvas daou anezo, ¹⁹ hag o hasas daved an Aotrou da houlenñ outañ:

— «Daoust ha te eo an hini a dle dond? Pe unan all on-eus da hortoz?»

²⁰ Erruet e-kichenn Jezuz, ar wazed-se a lavaras dezañ:

— «Yann, ar Badezour, e-neus kaset ahanom davedout, evid goulenn ouzit: «Daoust ha te eo an hini a dle dond, pe réd eo deom gortoz unan all?»»

²¹ D'ar mare-ze e pareas Jezuz kalz a dud euz o hleñvejou, o gwanderiou, o droug-sperejou hag e roas ar gweled da veur a zén dall. ²² Goudeze e respontas d'ar gannaded:

— «It da lavared da Yann petra ho-peus gwelet ha klevet: Ar re zall a wél, ar re gamm a gerz, ar re lor a zo pareet, ar re vouzar a glèv, ar re varo a adsao da veo, hag ar beorien a

zo prezeget dezo ar Helou Mad (17); ²³ Hag eüruz an neb ne vezin ket eur skoill evitañ».

²⁴ Pa oe eet kannaded Yann en hent, e komzas Jezuz d'ar bobl diwar e benn:

— «Petra oh eet da weled er goueleh? Eur raosklenn hejet gand an avel? ²⁵ Neuze 'ta petra oh eet da weled? Eun dén gwisket gand dillad kaer? Med an dud gwisket gand dillad kran hag a vév er plijaduriou a vez kavet e paleziou ar rouaned. ²⁶ Ahanta! Petra ez oh eet da weled? Eur Profet? Ya, m'hel lavar deoh hag ouspenn eur profet.

²⁷«Hennez eo an hini a zo bet skrivet diwar e benn; *«Setu! Kas a ran va hannad en da-raog, kempenn a raio da hent dirazout».*

²⁸ «M'hel lavar deoh, e-touez bugale ar merhed, nikun n'eo brasoh eged Yann, ha koulskoude, an disterra e Rouan-télèz Doue a zo brasoh egetañ.

²⁹ «Ar re oll a oa ouz e zelaou, ar publikaned hag all, a rentas meuleudi da Zoue o reseo badeziant Yann.

³⁰ «Ar Farizianed a-vad hag ar Skribed o-deus troet kein d'ar pezh a oa mennad Doue warno, o chom hep reseo e vadeziant.

³¹ «Ouz piou keñveria tud al lignez-mañ? Ouz piou ez int heñvel?

³² «Heñvel int ouz bugale azezet war ar blasenn hag o krial an eil d'egile: «Fleütal on-eus greet deoh ha n'ho-peus ket dañset; klemmganet on-eus ha n'ho-peus ket gouelet».

³³ «Rag Yann ar Badezour a zo deuet; ne zébr ket a vara ha ne év ket a win, hag e lavarit: eun diaoul a zo ennañ.

³⁴ «Mab an dén a zo deuet. Debri hag eva a ra hag e lavarit: Setu eul lonteg hag eun ever, eur mignon d'ar publikaned ha d'ar beherien.

³⁵ «Ar 'furnez a-vad a zo bet rentet justis dezi gand he oll bugale».

AR BEHEREZ PARDONET

³⁶ Eur Farizian a bedas Jezuz da zebri gantañ. Mond a reas d'e di, hag ez eas ouz taol.

³⁷ Ha setu ma tigouezas eur vaouez a vuez fall euz kêr. Klevet he-doa edo Jezuz ouz taol e ti ar Farizian. Digaset he-doa ganti eur pod alabastr leun a louzou-c'hwez-vad.

³⁸ Mond a ra a-dreñv da Jezuz, e-harz e-dreid. Daelou a skuill warno hag o zeha 'ra gand he bleo ha pokad dezo ha skuill warno louzou-c'hwez-vad.

³⁹ O weled kemend-all, ar Farizian e-noa pedet Jezuz a lavare ennañ e-unan:

— «Ma vije bet hemañ eur profet, e-nije gouezet piou ha peseurt maouez eo an hini a douch outañ: eur behérez!»

⁴⁰ Neuze e lavaras Jezuz:

— «Simon, eun dra bennag am-eus da lavared dit».

— «Lavar, Mestr, emezañ».

Ha neuze Jezuz:

⁴¹ Eur prester e-noa daou zleour: unan a oa dleour a bemp kant diner, egile a hanter-kant. ⁴² O veza n'hellent ket paea o dle e roas diskarg d'an eil ha d'egile euz kemend a dleent. ⁴³ Pehini anezo a garo anezañ ar muia?»

Simon a respontas:

«An hini, moar-vad, e-neus bet ar brasa diskarg».

— «Gwir a lavarez, eme Jezuz.

⁴⁴ Trei a reas neuze war-zu ar vaouez en eur lavared da Zimon:

— «Gweled a rez ar vaouez-se, deuet on en da di ha n'az-peus ket skuillet dour war va zreid; hi he-deus glepiet anezo gand he daelou hag o zehet gand he bleo.

⁴⁵ «N'az-peus ket poket din; hi abaoe m'eo deuet en ti, n'he-deus ket ehanet da bokad d'am zreid.

⁴⁶ « N'az-peus ket skuillet louzou-c'hwez-vad war va 'fenn; hi a-vad he-deus skuillet war va zreid louzou-c'hwez-vad a briz braz.

⁴⁷ « Setu perag e lavaran dit: He 'fehejou ken niveruz a zo pardonet dezi, en abeg m'he-deus diskouezet kalz karantez; med an hini a vez pardonet nebeud dezañ a gar nebeud ».

⁴⁸ Ha neuze d'ar vaouez:

— « Da behejou a zo pardonet dit ».

⁴⁹ Ar gouvidi a lavaras enno o-unan:

— « Piou eo an dén-mañ hag a bardon zokén ar pehejou? »

⁵⁰ Jezuz neuze d'ar vaouez:

— « Saveteet out bet gand da 'feiz. Kerz e peoh ».

Pennad VIII

MERHED SANTEL A HEUILL JEZUZ

¹ Goudeze, Jezuz a dremene a-dreuz kêriou ha bourhadennou, o prezeg hag oh embann Kelou-Mad Rouantêlêz Doue. Ouz e heul edo an Daouzeg, ² hag ive eun nebeud merhed hag a oa bet pareet gantañ diouz droug-sperejou ha kleñvejou; Mari anvet Madalen (18), eet seiz diaoul diouti, ³Janed gwreg Kouza, merour Herodez, Suzanna ha meur a hini all a zikoure anezo diwar o'feadra.

⁴ O veza m'en em zastume eun niver braz a dud, ha ma tireded davetañ euz an oll gêriadennou, e lavaras dre barabolenn:

PARABOLENN AN HADER

⁵ — « An hader a zo eet da hada e had; dre ma had e kouez euz ar greun war bord an hent; breset eo gand an treid ha debret gand laboused an neñv.

⁶ « Lod all a zo kouezet war ar vein; diwan a reont ha dizeha dre ziouer a hlebor.

⁷ « Re all a zo kouezet e-touez an drein, hag an drein, o kreski d'o heul, o-deus o mouget.

⁸ « Lod all a zo kouezet en douar mad; savet int ha taolet o-deus frouez kant evid unan.

Ha Jezuz neuze, a vouez kreñv:

— « An neb e-neus diskouarn da gleved, ra glevo ».

⁹ E ziskibien a houlennas outañ petra zinifie ar barabolenn-se. ¹⁰ Respont a reas dezo:

— « Deoh eo bet roet da anaoud misteriou Rouantêlêz Doue; d'ar re all a-vad eo dre barabolennou, ma chomint hep gweled goude selled, hag heb intent goude kleved.

¹¹ « Ha setu petra zinifi ar barabolenn: an had eo komz Doue.

¹² « Ar re a zo war bord an hent eo ar re a glêv, hag e teu an diaoul goudeze hag e lam kuit ar Gomz euz o halonou, gand aon na zeufent da gredi ha da veza salvet.

¹³ « Ar re a zo war ar vein eo ar re a zigemer a Gomz gand levenez p'he hlevont. Med n'o-deus ket a wrizioù; e-pad eur pennad e kredont, med da vare an tentadur e tilezont.

¹⁴ « Ar re a zo kouezet e-mesk an drein eo ar re a glêv, med diwar goust an trubuillou, ar binvidigez, plijadurioù ar vuez, e vezont mouget en hent ha ne zeuont ket da zarevi ».

¹⁵ « Ar pez a zo en douar mad eo ar re a glêv ar Gomz gand eur galon eün ha mad, a vir anezi, hag a daol frouez en eur zerhel mad ».

PENAOZ DIGEMER HA REI D'AR RE ALL KELENNADUREZ JEZUZ

¹⁶ « Ne elum dén eul lamp evid e helei gand eul lestr pe e lakaad dindan eur gwele; med laket e vez war eur fiantolor evid ma welo ar goulou ar re a zeu en ti.

¹⁷ « Rag n'eus netra zekret ha ne vo ket diskuillet, netra guzet ha ne vo ket anavezet ha laket a-wél d'an oll.

¹⁸ « Taolit evez eta ouz an doare ma selaouit; rag an neb e-neus a vo roet dezañ, hag an neb n'e-neus ket a vo lamet digantañ ar pez, zokén, a gréd dezañ kaoud »,

GWIR GERENTIEZ JEZUZ

¹⁹ Dond a reas e vamm hag e vreudeur d'e gavoud, med n'hellent ket mond beteg ennañ ablamour d'an niver braz a dud.

²⁰ Lavaret e oe dezañ:

— « Da vamm ha da vreudeur a zo aze er-mêz, c'hoant o-deus gweled ahanout »,

²¹ Respont a reas:

— « Va mamm ha va breudeur eo ar re a zelaou komz Doue hag a vir anezi »,

AR WALL-AMZER TORRET

²² Eun devez e pignas Jezuz en eur vag gand e ziskibien. Lavared a reas dezo:

— « Tremenom war an tu all d'al lenn ».

Hag int-i er mor.

²³ E-keid ha m'edont en hent en em roas Jezuz da gousked. Eur gwall-varr avel-dro a zirollas war al lenn (19), an dour a garge ar vag hag edont en argoll. ²⁴ Tostaad a rejont ouz Jezuz hag e zihuna en eur lavared:

— « Mestr, Mestr! emañ o vond da goll! »

Dihuna 'reas ha gourdrouz an avel hag an tonnou. Sioullaad a rejont hag e teuas kalmijenn. ²⁵ Hag e lavaras Jezuz dezo:

— « E peleh emañ ho feiz? »

Spontet e oant hag estlammet hag e lavarent kenetrezo:

— « Piou eo hemañ ma ra e vestr war an avelioug ha war ar mor zoken ha ma sentont outañ ».

EUN DEN ENNAN LEUN A ZROUG-SPEREJOU

²⁶ Douara 'rejont e Bro ar Jeraziened a zo dirag Bro-Halilea. ²⁷ P'edo o tiskenn war an douar, e teuas en arbenn dezañ eun den euz kêr hag a oa dindan veli droug-sperejou abaoe eur pennad mad a amzer. Ne zouge tamm dillad e-béd. N'edo ket o chom en eun ti med er beziou. ²⁸ Pa welas Jezuz eh en em daolas e-harz e dreid en eur grial hag en eur lavared a vouez kreñv:

— « Petra 'glaskez ouzin, Jezuz Mab an Doue Uhel-Meurbéd. Ne d-a ket da ober poan din ».

²⁹ Rag Jezuz a roe urz d'ar spered hudur da vond er-mêz euz an den-ze. Meur a wech, evid gwir, ez oa bet dalhet gantañ. Ereet e veze evid e zelher, gand chadennou hag hualou, med terri a ree e ereou, ha poulzet e veze gand an diaoul war-zu al lehiou gouez.

³⁰ Jezuz a houlennas outañ:

— « Pe ano out? »

— « Strollad » emezañ, rag meur a zroug-spered a oa eet ennañ. ³¹ Hag eh aspedent anezañ da jom hep rei urz dezo da vond d'an islonk.

³² Ha setu ma 'z oa eno eur vandenn vrag a voh o peuri war ar menez. An droug-sperejou a bedas stard Jezuz da rei aotre dezo da vond er moh-se. Hag e roas aotre.

³³ An droug-sperejou a zilezas an dén hag a antreas er moh. Hag ar vandenn en en daolas el lenn diwar an tornaod hag e oent beuzet.

³⁴ O weled kemend-all e tehas kuit ar vesaerien hag e tigasjont ar helou e kêr ha tro-war-dro.

³⁵ An dud a zeuas da weled petra 'oa c'hoarvezet. Digouezoud a rejont gand Jezuz, hag e kavjont, azezet ouz e dreid, an dén bet diahubet euz an droug-sperejou. Gwisket e oa hag e skiant vad gantañ.

Spontet e oent. ³⁶ Ar re o-doa gwelet a gontas dezo penaoz e oa bet saveteet an hini a oa e dalh an droug-sperejou.

³⁷ Neuze an oll euz karter ar Jerazenianed a houlennas digand Jezuz mond kuit diouto rag kroget e oa enno eur spont braz. Eñ a bignas er vag hag a yeas war e giz.

³⁸ Med an den hag a oa eet an droug-sperejou er-mêz anezañ, a houlenne digand Jezuz e lezel da jom gantañ. Jezuz a-vad ne asantas ket hag a lavaras dezañ:

³⁹— «Distro d'ar gêr ha ro da anaoud kemend e-neus Doue greet en da-geñver».

Mond a reas eta kuit, en eur embann dre gêr a-béz kemend e-noa Jezuz greet en e-geñver.

AR VAOUEZ KLANV GAND AN DIWADA HA DASORH MERH JAIR

⁴⁰ Pa oe distro Jezuz e oe digemeret gand eur bobl a dud rag ouz e hortoz edont oll.

⁴¹ Ha setu ma tigouezas eun dén anvet Jair, mestr ar zinagog. Koueza 'reas e-harz treid Jezuz hag e pedas anezañ stard da vond beteg e di.

⁴² N'e-noa nemed eur verh, war-dro daouzeg vloaz, ha dare da vervel. E-pad m'edo Jezuz o vond di, e voustre an dud anezañ beteg e zialana.

⁴³ Ha setu eno eur vaouez klañv gand ar c'holl gwad abaoe daouzeg vloaz. Dispignet he-doa he oll danvez gand medisined, hag hini e-béd n'e-noa gellet he farea.

⁴⁴ Tostaad a reas a-dreñv dezañ ha touch ouz bevenn e vantell, ha kerkent e paouezas da goll gwad.

⁴⁵ Jezuz a houlennas:

— « Piou e-neus touchet ouzin? »

O veza ma nahe an oll, e lavaras Pèr:

— « Mestr, an dud eo a zo ouz da voustra ha da eñka ».

⁴⁶ Med Jezuz a lavaras:

— « Unan bennag e-neus touchet ouzin; santet am-eus ez eus eet eun nerz er-mêz ahanon ».

⁴⁷ O weled e oa bet dizoloet, e teuas ar vaouez, en eur grenn, d'en em deuler e-harz e dreid. Konta 'reas dirag an oll perag he-doa touchet outañ ha penaoz e oa bet pareet kerkent.

⁴⁸ Neuze e lavaras dezi:

— « Va merh, gand da feiz out bet saveteet. Kerz e peoh ».

⁴⁹ O komz edo c'hoaz, pa zigouezas euz ti mestr ar zinagog eun dén da lavared:

— « Maro eo da verh, paouez da dregasi ar Mestr ».

⁵⁰ Med Jezuz hag e-noa klevet a lavaras da Jaïr:

— « Bez dienkreuz, kréd hebkén hag e vo saveteet ».

⁵¹ En em gavet en ti, ne lezas da vond tre gantañ nemed Pèr, Yann, ha Jakez, gand tad ha mamm ar hrouadur. ⁵² An oll a-vad a oa o ouela hag oh hircoudi warni. Jezuz a lavaras:

— « Na ouelit ket, n'eo ket maro, kousket eo! »

⁵³ Hag e reent goap anezañ rag gouzoud a ouient e oa maro. ⁵⁴ Med eñ, o kregi en he dorn, a halvas anezi:

— « Va merhig, dihun! »

⁵⁵ Hag he spered a zeuas dezi en-dro ha dioustu e savas. Jezuz a roas urz da rei dezi da zebri. ⁵⁶ Trefuet e oa he herent, ha difenn a reas outo lavared da zén ar pezh a oa erruet.

Pennad IX

MISION AN DAOUZEG ABOSTOL

¹O veza bodet an Daouzeg e roas galloud dezo ha beli war an oll zroug-sperejou ha galloud da barea ar hleñvejou.

²O has a reas da embann Rouantèlèz Doue ha da barea ar re glañv. ³ Hag e lavaras dezo:

— « Na gemerit netra ganeoh evid an hent, na baz, na sah, na bara, nag arhant. N'it ket da gaoud diou zae pep hini. ⁴ E ti pe di ma 'z it ennañ, chomit eno. Ahano eo ez eoh pelloh.

⁵ « Ma ne vez ket greet digemer deoh, en eur guitaad ar gêr-ze, c'hwi a hejo ar boutren diwar ho treid: Eun testeni a-eneb dezo e vo kement-se ».

⁶ Mond a rejont gand o hent, a gêriadenn da gêriadenn, en eur embann ar Helou Mad hag o para ar re glañv e pep leh.

HERODEZ HA JEZUZ

⁷ Herodez, an Tretrark, e-noe kelou euz ar pezh a dre-mene, hag e oe nehet. Rag darn a lavare e oa savet Yann a varo da veo.

⁸ Re all, e-noe en em ziskouezet Eliaz. Re all, e oa savet a varo da veo unan euz ar brofeted a-wechall.

⁹ Herodez a lavaras:

— «Yann... Me va unan am-eus laket e zibenna. Med piou eo hemañ a glevan kemend-all diwar e benn?»

Hag e klaske e weled.

DISTRO AN EBESTEL AR BARA KRESKET

¹⁰ Deuet en-dro e kontas an ebestel da Jezuz kement o-doa greet. O has a reas gantañ, hag eh en em dennas en eul leh distro diouz kostez eur gêr anvet Betsaida.

¹¹ Pa glevas an dud, ez ejont d'e heul. Jezuz a reas digemer dezo. Komz a ree dezo euz Rouantêlêz Doue ha para a reas ar re glañv.

¹² An deiz a oa war e ziskar; an Daouzeg a dosteas outañ hag a lavaras:

— «Grit d'an dud-se mond kuit, ma 'z aint d'ar bourhadennou ha d'ar hêriou tro-war-dro da glask lojeiz ha bevañs, rag amañ emañ en eul leh digenvez».

¹³ Jezuz a lavaras dezo:

— «Roit dezo, c'hwi hoh unan peadra da zebri».

Respont a rejont:

— «N'on-eus nemed pemp baraenn ha daou besk, nemed ha mond a rafem, ni on-unan, da brena peadra da zebri evid an oll dud-se».

¹⁴ Bez' e oa war-dro pemp mil gwaz anezo. Jezuz a lavaras d'e ziskibien:

— «Grit dezo azeza a hanter-kanchou».

¹⁵ Senti a rejont hag e lakjont an oll da azeza.

¹⁶ Jezuz a gemeras ar pemp baraenn hag an daou besk, hag en eur zevel e zaoulagad war-zu an neñv, o bennigas, a reas tammou anezo, hag o roas d'e ziskibien evid o ingala e-tre an oll.

¹⁷ Debrí a rejont oll ouz o naon, hag e oe dastumet an tammou chomet euz o dilerh: peadra da garga daouzeg paner.

PROFESION SANT PER

¹⁸ Eun devez m'edo Jezuz o pedi en eul leh distro, hag e ziskibien en-dro dezañ, e reas outo ar goulenn-mañ:

¹⁹ — «Hervez an dud, piou on-me?»

Hag int-i a respontas:

— «Yann Vadezour, pe hervez re all: Eliaz; evid re all c'hoaz: unan euz ar brofeted a-wechall, savet da veo».

²⁰ Jezuz a lavaras dezo:

— «Ha c'hwí, piou a lavarit ez on-me?»

Pèr a respontas:

— «Mesiaz Doue».

²¹ Neuze Jezuz a zifenn outo rust lavared kement-se da zén e-béd, ²² en eur lavared ouspenn:

— «Réd eo da Vab an Dén gouzañv kalz poaniou, beza distaolet gand Pennou-Braz ar bobl, ar Veleien-Vraz hag ar Skribed, beza laket d'ar maro ha sevel da veo d'an trede deiz».

EVID HEULIA JEZUZ

²³ Neuze e lavaras d'an oll:

— «An hini e-neus c'hoant dond d'am heul, dezañ trei kein dezañ e-unan, dougenn e groaz bemdez ha dond d'am heul,

²⁴ «Rag an neb a 'fello dezañ savetei e vuez he hollo, med an hini a gollo e vuez ablamour din a zaveteio anezi.

²⁵ «Da betra e talvez d'an dén gounid ar béd a-béz ma teu dezañ en em goll, pe ober gaou outañ e-unan.

²⁶ «Rag, an neb e-no bet méz ahanon hag euz va homzou, hennez e-no Mab an dén méz anezañ pa zeuio en e hloar hag e gloar an Tad hag an êlez.

²⁷ «E gwirionez m'hel lavar deoh, e-touez ar re a zo amañ, ez eus lod ha ne varvint ket a-raog beza gwelet Rouan-têlêz Doue» (20).

JEZUZ TREUZFURMET

²⁸ Eun eiz devez bennag war-lerh ar homzou-ze, e kemeras Jezuz gantañ Pèr, Yann ha Jakez, hag e pignas war ar menez'da bedi.

²⁹ Endra m'edo o pedi e teuas e zremm da jeñch hag e zillad da veza gwenn-kann ha lugernuz. ³⁰ Daou zén a oa o tivizoud gantañ: Moizez hag Eliaz. ³¹ Deuet da bara er hloar, e komzent euz ar himiad edo o vond da ober e Jeruzalem.

³² Pèr hag an daou all a oa maro gand ar hoant-kousked, med chomet e oant dihun, hag e weljont gloar Jezuz hag ive an daou zén en e-gichenn.

³³ Pa edo ar re-mañ o kuitaad Jezuz e lavaras Pèr dezañ:

— «Mestr, brao eo deom beza amañ, savom teir del-tenn: Unan evidout, unan all evid Moizez hag e-bén evid Eliaz».

Ne ouie ket petra 'lavare. ³⁴ Endra m'edo o komz evel-se, e teuas eur goabrenn da leda he skeud warno, hag e krogas aon enno oh antreal er goabrenn.

³⁵ Eur vouez a oe klevet o tond euz ar goabrenn. Lavared a re:

— «Hemañ eo va Mab muia karet, selaouit anezañ».

³⁶ E-pad ma komze ar vouez en em gavas Jezuz e-unan-penn. An diskibien a jomas peoh ha ne lavarjont netra da zén e-béd, d'ar mare-ze, euz ar pez o-doa gwelet.

AN DEN A OA AN DIAOUL ENNAN

³⁷ Antronoz, p'edont o tiskenn diwar ar menez, e teuas eun niver braz a dud en arbenn da Jezuz. ³⁸ Ha setu ma krias eun dén euz a greiz an dud:

— « Mestr, sell ouz va mab, me az péd, rag n'am-eus nemetañ a vugale. ³⁹ Awechou e vez dalhet gand eur spered. A-greiz pep kreiz e teu dezañ krial. E lakaad a ra da gaoud glizi gand an eonenn en e henou. Ha n'eo ket hep poan ez a kuit anezañ ouz e lezel torret e gorv.

⁴⁰ « Goulennet am-eus digand da ziskibien e argas, ha n'int ket bet deuet a-benn ».

⁴¹ Jezuz a respontas:

— « Rummad tud diskredig ha fallagr, beteg pe vare e vezin-me ganeoh hag e rankin ho kouzañv?... Digas da vab amañ! »

⁴² A-veh m'edo ar hrouadur o tond, ma oe stlapet d'an douar gand an diaoul hag hejet gand glizi. Med Jezuz a hourdrouzas ar spered hudur. Parea 'reas ar hrouadur, hag e renta d'e dad.

⁴³ Skoet e oe spered an oll gand braster Doue. O veza ma oant oll estlammet o weled kemend a ree, e lavaras Jezuz d'e ziskibien:

⁴⁴ — « Selaouit mad ar pezh emañ o vond da lavared deoh; Mab an Dén a zo o vond da veza lakeet etre daouarn an dud ».

⁴⁵ Med ne intentent ket ar gomz-se: dam-guzet e chome evito evid na zeufent ket da intent; ha ne gredent ket ober goulennou outañ war ar poent-se.

PIOU EO AR BRASA?

⁴⁶ Eur goulenn a zavas en o spered: daoust ha pehini anezo e oa ar brasa?

⁴⁷ Jezuz o houzoud petra 'zoñjent, a gemeras eur hrouadur, e lakeas en e-gichenn, ⁴⁸ hag a lavaras:

— « An neb a zigemer ar bugel-mañ em ano, am digemer, me va-unan, hag an neb am digemer a zigemer an hini e-neus va haset, rag an hini bihanna en ho-touez hennez eo ar brasa ».

⁴⁹ Neuze e komzas Yann:

— « Mestr, emezañ, gwelet on-eus eun dén oh argas an droug-sperejou en da ano, hag on-eus miret outañ d'henn ober ablamour ma ne zeu ket d'az heul, ganeom-ni ».

⁵⁰ Med Jezuz a respontas dezo:

— Na virit ket outañ, rag an neb n'ema ket a-eneb deoh a zo a-du ganeoh ».

EN HENT DA JERUZALEM

⁵¹ O veza ma tostae an deveziou ma tlee kuitaad ar béd-mañ, Jezuz a yeas en hent da vad war-zu Jeruzalem (21).

⁵² En e-raog e kasas kannaded. Ar re-mañ a yeas en eur vourhadenn Samaritaned evid reñka kemend a oa réd.⁵³ Med an dud ne 'fellas ket dezo e zigemer ablamour m'edo o vond da Jeruzalem (22).

⁵⁴ O weled kement-se, e ziskibien, Jakez ha Yann, a lavaras:

— « Aotrou, ma karez e lavarim d'an tan diskenn euz an neñv d'o distruja ».

⁵⁵ Jezuz a droas outo hag o gourdrouzas. ⁵⁶ Hag ez ejont d'eur vourhadenn all.

HEULIA JEZUZ DREIST PEP TRA

⁵⁷ E-pad o beaj e teu eun dén da lavared da Jezuz:

— « Me'yelo d'az heul e kement leh ma 'z i.

⁵⁸ Ha Jezuz ha respont dezañ:

— «Al lern o-deus o zoullou, laboused an neñv o neiziou; Mab an Dén a-vad n'e-neus leh e-béd da ziskuiza e benn».

⁵⁹ Da unan all e lavaras:

— «Deus d'am heul».

Hag hemañ a respontas:

— «Va lez da genta da vond da zebelia va zad.

⁶⁰ Ha Jezuz a respontas dezañ:

— «Lez ar re varo da zebelia ar re varo, Evidout-te, kerz da embann Rouantèlèz Doue» (23).

⁶¹ Unan all c'hoaz a lavaras dezañ:

— «Aotrou, mond a rin d'az heul, med a-raog, ro aotre din da lavared kenavo da dud va zi».

⁶² Ha Jezuz dezañ:

— «An neb a zell a-dreñv, goude beza kroget en alar, n'eo ket greet evid Rouantèlèz Doue».

Pennad X

AN DAOUZEG DISKIBL HA TRI-UGENT

¹ En amzer-ze, goude beza dibabet daouzeg ha tri-ugent euz e ziskibien, e kasas Jezuz anezo, daou-ha-daou, en e-raog, da vond e kement kêr ha kement leh e-noa e-unan da vond. ² Hag e lavaras dezo:

— «Braz eo an eost, med mederien a zo nebeud anezo. Pedit eta mestr an eost, ma kaso tud d'ober an eost.

³ — «It en hent; setu ma kasan ahanoh evel deñved e-touez ar bleizi. ⁴ Na gasit ganeoh na yalh, na sah, na boutou.

Na jomit ket en hent da zaludi dén e-béd. ⁵ E kement ti ma 'z eoh, lavarit da genta: Peoh d'an ti-mañ. ⁶ Ma 'z eus eno eun dén a beoh, e tiskenno ho peoh warnañ. Ma n'eus ket e teuio deoh en-dro.

⁷ « Chomit er memez ti. Debrit hag evit euz ar pez a vo roet deoh, rag gounid a ra al labourer e hobr. Arabad deoh mond euz eun ti d'egile,

⁸ « E kement kêr ma 'z eoh hag ho-po enni digemer vad, debrit ar pez a vo kinniget deoh, ⁹ roit ar pare d'ar re glañv a vo eno, ha lavarit d'an dud: Erruet eo beteg ennoh Rouantèlèz Doue.

¹⁰ « E kement kêr ma 'z eoh, ha ne vo ket greet digemer deoh, it war ar plasennou ha lavarit d'an dud: ¹¹ « Ar bouldrenn zokén, staget ouz on treid, a dennom kuit hag a lezom ganeoh, med intentit koulskoude: erru eo Rouantèlèz Doue.

¹² « M'hel lavar deoh: Da zeiz ar varn, ne vo ket barnet ken kriz Sodom hag ar gêr-ze.

¹³ « Gwas-a-ze dit Korazin! Gwas-a-ze dit Betsaida! (24) rag ma vije bet greet e Tir hag e Sidon ar burzudou a zo bet greet ennoh, o-defe cheñchet buez abaoe pell 'zo, gwisket gand sehier hag azezet war al ludu.

¹⁴ « Ya, da vare ar varn, evid Tir ha Sidon ne vo ket ken gwas hag evidoh.

¹⁵ « Ha te, Kafarnaom, ha savet e vezi beteg an neñv? Diskenn eo a ri beteg bro ar maro.

¹⁶ « An hini ho selaou, am zelaou. An hini a ya a-eneb deoh, a ya a-eneb din, hag an hini a ya a-eneb din, a ya a-eneb d'an hini e-neus kaset ahanon».

DISTRO LAOUEN AN DISKIBIEN

¹⁷ An daouzeg ha tri-ugent a zistroas, leun a levenez:

— « Aotrou, emezo, an diaouled o-unan a blég deom en da ano».

¹⁸ Jezuz a lavaras dezo:

— «O selled edon ouz satan o koueza euz an neñv evel eur flamm-tan. ¹⁹ Roet am-eus deoh galloud da daoler ho treid war an naered hag ar hruged, ha da drehi oll nerz an enebour heb na hellfe noazoud deoh.

²⁰ «Koulskoude, n'eo ket ablamour ma suj deoh ar sperejou eo ho-peus da veza laouen, med ablamour m'eo skrivet hoh anoïou en Neñvou».

AN AVIEL ROET DA ANAOUD D'AN DUD DISTER

²¹ D'an ampoent, gand al levenez, er Spered-Santel, e tridas kalon Jezuz hag e lavaras:

— «Da veuli a ran, va Zad, Aotrou an Neñv hag an douar, ablamour m'az-peus kuzet an traou-ze ouz an dud desket ha speredeg, ha m'az-peus o roet da anaoud d'ar re vianig. Ya, Tad, evel-se eo bet plijet ganit.

²² «Pep tra a zo bet roet din gand va Zad, ha dén e-béd ne oar piou eo ar Mab, nemed an Tad, na kennebeud piou eo an Tad, nemed ar Mab ha kement hini a zo plijet gand ar Mab henn diskleria dezañ».

²² O trei neuze war-zu e ziskibien, e lavaras dezo en o fart-o-unan:

— «Eüruz an daoulagad a wél ar pez a welit. ²⁴ Rag m'hel lavar deoh, stank eo bet ar brofeted hag ar rouaned o-defe karet gweled ar pez a welit, ha n'o-deus ket gwelet, klevet ar pez a glevit he n'o-deus ket klevet».

KARED DOUE HAG AN NESA

²⁵ Ha setu ma savas eun doktor war al Lezenn, hag evid klask e lakaad da nehi, e lavaras dezañ:

— «Mestr, petra 'm-eus da ober evid kaoud ar vuez peurbaduz?»

²⁶ Jezuz a respontas dezañ:

— «Al Lezenn, petra 'zo skrivet enni? Petra' lennez enni?»

²⁷ Hag eñ da lavared:

— «*Kared a ri an Aotrou da Zoue a-greiz da galon, gand da oll ene, da oll nerz, ha da oll spered, ha da nesa evel dout da unan*».

²⁸ — «Mad az-peus respontet, eme Jezuz dezañ, gra kement-se hag e vevi».

PARABOLENN AR SAMARITAN MAD

²⁹ Hemañ a-vad, o klask en em denna, a lavaras da Jezuz:

— «Ha piou eo va nesa?»

³⁰ Jezuz a respontas dezañ:

— «Eun dén a oa o tiskenn euz Jeruzalem da Jeriko. Koueza 'reas etre daouarn laeron, a denn digantañ kement e-noa, a wall-gas anezañ hag a ya kuit ouz e lezel hanter varo.

³¹ «Digouezoud a reas d'eur beleg diskenn dre ar memez hent; gweled a reas an dén hag e tremenas e-biou dezañ. ³² Evelse ive, eul leviad a zigouezas eno, a welas anezañ, hag a dremenas e-biou.

³³ «Med eur Samaritan o veaji a erruas d'e dro beteg ennañ, hag ouz e weled e oe gounezet gand an druez. ³⁴ Tostaad a reas da liena dezañ e houliou, en eur skuill warno eoul ha gwïn. Goudeze e lakeas anezañ war gein e loen, evid e gas d'an ostaleri hag eno eh ententas outañ.

³⁵ «Antronoz, e tennas daou bez arhant euz e yalh da rei d'an ostiz, en eur lavared: Ententit mad outañ ha ma vez brasoh ho mizou, me ho paeo pa vezin distro.

³⁶ «Pehini euz an tri-ze a zo bet nesa d'an dén kouezet etre daouarn al laeron?»

³⁷ Respont a reas an doktor:

— « An hini a zo bet trugarezuz en e-geñver ».

— « Kee, eme Jezuz, ha te ive gra eveldañ ».

MARTA HA MARI A VETANIA

³⁸ Jezuz oh ober hent gand e ebestel a antreas en eur gêriadenn, hag eur vaouez, anvet Marta, e zigemeraz en he zi.

³⁹ Bez' he-doa eur hoar anvet Mari, hag houmañ, azezet e-harz treid an Aotrou, a zelaoue e gomzou, ⁴⁰ e-keid ha ma labouré Marta war-dro an ti, prés warni. Chom a reas a-zav hag e lavaraz:

— « Aotrou, ha ne daolez ket evez e lez va hoar ahanon va unan da ober ar zervich? Lavar dezi dond d'am zikour ».

⁴¹ An Aotrou a-vad a respontas dezi:

— « Marta! Marta! nehet out ha kalz tregas a gemerez gand eur bern traou. N'eo ket réd kemend-all; unan hepken.

⁴² Mari he-deus dibabet al lodenn wella ha ne vo ket lamet diganti ».

Pennad XI

AR BATER

¹ Eun devez edo Jezuz o pedi. Pa oe echu gantañ e bedenn e lavaraz dezañ unan euz an diskibien:

— « Aotrou, desk deom pedi evel m'e-neus Yann-Vadezour desket d'e ziskibien ».

² Jezuz a lavaraz dezo:

« Pa vezoh o pedi, lavarit:

« Tad, da ano bezet santelleet,

« Da Rouantèlèz deuet deom.

³ « Ro deom bemdez bara or bevañs.

⁴ « Pardon deom or pehejou, rag ni a bardon ive d'ar re a zo dleourien deom.

« Ha mir ouzom da goueza e tentadur » (25).

AR MIGNON TORR-PENN

⁵ Lavared a ree c'hoaz:

— « Lakom e-nefe, unan bennag ahanoh, eur mignon hag a zeufe d'e gavoud e-kreiz an noz da lavared dezañ: « Va mignon, prest din teir varaenn (26), ⁶ rag eur mignon din o veaji, a zo erruet du-mañ, ha n'am-eus netra da ginnig dezañ », ⁷ Ha ma respontfe egile euz diabarz an ti:

— « Lez ahanon e peoh. Prennet eo bremañ an nor. Va bugale, koulz ha me, a zo eet da gousked; ne hellan ket sevel da rei bara dit ».

⁸ « Mad! m'hel lavar deoh, goude ma ne zavje ket da rei dezañ e houlenn dre vignoniaj, e savo koulskoude dre forz beza tregaset gantañ, hag e roio dezañ kement e-neus ezomm.

⁹ « Lavared a ran deoh; Goulennit hag e vo roet deoh, klaskit hag e kavoh, skoit hag e vo digoret deoh. ¹⁰ Rag an neb a houlenn a reseo, an neb a glask a gav, hag an neb a sko a vo digoret dezañ.

¹¹ « Peseurt tad, en ho-touez, ma teu e vab da houlenn eur pesk digantañ a rofe eun naer dezañ? ¹² Ha ma houlenn eur vi, daoust hag e rofe dezañ eur grug?

¹³ « Rag-se'ta, ma ouezit, c'hwi, daoust d'ar fall ma 'z oh, rei traou mad d'ho pugale, na pegement muioh ne roio ket ho Tad euz an Neñv ar Spered-Santel d'ar re her goulenno digantañ ».

JEZUZ HA BEELZBOUL

¹⁴ Oh argas eun diaoul mud edo Jezuz. Hogen, eur wech eet an diaoul er-mêz e stagas ar mud da gomz hag e oe estlammet an dud.

¹⁵ Hiniennou anezo, koulskoude, a lavaras:

— « Dre Veelzeboul, priñs an droug-sperejou, eo eh argas an diaoulou ».

¹⁶ Re all evid e amproui a houlenne digantañ eur zin euz an neñv. ¹⁷ Med eñ hag a anaveze o zoñjou a lavaras:

— « Kement rouantèlèz a zo dizunaniez enni heh-unan a ya da goll, hag an tiez enno a zizah an eil war egile. ¹⁸ Satan ive, mar d-eo disrannet dioutañ e-unan, penaoz e chomo e rouantèlèz en he-zav? Pegwir e lavarit eo dre Veelzeboul eh argasan an droug-sperejou. ¹⁹ Ha mar d-eo dre Veelzeboul eo eh argasan an droug-sperejou, ho tiskibien-c'hwi dre biou eh argasant anezo? Int-i neuze eta a vo ho parnerien.

²⁰ « Med mar d-eo dre halloud Doue eo eh argasan an droug-sperejou, neuze eo deuet Rouantèlèz Doue beteg ennoh.

²¹ « Pa vez eun dén kreñv, gand e armou, o tiwall e di, n'eus riskl e-béd evid e beadra. ²² Med ma tigouez unan all kreñvoh hag e-neus an treh warnañ, e lamo digantañ e armou a oa enno e fiziañs hag e lodenno e breiz.

²³ « An hini n'ema ket a-du ganin, a zo a-eneb din, hag an hini ne zastum ket ganin, ne ra nemed forani.

DISTRO AR SPERED HUDUR

²⁴ « Pa vez eet ar spered hudur er-mêz euz eun dén e kantre dre lehiou digenvez o klask diskuiz. Ha pa ne gav ket e lavar ennañ e-unan; « Distrei a ran d'am zi am-eus dilezet ».

²⁵ « Ha pa zigouez e kav an ti skubet ha kempennet, ²⁶ Neuze ez a da gerhad seiz spered all falloh egetañ. Antreal a reont hag ober ennañ o annez. Stad diweza an dén-ze a zo gwasoh eged an hini kenta.

AN EURUSTED WIRION

²⁷ Pa edo o prezeg evelse, e savas eur vaouez he mouez a-douez ar bobl da lavared:

— « Eüruz ar vamm he-deus da zouget hag he-deus da vaget! »

²⁸ Ha Jezuz respont :

— « Eüruz kentoh ar re a zelaou komzou Doue hag a vir anezo ».

BURZUD JONAZ

²⁹ O veza ma kreske an dud en-dro dezañ e lavaras :

— « Ar rummad-mañ a zo eur rummad fall ; goulenn a ra eur zin ! Med sin all e-béd ne vo roet dezañ nemed sin Jonaz.

³⁰ « Rag evel ma oe Jonaz eur zin evid tud Niniv, evel-se ive e vo Mab an Dén eur zin evid ar rummad-mañ.

³¹ « Da zeiz ar varn e savo rouanez ar Hreizteiz, gand gwazed ar rummad-mañ, hag e kondaono anezo, rag deuet eo euz ar penn all d'ar béd da zelaou furnez Salomon. Ahanta ! Brasoh eged Salomon a zo amañ.

³² « Da zeiz ar varn e savo gwazed Niniv gand ar rummad-mañ hag e kondaonint anezo, rag pinienn o-deus greet gand prezegèrèz Jonaz. Ahanta ! brasoh eged Jonaz a zo amañ.

³³ « Ne elum dén e-béd eul lamp evid e lakaad en eul leh kuz, med laket e vez war eur hantolor, evid ma welo ar sklêrijenn ar re a zeu en ti.

³⁴ « Lamp da gory eo da lagad. Mar d-eo yah da lagad, da gory a-béz a vo er sklêrijenn. Med mar d-eo klañv da lagad, da gory ive a vo en deñvalijenn. ³⁵ Evesa 'ta ma n'eo ket teñvalijenn ar sklêrijenn a zo ennout.

³⁶ « Mar d-ema da gory a-béz er sklêrijenn, hep tamm teñvalijenn e-béd, e vezo en e-béz er sklêrijenn, evel pa vez al lamp ouz da sklêrijenna gand e skéd ».

A-NEB AR FARIZIANED HA DOKTORED AL LEZENN

³⁷ O komz edo c'hoaz, pa zeuas eur Farizian d'e bedi da vond da leina d'e di, ha Jezuz antreal ha mond ouz taol.

³⁸ Souezet e oa ar Farizian o weled n'e-noa ket en em walhet a-raog ar préd. ³⁹ An Aotrou a lavaras dezañ :

— « Neuze, c'hwi, ar Farizianed, a nêta an diavêz euz an hanaf hag euz ar plad, med an diabarz ahanoh n'eus netra ennañ nemed laeroñsi ha fallagriez.

⁴⁰ « Tud diskiant ! Daoust hag an hini e-neus greet an diavêz n'e-neus ket greet ive an diabarz ?

⁴¹ « Roit kentoh en aluzenn ar pez a hellit ha neuze e vo glan pep tra ennoh.

⁴² « Med, gwas-a-ze deoh, Farizianed ! c'hwi hag a bae an diner diwar ar vent hag ar ruz ha kement a zav el liorz, hag a lez a gostez ar justis ha karantez Doue. An dra-mañ a oa da ober hep dilezel an dra-ze.

⁴³ « Gwas-a-ze deoh Farizianed ! C'hwi hag a glask ar plasou kenta er zinagogou hag a blij deoh beza saludet war ar plasennou.

⁴⁴ « Gwas-a-ze deoh ! C'hwi hag a zo heñvel ouz ar beziou na weler ket hag a gerz an dud warno hep gouzoud dezo ».

⁴⁵ Neuze, unan euz an doktored war al Lezenn a zavas e vouez :

— « O komz evel-se, warnom-ni ive e taolez disme-gañs »'. ⁴⁶ Eñ a respontas :

— « C'hwi ive, doktored war al Lezenn, gwas-a-ze deoh ! Lakaad a rit sammou ponner war diskoaz an dud, ha ne douchit ket hoh-unan ouz ar zammou-ze gand eur biz hepkén.

⁴⁷ « Gwas-a-ze deoh ! C'hwi hag a zav beziou kaer d'ar brofeted pa 'z eo ho tadou eo o-deus o lazet.

⁴⁸ Evel-se e roit testeni e kavit mad oberou ho tadou, pegwir int-i o-deus lazet ar brofeted ha c'hwi a zav beziou dezo.

⁴⁹ « Setu perag he-deus lavaret Furnez Doue heh-unan: Me a gaso dezo profeted hag ebestel; darn anezo a lazint, darn all a wall-gasint, ⁵⁰ evid ma vo goulennet kont digand ar rummad-mañ euz gwad an oll brofeted a zo bet skuillet abaoe penn kenta ar béd, ⁵¹ azaleg gwad Abel beteg hini Zakariaz a zo bet lazet etre an aoter hag ar zantual. Ya, m'hel lavar deoh, kont a vo goulennet digand ar rummad-mañ.

⁵² « Gwas-a-ze deoh Doktored war al Lezenn! rag m'ho-peus skrapet ganeoh alhwez ar ouiziègèz; c'hwi hoh-unan n'oh ket antreet enni, hag ar re a glaske antreal ho-peus miret outo ».

⁵³ Pa oa eet Jezuz er-mêz ahano, en em lakeas ar Skribed hag ar Farizianed d'e dregasi c'hwero, ha da ober goulennou ha goulennou outañ, ⁵⁴ o stigma pechou dezañ evid kaoud peadra d'e damall.

Pennad XII

KOMZ SKLER HAG HEB AON

¹ Ha neuze, pa oa en em vodet tud a vilierou beteg en em eñka an eil egile, e stagas da lavared d'e ziskibien:

— « Diwallit ouz goell ar Farizianed da lavared eo ar pilpouzèrèz. ² N'eus netra holoet ha ne vo dizoloet, ha n'eus netra guzet ha ne vo ket anavezet. ³ Ha kement ho-peus lavaret en deñvalijenn a vo klevet er sklêrijenn, splann, hag ar pez ho-po lavaret e plég ar skouarn, er hao, a vo embannet war an toennou.

⁴ « Hel lavared a ran deoh, c'hwi va mignoned, n'ho pet ket aon ouz ar re a laz ar horv, ha ne hellont, goude-ze, ober netra ouspenn.

⁵ « Mond a ran da ziskouez deoh ouz piou ho-peus aon da gaoud : An hini e-neus galloud, goude beza lazet, da daoler er Jehenn. Ya, m'hel lavar deoh, hennez eo ho-peus da gaoud aon razañ.

⁶ « Daoust ha ne vez ket gwerzet daou holvan evid daou wenneg, ha koulskoude, n'eus ket unan anezo hag a ve ankounac'heet gand Doue.

⁷ « Gwelloh c'hoaz : oll ho plevnnoù a zo kontet, aon e-béd eta, muioh e talvezit eged eur bern golveni.

⁸ « M'hel lavar deoh : An hini a zisklerio dirag an dud beza a-du ganin, Mab an Dén ive a zisklerio beza evitañ dirag Elez Doue. ⁹ Med an hini e-no va dianzavet dirag an dud a vo dianzavet dirag Elez Doue.

¹⁰ « An nep a lavaro eur gomz a-eneb Mab an Dén a vo pardonet dezañ, med an hini e-no gwall-gomzet a-eneb ar Spered-Santel (27), ne vo ket pardonet dezañ.

¹¹ « Pa vezoh kaset dirag ar zinagogou, ar pennadureziou hag an dud e karg, n'ho-po ket da gaoud nehamant evid gouzoud penaoz en em zifenn ha petra da lavared, ¹² rag ar Spered-Santel a zesko deoh, just d'ar poent, petra ho-po da lavared ».

MADOU AR BED-MAN HA MADOU AR BED ALL

¹³ A-douez ar bobl, e lavaras eun dén da Jezuz :

— « Mestr, lavar d'am breur rei din va lod euz on heritaj ».

¹⁴ Jezuz a respontas dezañ :

— « Piou e-neus va laket da varner warnoh ? ¹⁵ Diwallit, emezañ c'hoaz, ouz pep c'hoantègèz direiz : talvoudègèz buez eun dén, ha pa ve pinvidig, ne zeu ket euz e beadra ».

¹⁶ Hag e kontas dezo eur barabolenn :

¹⁷ — «Bez' e oa eun dén pinvidig. Gounidou braz e-noa greet gand e diègèz, hag e soñje ennañ e-unan: Petra 'rin, pa n'am-eus ket a blas da horrenn va eost?

¹⁸ «Setu, emezañ, petra 'rin: diskar va grignoliou ha sevel re all frañkoh, hag e tastumin enno va éd ha kement am-eus.

¹⁹ «Hag e lavarin d'am ene: Va ene, madou braz az-peus a-gostez evid kalz bloaveziou, bremañ eo dit diskuiza, debri, eva, ebati.

²⁰ «Med Doue a lavaras dezañ: Diskiant ma 'z out! En noz-mañ, end-eün, e vo goulennet da ene diganit, hag ar pez az-peus dastumet, da biou e vo?

²¹ «Evel-se ema kont gand an hini a zastum madou evitañ e-unan, e-leh sevel da binvidig dirag Doue».

PROVIDANS DOUE

²² «Setu perag, emezañ d'e ziskibien, e lavar an deoh: N'ho-pet ket neh gand ho puez, da houzaou petra ho-po da zebri, na gand ho korv, da houzaou penaoz e vo gwisket. ²³ Rag muioh eged ar boued eo ar vuez, hag ar horv muioh eged ar wiskamant.

²⁴ «Sellit ouz ar brini: Ne hadont na ne vedont, n'o-deus na kao na solier, ha Doue a vag anezo. Na pegement muioh eged al laboused ne dalvezit-c'hwi ket.

²⁵ «Piou ahanoh, diwar goust neh, a hell hirraad e vuez an disterra? ²⁶ Mar d-oh eta ken dihalloud war gennebeud a dra, perag kaoud nehamant gand ar peur-rest?

²⁷ «Sellit ouz al lili; n'ouzont na neza na gwea, ha m'hel lavar deoh: Salomon e-unan e-kreiz e hloar n'eo bet biskoaz gwisket evel unan anezo.

²⁸ «Ma teu Doue da wiska evel-se, war ar-mêz, ar yeot a zo aze hirio hag a vo taolet en tan warhoaz, na pegement muioh ne raio ket evidoh, tud laosk en ho feiz.

²⁹ « C'hwi eta, na glaskit ket petra 'zebroh na petra 'evoh, ha n'en em jalit ket. ³⁰ An oll draou-ze, payaned ar béd-mañ o hlask heb ehan. Evidoh-c'hwi, ho Tad a oar ho-peus ezomm anezo. ³¹ Klaskit kentoh e Rouantèlèz hag an dra-ze a vo roet deoh ouspenn.

³² « N'ho-pet ket aon, tropell bihan, rag plijet eo bet d'ho Tad rei deoh e Rouantèlèz.

³³ « Gwerzit ar pez a zo deoh ha roit anezañ en aluzenn. Grit evidoh ilhier ha na uzint ket, eun teñzor hag a bado en Neñvou: Eno, na laer na dosta, na tartouz na grign, ³⁴ rag el leh m'ema ho teñzor ema ive ho kalon.

BEZA PREST EVID DISTRO AR MESTR

³⁵ « Bezit ho kouriz en-dro d'ho kroaz-lez (28) hag ho lampou war-elum. ³⁶ Bezit heñvel ouz tud o hortoz o mestr pa zistroio euz ar fést, evid digeri dezañ kerkent ha ma tigouezo ha ma skoio. ³⁷ Eüruz ar zervicherien a vo kavet war-veill gand o mestr pa zistroio. E gwirionez m'hel lavar deoh, lakaad a raio e houriz hag ober dezo azeza ouz taol hag o zervicha an eil goude egile.

³⁸ « Ha ma teu d'an eil beilladenn pe d'an drede, ha m'o hav evel-se, eüruz ar re-ze.

³⁹ « Gouzoud a rit er-vad, ma ouezfe mestr an ti da béd eur e teufe al laer, e chomfe da veilla ha ne lezfe ket toulla e di.

⁴⁰ « C'hwi ive, bezit prést, rag dond a ray Mab an Dén d'an eur na zoñjit ket».

⁴¹ Neuze e lavaras Pèr:

— « Evidom-ni eo e lavarez ar barabolenn-se, pe evid an oll? »

⁴² An Aotrou a respontas:

— « Pehini eo ar merour feal ha fur a vo laket gand e vestr e penn e zervicherien, evid rei da bep hini, d'ar houlz, e

lod gwiniz? ⁴³ Ya, eüruz ar zervicher-ze a vo kavet gand e vestr oh ober evel-se. ⁴⁴ E gwirionez m'hel lavar deoh, lakaad a raio anezañ da vestr war e oll vadou.

⁴⁵ « Med, ma lavar ar zervicher-ze ennañ e-unan: Dale ra va mestr da zond, ha m'en em laka da skei gand ar vevelien hag ar mitizien, ha da zebri, ha da eva, da d'en em vezvi; ⁴⁶ mestr ar zervicher-ze a erruo d'an devez n'ema ket o hortoz, ha d'an eur ne oar ket, hag e raio skourjeza anezañ hag e lakaad e-touez an dud difeiz.

⁴⁷ « Ar zervicher-ze hag a anavez bolontez e vestr, ha n'e -no koulskoude prepalet netra, na greet hervez e zivizou, a vo kastizet.

⁴⁸ « Med an hini ne anavez ket ar volontez-se, hag e-no meritet kastiz, hennez n'e-no ket ken braz kastiz. Kalz a vo goulennet digand an hini e-neus resevet kalz, ha seul vui e vo bet fiziet en unan bennag, seul vui e vo goulennet digantañ.

JEZUZ DIRAG E BASION

⁴⁹ « Deuet on da zigas an tan (29) war an douar, ha pegement e karfen e ve krog a-benn bremañ.

⁵⁰ « Bez' ez eus eur vadeziant hag am-eus c'hoaz da reseo, ha pegen enkrezet on beteg ma vo kaset kement-se da benn.

PENN-ABEG A ZIZUNANIEZ

⁵¹ « Kredi a ra deoh ez on deuet da lakaad ar peoh war an douar? N'eo ket, a lavaran deoh, med kentoh an dizunaniez.

⁵² Rag azaleg bremañ, en eun tiègèz a bemp dén e vo dizunaniez etrezo: tri a-eneb daou, daou e-eneb tri; disparti a vo: ⁵³ an tad a-eneb d'e vab, ar mab a-eneb d'e dad, ar vamm a-eneb d'he merh, ar verh a-eneb d'he mamm; ar vamm-gaer a-eneb d'he merh-kaer, ar verh-kaer a-eneb d'he mamm-gaer».

SINOÙ AN AMZER

⁵⁴ Lavared a reas c'hoaz d'an dud:

— « Pa welit eur goumoulenn o sevel diouz tu ar huzheol, e lavarit diouztu: ar glao a zo o tond, hag evel-se e tigouez.

⁵⁵ « Ha pa welit an avel o c'houeza diouz tu ar hreisteiz, e lavarit: tomm-bah e vo, ar pezh a zigouez.

⁵⁶ « Sperejou faoz ahanoh! Gouzoud a rit anaoud doa-reou an douar hag an oabl. Hag an amzer a vremañ penaoz n'ouzoh ket he anaoud?

⁵⁷ « Perag eta ne brizit ket, drezoh hoh-unan, ar pezh a zo just? ⁵⁸ Evel-se pa 'z ez gand da enebour da gavoud ar penn-rener, klask an tu, en hent, d'en em gleved gantañ gand aon na vefes sachet gantañ dirag ar barner, ha laket gand ar barner etre daouarn ar gward, ha taolet er prizon gand ar gward.

⁵⁹ « Hel lavared a ran dit: Ken n'az-po paet beteg ar gwenneg diweza, ne 'z i ket er-mêz ».

Pennad XIII

OBÉR PINIJENN

¹ En amzer-ze e teuas tud da zigas kelou da Jezuz (30) diwar-benn ar Halileaned e-noa Pilat mesket o gwad gand hini o zakrifisou. ² Jezuz a respontas dezo:

— « Ha kavoud a ra deoh e oa ar Halileaned-se brasoh peherien eged an oll dud all a Vro-Halilea, ablamour m'o-deus gouzañvet eur hastiz ken garo? ³ Ne oant ket, m'hel lavar deoh. Med ma ne jeñchit ket buez, c'hwi oll a yelo da goll eveldo.

⁴ «Hag an triweh-se a zo bet kouezet warno tour Siloe hag a zo bet lazeta, ha kavoud a ra deoh e oant kablusoh eged an oll dud all a zo o chom e Jeruzalem? ⁵ Ne oant ket, m'hel lavar deoh. Med ma ne rit ket pinijenn, c'hwi oll a yelo da goll eveldo.

AR WEZENN FIEZ DIFROUEZ

⁶ Jezuz a lavaras c'hoaz ar barabolenn-mañ:

— «Eur wezenn 'fiez e-noa eun dén en e winieg. Dond a ra da glask frouez enni ha ne gav ket. ⁷ Hag e lavar da baotr ar winieg:

— «Setu tri bloaz 'so ma teuan da glask frouez er wezenn'fiez-mañ ha ne gavan ket. Trohit anezi eta; d'ober petra e chom da zuna an douar?»

⁸ Egile a respontas:

— «Mestr, lezit anezi c'hoaz er bloaz-mañ; amzer din da balad ha da lakad teil en-dro dezi. ⁹ Ken buan all e roio frouez hiviziken. Ma ne ro ket c'hwi a droho anezi.

PAREANS EUR VAOUENZ D'EUN DEIZ SABAT

¹⁰ Jezuz a oa o kelenn en eur zinagog d'eun deiz sabat. ¹¹ War al leh e oa eur vaouez dalhet gand eur spered a waske anezi abaoe triweh vloaz. Daoubleget e oa ha ne helle ket sevel plom he hein. ¹² P'he gwelas, Jezuz he galvas hag a lavaras dezi:

— «Maouez, dizammet out euz da zroug».

¹³ Astenn a reas e zaouarn warni. Kerkent e savas sonn en he-zav hag en em lakeas da renta gloar da Zoue.

¹⁴ Mestr ar zinagog, droug ennañ, en abeg m'e-noa roet ar pare d'eun deiz sabat, a lavaras d'ar bobl:

— «C'hweh devez a zo d'al albour, d'an deziou-ze eo deoh eta dond da glask ar pare, ha n'eo ket d'an deiz sabat».

¹⁵ An Aotrou a respontas dezañ:

— «Sperejou faoz! Daoust ha pep hini ahanoh ne zistag ket e ejenn pe e azen diouz e laouer, da zeiz ar zabat, evid o has d'an dour? ¹⁶ Hag ar vaouez-se merh da Abraham, e dalh satan abaoe triweh vloaz, daoust ha n'eo ket d'an deiz sabat 'oa dleet terri heh ereou?»

¹⁷ War ar homzou-ze e oe karget e enebourien a vez hag an oll a oe leun a levez gand an oll vuzudou a ree.

PARABOLENN AR HREUNENN ZEZO

¹⁸ Lavared a reas neuze:

— «Ouz petra eo heñvel Rouantèlèz Doue? Ouz petra komparachi anezi? ¹⁹ Heñvel eo ouz eur hreunenn zezo, e-neus eun dén kemeret hag hadet en e liorz. Kreski a ra ha dond da wezenn, ha laboused an neñv a ra o neiziou en he skourrou».

PARABOLENN AR GOELL

²⁰ Lavared a reas c'hoaz:

— «Ouz petra heñvellaad Rouantèlèz Doue? ²¹ Heñvel eo ouz ar goell a gemer eur vaouez d'e veska gand tri vuzuliad bleud ken a zeu an toaz a-béz da hoï».

AN NOR STRIZ

²² Jezuz a dremene, en eur gelenn, dre gêriou ha bourhadennoù, en hent da vond da Jeruzalem.

²³ Eun dén a houlennas outañ:

— «Aotrou, daoust ha rouez e vo an dud salvet?»

²⁴ Eñ a lavaras:

— «Poagnit da antreal dre an nor striz, rag m'hel lavar deoh e vo kalz o klask mond tre ha ne hellint ket:

²⁵ « Pa vo savet mestr an ti da brenna an nor, ha c'hwi er-mêz, ma skoit war an nor en eur lavared :

— « Aotrou, digor deom ! »

Ha p'e-no respontet deoh :

— « N'ouzon ket a beleh oh ».

²⁶ Neuze c'hwi 'lavaro :

— « Debret hag evet on-eus ganit ha te az-peus kelennet war or plasennou ».

²⁷ Med eñ a responto :

— « Hel lavared a ran deoh, n'ouzon ket a beleh ez oh, it pell diouzin, c'hwi oll, mevelien an droug ».

²⁸ « Eno e vo daelou ha skriñnadeg dent, pa weloh Abraham, Izaag ha Jakob hag an oll brofeted, e Rouantêlêz Doue, e-keid ha ma vezoh-c'hwi taolet er-mêz. ²⁹ Euz ar zao-heol, beteg ar huz-heol, euz an hanter-norz hag euz ar hreisteiz e teuor da gemered plas ouz taol, e Rouantêlêz Doue. ³⁰ Ya, lod euz ar re ziweza a vo da genta, ha lod euz ar re genta a vo da ziweza ».

AL LOUARN HERODEZ

³¹ D'ar maze-ze, eun nebeud Farizianed a dosteas hag a lavaras dezañ :

— « Kerz a-hann, rag Herodez a 'fell dezañ laza ahanout ».

³² Respont a reas dezo :

— « It da lavared d'al louarn-ze (31) : Setu, argas a ran an droug-sperejou, paraa ar re glañv, hirio ha warhoaz, ha d'an trede deiz eo echu.

³³ « Hirio a-vad ha warhoaz hag en deiz warlerh e rankan derhel gand va hent, rag eur profet ne hell mervel nemed e Jeruzalem ».

JERUZALEM! JERUZALEM!

³⁴ « Jeruzalem! Jeruzalem: Te hag a laz ar brofeted hag a stlap mein ouz ar re a vez kaset dit, na péd kwech eo fellet ganin dastum da vugale, evel ma tastum eur vamm-yar he neiziad dindan he diwaskell, ha n'eo ket bet fellet ganit. ³⁵ Mad, lezet e vo ganeoh ho ti, hel lavared a ran deoh, n'am gweloh mui ken a zeuy an deiz ma lavaroh:

« Benniget ra vo, en ano an Aotrou, an hini a zo o tond ».

Pennad XIV

EUR BAREANS ALL DA ZEIZ AR ZABAT

¹Eun devez sabat e oa eet Jezuz da breja da di unan euz pennou braz ar Farizianed, hag ar re-mañ ne dennent ket o daoulagad diwarnañ.

² Ha setu ma oa dirazañ eun dén klañv gand an dourgoeñv.

³ Jezuz a lavar d'ar Farizianed ha d'ar Skribed:

— « Daoust hag aotre a zo da barea d'eun deiz sabat pe n'eus ket? »

⁴ Med chom e rajont dilavar. Neuze Jezuz a gemeras ar hlañavour, e bareas hag a gasas anezañ en e hent. ⁵ Hag e lavaras dezo:

— « Pehini ahanoh, ma teu e vab pe e ejenn da goueza en eur puñs, ne denno ket anezañ er-mêz raktal ha goude ma vefe d'eun deiz sabat? »

⁶ Respont e-béd ne helljont rei da gement-se.

PA VEZOH PEDET DA LEINA

⁷ O weled e kemere an dud a oa pedet ar plasou kenta, e lavaras dezo ar barabolenn-mañ:

⁸ — « Pa vezez pedet gand unan bennag d'eul lein vraz, ne d-a ket da gemered ar plas kenta, gand aon na vefe da zond unan bennag uhelloh egedout, ⁹ ha na zeufe an hini e-neus ho pedet ho taou da lavared dit: « Ro da blas da hemañ », hag ez afes, méz warnout, d'ar plas diweza.

¹⁰ « Med pa vezi pedet, kemer ar plas diweza, ha pa zigouezo an hini e-neus da bedet, e lavaro dit:

« Mignon, sav uhelloh », hag e vezo eun enor evidout dirag an oll gouvidi all.

¹¹ « An neb en em uhella a vo izelleet, an neb en em izella a vo uhelleet ».

¹² Jezuz a lavaras ive d'an hini e-noa pedet anezañ:

— « Pa bedez da verenna pe da goania, na béd ket da vignoned na da vreudeur na da gerent, na da amezeien binvidig, gand aon da veza pedet ganto d'o zro, hag evel-se digollet.

¹³ « Pa rez lein vraz, péd kentoh peorien, tud vahagnet, tud kamm, tud dall, ¹⁴ hag e vezi eüruz o veza ma n'hellont ket ober dit kemend-all. Digollet e vezi pa zavo an dud just a varo da veo ».

DIWARBENN AR GOUVIDI HAG A NAH DOND

¹⁵ O kleved kement-se, e lavaras da Jezuz unan euz ar gouvidi:

— « Eüruz an hini e-no perz er préd e Rouantèlèz Doue ».

¹⁶ Lavared a reas dezañ:

— « Eun dén a oa o vond da rei eur goan vraz hag a bedas kalz a dud. ¹⁷ Da vare ar préd e kasas e zervicher da lavared d'ar gouvidi:

— « Deuit ! Prést eo bremañ pep tra ».

¹⁸ « Int a-vad en em lakeas, oll a-unan, da glask digareziou. An hini kenta a lavaras dezañ :

— « Eur park am-eus prenet, hag e rankan mond d'e weled. Plijet ganit va digarezi »

¹⁹ Unan all a lavaras :

— « Pemp koublad ejenned emañ o nevez prena, hag ez an da êsaea anezo. Plijet ganit va digarezi ».

²⁰ Unan all a lavaras c'hoaz :

— « Nevez dimezet on, setu perag ne hellan ket mond ».

²¹ « Deuet en-dro, ar zervicher a gontas ar responchou-ze d'e vestr. Neuze ar mestr, eet e kounnar, a lavaras d'ar zervicher :

— « Kee buan dre plasennou ha ruiou kêr, ha digas amañ ar re baour, ar re ampechet, ar re zall, ar re gamm ».

²² Ar mevel a zeuas da lavared :

— « Greet am-eus ar pezh az-poa gourhemennet hag e chom plas c'hoaz.

²³ Neuze e lavaras an Aotrou d'e zervicher :

— « Kee dre an henchou, a-hed ar girzier, ha pouez war an dud da ober dezo antreal evid ma vo leun va zi. ²⁴ Rag hel lavared a ran deoh : Nikun euz ar re a oa bet pedet n'e-no an tañva euz va bañvez ».

TREI KEIN DA GEMENT A GARER

²⁵ Eur bern tud a ree hent gand Jezuz. Trei a reas war-zu enno ha lavared dezo :

²⁶ « An neb a zeu davedon hep kared ahanon muioh eged e dad, e vamm, e wrég, e vugale, e vreudeur ha c'hoarezed, hag e vuez e-unan zokén, ne hell ket beza diskibl din.

²⁷ « An hini ne zoug ket e groaz ha ne zeu ket d'am heul ne hell ket beza diskibl din ».

TREI KEIN D'E OLL VADOU

²⁸ « Piou ahanoh, ma fell dezañ sevel eun tour, ne azez ket da genta da ober ar gont euz ar mizou, da weled ha peadra a-walh e-neus da gas al labour da benn, ²⁹ gand aon n'hellfe ket peur-ober e labour, goude beza greet an diazez, ha na zeufe ar re a welfe kement-se da ober goap anezañ :

³⁰ « Setu aze unan, e-neus kroget da zevel eun tour, hag n'e-neus ket gellet echui! »

³¹ « Pe c'hoaz : Peseurt roue, o vond da ober brezel d'eur roue all, ha ne azez ket da genta, evid gweled ha gouest eo, gand deg mil dén, da zelher penn ouz an hini a zeu dezañ gand ugent mil. ³² Ma n'eo ket gouest, e-keid ha m'ema egile pell c'hoaz, e kas kannaded davetañ da houlenn ober ar peoh.

³³ « Evel-se ive, an nep piou bennag ahanoh ha ne zilez ket kement e-neus, n'hell ket beza diskibl din ».

³⁴ « Eun dra vad eo an holen, med ma teu an holen da goll e zaour, gand petra e vo roet dezañ en-dro? ³⁵ N'eo mui mad nag evid an douar nag evid an teil. Taolet e vez er-mêz. Neb e-neus diskouarn da glevet ra glevo ».

Pennad XV

TEIR BARABOLENN AN DRUGAREZ

¹ Ar bublikaned hag ar beherien a veze oll o klask mond tost da Jezuz evid e zelaou. ² Ar Farizianed hag ar Skribed a hrosmole, en eur lavared :

— « Hennez a ra digemer vad d'ar beherien hag e zèbr gantó ».

³ Neuze e lavaras Jezuz dezo ar barabolenn-mañ :

AN DANVAD DIANKET

⁴ — « Píou ahanoh hag e-neus kant dañvad, ma teu dezañ koll unan anezo, na lez ket an naonteg ha pevar-ugent all er goueleh, evid mond da glask an hini dianket, beteg m'e-no e gavet.

⁵ « Ha p'e-neus e gavet, e lak anezañ gand levez war e ziskoaz, ⁶ hag erruet er gêr e halv e vignoned hag e amezeien, hag e lavar dezo :

« Bezit laouen ganin, rag kavet am-eus an dañvad a oa kollet ».

⁷ « Evel-se, e lavaran deoh, e vo brasoh levez en neñv, evid eur peher hag e-neus cheñchet buez eged evid naonteg ha pevar-ugent (32) dén just ha n'o-deus ket ezomm da jeñch buez ».

AR PEZ ARHANT KOLLET

⁸ — « Pe c'hoaz, peseurt maouez dezi dég pez arhant, ma tigouez dezi koll unan, ne elum ket a houlou, ha ne skub ket he zi, ha ne glask ket gand evez beteg m'he-do e gavet.

⁹ « Ha p'he-deus e gavet, e halv he mignonezed hag he amezegézéd, hag e lavar dezo :

— « Bezit laouen ganin, rag kavet am-eus ar pez arhant am-boa kollet ».

¹⁰ « Evel-se, m'hel lavar deoh, e vo levez e-touez êlez Doue, evid eur peher hepkén hag a zeu keuz dezañ ».

AR MAB FORAN (33)

¹¹ Jezuz a lavaras c'hoaz :

— « Eun dén e-noa daou vab,¹² Ar yaouanka a lavaras d'e dad :

— «Tad, ro din ar pez a dle dond din d'am lod».

«Hag an tad a roas e lod da bep hini.

¹³ «Eun nebeud deveziou goude, dastumet gantañ e oll beadra, e kerz ar mab yaouanka d'eur vro, pell diouz ar gêr, hag eno e tispign e arhant o veva en dizurz.

¹⁴ «Goude m'e-noa foranet kement e-noa, e teuas eur gernez vraz er vro, hag eñ ive a gouezas en diénéz. ¹⁵ Réd e oe dezañ mond da vevel gand eun aotrou euz ar vro, hag hemañ e gasas war ar-mêz da ziwall ar moh.

¹⁶ «C'hoant a-walh e-neveze da leunia e gov gand ar hlosou a zebre ar moh, med dén e-béd ne roe dezañ.

¹⁷ «Neuze e soñjas ennañ e-unan: nag a vevelien e ti ya zad o-deus bara kement ha ma karont, ha me 'zo amañ o vervel gand an naon! ¹⁸ Sevel a rin ha mond da gavoud va zad, hag e lavarín dezañ: Tad, pehet am-eus a-eneb an neñv hag a-eneb dit. ¹⁹ N'on ket din mui da veza anvet da vab; kemer ahanon evid unan euz da vevelien».

²⁰ «Sevel a reas eta ha mond daved e dad. Pell edo c'hoaz pa welas e dad anezañ. E galon leun a druez, e redas an tad da vriata e vab ha da bokad dezañ.

²¹ «Ar mab neuze a lavaras:

— «Tad, pehed am-eus a-eneb an Neñv hag a-eneb dit. N'on ket din mui da veza anvet da vab».

²² «Med an tad a lavaras d'e vevelien:

— «Buan, it da gerhad kaerra dillad a zo da lakaad dezañ, gand eur walenn war e viz ha boutou en e dreid. ²³ Digasit al leue lard ha lazit anezañ. Debrom ha greom fést a joa. ²⁴ Rag va mab amañ a oa maro hag a zo deuet beo en-dro. Kollet e oa ha setu m'eo kavet».

«Kregi 'reont eta d'ober fést.

²⁵ «Ar mab hena, vid-se, a oa er park. En eur zond d'ar gêr, dre ma tosta ouz an ti e klév trouz soniou ha dañsou.

²⁶ Gelter a ra unan euz ar vevelien hag e houlenn outañ petra 'zo a nevez.

²⁷ — «Da vreur, eme ar mevel, a zo erruet, ha da dad e-neus laket laza al leue lard, o veza m'e-neus e gavet yah ha dibistig».

²⁸ «E kounnar ruz ez eas ar mab hena, ha ne 'felle ket dezañ mond tre. Ranket e-neus an tad dond er-mêz da bourchu warnañ. ²⁹ Med eñ a respont dezañ:

— «Setu nousped a vloavez a zo emañ en da zervich, hep dizenti ouzit morse, ha gwech e-béd n'ez-peus roet din eur havrig d'ober fést gand va mignonned. ³⁰ Med kerkent ha m'eo deuet en-dro ar mab-se dit, hag e-neus dispignet e beadra gand merhed diroll, ez-peus lazet evitañ al leue lard».

³¹ An tad a lavaras dezañ:

— «Va mab, te 'zo dalhmad ganin ha kement tra ameus a zo dit. ³² Med réd e oa ober fést ha beza laouen, pegwir da vreur a oa maro hag a zo deuet beo en-dro, kollet e oa, ha kavet eo».

Pennad XVI

AR MEROUR DISLEAL

¹ Jezuz a lavare ive d'e ziskibien:

— «Bez' e-noa eun dén pinvidig eur merour, tamallet dezañ forani e vadou.

² «Gelter a reas anezañ d'e gavoud hag e lavaras dezañ:

— «Petra 'glevan diwar da benn? Rent kont din euz da verèrèz, rag hiviziken ne helli mui beza va merour».

³ «Neuze e lavaras ar merour outañ e-unan:

— «Petra 'rin pa lam va mestr va harg diganin? Da labourad douar? Nerz n'am-eus ket, ha méz am-befe o vond

da glask an aluzenn. ⁴ Gouzoud a ran petra 'rin evid ma vo tud da rei digemer din, p'am-bo kollet va harg.

⁵ «Gelver a reas d'e gavoud, hini hag hini, ar re a oa dleour d'e vestr. D'ar henta e lavaras:

— «A begement out dleour d'am mestr?»

⁶ «Hemañ a respontas:

— «A gant barillad eoul».

«Ar merour a lavaras dezañ:

— «Kemer da baper-diskarg, azez, ha skriv hanterkant».

⁷ «Goude e lavaras da unan all:

— «Ha te, a begement out dleour?»

— «A gant muzuliad gwiniz» emezañ.

— «Kemer da baper, eme ar merour, ha skriv: pevarugent».

⁸ «Hag ar mestr a veulas ar merour displeal evid e ijin (34); rag bugale ar béd a zo edennoh en o aferiou kenetrezo eged bugale ar sklêrijenn. ⁹ Ha me 'lavar: Grit mignoned deoh gand arhant an displealded, evid ma helloh, pa zeuio da van-koud, beza digemeret mad ganto, en teltennou peurbaduz.

¹⁰ «An neb a heller kaoud fiziañs ennañ e traou dister, a heller kaoud fiziañs ennañ e traou braz, hag an neb a zo displeal e traou dister, a zo ken displeal all en traou braz.

¹¹ «Ma n'oh ket bet din a fiziañs gand arhant an displealded, piou a fizio ennoh ar gwir binvidigeziou?

¹² «Ha ma n'oh ket bet din a fiziañs gand madou a zo da dud all, piou a roio deoh ar pez a zo deoh hoh unan?

¹³ «Ne hell servicher e-béd servicha daou vestr, pe e-no kasoni ouz unan ha karantez ouz egile, pe en em stago ouz unan, hag e tisprijo egile. Ne hellit ket servicha Doue hag an arhant».

¹⁴ Ar Farizianed, tud troet gand an arhant, a zelaoue an oll draou-ze, hag a ree goap anezañ. ¹⁵ Jezuz a lavaras dezo:

— «C’hwi a glask tremen evid tud just dirag ar fe all, med Doue a anavez ho kalonou: Ar pezh a zo uhel evid an dud a zo da veza disprijet hervez Doue.

¹⁶ «Al Lezenn hag ar brofeted a ya beteg Yann, med abaoe, Kelou Mad Rouantêlêz Doue a zo embannet, ha pep dén a laka e boan evid antreal ennañ.

¹⁷ «An neñv hag an douar a dremeno êsoh eged na gouezo an disterra lizerennig euz al Lezenn».

DIWAR-BENN AN DIMEZI

¹⁸ «Kement dén a gas kuit e wrég hag a zimez da unan all a zo avoultrer, hag an hini a zimez da eur wrég kaset kuit gand he gwaz a zo avoultrer».

AR PINVIDIG FALL HAG AR PAOUR-KEZ LAZAR

¹⁹ «Bez e oa eun dén pinvidig hag a veze gwisket gand mezer moug ha lin fin; keusteurenn vad dreist a veze gantañ bemdez.

²⁰ «Bez’ e oa ive eur paour, anvet Lazar, a veze e toull an nor, war e hourvez, goloet e gory a houliou. ²¹ C’hoant e-nefe bet da derri e naon gand ar pezh a goueze diouz taol ar pinvidig, med ar chas eo a zeue da lipad e houliou.

²² «Ar paour a hoarvezas dezañ mervel hag e oe douget gand an Elez war galon Abraham. Ar pinvidig a varvas ive hag e oe laket er béz.

²³ «O veza e bro an anaon, e savas e zaoulagad, ha gwasket gand an tourmañchou, e welas euz a bell Abraham ha Lazar en e-gichenn. ²⁴ Hag eñ da grial:

— «Abraham, va zad, bez truez ouzin; kas Lazar da zouba penn e viz en dour evid distana din va zeod rag poaniou kriz a ziwaskan en tan-flamm-mañ».

²⁵ « Abraham a respontas :

— « Va mab, bez soñj ez-peus resevet da lod eürusted e-pad da vuez, ha Lazar e lod a boaniou, med bremañ ez eo frealzet ha te poaniet.

²⁶ « Ouspenn-ze, etre c'hwi ha ni ez eus evid atao eun islonk don, kén na hell ket tremen, a-hann davedoh, ar re a garfe henn ober, na tremen alese davedom ».

²⁷ — « Neuze, tad, eme ar pinvidig, goulenn a ran diganit kas anezañ da di va zad ; ²⁸ pemp breur am-eus, evid rei dezo da houzoud penaoz ema kont, ha ma ne zeuint ket, int-i ive, el leh-mañ a dourmañchou.

²⁹ « Abraham a respontas :

— « Bez' o-deus Moizez hag ar brofeted, n'o-deus nemed o zelaou ».

³⁰ — « N'eo ket, Abraham va zad, eme adarre ar pinvidig, med, ma 'z a unan bennag euz a douez ar re varo e raint pinienn ».

³¹ Abraham a respontas dezañ :

— « Ma ne zelaouont na Moizez nag ar brofeted, ha goude ma savfe unan bennag a-douez ar re varo, ne gredfent ket ».

Pennad XVII

AR WALL-SKWER

¹ Jezuz a lavaras d'e ziskibien :

— « Ne heller ket ober na vefe ket a skweriou fall, med malloz d'an neb a zo penn-kaoz.

² « Gwelloh e vefe dezañ e vije staget eur mên milin ouz e houzoug hag e vefe stlapet er mor, kentoh eged beza eur skoill evid unan hepkén euz ar re vihan-mañ. Taolit evez eta! »

PARDONI ATAO

³ — « Ma teu d'az preur mañkoud ouzit, repren anezañ, ha ma teu da jeñch buez, pardon dezañ. ⁴ Ha ma vank ouzit seiz kwech bemdez, ha ma teu seiz kwech davedout en eur lavared: « keuz am-eus », e pardoni dezañ ».

NERZ AR FEIZ

⁵ An ebestel a lavaras d'an Aotrou:

— « Laka da greski ennom ar feiz ».

⁶ An Aotrou a respontas:

— « Ma vefe ken braz ho feiz hag eur hreunenn zezo, e lavarfeh d'ar wezenn vouar-mañ: diframm da wriziou ha kee d'o 'flanta er mor; hag a sentfe ouzoh ».

SERVICHA GAND IZELDED A GALON

⁷ « Pehini ahanoh, dezañ eur zervicher bet oh arad pe o vêsa al loened, a lavaro dezañ, pa vo distro euz ar park: « Deus buan ouz taol »? ⁸ Daoust ha ne lavaro ket dezañ kentoh: « Aoz din va hoan ha stard da houriz d'am zervicha, ken n'am-bo debret hag evet. Goude e helli debri hag eva d'az tro ».

⁹ « Daoust hag anaoudègèz vad e-no d'ar zervicher-ze evid beza sentet outañ?

¹⁰ « Evel-se, c'hwi ive, greet ganeoh kemend a vo bet gourhemennet deoh, lavarit: « servicherien didalvez om. N'on-eus greet nemed ar pezh a dleem ober ».

AN DEG DEN LOR

¹¹ O veza m'edo oh ober hent war-zu Jeruzalem, e tremenas Jezuz war harzou Bro-Zamaria ha Bro-Halilea.

¹² P'edo oh antreal en eur vourhadenn, e teuas dég dén lor en arbenn dezañ. Chom a rejont pellig a-walh dioutañ (35) hag e lavarjont:

¹³ — «Jezuz, Mestr, bez truez ouzom».

¹⁴ O weled kement-se, e lavaras Jezuz dezo:

— «It d'en em ziskouez d'ar veleien».

E-keid ha m'edont o vond e tigouezas dezo beza pareet. ¹⁵ Unan anezo, o weled e oa pare, a zeuas war e giz en eur gana meuleudi da Zoue a vouez uhel. ¹⁶ En em strinka 'reas, e dal d'an douar, e-harz treid Jezuz, ouz e drugarekaad. Hogen, eur Samaritan e oa.

¹⁷ Jezuz a lavaras dezañ:

— «Daoust ha n'int ket bet pareet o dég? Hag an nao all, e peleh emaint? ¹⁸ N'eus ket bet eta nemed hemañ, eun estren anezañ, da zond en-dro da veuli Doue».

¹⁹ Hag e lavaras dezañ:

— «Sav en da-zav ha kee, da 'feiz he-deus da zaveteet».

DONEDIGEZ ROUANTELEZ DOUE

²⁰ Ar Farizianed a reas goulennou outañ:

— «Pegoulz eta e teu Rouantèlèz Doue?»

Respont a reas:

— «Rouantèlèz Doue ne zeu ket evel eun dra êz da weled. ²¹ Ne vo ket lavaret: «Amañ ema!» pe: «Aze ema!» rag en ho-touez ema Rouantèlèz Doue (36)».

²² Neuze e lavaras d'e ziskibien:

— «Eun amzer a zeuio hag e karoh gweled, pa ne ve nemed unan euz deziou Mab an dén, ha ne weloh ket.

²³ «Lavaret e vo deoh: «Aze ema! Amañ ema» Na lohit ket, na redit ket, ²⁴ rage evel eul luhedenn o tarza a skéd euz an eil penn d'egile d'an oabl, evel-se e vo Mab an dén d'e zeiz.

²⁵ «Med, diagent e ranko gouzañv kaled, ha beza distaolet gand ar rummad-mañ.

²⁶ «Evel ma oe kont e amzer Noe, evel-se ive e vo e amzer Mab an Dén. ²⁷ An dud a zebre, a eve, a gemere gwaz, a gemere gwrég, beteg an deiz ma 'z eas Noe en arh, ha ma teuas an dour-beuz d'o distruja oll.

²⁸ «Pe c'hoaz evel ma oe kont e amzer Lot: An dud a zebre, a eve, a brene, a werze, a blante, a zave tiez. ²⁹ Med d'an deiz ma 'z eas Lot kuit euz Sodom, e lakeas Doue da goueza euz an neñv eur glao a dan hag a zoufr hag o distrujas oll.

³⁰ «Evel-se e vo kont ive d'an deiz m'en em ziskouezo Mab an Dén.

³¹ «D'an deiz-se, an hini a vo war al leur-doenn hag a vezo e draou en ti, arabad e vo dezañ diskenn d'o herhad, hag an hini a vo er park, arabad e vo dezañ kennebeud distrei war e giz. ³² Ho-pet soñj euz gwrég Lot.

³³ «An neb a glasko mired e vuez he hollo hag an neb he hollo he miro.

³⁴ «M'hel lavar deoh: En noz-se, euz daou zén en hevelep gwele, unan a vo kemeret hag egile lezet. ³⁵ Euz a ziuo vaouez o vala asamblez, unan a vo kemeret hag e-bén lezet»,

³⁶ ³⁷ An diskibien a houlennas outañ:

— «E peleh e vo eta?»

Respont a reas:

— «El leh ma vo ar horv eno eo en em zastumo ar guped».

Pennad XVIII

AR BARNER FALLAGR HAG AN INTANVEZ TORR-PENN

¹ Jezuz a lavaras d'e ziskibien eur barabolenn diwar-benn m'eo réd pedi heb ehan hag hep koll kalon:

² « Bez e oa, emezañ, en eur gêr, eur barner ha n'e-noa ket a zoujañs evid Doue; n'en em jale ket kennebeud gand an dud.

³ « En hevelep kêr e oa ive eun intañvez hag a zeuas d'e gavoud en eur lavared: « Barn etrezon ha va enebour ».

⁴ « E-pad hir amzer ne 'fellas ket dezañ henn ober. Abenn ar fin e lavaras ennañ e-unan:

— « Daoust ma n'am-eus ket a zoujañs evid Doue, ha ne ran forz euz an dud, ⁵ koulskoude, o veza ma 'z on enouet ouz he hleved, ez an da rei dezi he goulenn, en aon na gendalhfe da derri din va 'fenn ».

⁶ « Peurechui a reas an Aotrou, en eur lavared:

— « Selaouit ar pez a lavar ar barner displeal-ze, ha Doue ne rentfe ket justis d'an dud dibabet gantañ a zo o krial noz-deiz war-zu ennañ, hag e rafe dezo gortoz?

⁷ « Hel lavared a ran deoh: Ne vezo ket pell evid rei o gwir dezo. ⁸ Evelato, Mab an Dén pa zeuio, daoust ha kavoud a raio feiz war an douar? »

AR FARIZIAN HAG AR PUBLIKAN

⁹ Hag e lavaras Jezuz eur barabolenn evid ar re a grede dezo e oant just, ha n'o-doa nemed disprij evid an dud all:

¹⁰ « Daou zén a bignas d'an Templ da bedi, unan anezo a oa eur Farizian, egile eur Publikan.

¹¹ « Ar Farizian, en e-zav, a bede ennañ e-unan evel-henn:

— «Va Doue, da drugarekaad a ran, en abeg n'on ket e-giz ar re all: laer, disleal, avoultrer, pe c'hoaz evel ar publikan-mañ.

¹² «Yun a ran diou wech ar zizun, ha rei a ran ive an degved euz kemend a hounezan».

¹³ «Ar publikan a-vad en em zalhe e traoñ an Templ. Ne grede ket zokén sevel e zaoulagad war-zu an Neñv, ha skei a ree war boull e galon en eur lavared:

— «Doue, bez truez ouzin, peher ma 'z on».

¹⁴ «Me 'lavar deoh, hemañ a ziskennas d'e di pardonet gand Doue, med nann egile, rag an neb en em uhella a vo izelleet, hag an neb en em izella a vo uhelleet».

JEZUZ HAG AR VUGALIGOU (37)

¹⁵ An dud a zigase dezañ ar vugale vihan zokén, evid ma touchfe outo. O weled kement-se e ree an diskibien trouz dezo.

¹⁶ Med Jezuz a lakeas digas dezañ ar vugaligou vihan en eur lavared:

«Lezit ar vugaligou da zond davedon; na virit ket outo, rag d'ar re a zo heñvel outo eo Rouantèlèz Doue.

¹⁷ «E gwirionez m'hel lavar deoh; An neb ne zigemer ket evel eur bugel (38) Rouantèlèz Doue ne antreo ket enni».

RISKL AR BINVIDIGEZ

¹⁸ Eun dén a reñk uhel a houlennas ouz Jezuz:

— «Mestr mad, petra 'm-eus da ober evid kaoud ar vuez peurbaduz da lod?»

¹⁹ Jezuz a lavaras dezañ:

— «Perag e lavarez ez on mad? N'eus nemed Doue hag a ve mad. ²⁰ Anaoud a rez ar gourhemennou: Ne ri ket a

avoultriez, ne lazi ket, ne laeri ket, ne lavari ket a fals-testeni, da dad da vamm a enori».

²¹ Hemañ a respontas:

— «An dra-ze am-eus miret penn-da-benn abaoe va yaouankiz».

²² O kleved kement-se e lavaras Jezuz dezañ:

— «Eun dra a vank dit c'hoaz: Gwerz kement az-peus, ro ar priz d'ar beorien, hag ez-po eun teñzor en Neñvou, ha neuze, deus d'am heul».

²³ O kleved kement-se e teuas da veza trist, rag pinvidig braz e oa. ²⁴ Ouz e weled e lavaras Jezuz:

— «Na diêz eo d'ar re o-deus danvez tizoud Rouantêlêz Doue.²⁵ Ya, êsoh eo d'eur hañval tremen dre doull eun nadoz, eged d'eun dén pinvidig antreal e Rouantêlêz Doue».

²⁶ Ar re a oa o selaou a lavaras:

— «Neuze 'ta, piou a hell beza salvet?»

²⁷ Ha Jezuz a lavaras dezo:

— «Ar pez a zo dreist galloud an dén, Doue a hell henn ober».

DIGOLL AR RE A ZILEZ PEP TRA

²⁸ Pèr a lavaras:

— «Evidom-ni on-eus dilezet or madou hag om eet d'az heul».

²⁹ Respont a reas:

— «E gwirionez m'hel lavar deoh, n'eus dén e-béd hag e-no dilezet ti, gwrég, breudeur, kerent ha bugale, ablamour da Rouantêlêz Doue,³⁰ ha na resevfe ket kalz muioh en amzer-mañ, hag ar vuez peurbaduz en amzer da zond».

EVID AN DREDE GWECH E KOMZ EUZ E BASION

³¹ Jezuz a gemeras gantañ an Daouzeg hag a lavaras dezo:

— «Setu ma pignom da Jeruzalem ha ma vo sevenet kement o-deus skrivet ar brofeted diwar-benn Mab an Dén: ³² rag laket e vo etre daouarn ar bayaned, goapeet e vo, dismegañset e vo, skopet e vo outañ; ³³ goude beza e skourjezet e lazint anezañ, ha d'an trede deiz eh adsavo da veo».

³⁴ Int-i a-vad ne intentent netra e kement-se. Ar gomz-ze ne oa ket sklêr evito, ha ne ouient ket petra e-noa c'hoant Jezuz da lavared.

DEN DALL JERIKO

³⁵ Jezuz a dostae ouz Jeriko, ha setu eun dén dall azezet war ribl an hent o houlenn an aluzenn.

³⁶ O veza klevet tud o tremen e-biou e houlennas petra 'oa a nevez. ³⁷ Roet e oe dezañ da houzoud:

— «Jezuz a Nazared eo a zo o tremen. ³⁸ Krial a reas:

— «Jezuz, Mab David, bez truez ouzin!»

³⁹ Ar re a gerze er penn a-raog a ree trouz dezañ evid ober dezañ chom peoh, med eñ a grie gwasoh-gwas:

— «Mab David, bez truez ouzin!»

⁴⁰ Jezuz a jomas a-zav hag a houlennas ma vefe digaset beteg ennañ. Pa oe deuet tost e houlennas outañ:

⁴¹ — «Petra ' fell dit?»

Respont a reas:

— «Aotrou, ma teuio din ar gweled».

⁴² Jezuz a lavaras dezañ:

— «Gwél sklêr, da feiz he-deus da zaveteet».

⁴³ D'ar mare-ze end-eün e teuas dezañ ar gweled. Ar bobl, o weled kement-se, a gane meuleudi da Zoue.

Pennad XIX

ZACHE

¹ Jezuz, antreet e Jeriko, a oa o treuzi kêr. ² Bez' e oa eno eun dén anvet Zache, unan euz pennou-braz ar Bublikaned, eun dén pinvidig anezañ, ³ o klask gweled piou e oa Jezuz, med ne zeue ket a-benn ablamour d'an engroez a dud, rag bihan e oa a vent.

⁴ Neuze e redas en a-raog hag e pignas en eur wezenn zikomor, evid e weled, rag dre eno e tlee tremen. ⁵ Jezuz pa erruas eno a zavas e zaoulagad hag e lavaras dezañ:

— «Zache, hast buan diskenn, rag en da di e rankan hirio mond da loja».

⁶ Buan e tiskennas neuze da zigemer anezañ gand leve-nez. ⁷ O weled kement-se, e hrosmole an dud hag e lavarent:

— «Da di eur peher eo eet da loja».

⁸ Zache, deuet dirag an Aotrou, a lavaras:

— «Sell Aotrou, an hanter euz va madou a roan d'ar beorien, ha m'am-eus greet gaou ouz unan bennag e rentan dezañ peder gwech kemend-all».

⁹ Neuze e lavaras Jezuz dezañ:

— «Hirio eo deuet ar zilvidigez evid an ti-mañ; hemañ ive a zo eur mab da Abraham (39); ¹⁰ rag Mab an Dén a zo deuet da glask ha da zavetei ar pezh a oa kollet».

PARABOLENN AN DEG PEZ AOUR

¹¹ O veza m'edo an dud o selaou ar homzou-ze, e lavaras Jezuz c'hoaz eur barabolenn, rag m'edo tost da Jeruzalem, ha ma krede dezo edo Rouantêlêz Doue o vond d'en em ziskouez d'an ampoent. ¹² Lavared a reas eta:

«Eun dén a reñk uhel a yeas d'eur vro bell evid reseo ar halloud a roue ha dond en-dro goudeze.

¹³ « Lavared a reas da zég euz e zervicherien dond d'e gavoud, hag e roas dezo dég pez aour en eur lavared:

— « Lakit anezo da dalvezoud a-hann ma vezin distro ».

¹⁴ « E genvroidi o-doa kasoni outañ hag e kasjont kannaded war e lerh da lavared: « Ne 'fell ket deom kaoud hennez da roue ».

¹⁵ « Pa oe distro, goude beza resevet ar halloud a roue, e lakeas dond davetañ ar zervicherien e-noa roet arhant dezo, da houzoud pegement o-doa gounezet pep hini anezo.

¹⁶ « An hini kenta a zeuas hag a lavaras:

— « Aotrou, da bez aour e-neus gounezet dég all ».

¹⁷ — « Mad eo servicher mad, pegwir out bet feal war eun dra dister, me 'ro galloud dit war dég kêr ».

¹⁸ « An eil a zeuas hag a lavaras:

— « Da bez aour e-neus gounezet pemp ».

¹⁹ « Da hennez ive e lavaras:

— « Te'vezo e penn pemp kêr ».

²⁰ Unan all a zeuas hag a lavaras:

— « Setu amañ da bez aour. E laket am-boia a-gostez en eul lienenn. ¹² Aon am-boia razout, en abeg ma 'z out eun dén rust, lemel a rez ar pezh n'az-peus ket laket hag eosti ar pezh n'az-peus ket hadet ».

²² Lavared a reas dezañ:

— « Emaon o vond da varn ahanout diouz da gomzou da-unan, servicher fall! Goud a ouies ez on eun dén rust, lemel a ran ar pezh n'am-eus ket laket, hag eosti ar pezh n'am-eus ket hadet ».

²³ — « Neuze 'ta emezañ, perag n'az-peus ket laket va arhant war gampi? D'am distro em-befe tennet anezañ gand an interest ».

²⁴ Hag e lavaras d'ar re a oa war al leh:

— «Tennit digantañ e bez aour, ha roit anezañ d'an hini e-neus dég».

²⁵ Lavared a rejont:

— «Aotrou, dég e-neus dija!»

²⁶ Hag eñ da respont:

— «Hel lavared a ran deoh: An neb e-neus a vo roet dezañ, med an hini n'e-neus ket, ar pezh e-neus zokén a vo tennet digantañ. ²⁷ Evid va enebourien, ar re-ze ha ne 'felle ket dezo e vefen roue warno, digasit anezo hag o lazit dirazon».

JEZUZ DIGEMERET E JERUZALEM

²⁸ Goude beza komzet evel-se, Jezuz a yeas a-raog evid sevel da Jeruzalem.

²⁹ Pa oe digouezet tost da Vefajez ha da Vetania, nepell diouz ar menez anvet Menez an Olivez, e kasas daou euz e ziskibien ³⁰ en eur lavared dezo:

— «It d'ar gêriadenn a zo dirazoh. En eur antreal e kavoh eun azen yaouank ouz ar stag, ha n'eus bet c'hoaz dén e-béd azezet war e gein. Distagit anezañ hag henn digasit amañ.

³¹ «Ma houlenn unan bennag ouzoh» perag henn distagit? respontit evel-henn:

— «An Aotrou e-neus ezomm anezañ».

³² Mond a reont eta, hag e kavont an traou evel m'e-noa lavaret dezo.

³³ Pa edont o tistaga an azen yaouank, e houlennas e vistri outo:

— «Perag e tistagit-hu an azen youank-se?»

³⁴ Hag int-i da respont:

— «An Aotrou e-neus ezomm anezañ».

³⁵ Henn digas a rejont da Jezuz, teurel o mantilli war e gein, ha lakaad Jezuz da azeza warnañ.

³⁶ Dre ma 'z ee e lede an dud o mantilli war an hent. ³⁷ Jezuz a oa dija war diribin Menez an Olivez, pa stagas an niver braz a ziskibien a oa eno leun a joa, da veuli Doue a vouez uhel, evid an oll vurzudou o-doa gwelet, en eur lavared:

³⁸ « *Meuleudi d'an hini a zo o tond,*
« *Eñ or roue, en ano an Aotrou.*
« *Peoh en Neñv,*
« *ha gloar e barr an Neñvou* ».

³⁹ Lod Farizianed, euz an douez an dud, a lavaras da Jezuz.

— « Mestr, gourdrouz 'ta da ziskibien ».

⁴⁰ Hag eñ a respontas dezo:

— « M'hel lavar deoh, ma teu ar re-mañ da rei peoh, ar vein eo a youho ».

JEZUZ O OUELA WAR JERUZALEM

⁴¹ Pa dosteas ouz kêr, ha pa welas anezi, e ouelas war he houst.

⁴² Lavared a ree:

— « M'az-pije gouezet, te ive, en deiz-mañ, penaoz kavoud ar peoh!... Med siwaz! kuzet eo bet kement-se ouz da zaoulagad! ⁴³ Ya, evidout ez eus deveziou o tond, ma savo da enebourien savaduriou a zeziz a-eneb dit. Kelhiet e vezi ganto hag eñket a bep tu. ⁴⁴ Da 'flastra 'raint, te ha da vugale ganit, ha ne lezint ket ahanout mên war vên, ablamour n'az-peus ket gouezet pe vare ez or deuet d'az kweled ».

AR VARHADOURIEN ER-MEZ

⁴⁵ Neuze eh antreas Jezuz en Templ hag en em lakeas da

gas er-mêz a re a oa staliou-gwerz ganto. ⁴⁶ Lavared a ree dezo:

— «Skrivet eo: *Va zi a vo eun ti a bedenn*, ha c'hwi ho-peus greet anezañ eun toull laeron».

KELENNADUREZ EN TEMPL

⁴⁷ Bemdez e veze o kelenn en Templ. Priñsed ar Veleien hag ar Skribed a glaske an tu d'e lakad d'ar maro, ha Pennou-Braz ar bobl kemend-all.

⁴⁸ Med ne gavent ket petra ' hellfent ober, rag ar bobl, desevet gand e gomzou, a zelaoue anezañ.

Pennad XX

¹ Unan euz an deveziou-ze, edo Jezuz o kelenn en Templ hag oh embann ar Helou Mad, pa zigouezas Priñsed ar Veleien, ar Skribed ha Pennou-Braz ar bobl. ² Lavared a rejont dezañ:

— «Lavar deom a-berz peseurt galloud e rez kement-se, pe piou e-neus roet dit ar halloud-se».

³ Respont a reas dezo:

— «Me ive a zo o vond da ober eur goulenn ouzoh. Lavarit din: ⁴ Badeziant Yann, daoust hag euz an Neñv e teue pe a-berz an dud?»

⁵ Soñjal a rejont enno o-unan: Ma lavarom: euz an Neñv, e rebecho deom: Perag n'ho-peus ket kredet ennañ? ⁶ ha ma lavarom: a-berz an dud, e vezo stlapet mein ouzom, rag kavoud a ra dezo stard ez eo Yann eur profet.

⁷ Neuze e respontjont ne ouient ket a beh e teue. ⁸ Ha Jezuz a respont dezo:

— « Me, kennebeud, ne lavarin ket deoh a-berz peseurt galloud e ran kement-se ».

PARABOLENN AR WINIERIEN VUNTRER

⁹ Hag en em lakeas da lavared d'ar bobl ar barabolenn-mañ :

— « Eun dén a blantas eur winieg, feurmi 'reas anezi da winierien hag e kuiteas ar vro evid hir amzer.

« ¹⁰ Digouezet ar mare e kasas eur zervicher da gavoud ar winierien, da houlenn diganto e lod euz frouez ar winieg. Med ar winierien a wall-gasas anezañ hag e gasas en e hent gand netra.

¹¹ « Kas a reas dezo eur zervicher all, hemañ ive a oe skoet gantañ, dismegañset ha kaset kuit gand netra ».

¹² « Adarre e kasas eun trede servicher, hemañ ive a oe gloazet hag argaset ganto.

¹³ « Mestr ar winieg a zoñjas neuze : Petra da ober ? Kas a rin va mab karet, eñ a vo doujet ganto.

¹⁴ « Med o weled ar mab, e soñjas kenetrezo ar winierien : « Ar pennher eo hemañ, lazom anezañ, evid ma vo deom an herez ».

¹⁵ « Stlepel a rejont anezañ er-mêz euz ar winieg hag e laza. Petra 'ray eta dezo mestr ar winieg ?

¹⁶ « Dond a raio, lakaad ar winierien d'ar maro ha fizioud ar winieg e tud all. O kleved kement-se e lavarjont : « Nann ! biken ! » ¹⁷ Med Jezuz a zellas outo en o daoulagad hag a lavaras :

— « Petra' dalv eta ar homzou-mañ euz ar Skritur ? : *Ar mên bet taolet a gostez gand ar vañsonerien, hennez eo a zo deuet da veza ar mên-korn.* ¹⁸ *Kement dén a gouezo war ar mên-se, a vo brevet, hag an neb a gouezo ar mên-se warnañ a vo flastret gantañ.* ».

¹⁹ Ar Skribed hag ar Farizianed a glaskas an tu da lakaad an dorn warnañ dioustu, med aon o-devoa rag ar bobl. Intentet mad o-doa eo evito e-noa lavaret ar barabolenn-se.

DA ZEZAR AR PEZ A ZO DA ZEZAR

²⁰ En em lakaad a rejont da daoler o evez warnañ hag e kasjont d'e gavoud spierien hag a glaske tremen evid tud just. C'hoant o-devoa da gavoud abeg en e gomzou evid e lakaad dindan galloud ar gouarnour hag etre e zaouarn.

²¹ Goulenn a rejont eta outañ :

— « Mestr, goud a ouzom eo eün da gomzou ha da gelennadurez, ez out leal gand an oll, ²² hag e kelennez hent Doue hervez ar wirionez. ²² Daoust hag aotreet eo deom paea an taillou da Zesar pe n'eo ket? »

²³ Jezuz, anad dezañ o zrubardèrèz, a lavaras :

²⁴ — « Diskouezit din eur pez arhant. Euz piou eo ar skeudenn hag an enskrivadur a zo warnañ? »

Hag e respontjont :

— « Euz Sesar ».

²⁵ Hag eñ dezo :

— « Ahanta ! rentit da Zesar ar pez a zo da Zesar ha da Zoue ar pez a zo da Zoue ».

²⁶ Ne helljont kavoud gaou e-béd en e gomzou dirag an dud, ha souezet braz gand e respont e chomjont dilavar.

DASORH AR RE VARO

²⁷ Lod saduseaned (40), euz ar re hag a lavar n'eus dasorh e-béd evid ar horvou, a houlennas ouz Jezuz :

— ²⁸ « Mestr, Moizez e-neus roet deom al Lezenn-mañ : Ma teu unan bennag da vervel hep lezel bugale, hag-eñ dime-

zet, e tle e vreur dimezi d'an intañvez da zevel lignez d'an hini maro.

²⁹ « Bez' e oa eta seiz breur. An hini kenta a zimezas hag a varvas dizher. ³⁰ An eil a gemeras an intañvez hag a varvas hep lezel bugale. ³¹ An trede a gemeras an intañvez, hag evel-se o zeiz: mervel a rejont hep lezel bugale. ³² Ha da fin an dro e varvas ive ar wrég.

³³ « Ahanta! ar vaouez-se, da vare an dasorh, da biou e vo-hi gwrég? Pegwir o-deus bet, o zeiz, anezi da bried? »

³⁴ Jezuz a respontas dezo:

— « Bugale ar béd-mañ a gemer gwrég pe waz. ³⁵ Med ar re a vo bet kavet din da gaoud lod er béd da zond hag en adsao ar re varo da veo ne gemeront na gwrég na gwaz, ³⁶ rag ne hellont mui mervel, par int d'an Elez, mibien int da Zoue, pegwir int mibien an dasorh. ³⁷ « Hag evid ar pez a zell ouz adsao ar re varo da veo, Moizez e-unan e-neus henn roet deom da houzoud er pez a lavar diwarbenn ar « Vodenn » pa anv an Aotrou: Doue Abraham, Doue Izaag ha Doue Jakob. ³⁸ Doue n'eo ket Doue re varo eo, med Doue re veo, rag evitañ an oll a zo beo »,

³⁹ Skribed a zavas o mouez da lavared:

— « Mestr, komzet mad az-peus ».

⁴⁰ Rag ne gredent mui ober goulennou all outañ. ⁴¹ Neuze e lavaras dezo:

— « Penaoz e heller lavared ez eo ar Hrist Mab da Zavid, ⁴² pegwir e lavar David, e-unan, e levr ar Salmou:

« *An Aotrou e-neus lavaret d'am Aotrou:*

« *Azez en tu dehou din,*

« ⁴³ *beteg m'am-bo greet euz da enebourien,*

« *eur skabell dindan da dreid* ».

⁴⁴ « David eta a ra Aotrou anezañ, penaoz neuze e hell beza mab dezañ? »

AR SKRIBED BARNET GAND JEZUZ

⁴⁵ Lavared a reas d'e ziskibien dirag ar bobl ouz e zelaou;

⁴⁶ — « Diwallit ouz ar Skribed a blij dezo bale gand saeou hir, beza saludet war ar plasennou, kemer ar hadoriou kenta er sinagogou hag ar plasou a enor er bañveziou. ⁴⁷ Int-i hag a grign madou an intañvezed, hag a ra an neuz da hir-bedi, rust ha rust e vo ar varnedigez evito ».

Pennad XXI

DONEZON AN INTANVEZ

¹ O sevel e zaoulagad, Jezuz a welas ar re a oa o lakaad o frovou en teñzor; tud pinvidig e oant.

² Gweled a reas ive eur paour kêz intañvez o lakaad daou bezig bihan. ³ Hag e lavaras:

— « E gwirionez m'hel lavar deoh, ar baour a intañvez-ze he-deus lakeet muioh eged an oll re all. ⁴ Rag ar re-ze oll o-deus kemeret, evid rei o 'frov, euz ar pezh n'oa ket réd dezo, e-leh houmañ eo diwar he diénéz eo he-deus kemeret evid rei kement he-devoa evid beva ».

DISMANTR JERUZALEM (41)

⁵ Evel ma oe lod o tivizoud diwar-benn an Templ, bamet ha souezet o weled ar vein gaer ha provou an dud fidel, Jezuz a lavaras dezo:

⁶ — « An traou-ze oll emaoñ o selled outo, eun deiz a zeuio ha ne jomo ket anezo mên war vên; distrujet e vo pep tra ».

⁷ Goulenn a rejont outañ:

— « Mestr, peur e tiguezo kement-se? Ha petra 'vo ar zin e vo war-nes erruoud? »

⁸ Respont a reas:

— « Diwallit na vefeh touellet, rag kalz a zeuio em ano hag a lavararo: « Me eo! » ha: « Tost braz ema an amzêr! » N'it ket d'o heul!

⁹ Pa glevoh kont euz brezeliou, taoliou dispah, n'it ket da sponta! Kement-se a rank erruoud da genta, med ne vo ket fin ken buan all ».

¹⁰ Jezuz a lavararo c'hoaz:

— « Freuz a zavo, broad eneb broad, rouantêlêz eneb rouantêlêz. ¹¹ Meur a grên-douar braz a vo e meur a leh, bosenn ha kernez amañ hag a-hont, en oabl e vo gwelet traou spontuz ha sinou braz.

¹² Med a-raog an oll draou-ze e vezoh paket ha gwall-gaset; roet e vezoh d'ar zinagogou, laket er prizoniou, kaset dirag ar rouaned hag ar houarnourien, en abeg d'am ano. ¹³ Ha kement-se a roio tro deoh da rei testeni.

¹⁴ « Lakit mad en ho spered, n'ho-po ket da glask penaoz en em zifenn. ¹⁵ Me, va-unan, a zilo en ho spered komzou a 'furnez ha n'hellou ket hoh enebourien herzel outo nag o dispenn.

¹⁶ « Gwerzet e vezoh gand ho tad hag ho mamm zokén, gand ho preudeur, ho tud nez hag ho mignoned; lod ahanoh a vo laket d'ar maro ganto. ¹⁷ Kas o-devezo an oll ouzoh ablamour d'am ano.

¹⁸ « Med blevenn e-béd diwar ho penn na vo kollet.

¹⁹ « Dalhit mad d'ho feiz hag e vezoh salvet ».

SEZIZ JERUZALEM

²⁰ « Pa weloh Jeruzalem kelhiet gand an armeou, c'hwi a welo neuze eo deuet eviti eur an dismantr.

²¹ « Neuze, ar re a vo e Bro-Judea, dezo tehed d'ar menezioù. Ar re a vo e diabarz kêr, dezo pellaad diouti; ar re a vo war ar mêzioù, dezo chom hep dond e kêr.

²² « Rag deizioù a gastiz e vo an deizioù-ze, ma vo sevenet kemend a zo bet skrivet.

²³ « Gwas-a-ze d'ar merhed a vezo o tougenn pe o vaga en deizioù-ze rag diénéz vraz a vo er vro ha kounnar a-eneb ar bobl-mañ.

²⁴ « Koueza 'ray an dud dindan dremm ar hleze, kaset e vezint da sklaved en oll vroioù. Breset e vo Jeruzalem dindan treid ar bayaned, beteg ma vo eet da benn amzer ar bayaned ».

FIN AR BED

²⁵ « Bez' e vo sinou burzuduz en heol, el loar hag er stered, ha war an douar gwall anken a wasko ar poblou, nehet ma vezint gand trouz ar mor ha fraill an tarziou, ²⁶ ken na vo an dud trohet o alan gand ar spont er gortoz euz ar pezh a hoarvezo gand ar béd a-béz, rag brañsella 'raio astrou an neñv,

²⁷ « Neuze e vo gwelet Mab an Dén o tond war eur goabrenn gand eur vraz a halloud hag a hloar.

²⁸ « Pa vo kement-se krog da hoarvezoud, en em lakit sonn ha savit ho penn rag tostaad a ray ho silvidigez ».

PARABOLENN AR WEZENN FIEZ

²⁹ Hag e lavaras dezo eur barabolenn:

« Gwelit ar wezen 'fiez hag an oll wez: ³⁰ pa grogont da deurel broñsou, e houzoù, ahanoh hoh-unan, diouz o gweled, ema tost an hañv.

³¹ « Evel-se, c'hwi ive, pa weloh kement-se o tigueuzoud, c'hwi a ouezo ema tost Rouantèlèz Doue.

³² « E gwirionez, m'hel lavar deoh: Ne dremeno ket ar rummad-mañ ken na vo erruet an oll draou-ze. ³³ An neñv hag an douar a dremeno, va homzou a-vad ne dremenint ket ».

BEZIT WAR EVEZ

³⁴ « Evidoh-c'hwi, diwallit na ve morzet ho kalonou gand an debri hag an eva re, ha gand nehamañchou ar vuez, ha na zeufe an deiz-se warnoh dre laer, evel eur roued d'ho paka, ³⁵ rag koueza 'raio war an oll dud o veva war an douar a-béz.

³⁶ « Chomit eta war zihun, o pedi e peb amzer, evid beza e stad d'en em denna euz an oll draou a zo da zond ha d'en em gavoud dirag Mab an Dén ».

DEVEZIOU DIWEZA JEZUZ

³⁷ Jezuz a veze e-pad an deiz, en Templ, o kelenn, hag ez ee da dremen an noz war eur menez anvet Menez an Olivez. ³⁸ Hag ar bobl a zeue, mintin mad, davetañ, d'an Templ, d'e zelaou.

Pennad XXII

TRUBARDEREZ JUDAZ

¹ Tostaad a ree gouel ar Bara-Dihoell, anvet ar Pask (42). ² Priñsed ar veleien hag ar Skribed a glaske an tu d'e lakaad d'ar maro, rag aon o-doa ouz ar bobl.

³ Satan a antreas neuze e Judaz, lesanvet Iskarjot, hag a oa unan euz an Daouzeg. ⁴ Mond a reas da weled gand Priñsed ar Veleien ha Pennou-Braz ar warded, penaoz e lakaad etre o daouarn.

⁵ Laouen braz e oent ha divizoud a rejont rei arhant dezañ. ⁶ Asanti a reas hag e klaskas an doare gwella evid e lakaad etre o daouarn hep gouzoud d'an dud.

⁷ Setu ma tigouezas deiz ar Bara-Dihoell ma tleed aberza ar Pask.

⁸ Jezuz a gasas Pèr ha Yann en eur lavared:

— « It da brepari deom ar Pask evid ma tebrim anezañ ».

⁹ Int-i a houlennas outañ:

— « E peleh e fell dit ez afem da bourchas Pask? »

¹⁰ Jezuz a respontas dezo:

— « Pa vezoh oh antreal e kêr e teuio en arbenn deoh eun dén o tougenn eur podad dour, it d'e heul beteg an ti ma 'z ay ennañ. ¹¹ Hag e lavaroh da vestr an ti:

— « Ar Mestr a houlenn ouzit: e peleh ema ar zal ma tebrin enni ar Pask gand va diskibien? »

¹² « Hag e tiskouezo deoh ar gambr war-laez, frank hag annezet. Preparit eno pep tra »,

¹³ Mond a rejont hag e kavjont pep tra evel m'e-noa lavaret dezo, hag e preparjont ar Pask.

¹⁴ En abardaez-se, pa oe deuet an eur, Jezuz a yeas ouz taol gand e ebestel, ¹⁵ hag e lavaras dezo:

— « C'hoant braz am-eus bet da zebri ar Pask-mañ ganeoh a-raog gouzañv va Fasion. ¹⁶ Rag hel lavared a ran deoh, ne zebrin mui anezañ ken na vo deuet da vad Rouantèlèz Doue ».

¹⁷ Neuze, o veza kemeret eur halirad gwin ha lavaret trugarez, e lavaras:

— « Kemerit ha lodennit etrezoh, ¹⁸ rag m'hel lavar deoh, ne evin mui euz frouez ar winienn ken na vo deuet Rouantèlèz Doue ».

¹⁹ Hag o veza kemeret ar bara ha greet ar bedenn a drugarez, e torras anezañ hag henn roas dezo en eur lavared:

— « Va horv eo hemañ, an hini roet evidoh, grit kement-mañ gand ar zoñj ahanon ».

²⁰ Evel-se e reas c'hoaz evid ar halirad, goude koan, en eur lavared:

— « Bez' ez eo ar halirad-mañ an emgleo nevez em gwad (43), an hini skuillet evidoh. ²¹ Setu, evelato, ema dorn an hini am gwerz ganin-me war an daol. ²² Rag Mab an Dén a zo o vond kuit evel m'eo merket. Gwas-a-ze a-vad d'an hini a werz anezañ ».

²³ Hag an ebestel a glask etrezo piou bennag en o-zouez a oa o vond da ober kement-se.

PIOU EO AR BRASA

²⁴ Tabud a zav ive etrezo da houzoud piou anezo a zo da veza kemeret evid ar brasa. ²⁵ Jezuz a-vad a lavaras dezo:

— « Rouaned ar broadou a ra o mistri warno hag ar re a daol pouez o galloud warno a anver madoberourien (44).

²⁶ « Diwallit, c'hwi, da veza evel-se. Er hontrol, ar brasa en ho-touez, d'en em lakaad par d'an disterra, hag an hini a zo e penn, par d'ar zervicher.

²⁷ « Pehini eo ar brasa evid gwir: an hini a zo ouz taol, pe an hini a zo o servicha? Daoust ha n'eo ket an hini a zo ouz taol? Ha me koulskoude, a zo en ho-touez evel an hini a zervich.

AN DIGOLL PROMETET

²⁸ C'hwi eo ar re o-deus dalhet mad ganin e-kreiz va zrubuillou; ²⁹ Ha me a lak ar Rouantèlèz en ho kerz evel m'eo bet laket em herz gand va Zad, ³⁰ evid ma vezoh ouz va zaol o tebri hag oh eva em Rouantèlèz, ha m'ho-po troniou da azeza gand galloud war an daouzeg rummad euz pobl Israel ».

KAN AR HILLOG

³¹ « Simon, Simon, setu e-neus bet satan e houlenn evid da strilla, evel ma vez greet d'ar gwiniz er hrouer. ³² Med me am-eus pedet evidout, evid ma chomo da feiz hep fallaenn. Ha te, pa vezi distroet, dit da gennerza da vreudeur ».

³³ Pèr a lavaras dezañ:

— «Aotrou, prést on da vond ganit ha d'ar prizon ha d'ar maro!»

³⁴ Med Jezuz a lavaras dezañ:

— «M'hel lavar dit, Pèr, ne gano ket ar hillog hirio, a-raog m'az-po, dre deir gwech, nahet va anaoud».

EUR AN EMGANN DIWEZA

³⁵ Hag e lavaras dezo:

— «P'am-boa kaset ahanoh hep yalh, na bisah, na bou-tou, daoust ha diouer ho-peus bet euz eun dra bennag:

— «Seurt e-béd, emezo».

³⁶ Hag e lavaras dezo:

— «Med, bremañ, d'an neb e-neus eur yalh, kemered anezi, ha kemend-all evid ar bisah. D'an neb n'e-neus kleze e-béd, gwerza e vantell da brena unan.

³⁷ «Rag m'hel lavar deoh, bez' e rank dond da wir ennon-me, ar gomz-mañ euz ar Skribur: «*Laket eo bet e reñk an dorfetourien*».

«E gwirionez, ar pez a zo skrivet diwar va 'fenn, a zo o vond da veza peur-echuet».

³⁸ Int-i a lavaras dezañ:

— «Setu amañ daou gleze!»

— «A-walh eo!»

WAR MENEZ AN OLIVEZ

³⁹ O veza eet er-mêz, Jezuz a gerzas, evel kustum, da Venez an Olivez. War e lersh e teuas ive an diskibien. ⁴⁰ Erruet eno, e lavaras dezo:

— «Pedit evid na gouezoh ket e tentadur».

⁴¹ Pellaad a reas diouto war héd bann eur mên, da bedi war e zaoulin, evel-henn:

⁴² — «Tad, ma plij ganit, pella ar halirad-mañ diouzin. Koulskoude, n'eo ket va bolontez din-me, med da hini-te bezet greet.

⁴³ Neuze e paras dirazañ eun El euz an Neñv d'e gennerza.

⁴⁴ Gwasket gand an anken, e pede startoh. Ec'hwezenn a zeuas da veza evel beradou gwad o tivera beteg an douar.

⁴⁵ O veza savet diwar e bedenn hag eet daved e ziskibien, e kavas anezo kousket gand samm o glahar. ⁴⁶ Hag e lavaras dezo:

— «Perag oh kousket? Savit ha pedit evid na gouezoh ket e tentadur».

JEZUZ LIAMMET

⁴⁷ Edo c'hoaz o komz, pa zigouezas eur vandennad tud, hag an hini anvet Judaz, unan euz an Daouzeg, a gerze en o 'fenn. Tostaad a reas ouz Jezuz, da bokad dezañ. ⁴⁸ Jezuz a lavaras dezañ:

— «Judaz, gand eur pok eo e werzez Mab an Dén?»

⁴⁹ O weled petra a oa o vond da hoarvezoud, e houlennas outañ ar re a oa en-dro da Jezuz:

— «Aotrou, ha ma skofem a daoliou kleze?»

⁵⁰ Hag unan anezo a sko eun taol gand mevel ar Beleg-Braz hag a zistag dezañ e skouarn zehou. ⁵¹ Med Jezuz a lavaras:

— «Lezit! A-walh evel-se!»

Hag o veza touchet ouz skouarn an dén e lakas anezañ pare.

⁵² Neuze e komzas Jezuz ouz ar re a oa deuet warnañ: Pennou-Braz ar veleien, gwardou an Templ, ha Pennou-Braz ar bobl:

— «Deuet oh, evel d'eul laer, gand klezeier ha bizier. ⁵³ Pa vezen bemdez ganeoh en Templ, n'ho-peus ket taolet ho taouarn warnon, med bremañ ema hoh eur ha galloud an deñvalijenn».

PER A NAH E VESTR

⁵⁴ Kregi a rejont ennañ, e gas ganto, hag e rén da di ar Beleg-Meur.

Pèr a zeuas da heul, a-ziabell. ⁵⁵ Tan o-devoa greet e-kreiz ar porz hag azezet e oant tro-dro, ha Pèr a yeas da azeza en o-zouez.

⁵⁶ Eur vatez, ouz e weled azezet ouz skleur an tan ha goude beza sellet mad outañ a lavaras:

— «Hemañ ive a oa gantañ».

⁵⁷ Med eñ en em lakeas da nah en eur lavared;

— «Maouez, n'anavezan ket anezañ».

⁵⁸ Eun nebeud goude, unan all o veza sellet outañ a lavaras:

— «Te ive a zo euz an dud-se!»

Ha Pèr a respontas:

— «Ne d-on ket»

⁵⁹ War-dro eun eur diwezatoh, setu unan all c'hoaz o poueza hag o poueza da lavared:

— «Difazi eo! Hemañ ive a oa gantañ, ha neuze, Galilead eo».

⁶⁰ Respont a reas Pèr:

— «N'ouzon ket petra emout o lavared».

Kerkent, ha Pèr c'hoaz o komz, e stagas ar hillog da gana.

⁶¹ An Aotrou, o veza troet ouz Pèr, a baras e zell warnañ, hag e teuas soñj da Bèr euz komzou Jezuz o lavared: « A-raog m'e-no ar hillog kanet hirio, ez-po, dre deir gwech, nahet va anaoud ».

⁶² Mond a reas Pèr er-mêz hag e skuillas daelou c'hwero.

⁶³ Hogen, ar re a oa o tiwall Jezuz a ree goap anezañ hag a skoe gantañ. ⁶⁴ Moucha 'rejont dezañ e benn ha goulenn outañ:

— « C'hoari da brofet! Piou e-neus skoet ganit? »

⁶⁵ Hag e-leiz a wall-gomzou all a zistagent a-eneb dezañ.

JEZUZ DIRAG AR HUZUL-MEUR

⁶⁶ Deuet an deiz, eh en em vodas Pennou-Braz ar bobl, ar Veleien-Vraz hag ar Skribed. Greet o-doa digas Jezuz dirag ar Huzul-Meur. ⁶⁷ Hag e lavarjont dezañ:

— « Ma 'z out ar Mesiaz, lavar deom ».

Eñ a respontas dezo:

— « Ma lavaran ya deoh, ne gredoh ket, ⁶⁸ ha ma ran goulennou ouzoh, ne respontoh ket. ⁶⁹ Med diwar vremañ e vo Mab an dén azezet en tu dehou d'an Oll-Halloudeg ».

⁷⁰ Oll e lavarjont neuze:

— « Te eta, a zo mab da Zoue? »

Ha Jezuz a respontas:

— « C'hwi hel lavar: Bez' ez on ».

⁷¹ Neuze e lavarjont:

— « Peseurt ezomm on-eus c'hoaz a destou? Ni on unan on-eus klevet diwar e vuzellou ».

Pennad XXIII

JEZUZ DIRAG PILAT

¹ Oll a unan, tud ar Huzul a zavas neuze, hag a gasas Jezuz da di Bilat (45) ar gouarnour. ² E damall a rejont en doare-mañ :

— « Kavet on-eus hemañ o poulza ar bobl d'an dizurz, o tivenn paea an taillou d'an impalaer, hag o tiskleria ez eo-eñ ar Mesiaz-Roue ».

³ Pilat a houlennas ouz Jezuz :

— « Ha te a zo roue ar Juzevien ? »

Respont a reas Jezuz :

— « Te hel lavar. »

⁴ Neuze e troas ouz ar Veleien-Vraz hag ouz ar bobl hag e lavaras dezo :

— « Ne gavan abeg e-béd da gondaoni an dén-mañ ».

⁵ Med int-i e bourchue muioh-mui :

— « Dougenn a ra ar bobl d'en em zavel, o prezeg dre vro ar Juzevien a-béz, azaleg Bro-Halilea beteg amañ ».

⁶ Pilat, pa glevas ano euz Bro-Halilea, a houlennas ha Galilead e oa an dén. ⁷ O veza klevet e oa euz galloud Herodez, e kasas anezañ da di Herodez a oa en em gavet ive e Jeruzalem d'an deziou-ze.

JEZUZ DIRAG HERODEZ

⁸ Herodez, o weled Jezuz, a oe laouen braz, rag abaoe pell-amzer e-noa c'hoant d'e weled, ablamour d'ar pez a gleve diwar e benn ; ha fiziañs e-noa d'e weled oh ober eur burzud bennag. ⁹ Goulennou a reas outañ stank ha stank, med ne respontas dezañ gér e-béd.

¹⁰ E-keid-se, ar Veleien-Vraz hag ar Skribed a oa eno a boanie da zavel tamallou a-eneb dezañ.

¹¹ Herodez hag e wardou a daolas dismegañs warnañ, a reas goap anezañ hag a wiskas dezañ eur zae liou splann, hag a gasas anezañ en-dro da Bilat. ¹² Herodez ha Pilat, hag i enebourien beteg neuze, a zeuas da veza mignoned azaleg an deiz-se.

JEZUZ A-NEVEZ DIRAG PILAT

¹³ Pilat, neuze, a halv dirazañ ar Veleien-Vraz, ar rene-rien hag ar bobl, ¹⁴ hag a lavaras dezo:

— «Digaset ho-peus din an dén-mañ evel unan hag a boulz ar bobl d'an dizurz, med, goude beza greet enklask warnañ dirazoh, n'am-eus kavet abeg e-béd ennañ d'e gondaoni diwar an tamallou a rit dezañ, ¹⁵ nag Herodez kennebeud, rag digaset e-neus anezañ deom endro. N'eus netra eta, a gement e-neus greet, hag a verit ar maro. ¹⁶ Rag-se ez an da lakaad e gastiza, hag e roin dezañ e 'frankiz».

¹⁷ Hogen, red e veze dezañ, da geñver pep gouel, rei e frankiz da unan pe unan. ¹⁸ Med oll a-unan en em lakejont da grial:

— «Lakit hemañ d'ar maro ha roit deom Barabbaz!» ¹⁹ Hemañ a oa bet taolet er prizon, ablamour d'eun taol dispah savet e kêr, ha d'eur muntr.

²⁰ Eur wech c'hoaz, Pilat hag e-noa c'hoant rei e 'frankiz da Jezuz, a gomzaz outo. ²¹ Med i da youhal:

— «Ouz ar groaz! ouz ar groaz!»

²² Evid an deirved gwech e lavaras Pilat dezo:

— «Peseurt droug eta e-neus greet? N'am-eus kavet ennañ netra hag a veritfe ar maro; goude beza e gastizet e roin dezañ e 'frankiz».

²³ Med int-i a bourchue da houlenn a-bouez-penn ma vefe staget ouz ar groaz, ha kreñvoh kreñva e savent o moueziou.

²⁴ Neuze Pilat a zougas ar zetañs da rei dezo o goulenn. ²⁵ Lezel a reas da vond an hini a oa bet taolet er prizon evid eun taol dispah hag eur muntr, rag henez a houlenent, hag e lakeas Jezuz etre o daouarn, evid ober dezañ hervez o youl.

WAR HENT AR HALVAR

²⁶ Pa edont o kas anezañ ganto, e pakjont eun dén anvet Simon euz Bro-Guren, a oa o tond d'ar gêr euz ar park, evid e lakaad da zougenn ar groaz warlerh Jezuz.

²⁷ Ouz e heul e oa eur boblad vraz a dud hag a verhed, a skoe war boull o halon hag a hirvoude war e goust. ²⁸ O veza distroet war-zu enno, Jezuz a lavaras:

— « Merhed Jeruzalem, na ouelit ket warnon-me; gouelit kentoh warnoh hoh-unan ha war ho pugale. ²⁹ Rag dond a ra deziou ma vo lavaret: « Eüruz ar gwragez difrouez, ar re n'o-deus ket ganet bugale, hag ar re n'o-deus ket maget ». ³⁰ Neuze e lavaro an dud d'ar menezioù: « Kouezit warnom », ha d'an torgennou: « Goloit ahanom ». ³¹ Rag ma vez greet kement-mañ d'ar hoad glaz, petra ne vo ket greet d'ar hoad seh ».

³² Bez' e oa daou zén all, torfetourien anezo, kaset asamblez gand Jezuz, evid beza laket d'ar maro.

JEZUZ OUZ AR GROAZ

³³ Eur wech erruet el leh anvet ar Halvar, e oe staget Jezuz ganto ouz ar Groaz, hag an dorfetourien ive, unan en tu dehou, egile en tu kleiz.

³⁴ Jezuz a lavare:

— « Tad, pardon dezo, rag n'ouzont ket petra emaint oh ober ».

Neuze e lodennjont e zillad hag e tennjont anezo d'ar zord.

³⁵ Ar bobl a jome eno da zelled. Renerien ar bobl, int-i, a ree goap anezañ, en eur lavared:

— « Saveteet e-neus re all, dezañ d'en em zavetei e-unan, mar d-eo Mesiaz Doue, an hini dibabet gantañ ».

³⁶ Ar zoudarded ive a ree goap anezañ; tostaad a rejont ha kinnig dezañ gwin treñk en eur lavared:

— ³⁷ « Ma 'z out roue ar Juzevien, en em zavete da unan ».

³⁸ Bez' e oa ive a-zioh e benn eur skritell, gand ar gerioumañ e gresianeg, latineg hag hebreeg; « Roue ar Juzevien eo hemañ ».

³⁹ Unan euz an dorfetourien laket e kroaz a wall-gomze outañ:

— « Ha n'out ket-te ar Mesiaz? En em zavete da unan ha ni ganit ».

⁴⁰ Med an torfetour all a ree rebech dezañ:

— « N'az-peus ket a zoujañs evid Doue zokén, ha te barnet d'ar memez kastiz? ⁴¹ Evidom-ni ez eo just, rag priz on oberou a resevom; med hemañ n'e-neus greet droug e-béd ».

⁴² Hag e lavaras:

— « Jezuz, bez soñj ahanon pa vezi erruet en da Rouantèlèz ».

⁴³ Ha Jezuz da respont dezañ:

— « E gwirionez, m'hel lavar dit, hirio e vezi ganin er Baradoz ».

MARO JEZUZ

⁴⁴ War-dro kreisteiz e oa, pa gouezas teñvalijenn war an douar a-béz, beteg teir eur, gand eur fallaenn war an heol. ⁴⁵ Ha gouel an Templ a rogas dre an hanter.

⁴⁶ A vouez uhel, Jezuz a lavaras:

— « Tad, etre da zouarn e lakan va ene ».

Ha goude ar homzou-ze e laoskas e huanad diweza.

⁴⁷ O weled ar pezh a oa c'hoarvezet, ar hantener a rentas gloar da Zoue, en eur lavared:

— « E gwirionez, an dén-ze a oa just ».

⁴⁸ An oll dud a oa en em vodet eno da zelled, goude beza gwelet ar pezh a oa digouezet, a zistroas en eur skei war boull o halon.

⁴⁹ Oll vignoned Jezuz a jome a-ziabell, hag ive ar merhed bet ouz e heul azaleg Bro-Halilea, da zelled ouz kement-se.

JEZUZ LAKEET ER BEZ

⁵⁰ Ha setu eun dén, anvet Jozef, unan euz ar Huzul-Meur, dén mad ha just, ⁵¹ ha n'oa ket bet a-du gand mennadou na gand oberou ar re all. Euz kêr Arimatea e oa, e Bro-Judea, hag eñ ive a oa o hortoz Rouantêlêz Doue.

⁵² Mond a reas da gavoud Pilat da houlenn korv Jezuz. ⁵³ Diskenn a reas anezañ euz ar groaz, hag e baka en eul liñser, ha goude e lakeas anezañ en eur béz kleuzet er roh, ha n'oa bet c'hoaz laket dén e-béd ennañ.

⁵⁴ Deiz ar Pourchas e oa ha tostaad a ree ar zabat.

⁵⁵ Ar merhed a-vad a oa deuet gand Jezuz azaleg Bro-Halilea a yeas da heul Jozef. Selled a rejont ouz ar béz hag ouz an doare ma oa bet laket korv Jezuz.

⁵⁶ Distrei a rejont e kêr, evid pourchas louzeier c'hwez vad, ha da zeiz ar zabat e chomjont da ehana, hervez al Lezenn (46).

Pennad XXIV

AR BEZ GOULLO

¹ Deiz kenta ar zizun, a-bréd diouz ar mintin, e teuas ar merhed d'ar béz, ganto al louzou c'hwéz-vad o-doa pourchaset.

² Kavoud a rejont ar mên ruillet a-zirag dor ar béz. ³ Eet e-barz, ne gavjont ket korv an Aotrou Jezuz.

⁴ E-pad ma choment nehet gand kement-se, setu o tond dirazo daou zén, lugernuz o gwiskamant.

⁵ Kroget aon enno, hag o 'fenn troet war-zu an douar, e klevjont anezo o lavared dezo:

— «Perag e klaskit e-touez ar re varo, an hini a zo beo? ⁶ N'ema ket amañ, savet eo da veo. Dalhit soñj euz ar pez e-noa lavaret deoh, p'edo c'hoaz e Bro-Halilea. ⁷ Lavaret e-noa e tlee Mab an Dén beza laket etre daouarn ar beherien, beza staget ouz ar groaz, ha sevel beo d'an trede deiz».

⁸Dond a reas da zoñj dezo euz e gomzou.

DISKRED AN EBESTEL

⁹ Pa oent distroet euz ar bez, e rojont kelou a gement-se d'an unneg abostol ha d'an oll ziskibien all.

¹⁰ Bez' e oa anezo Mari Madalen, Joanna ha Mari mamm Jakez, hag ar re all euz o hompagnunez a lavare ive ar memez tra d'an ebestel.

¹¹ Med, evid ar re-mañ, ne oa ar homzou-ze nemed sorhennou, ha ne gredjont ket ar merhed.

¹² Pèr a zavas hag a redas d'ar béz. En eur zoubla e benn da zelled e welas al lurennou laket en o 'fart o-unan war an douar. Distrei a reas, souezet ennañ e-unan gand ar pez a oa c'hoarvezet.

DAOU ZISKIBL EMMAUZ

¹³ En deiz-se daou anezo a ree hent war-zu eur geriadenn anvet Emmaüz, div eur vale (47) diouz Jeruzalem. ¹⁴ Ha kaoz a oa ganto euz an oll draou a oa bet c'hoarvezet.

¹⁵ E-kreiz o divizou, pa lavarent o zoñjou an eil d'egile, Jezuz e-unan a zeuas en o-hichenn hag a ree hent ganto. ¹⁶ Med n'oa ket o daoulagad evid e anaoud. ¹⁷ Eñ a lavaras dezo:

— «Peseurt divizou a zo ganeoh en eur vale?»

Chom a rejont a-zav, teñval o'fenn. ¹⁸ Hag unan anezo, Kleopas e ano, a respont dezañ:

— «N'eus nemedout, diavezour e Juruzalem, o veza hep gouzoud an traou c'hoarvezet e kêr en deiziou-mañ».

¹⁹ — «Peseurt traou?» emezañ dezo.

Hag int a respont:

— «Diwar-benn Jezuz a Nazared, a zo bet eur profet, braz e halloud en e oberou hag en e gomzou dirag Doue ha dirag ar bobl a-béz.

²⁰ «Med, ar Veleien-Vraz ha renerien or pobl o-deus e roet d'ar gouarnour, evid ma vefe kondaonet d'ar maro ha staget ouz ar groaz.

²¹ Ni, koulskoude, on-oa esperañs e oa eñ o vond da zavetei Israel. Ha gand kement-se ema bremañ an trede devez abaoe m'eo bet c'hoarvezet an traou.

²² «Gwir eo ez eus merhed euz or re-ni, hag o-deus laket ahanom nehet: eet int, mintin mad, d'ar béz. ²³ N'o-deus ket kavet e gory ha deuet int en-dro. Lavared a reont zoken o-deus gwelet Elez ha klevet ganto ez eo beo.

²⁴ «Neuze, unan bennag ahanom a zo eet beteg ar béz, hag o-deus kavet pep tra evel ma lavare ar merhed, med eñ, n'o-deus ket e welet».

²⁵ Lavared a reas dezo:

— «O tud berr a spered ha pell o kredi kement o-deus lavaret ar brofeted! ²⁶ Daoust ha ne ranke ket ar Mesiaz gouzañv ar poaniou-ze evid antreal en e hloar?»

²⁷ Neuze, o kemer Moizez da genta, ha goudeze an oll brofeted, e tisplegas dezo en oll skrituriou ar pezh a oardiwar e benn.

²⁸ Tostaad a rejont evel-se ouz ar geriadenn, el leh m'edont o vond, hag eñ a reas an neuz da gerzed pelloh. ²⁹ Med int-i a bourchuas warnañ en eur lavared:

— «Chom ganeom, rag deuet eo an abardaez hag an deiz a zo dija war e ziskar». Hag ez eas tre evid chom ganto.

³⁰ Ha setu, e-pad m'edo ouz taol, o veza kemeret ar bara e rentas bennoz hag o veza e dorret her roaz dezo (48).

³¹ Neuze e tigoras o daoulagad hag eh anavezjont anezañ. Med Eñ a yeas kuit diwar o gwél. ³² Hag e lavarjont an eil d'egile:

— «Ha n'eo ket gwir edo or halon o virvi ennom e-pad ma komze ouzom en hent ha ma tisplege deom ar Skrituriou?»

³³ Sevel a rejont raktal ha distrei da Jeruzalem, hag eno e kavjont bodet an unneg abostol hag ar re a oa ganto, hag e klevjont anezo o lavared:

³⁴ — «Gwir mad eo! Dasorhet eo an Aotrou hag en em ziskouezet e-neus da Zimon».

³⁵ Hag an daou ziskibl, d'o zro, da gonta petra a oa digouezet war an hent ha penaoz o-doa e anavezet p'e-noa torret ar bara.

JEZUZ EN EM ZISKOUEZ D'E EBESTEL

³⁶ O komz edont c'hoaz pa erruas Jezuz en o zouez. ³⁷ Souezet braz e oent hag e krogas aon enno; kavoud a ree dezo gweled eur spés. ³⁸ Jezuz a lavaraz dezo:

— «Perag beza strafuillet ha kaoud douetañs en ho kalon? ³⁹ Sellit ouz va daouarn hag ouz va zreid: Me an hini eo. Touchit ouzin ha sellit mad: Eur spés n'e-neus na kig nag eskern evel ma welit din».

⁴⁰ Goude beza komzet evel-se e tiskouezas dezo e zaouarn hag e dreid (49). ⁴¹ O joa a oa ken braz ma ne gredent ket c'hoaz, bamet ma oant gand ar zouez, ha setu ma lavaras Jezuz dezo:

— «Ha bez' ho-peus eun dra bennag da zebri?»

⁴² Kinnig a rejont dezañ eun tamm pesk bet poazet war ar brill. ⁴³ E gemered a reas hag e zebri dirazo.

E GEMENNADUREZIOU DIWEZA

⁴⁴ Goudeze e lavaras dezo:

— «Dalhit soñj er homzou-mañ am-eus bet lavaret deoh p'edon c'hoaz en ho touez: E ranke dond da wir kement a zo skrivet diwar va 'fenn e Lezenn Voizez, er brofeted hag er salmou».

⁴⁵ Neuze e tigoras dezo o spered da intent ar Skrituriou.

⁴⁶ Hag e lavaras dezo:

— «Evel-se eo merket er Skritur Zakr, e-noa ar Zalver da houzañv ar maro ha da zével a varo da veo d'an trede deiz, ⁴⁷ hag e tlee ar cheñch buez evid ar pardon euz ar pehejou beza prezeget en e ano, d'an oll boblou, ha da genta e kêr Jeruzalem.

⁴⁸ «C'hwi eo a zo lakeet da dést a gement-se. ⁴⁹ Emaon o vond da zigas deoh promesa va zad (50). Ha c'hwi, chomit e kêr beteg ma vo deuet deoh an nerz euz an neñv».

JEZUZ O SEVEL D'AN NENV

⁵⁰ Goudeze e kasas Jezuz anezo tost da Vetania. Savet gantañ e zaouarn e vennigas anezo.

⁵¹ Hag e-pad ma vennige anezo, e pelleas diouto hag e oe douget d'an neñv.

⁵² Int-i, goude beza stouet dirazañ, a zistroas e kêr Jeruzalem, levez vraz en o halon.

⁵³ Hag e vezent dalhmad en Templ o rei meuleudi ha bennoz da Zoue.

Notennoù war aviel Sant Lukaz

(1) «Teofil»: Ne houzer ket piou eo an dén-ze hag a reseo digand Sant Lukaz e Avel hag Oberou an Ebestel.

(2) Beleien an Testamant Koz a oa rannet e pevar rummad war 'n-ugent. Pep hini, e-doug eur zizunvez e-noa e dro da zervicha en Templ.

(3) Beza divugel a veze kemeret evid eun dra vezuz, eun dizenor.

(4) Evel m'ema kont ive e Avel Sant Vaze, an daou bennad kenta a ra deom an danevell euz bugaleaj Jezuz e-giz dén; pep tra amañ a-vad o trei endro da Vari ha nann da Jozef.

(5) Darn a dro evel-henn: « Me da zalud, te hag a blij kenañ da Zoue ».

(6) An ano a Jezuz (Ieshua) a oa douget kalz gand ar Juzevien. Talvezoud a ree da lavared: « Doue a zo Salver ». Er wech-mañ e kemer e dalvou-dêgêz leun.

(7) « Kenta ganet » da lavared eo an hini a zo an heritour. An dra-ze ne lavar ket he-deus bet Mari bugale all. Ar re a vez greet « e vreudeur » anezo (8, 19), hervez giz ar Juzevien, n'int nemed e gendirvi.

(8) Pe « Ar Hrist ». Mesiaz ha Krist a zo ar memez gêr. Unan a zo en hebreeg hag egile e gresianeg. Talvezoud a reont da lavaraed: An hini a zo konsakret gand Doue.

(9) Gortoz a ree an deiz ma teufe Doue, hervez e brömesaou, da zavetei e bobl.

(10) Sant Lukaz e-neus klasket amañ merka ar penn kenta euz mision Sant Yann-Vadezour hervez doare an istorourien hresianeg, ha goude, hervez doare an Testament-Koz evid ar Brofeted.

(11) Pep Tetrark a oa mestr war ar palevarz euz ar Palestin.

(12) « Publikaned »: Dastumerien an taillou evid ar Romaned, tud dizonest ha gwelet fall gand ar bobl.

(13) « Lignez Jezuz »: n'eo ket êz gweled a beleh e teu ar hemm a zo etre al lignez-mañ hag hini Sant Vaze. Pep hini a dle beza labouret war danvezioù disheñvel, o tond marteze, pe diouz kostez Mari, pe diouz kostez Jozef.

(14) « Da vare ar huz-heol... » Evid ar Juzevien, eun devez a bade euz eur huz-heol d'eun all: « hag e oe eun abardaez, hag e oe eur beure » a lavar deom an Testamant-Koz. Emaom amañ eta da 'fin ar zabat. Difenn a oa da zougenñ eun dén euz eul leh d'eun all a-raog ar huz-heol.

(15) « Levi » an hini a zo anvet el leh all « Maze » (Mt. 9,9).

(16) Diêz eo an Aviel da zigemer, nevez ma 'z eo e gellenadurez hag o vond kement a-eneb ar plegou pe ar gizioù digemeret.

(17) « Ar Helou Mad » : Hervez diouganou ar Profet Izaiaz. Aze ema eta ar merk eo Jezuz ar Mesiaz.

(18) « Madalen ». N'eo ket ar vaouez-mañ an hevelep hini hag ar behérez bet gwelet eur pennad a-raog, na kennebeud all ar Vari a zo ano anezi e Betania.

(19) Lenn Jenezared. Gweled 13, Aviel Sant Vaze.

(20) Rouantêlêz Doue a zeraou gand prezegêrêz Jezuz. Evel eur hreunnenn nevez ema dija o kellida en or béd deom (Lukaz 17,20 ha 21).

(21) « War-zu Jeruzalem » : Azaleg amañ ha betag 18, 14, Sant Lukaz a gendastum, e kerz eur veaj greet gand Jezuz e Jeruzalem, darvoudou ha n'emaint ket e Sant Mark, hag a zo reñket gand Sant Vaze en eun doare all.

(22) Evid mond euz Bro-Halilea da Jeruzalem, e helled pe heulia ar Jourdan pe treuzi Bro-Zamaria. Evid ar Juzevien, ar Zamaritaned a oa hanter bayaned. Setu perag e oant gwelet fall ganto.

(23) « Rouantêlêz Doue » : Embann Rouantêlêz Doue a zo pouezusoh eged netra all e-béd.

(24) Gweled Notenn 25, Aviel Sant Vaze.

(25) « Mir ouzom da goueza e tentadur » : N'on lez ket da goueza evel en eun toull-trap, pe da veza paket evel en eul las-koulm war an hent. Setu ar skeudenn a zamweler er bedenn-se. Ne houlennom ket ne vem ket tentet, med ma vezim treh d'an tentaduriou.

(26) « Teir varaenn » : n'eo ket torziou braz evel or re, med torziou bihan evel ar re a boazé ar Juzevien war eur mên tomm.

(27) « Eneb ar Spered-Santel » : Gweled N. 27 Sant Vaze.

(28) « Ho kouriz en-dro d'ho kroaz-lêz » : da zerhel dibradet ar zae da helloud ober êsoh a-ze al labour.

(29) « Da zigas an tan » : Tan ar garantez hag a vo c'hwezet war ar béd gand ar Basion hag ar maro ema Jezuz o vond da houzañv.

(30) « Da zigas kelou da Jezuz » : Euz daou zarvoud roet dezañ da houzoud, Jezuz a denn kenteliou rust.

(31) Herodez « al louarn-se » gand e finesaou ne hello cheñch netra er pez a 'fell da Zoue.

(32) « 99 dén just » : war o meno.

(33) « Ar mab foran » : Ar barabolenn-mañ a zo ken kaer ma ne chaner ket d'he lenn ha da hir-zoñjal enni. Ne vez kavet nemed e Aviel Sant Lukaz: Aviel madêlêz Doue.

(34) « Evid e ijin »: Ne veuler ket anezañ evid e zislealded, med evid e ijin. Salo e-nefe pep dén kemend-all a ijin da glask mond e Rouantêlêz Doue.

(35) « Pellig a-walh dioutañ »: Divenn o-doa an dud-lor da dostaad ouz an dud yah.

(36) « En ho-touez ema Rouantêlêz Doue »: Ema Rouantêlêz Doue o tiwan dija e goueled ar halonou. P'en em ziskouezo eun deiz (deiz donedigez Mab an Dén) e wirionez a dreho war an oll. Med evid kalz e vo re ziwezad.

(37) Azaleg amañ, Sant Lukaz ha Sant Mark a vo heñvel a-walh adarre o avielou.

(38) « Evel eur bugel »: Da lavared eo, ken didroidell, ken eeün a galon ha ken anaoudeg.

(39) « Mab da Abraham »: e-neus feiz Abraham.

(40) « Lod Saduseaned »: ar re-mañ 'oa an dud e karg (evel ar Veleien-Vraz), muioh darbareet gand traou ar horv eged gand traou an ene. Gwasa enebourien Jezuz eo bet ar re-mañ. Ar Farizianed, da vihana, a glaske traou ar spered. Kollet e oant-avad gand o lorhentez.

(41) « Dismantr Jeruzalem »: A-dreñv an darvoud-mañ hag a zigouezo er bloaz 70, Jezuz a wél dija o tond an deiz ma 'z aio ar béd-mañ da netra ha ma ne jomo en e blas nemed Rouantêlêz Doue. An daou zardvoud-se en em gav amañ mésk-ha-mésk.

(42) « ... anvet Pask »: Gweled notenn 59 e Sant Vaze.

(43) « ... em gwad »: Gweled notenn 60, Sant Vaze.

(44) « ... A anver madoberoureien »: Eun ano a enor hag a zo bet douget gand meur a roue en Ejipt.

(45) Pilat: Gouarnour roman Bro-Judea.

(46) « Hervez al Lezenn »: Ar zabat a zigore d'ar gwener da noz, d'ar huz-heol. Diwar neuze ne helled muñ ober netra beteg ar huz-heol en deiz war-lerh, hag e gwirionez, beteg ar zao-heol d'ar zul vintin.

(47) « Div eur vale »: tri-ugent « stad », da lavared eo war-dro 12 km.

(48) « ... her roas dezo »: kement-se a zigase da zoñj dezo eur ar Goan-Ziweza, er Gambr-Lid.

(49) « E zaoarn hag e dreid »: Korv Jezuz savet da veo a zo ken gwir hag an hini e-noa a-raog (39, 40), med beva 'ra bremañ e gloar Doue ha ne vez anavezet nemed dre ar feiz (24, 16).

(50) « ... promesa va Zad »: Ar Spered Santel, an hini a dle cheñch kalonou an dud, ha lakaad da zond Rouantêlêz Doue, evel m'eo displeget gand Sant Lukaz e levr « Oberou an Ebestel ».

Kalvar Plougastell:

*Jezuz o walhi o zreid
d'e ebestel.*



Aviel Jezuz-Krist

Hervez Sant Yann

An aviel hervez Sant Yann

A BELEH E TEU

An Aviel hervez Sant Yann eo ar pevare hag an diweza euz ar pevar Aviel, bet skrivet moarvad diwezad a-walh, war-dro fin ar hantved kenta.

Eul lodenn anezañ a-vad a hellfe beza bet skrivet abretoh, rag, war a zeblant, eo bet savet e meur a wech.

Ar pezh a zo gwir eo ez eus bet kavet e Bro-Ejipt eun tammig « papiruz » euz ar bloavez 120 pe war-dro, warnañ eur'frazenn bennag euz Aviel Sant Yann.

N'eo ket mammenn an Aviel-mañ, war a greder, ar memez hini gand mammenn an tri Aviel all. An eñvoriou a gaver amañ euz Jezuz a zeu, a-dra-zur, digand Sant Yann e-unan: « An hini a oa karet gand Jezuz ». Santoud a reer e-neus bet Yann hag e ziskibien prederiet hir-amzer, war gomzou ha war vuzudou Jezuz. Med, moarvad, ar pevare Aviel, evel m'eo bet deuet beteg ennom, n'eo ket bet skrivet war-eün gand Sant Yann, med gand e ziskibien.

PENAOZ EO BET SAVET

Bez' ez eus, er pevare Aviel, meur a bennad hag a gaver en tri Aviel all; evel Badeziant Jezuz, ar varhadourien kaset ermêz euz an Templ, burzud ar bara kresket, ar Gambr-lid, ha dreist-oll Pasion ha Rezureksion Jezuz.

Ha ma n'e-neus danevell e-béd war vugaleach Jezuz, evel Sant Vaze ha Sant Lukaz, e-neus, evelato, eur « rag-lavar », el leh ma tisplég deom sklêr e teu Jezuz euz Doue.

Med ar framm euz e Aviel a zo disheñvel mad gand Yann. Gwelloh e-neus kavet ober eun dibab e-touez an darvoudou a

gaver e buez Jezuz: Kana, Nikodem, ar Zamaritanez, an dén seizet, ar bara kresket, gouel an Teltennou, an dén ganet dall, Lazar, ar Goan-ziweza, ha lakaad da heul an darvoudou-mañ eur gelennadurez hir o tond anezo.

Tad ar pevare Aviel a implij nebeud a heriou. Aliez e vezont ar memez re. Med gand an niver bihan a heriou-ze, e tigor deom dremweliou dreist-ordinal, beteg mond zokén e diabarz Mister Jezuz gwir Doue.

KEMENNADUREZ

Kelou Mad ar Pevare Aviel a zo en e-béz er «rag-lavar»:

Jezuz eo gwir Vab Doue, krouer ar béd. Bez' ez eo ar Vuez evid kement hini a gréd ennañ. Dén eo en em hreet, ha roet e-neus deom da anaoud Mister Doue e Dad, ha digantañ on-eus bet pep tra...

A-dreuz eun nebeud burzudou dibabet gantañ, adreuz eur gelennadurez don, Jezuz, e gwirionez, en em ziskouez evel Sklêrijenn ar béd, evel an hini a zo deuet da rei ar Spered-Santel, an hini en em hra, dre e varo hag e Rezureksion, buez ar béd; ar Bara diskennet euz an Neñv hag a vag evid eur Vuez peurbaduz...

Morse ne heller lavared beza peurlennet an Aviel-ze. Kaer e vez e lenn, e kaver ennañ atao traou nevez, donderiou kuzet.

Peseurt respont a houlenn diganeom? Ar feiz. Hag an dra-ze eo ar pezh a lavar deom al lizer kenta bet skrivet gand ar memez Yann:

«An neb a gréd e Mab Doue, e-neus ennañ testeni Doue. Ha setu amañ pehini eo an testeni-ze: E-neus Doue roet deom ar Vuez peurbaduz, hag ema ar Vuez-se en e Vab. An hini e-neus ar Mab, e-neus ar Vuez. An hini n'e-neus ket Mab Doue n'e-neus ket ar Vuez. Skrivet am-eus deoh an traou-mañ, deoh-c'hwi hag a gréd en ano Mab Doue, evid ma ouezoh mad ho-peus ar Vuez peurbaduz» (1 Yann, 5, 10-13).

Pennad I

RAKLAVAR

¹ Er penn kenta edo ar Gomz (1),
hag ar Gomz a oa gand Doue.
hag ar Gomz a oa Doue.

² Er penn kenta edo gand Doue.

³ Drezañ eo bet greet pep tra,
hag heptañ n'eus bet greet netra.

⁴ Kement a zo bet greet ennañ a oa buez,
hag ar vuez a oa sklerijenn an dud.

⁵ Ar sklerijenn a lugern e-kreiz an deñvalijenn,
hag an deñvalijenn n'he-deus ket dalhet anezi.

⁶ Bez' e oe eun dén, kaset gand Doue,
Yann 'oa e ano.

⁷ Deuet e oa evid beza test,
Med testeni e-noa da rei d'ar sklerijenn,
evid dougenn an oll da gredi drezañ.

⁸ Ne oa ket hennez ar sklerijenn,
med evid rei testeni d'ar sklerijenn e teue.

⁹ Ar Gomz a oa ar sklerijenn wirion
a bar war bep dén en eur zond er béd.

¹⁰ Er béd edo hag ar béd a zo bet greet gantañ
Ha n'eo ket bet anavezet gand ar béd.

¹¹ Deuet eo en e vro
hag e dud n'o-deus ket greet digemer dezañ.

¹² Med, d'ar re o-deus e zigemeret,
d'ar re a gréd en e ano,
e-neus roet galloud da zond da veza bugale da Zoue.

¹³ Ar re-ze n'int ket ganet euz ar gwad, (2)
na diwar youl ar horv,
na diwar bolontez mab-dén,
med euz Doue eo ez int ganet.

¹⁴ Hag ar Gomz a zo en em hreet dén,
ha deuet eo da jom en on-touéz,
ha ni on-eus gwelet e hloar,
an hini a zo dezañ a-berz an Tad, evel Mab unganet
leun a hras hag a wirionez.

¹⁵ Yann a zoug testeni diwar e benn hag a lavar a vouez
kreñv:

*«Hemañ eo an hini a lavaren diwar e benn:
«An hini a zo o tond war va lerh
«a zo bremañ em-raog,
«rag em-raog e oa anezañ».*

¹⁶ Ni on-eus bet oll euz e leunder,
ha gras goude gras.

¹⁷ Al Lezenn a zo bet roet dre Voizez, med ar hras hag ar
wirionez
a zo deuet dre Jezuz-krist.

¹⁸ Dén é-béd n'e-neus gwelet Doue biskoaz.
Ar Mab unganet, hag a zo e kalon an Tad,
Eñ, e-neus diskouezet anezañ.

AN TESTENI ROET GAND YANN

¹⁹ Setu amañ an testeni a roas Yann pa oe kaset davetañ,
gand Juzevien Jeruzalem, beleien ha levited, da ober outañ ar
goulenn-mañ:

— «Piou out-te?»

²⁰ Hag e lavaras ar wirionez, n'he nahas ket hag e tisklerias:

— «N'eo ket me eo ar Hrist».

²¹ Neuze e houlenjont outañ:

— «Piou out? Ha bez' ez out Elias?»...

— «N'on ket», emezañ (3)

— «Ha bez' ez out neuze ar Profet?»

— «N'on ket» emezañ.

²² Neuze e lavarjont dezañ:

— «Piou out? ma kasim respont d'ar re o-deus on digaset. Petra 'lavarez ahanout da unan?»

²³ — «*Me, emezañ, eo ar vouez o krial en dezert; Kempennit an hent d'an Aotrou, evel ma lavaras ar profet Izaias*».

²⁴ Lod euz ar re a oa bet digaset a oa Farizianed, ²⁵ hag a reas c'hoaz outañ ar goulenn-mañ:

— «Perag neuze e vadezez ma n'out nag ar Hrist nag Eliaz nag ar Profet?»

²⁶ Yann a respontas dezo:

— «Me a vadez en dour, med en ho-touez ez eus unan ha n'anavezit ket, ²⁷ an hini a zeu war va lerh ha n'on ket din da ziskoulma dezañ lasou e zandalennou».

²⁸ Kement-se a hoarvezas e Betania, en tu all d'ar ster Jordan, el leh m'edo Yann o vadezi.

OAN DOUE

²⁹ En deiz warlerh Yann a welas Jezuz o tond davetañ, hag e lavaras:

— «Setu Oan Doue, an hini a zilam pehed ar béd! (4) ³⁰ Hemañ eo an hini am-eus lavaret diwar e benn:

« Eun dén a zeu war va lerh
« hag a dremen em-raog,
« rag em-raog e oa anezañ »,

³¹ ha me ne anavezen ket anezañ, med evid ma vefe roet da Israel e anaoud eo ez on deuet da vadezi en dour ».

³² Yann a zisklerias :

— « Gwelet am-eus ar Spered, evel eur goulm, o tiskenn euz an Neñv hag o chom warnañ. ³³ Ha ne anavezen ket anezañ, med an hini e-noa kaset ahanon da vadezi en dour e-noa lavaret din :

— « An hini a weli ar Spered o tiskenn hag o chom warnañ, hennez eo a vadez er Spered Santel.

³⁴ « Ya, gwelet am-eus ha testeni am-eus roet eo Eñ Mab Doue ».

AN DISKIBIEN GENTA

³⁵ Antronoz edo Yann adarre er memez leh gand daou euz e ziskibien. ³⁶ O veza gwelet Jezuz o vond e-biou e lavaras :

— « Setu Oan Doue ».

³⁷ An daou ziskibl a glevas kement-se, hag a yeas da heul Jezuz. ³⁸ Jezuz a zistroas outo hag ouz o gweled o tond d'e heul e lavaras :

— « Petra' glaskit? »

Respont a rejont dezañ :

— « Rabbi! — da lavared eo : mestr — e peleh emañ o chom? »

³⁹ Lavared a reas dezo :

— « Deuit ha gwelit ».

Mond a rejont gantañ hag e weljont e peleh edo o chom, hag e chomjont gantañ en deiz-se. War-dro an degvéd eur e oa (5).

⁴⁰ Andre, breur Simon-Pêr, a oa unan euz an daou o-doa klevet Yann-Vadezour hag a oa eet da heul Jezuz.

⁴¹ Mond a reas da genta da weled Simon e vreur hag e lavaras dezañ:

— «Kavet on-eus ar Mesiaz, da lavared eo ar Hrist. ⁴² Hag e kasas anezañ da gavoud Jezuz. O veza sellet outañ e lavaras Jezuz:

— «Te a zo Simon, mab da Yann, te a vo «Kefa» da ano, da lavared eo «roh».

⁴³ Antronoz e lakeas Jezuz en e zoñj mond da Vro-Halilea. En em gavoud a ra gand Filip hag e lavar dezañ:

— «Deus d'am heul».

⁴⁴ Hogen, Filip a oa euz Betsaida, kêr Andre ha Pêr. ⁴⁵ Mond a ra da gavoud Natanael hag e lavar dezañ:

— «An hini a zo bet skrivet diwar e benn gand Moizez el Lezenn, ha gand ar brofeted, e gavet on-eus: Jezuz eo, mab Jozef euz Nazared».

— ⁴⁶ Daoust hag euz Nazared e hell dond eun dra bennag a vad?» eme dezañ Natanael.

— «Deus da weled», a lavaras Filip.

⁴⁷ Jezuz a zell ouz Natanael a oa o tond beteg ennañ, hag e lavaras diwar e benn:

— «Setu amañ eur gwir Israelad ha n'eus ket a widre ennañ».

— ⁴⁸ «Penaos eh anaveztez-te ahanon?» a lavaras Natanael dezañ.

Jezuz a respontas:

— «A-raog, zokén, ma oes bet galvet gand Filip, p'edos dindan ar wezenn 'fiez, am-eus da welet».

⁴⁹ Ha Natanael dezañ:

— «Rabbi, Mab Doue out, Roue Israel out!»

⁵⁰ Jezuz a lavaras dezañ « Ablamour m'am-eus lavaret dit: « da weled am-eus dindan ar wezenn fiez e kredez, kalz brasoh traou a weli. »

⁵¹ Hag e lavaras c'hoaz:

— « E gwirionez, e gwirionez, m'hel lavar deoh, gweled a reoh an Neñv digor hag an Elez o sevel hag o tiskenn a-uz da Vab Doue ».

Pennad II

EURED KANA

¹ D'an trede deiz e oe eun eured e Kana Bro-Halilea, ha mamm Jezuz a oa eno.

² Pedet'oa bet Jezuz ive d'an eured hag e ziskibien gantañ.

³ War-nes mankoud edo ar gwin; mamm Jezuz a lavaras dezañ:

— « N'o-deus mui a win ».

⁴ Jezuz a respontas dezi:

— « Petra vije etrezom maouez? N'eo ket deuet c'hoaz va eur » (6).

⁵ E vamm a lavaras neuze d'ar zervicherien:

— « Grit kement tra a lavaro deoh ».

⁶ Laouerou mên a oa eno, c'hweh anezo, a zerviche d'ar Juzevien d'en em walhi hervez al lezenn, hag e pep hini ez ee daou pe dri vuzuliad. (7)

⁷ Jezuz a lavaras dezo:

— « Kargit al laouerou-ze a zour ».

Hag int-i d'o leunia rez ar bord.

⁸ Lavared a reas goudeze:

— «Kemerit bremañ ha kasit d'an ostiz».

Kas a rejont dezañ.

⁹ An ostiz, p'e-noe tañvet an dour troet e gwin, hep gouzoud a beleh e teue — ar zervicherien o-doa tennet an dour a ouïe mad — a halvas ar gwaz-nevez hag a lavaras dezañ:

¹⁰ — «An dud, emezañ, a lak war an daol ar gwin mad da genta, ha pa vez tommet d'ar pennou, an hini falloh. Te, er hontrol, az-peus miret ar gwin mad beteg bremañ».

¹¹ Setu burzud kenta Jezuz, greet gantañ e Kana Bro-Halilea. Diskouez a reas e hloar hag e ziskibien a gredas ennañ.

¹² Goudeze e tiskennas Jezuz da gêr Kafarnaom, gand e vamm, e vreudeur hag e ziskibien, hag e chomjont eno eun nebeud deveziou.

JEZUZ HAG AN TEMPL

¹³ Tost edod da houel Pask ar Juzevien; Jezuz a bignas da gêr Jeruzalem,

¹⁴ E diabarz an templ e kavas ar varhadourien o werza ejenned, deñved ha koulmed, hag ive an drokerien arhant.

¹⁵ Neuze, o veza greet eur skourjez gand kerdin, e taolas anezo oll er-mêz euz an templ, deñved hag ejenned hag all; strewi 'reas moneiz an drokerien ha taoler o zaoliou d'an traoñ.

¹⁶D'ar re a oa o werza koulmed e lavaras:

— «Kasit an traou-ze kuit a-hann; na rit ket euz ti va Zad eur stal-genwerz».

¹⁷ Soñj a zeuas d'e ziskibien euz komzou ar Skritur-Zakr:

«*Tan ar gréd evid da di a zèv ahanon*».

¹⁸ Med ar Juzevien a lavaras dezañ :

— « Peseurt sin a ziskouezez deom evid ober kemend-all? »

¹⁹ Jezuz a respontas dezo :

— « Diskarit an templ-mañ, hag e tri devez e lakin anezañ en e-zav ».

²⁰ Ar Juzevien a lavaras dezañ : (8)

— « C'hweh bloaz ha daou-ugent a zo eet da zevel an templ-mañ, ha te henn adsavo e tri devez? »

²¹ Med Jezuz e-noa komzet euz an templ ma oa e gorr. ²² Setu pa oe savet a-douez ar re varo, e ziskibien a deuas da zoñj dezo e-noa lavaret kement-se ; hag e krédjont er Skritur-Zakr hag e komzou Jezuz.

²³ E-pad ma chomas e Jeruzalem evid gouel ar Pask, kalz tud a gredas ennañ, o veza gwelet ar burzudou a ree.

²⁴ Jezuz, evelato, ne lakee ket e 'fiziañs enno rag anaoud a ree anezo oll. ²⁵ Ha n'e-noa ezomm euz testeni e-béd diwarbenn doareou an dén, rag gouzoud a ree e-unan petra'zo en dén.

Pennad III

JEZUZ HA NIKODEM

¹ E-touez ar Farizianed e oa eun dén anvet Nikodem, unan euz Pennou-Braz ar Juzevien.

² Dond a reas da gavoud Jezuz, en noz, hag e lavaras dezañ :

— « Mestr, gouzoud a reom eo a-bez Doue ez out deuet da gelenn an dud, rag dén e-béd ne hell ober ar burzudou a rez, ma n'ema ket Doue gantañ ».

³ Jezuz a lavaras dezañ:

— «E gwirionez m'hel lavar dit,
dén e-béd, ma ne vez ket ganet euz an Neh
ne hell gweled Rouantêlêz Doue».

⁴ Ha Nikodem a lavaras dezañ:

— «Med penaoz e hell eun dén beza ganet
pa 'z eo deuet koz?
Daoust ha mond a hell adarre e kov e vamm
ha beza ganet a-nevez?»

⁵ Jezuz a respontas:

— «E gwirionez, e gwirionez, m'hel lavar dit,
dén e-béd, ma ne vez ganet a-nevez
euz an dour hag euz ar Spered-Santel
ne hell antreal e Rouantêlêz Doue.

⁶ Kement a zo bet ganet diwar an natur-dén
n'eo nemed natur-dén,
ha kement a zo bet ganet euz ar Spered
a zo spered.

⁷ Ne d-a ket da veza souezet
m'am-eus lavaret dit:

«Réd eo beza ganet euz an Neh».

⁸ «An avel (9) a c'hwéz en tu ma kar,
ha klevet a rez he mouez.

N'ouzout ket a-vad
nag euz peleh e teu
na da beh euz a.

Evel-se ema kont
gand kement dén a zo ganet euz ar Spered».

⁹ Nikodem a lavaras:

— «Penaoz e hell an traou-ze c'hoarvezoud?»

¹⁰ Jezuz a respontas dezañ:

— «Te 'zo mestr-kelenner en Israel
ha n'ouzout ket an traou-ze?»

- ¹¹ « E gwirionez, e gwirionez, m'hel lavar dit :
Ni a gomz euz ar pez a ouzom ;
Ni a ro testeni euz ar pez on-eus gwelet ;
med ne resevit ket on testeni.
- ¹² « Ma ne gredit ket
pa gomzan euz traou an douar,
Penaos e kredfeh
ma komzfen deoh euz traou an Neñv ?
- ¹³ Ha koulskoude, dén n'eo savet d'an Neñv
nemed an hini a zo diskennet euz an Neñv,
Mab an Dén (10).
- ¹⁴ « Evel m'e-noa Moizez, gwechall,
savet er vann an naer arem, en dezert (11),
evel-se ive
e ranko Mab an Dén beza savet en uhel,
- ¹⁵ evid m'e-no drezañ ar vuez peurbaduz
kement hini a gréd ennañ.
- ¹⁶ « Ken braz eo bet karantez Doue evid ar béd
m'e-neus roet e Vab unganet
evid n'ez aio ket da goll
kement hini a gred ennañ,
hogen, m'e-no ar vuez peurbaduz.
- ¹⁷ « Rag Doue e-neus digaset e Vab er béd,
n'eo ket evid barn ar béd,
med evid ma vo salvet ar béd drezañ.
- ¹⁸ « An neb a gréd ennañ
n'eo ket barnet ;
an neb ne gréd ket ennañ
â zo dija barnet (12)
pegwir n'e-neus ket kredet
e Mab unganet Doue.
- ¹⁹ « Evel-henn ema ar varnedigez :
Ar sklêrijenn a zo deuet er béd,

hag an dud o-deus kavet gwelloc'h
an deñvalijenn eged ar sklêrijenn,
ablamour ma oa fall o oberou.

²⁰ «Rag kement dén a ra an droug
e-neus kas ouz ar sklêrijenn:
ne 'fell ket dezañ mond er sklêrijenn
gand aon na vefe diskuliet e oberou.

²¹ «Med an neb a vév hervez ar wirionez
a ya daved ar sklêrijenn,
evid ma vo anavezet
ez eo greet e oberou hervez Doue».

JEZUZ E BRO-JUDEA

²² Goude ez eas Jezuz gand e ziskibien da Vro-Judea.
Chom a reas eno ganto hag e vadeze.

²³ Yann, diouz e du, a vadeze e Ainon, nepell diouz
Salim, el leh ma 'z eus kalz a zour; an dud a zeue da veza
badezet. ²⁴ Rag Yann n'oa ket bet c'hoaz taolet er prizon.

²⁵ Hogen, tabut a zavas etre diskibien Yann hag eur
Juzeo diwar-benn glanidigez. ²⁶ Dond a rejont da gavoud
Yann, ha lavared dezañ:

— «Rabbi, an hini a oa ganit en tu all d'ar Jourdan, an
hini az-peus roet testeni dezañ, setu eñ ive o vadezi, hag ez a
an oll davetañ».

²⁷ Yann a respontas dezo:

— «Ne hell eun dén reseo netra
ma n'eo ket bet roet dezañ euz an Neñv.

²⁸ «C'hwí hoh-unan a zo test em-eus lavaret:
«Me n'on ket ar Hrist,
med bez' ez on an hini
a zo bet kaset en e raog».

29 « An hini e-neus ar wrég eo ar pried
ha mignon ar pried a jom aze,
a zelaou anezañ,
ha mouez ar pried a ro dezañ levenez leun-barr!
Setu aze va levenez,
ha leun-barr eo.

30 « Réd eo dezañ kreski
ha din-me disterraad.

31 « An hini a zeu euz an Neh
a zo a-uz d'an oll;
an hini a zeu euz an douar
a zo douarel
hag a gomz en eun doare douarel.

An hini a zo euz an Neñv
32 a ro testeni euz ar pez e-neus gwelet
hag ar pez e-neus klevet,
ha ne ro dén digemer d'e desteni.

33 « An hini a zigemer e desteni
a warant eo Doue gwirion.

34 « Evid gwir
an hini a zo bet kaset gand Doue
a lavar komzou Doue;
ha Doue a ro dezañ ar Spered hep konta.

35 « An Tad a gar ar Mab,
ha lakeet e-neus pep tra etre e zaouarn.

36 « An hini a gréd er Mab
e-neus ar vuez peurbaduz;
med an hini ne gréd ket er Mab
ne welo ket ar vuez;
med kounnar Doue a jom warnañ ».

Pennad IV

AR ZAMARITANEZ

¹ Pa ouezas Jezuz o-doa ar Farizianed klevet e houneze hag e vadeze muioh a ziskibien eged Yann, — ² e gwirionez, Jezuz ne vadeze ket, med e ziskibien —, ³ e kuiteas Bro-Judea, hag e tistroas da Vro-Halilea. ⁴ Hag e ranke treuzi Bro-Zamaria.

⁵ Digouezoud a reas en eur gêr euz Bro-Zamaria, anvet Sikar, demdost d'an douarou bet roet gand Jakob da Jozef e vab. Puñs Jakob a oa eno.

⁶ Eet skuiz gand an hent, ez eas Jezuz da azeza war bord ar puñs. War-dro ar c'hwehved eur e oa.

⁷ Dond a reas eur vaouez euz tud Bro-Zamaria da gerhad dour.

Jezuz a lavaras dezi:

— «Ro din da eva!»

⁸ Rag e ziskibien a oa eet e kêr da brena peadra da zebri.

⁹ Ar Zamaritanez a lavaras dezañ:

— «Petra! Te, eur Juzeo, a houlenn da eva diganin-me, eur Zamaritanez?» (13).

N'eus ket a zarempred etre ar Juzevien ha tud Bro-Zamaria.

¹⁰ Jezuz a respontas dezi:

— «Ma 'h anavezfes donezon Doue,
ha ma ouezfes piou a zo o lavared dit:

«Ro din da eva»,
Te eo a houlennfe digantañ,
hag eñ a rofe dit dour beo» (14).

¹¹ Ar vaouez a lavaras dezañ:

— «Aotrou, n'az-peus netra evid tenna dour,
hag eo don ar puñs. Euz peleh eta az-pevez
an dour beo-ze?»

¹² « Ha brasoh e vefes eged on Tad Jakob e-neus roet deom ar puñs-mañ, hag e-neus bet evet dour anezañ, eñ, e vugale hag e loened? »

¹³ Jezuz ar respontas dezi:

— « An neb a év euz an dour a zo amañ e-no sehed c'hoaz;

¹⁴ An neb, a-vad, a evo euz an dour a roin dezañ n'e-no ket sehed biken mui hag an dour a roin dezañ a zeuio da veza ennañ eur stivell hag a darzo e buez peurbaduz ».

¹⁵ Ar vaouez a lavaras dezañ:

— « Aotrou, ro din euz an dour-ze da eva, ma n'am-bo mui sehed, ha ma n'am-bo ket ezomm da zond amañ da gerhad dour ».

¹⁶ Jezuz a lavaras dezi:

— « Kerz da helver da bried, ha deus en-dro ».

¹⁷ Ar vaouez a respontas:

— « N'am-eus pried e-béd ».

¹⁸ — « Gwir a lavarez, eme Jezuz, n'az-peus pried e-béd, rag pemp gwaz az-peus bet, hag an hini a zo ganit bremañ, n'eo ket da bried. Aze az-peus lavaret ar wirionez ».

¹⁹ Ar vaouez a lavaras dezañ:

— « Aotrou, gweled a ran ez out eur profet. On Tadou o-deus adoret Doue war ar menez-mañ, ²⁰ Ha c'hwi a lavar eo da Jeruzalem eo mond da adori ».

²¹ Jezuz a lavaras dezi:

— « Dond a ra an eur ha ma ne vo na war ar menez-mañ, nag e Jeruzalem ho-po da adori an Tad.

- ²² « C'hwi a ador ar pezh n'anavezit ket,
 ha ni ar pezh a anavezom;
 rag euz ar Juzevien eo e teu ar zilvidigez.
- ²³ « Med dond a ra an eur
 — ha bremañ eo —
 ma vo an dud a wir relijion
 oh adori an Tad a spered hag e gwirionez.
 Ar seurt tud-se eo a glask an Tad d'e adori. »

²⁴ « Spered eo Doue,
 hag an dud a 'fell dezo e adori
 a dle henn ober a spered hag e gwirionez ».

²⁵ Ar vaouez a lavaras dezañ:
 — « Gouzoud a ran ez eus eur Mesiaz o tond, da
 lavared eo ar Hrist; hennez pa vo deuet a zesko
 deom pep tra ».

²⁶ — « Me eo, eme Jezuz,
 me hag a gomz ganit ».

²⁷ Ha d'an ampoent e tigouezas e ziskibien. Souezet e
 oent o veza ma komze gand eur vaouez. Koulskoude, hini
 e-béd ne lavaras dezañ: « Petra emhout o klask? », pe: « Perag
 emhout o komz ganti? »

²⁸ Ar vaouez, neuze, a lezas aze he 'fod dour, hag a yeas e
 kêr da lavared d'an dud:

²⁹ — « Deuit da weled eun dén, hag e-neus lavaret din
 kement am-eus greet. Ha ne vefe ket eñ ar Hrist? »

³⁰ Hag an dud dond er-mêz euz kêr da gavoud Jezuz.

³¹ E-keid-se, an diskibien a bede Jezuz:

— « Mestr, emezo, deus da zebri ».

³² Med eñ a respontas:

— « Me am-eus da zebri eur bevañs ha ne anavezit ket ».

³³ An diskibien neuze a lavaras kenetrezo:

— « Ha bet e vije unan bennag o tigas dezañ da zebri? »

- ³⁴ Jezuz a lavaras dezo:
— «Setu amañ va bevañs:
Ober bolontez an hini
e-neus va digaset er béd,
ha kas da benn e labour.
- ³⁵ «Ha ne lavarit-hu ket:
«Pevar miz c'hoaz
hag e vo an eost?»
Setu e lavaran deoh:
«Savit ho taoulagad
ha gwelit ar mêziou
penaoz int gwenn dija evid an eost».
- ³⁶ «An eoster a reseo e hopr
hag a zastum frouez
evid ar vuez peurbaduz,
e seurt ma 'z eo laouen
koulz an hader hag an eoster.
- ³⁷ «Amañ a teu da wir ar pezh a vez lavaret:
Unan a had, unan all a ra an eost.
- ³⁸ «Me am-eus ho kaset, c'hwi, da eosti
ar pezh n'ho-peus ket bet a labour gantañ.
Re all o-deus labourer
ha c'hwi a zeu da zastum frouez o labour».

³⁹ Kalz a Zamaritaned euz ar gêr-se o-doa kredet ennañ,
ablamour da gomzou ar vaouez a roe an testeni-mañ: diskle-
riet e-neus din kement am-eus greet. ⁴⁰ Rag-se, eur wech
erruet beteg ennañ, ar Zamaritaned-se a bedas anezañ da jom
ganto. Ha chom a reas eno daou zevez. ⁴¹ Kalz stankoh e
teujont neuze da gredi ennañ ablamour d'e gomzou e-unan. ⁴²
Hag e lavarent d'ar vaouez:

— «N'eo ket mui diwar da lavarou-te e kredom, rag ni
on-unan on-eus e glevet, ha gouzoud a reom eo eñ, e gwirio-
nez, Salver ar béd».

PAREANS MAB AN OFISER

⁴³ Daou zevez goude ez eas kuit Jezuz ahano evid distrei da Vro-Halilea. ⁴⁴ Evid gwir, diskouezet e-noa Jezuz ne vez ket enoret eur profet en e vro e-unan.

⁴⁵ Koulskoude, p'en em gavas e Bro-Halilea, e oe digemeret mad gand Galileiz eet int-i o-unan da Jeruzalem evid ar gouel, hag o-doa gwelet kement e-noa greet.

⁴⁶ Jezuz a zistro eta da Gana a Vro-Halilea, el leh m'e-noa troet an dour e gwin. Eno e oa eun ofiser d'ar roue. klañv e oa e vab e Kafarnaom. ⁴⁷ O veza klevet e oa deuet Jezuz euz Bro-Judea da Vro-Halilea, e teuas d'e weled ha d'e bedi da ziskenn, ha da barea e vab dare da vervel.

⁴⁸ Jezuz a lavaras dezañ:

— «Nemed ha gweled a rafeh sinou ha burzudou ne gredoh morse».

⁴⁹ An ofiser a lavaras dezañ:

— «Diskenn a-raog na varvo va mab».

⁵⁰ Jezuz dezañ:

— «Kerz, beo eo da vab».

Kredi a reas an dén-se er gomz e-noa lavaret Jezuz dezañ, hag ez eas en hent.

⁵¹ P'edo o tiskenn, e teuas e zervicherien en arbenn dezañ hag e lavarjont: «Beo eo da vab». ⁵² Goulenn a reas outo da bed eur e oa en em gavet gwelloh. «Deh eo, emezo dezañ, d'ar zeizved eur (15), ez eo eet an derzienn dioutañ».

⁵³ Gweled a reas an tad eo d'an eur-ze end-eün e-noa lavaret Jezuz dezañ: «Beo eo da vab». Kredi a reas neuze, eñ hag oll e dud.

⁵⁴ Setu an eil sin a reas Jezuz goude beza distroet euz Bro-Judea da Vro-Halilea.

Pennad V

EUN DEN SEIZET PAREET E JERUZALEM (16)

¹ Goudeze e oe eur gouel braz evid ar Juzevien, hag e pignas Jezuz da Jeruzalem.

² E Jeruzalem, e-tal dor an deñved, ez eus eul lenn anvet Bedzata en hebreeg, hag he-deus pemp porched.

³ Dindanno e veze war o gourvez eun niver braz a dud klañv, tud dall, kamm, seizet [o hortoz e teufe an dour da vourbouilla, ⁴ rag beb an amzer e tiskenne êl an Aotrou el lenn hag a lakee an dour da vourbouilla. An hini a ziskenne da genta e-barz goude bourbouill an dour a veze pareet euz e gleñved, n'eus forz peseurt e vefe.]

⁵ Bez e oa eno eun dén, klañv abaoe eiz vloaz ha tregont. ⁶ Jezuz a welas anezañ war e hourvez, hag o klevet edo er stad-se abaoe hir amzer dija, e lavaras dezañ:

— «Ha c'hoant ez-peus da barea?»

⁷ — «Aotrou, eme dezañ ar hlañvour, n'em-eus dén d'am zaoler el lenn kerkent ha ma vez bourbouill gand an dour; hag amzer din da vond, unan all a ziskenn en dour em-raog».

⁸ Jezuz a lavaras dezañ:

— «Sav, kemer da hravaz ha kerz».

⁹ Kerkent e oe pareet an dén. Kemer a reas e hravaz hag e kerze.

Hogen eun deiz sabat oa an deiz-se. ¹⁰ Setu ma lavaras ar Juzevien d'an hini a oa bet pareet:

— «Ar zabat a zo; n'az-peus ket droad da gas da wele ganit».

¹¹ Med respont a reas dezo:

— «An hini e-neus va fareet eo e-neus lavaret din:
«Kemer da hravaz ha kerz».

¹² Goulenn a rejont outañ :

— « Piou eo an dén e-neus lavaret dit : « Kemer da hra-vaz ha kerz ? »

¹³ Med an hini a oa bet pareet ne ouie ket piou e oa, rag Jezuz a oa en em dennet kuit a-douez an dud a oa war al leh. ¹⁴ Diwezatoh e kavas Jezuz anezañ en Templ, hag e lavaras dezañ :

— « Setu te pareet ; na beh ket mui gand aon na zigouezfe gwasoh ganit ».

¹⁵ An dén a yeas da gonta d'ar Juzevien e oa Jezuz an hini e-noa e bareet. ¹⁶Setu perag e klaske ar Juzevien heskina Jezuz en abeg m'e-noa greet an dra-ze eun devez sabat.

¹⁷ Ha Jezuz a respontas dezo :

— « Va Zad beteg bremañ a labour, ha me ive a labour ».

GALLOUD AR MAB

¹⁸ Setu perag ne glaske ar Juzevien nemed muioh c'hoaz e lakaad d'ar maro, rag n'oa ket a-walh dezañ terri lezenn ar zabat, lavared a ree ouspenn e oa Doue tad dezañ e-unan, oh en em lakaad evel-se par da Zoue.

¹⁹ Neuze e komzas Jezuz hag e lavaras dezo :

— « E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh :
Ne hell ar Mab ober netra anezañ e-unan,
med hepkén ar pez a wél an Tad oh ober.
Rag ar pez a ra an Tad,
ar Mab her gra er memez doare.

²⁰ « Rag an Tad a gar ar Mab,
hag a ziskouez dezañ kement a ra.
Diskouez a raio dezañ oberou brasoh c'hoaz,
ma vezoh estlammet ganto.

²¹ « Evel ma ra an Tad d'ar re varo
sevel ha beva,

ar Mab ive a ro buez
d'ar re a 'fell dezañ.

- 22 « Ne varn an Tad dén e-béd;
roet e-neus d'ar Mab pep barnedigez.
- 23 « Evid ma 'h enoro an oll ar Mab
evel ma 'h enoront an Tad.
An neb ne enor ket ar Mab
ne enor ket kennebeud an Tad
e-neus kaset anezañ.
- 24 « E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh,
an hini a zelaou va homzou,
hag a gréd en hini e-neus kaset ahanon,
hennez e-neus ar vuez peurbaduz,
ha ne gouez ket dindan ar varnedigez,
rag tremenet eo dija
euz ar maro d'ar vuez.
- 25 « E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh:
Dond a ra an eur,
ha bremañ eo dija (17),
ma klevo ar re varo mouez Mab Doue,
hag ar re o-do klevet anezi a vevo.
- 26 « Evel m'e-neus an Tad
ar vuez ennañ e-unan,
evel-se e-neus greet d'ar Mab
kaoud ar vuez ennañ e-unan,
- 27 hag e-neus roet dezañ ar halloud da varn,
rag ma 'z eo Mab an Dén.
- 28 « Na vezit ket souezet:
Dond a ra an eur ma teuio da gleved e vouez,
ar re oll a zo er beziou,
ha ma teuio er-mêz,
- 29 ar re o-do greet ar mad
oh adsevel evid ar vuez,
ar re o-do greet an droug
oh adsevel evid beza barnet.

- 30 « Me ne hellan ober netra ahanon va-unan;
 hervez ar pezh a glevan eo e varnan;
 ha just eo va barnedigez,
 rag ne glaskan ket va bolontez va-unan,
 med bolontez an hini e-neus kaset ahanon.
- 31 « Ma rofen testeni d'in va-unan,
 ne vefe ket va zesteni da veza kredet.
- 32 « Med unan all a zo
 hag a zoug testeni diwar va 'fenn,
 ha gouzoud a ran
 eo gwirion an testeni-ze (18).
- 33 « Kaset ho-peus kannaded da gavoud Yann,
 ha roet e-neus testeni d'ar wirionez.
- 34 « Evidon-me, n'eo ket am-befe
 da reseo testeni eun dén,
 med evel-se eo e komzan
 evid ma vefeh salvet.
- 35 « Yann a oa ar houlaouenn
 a vez alumet,
 hag a skéd,
 ha plijet eo bet ganeoh kemer joa
 eur pennadig
 ouz e sklêrijenn.
- 36 « Hogen, brasoh testeni am-eus
 eged hini Yann.
 Hag an oberou e-neus va Zad
 roet din da gas da benn,
 an oberou-ze end-eün a ran
 a ro testeni din,
 ez eo an Tad e-neus kaset ahanon.
- 37 « Va Zad e-unan,
 Eñ hag e-neus kaset ahanon,
 e-neus roet testeni diwar va 'fenn.
 Biskoaz n'ho-peus klevet e vouez
 na gwelet e zremm,

- 38 « ha n'ema ket e Gomz o chom ennoh,
rag ma ne gredit ket
en hini a zo bet kaset gantañ.
- 39 « Furchal a rit ar Skrituriou,
ablamour ma soñj deoh
kavoud enno ar vuez peurbaduz,
hag int-i eo
a ro testeni diwar va 'fenn,
- 40 « ha ne 'fell ket deoh dond davedon
evid kaoud ar vuez peurbaduz.
- 41 « Ar hloar a zeu a-berz an dud
ne resévan ket anezi.
- 42 « Ha neuze, hoh anaoud a ran:
N'ho-peus ket ennoh karantez Doue.
- 43 « Me 'zo deuet en ano va Zad,
ha ne 'fell ket deoh ober digemer din;
Ma teufe unan bennag all en e ano e-unan,
e tigemerfeh anezañ.
- 44 « Penaoz e hellfeh kredi,
c'hwi hag a denn ho kloar an eil euz egile,
ha ne glaskit ket ar hloar
a zeu euz Doue hepkén?
- 45 « N'it ket da zoñjal
e tamallin me ahanoh dirag an Tad.
Ho tamaller a vo Moizez
ho-peus laket ennañ hoh esperañs.
- 46 « E gwirionez, m'ho-pije kredet e Moizez
e kredfeh ennon ive,
rag diwar va 'fenn e-neus skrivet.
- 47 « Ma ne gredit ket er pez e-neus skrivet,
penaoz e kredfeh er pez a lavaran? »

Pennad VI

AR BARA KRESKET

¹ Neuze e treizas Jezuz evid mond en tu all da vor Galilea, pe vor Tiberiad.

² War e lerh e teue eur bobl vraz a dud, ablamour ma welent ar burzudou a ree war ar re glañv.

³ Setu perag e pignas Jezuz war ar menez hag eh azezas eno gand e ziskibien. ⁴ Tost e oa ar Pask, gouel ar Juzevien (19).

⁵ Jezuz o veza savet e zaoulagad ha gwelet eur bobl vraz a dud o tond etrezeg ennañ, a lavaras da Filip:

— «E peleh e prenim bara evid rei dezo da zebri?»

⁶ Komz a ree evel-se evid e amproui, rag eñ a ouie mad petra edo o vond da ober.

⁷ Respont a reas Filip:

— «Daou hant dinerad bara a vefe re nebeud evid rei eun draig bennag da beb hini».

⁸ Unan euz an diskibien, Andre, breur da Zimon-Pèr a lavaras da Jezuz:

⁹ — «Bez' ez eus amañ eur paotr hag a zo gantañ pemp baraenn heiz ha daou besk. Med petra eo an dra-ze evid kemend-all a dud?»

¹⁰ Neuze e lavaras Jezuz:

— «Grit d'an dud azeza».

Kalz a yeot a oa el leh-se. Azeza a rejont eta. War-dro pemp mil gwaz a oa anezo.

¹¹ Jezuz a gemeras ar baraennou, a reas eur bedenn a drugarez, hag a ingalas anezo etre an dud a oa eno; gand ar pesked e reas kemend all. Rei a reas dezo kement ha m'o-doa c'hoant da gaoud.

¹² P'o-doa debret an dud hervez o c'hoant, e lavaras Jezuz d'e ziskibien:

— «Dastumit an tammou a jom, ma ne 'z ay netra da goll».

¹³ O dastum a rejont, ha diwar ar pemp baraenn heiz e kargjont daouzeg panerad euz an tammou chomet a zilerh a re o-doa debret.

¹⁴ Hag an dud-se, o weled ar burzud greet gantañ, a lavare:

— «Hemañ eo e gwirionez ar profet braz, an hini a dle dond er béd».

¹⁵ Hag o houzoud edond o tond d'e gemer dre nerz evid e lakaad da roue, en em dennas Jezuz e-unan-penn, war ar menez.

JEZUZ A VALE WAR AR MOR

¹⁶ Deuet an abardaez, e tiskennas e ziskibien betek ar mor.

¹⁷ Hag int-i pignad en eur vag evid mond da Gafarnaom, en tu all d'ar mor.

Dija e oa kouezet an deñvalijenn, ha ne oa ket deuet Jezuz betek enno. ¹⁸ An avel a c'hweze kreñv hag ar mor a oa rust (20).

¹⁹ Roeñvet o-doa war hed pemp stad (21) war 'n ugent pe dregont, pa weljont Jezuz o kerzed war ar mor hag o tostaad ouz ar vag. Neuze 'krogas aon enno.

²⁰ Jezuz a lavaras dezo:

— «Me eo, n'ho pet ket aon!»

²¹ Felloud a reas dezo e gemer er vag, med kerkent e touaras ar vag el leh m'edont o vond.

AR BARA A VUEZ

²² Antronoz, an dud a oa chomet en tu all a welas n'oa bet eno nemed eur vag, hag ne oa ket eet Jezuz enni gand e ziskibien: ar re-mañ a oa eet kuit o-unan.

²³ A-hend-all, bagou all o tond euz Tiberiad a oa digouezet e-kichenn al leh m'o-doa debret ar bara goude m'e-noa an Aotrou lavaret ar bedenn a drugarez.

²⁴ P'o-doa gwelet an dud n'edo mui eno na Jezuz nag e ziskibien, e savjont int-i ive er bagou evid mond da Gafarnaom, war glask euz Jezuz.

²⁵ Hag o veza e gavet en tu all d'ar mor, e lavarjont dezañ:

— «Mestr, pe da vare out deuet amañ?»

²⁶ Jezuz a respontas dezo:

— «E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh: War glask ahanon emao, n'eo ket ablamour m'ho-peus gwelet sinou burzuduz, med ablamour m'ho-peus debret hervez ho c'hoant.

²⁷ «Grit eta oberou,
n'eo ket evid ar vagadurez a ya da 'fall
med evid ar vagadurez a jom e buez peurbaduz;
an hini a ro deoh Mab an Dén,
rag Eñ e-neus an Tad hag a zo Doue
merket gand e ziell».

²⁸ An dud a lavaraz dezañ:

— «Petra on-eus da zeveni evid ober oberou Doue?»

²⁹ Respont a reas Jezuz dezo:

— «Setu amañ an oberenn a houlenn Doue diganeoh: Kredi en hini e-neus va kaset er béd».

³⁰ Hag e larvarjont dezañ:

— «Med peseurt sin a rez-te deom evid ma welim ha ma kredim ennout? Peseurt oberenn a rez?»

³¹« On Tadou gwechall o-deus debret ar mann er goueleh, hervez ma lavar ar Skritur:

« Eur bara euz an Neñv e-neus roet dezo ».

³² Med Jezuz a lavaras dezo:

— « E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh: Neo ket Moizez eo e-neus roet deoh ar bara euz an Neñv, med va Zad eo a ro deoh ar bara gwirion deuet euz an Neñv.

³³ « Rag bara Doue eo an hini a ziskenn euz an Neñv hag a ro buez d'ar béd ».

³⁴ Neuze e lavarjont dezañ:

— « Aotrou, roit deom bepréd euz ar bara-ze ».

³⁵ Ha Jezuz a lavaras dezo:

— « Me eo bara ar vuez (22);
An neb a zeu davedon
n'e-no ket naon kén,
hag an neb a gred ennon
sur, n'e-no mui biken sehed ».

³⁶ « Med lavaret am-eus deoh:
Va gwelet ho-peus
ha koulskoude ne gredit ket.

³⁷ « Ar re oll a ro din va Zad
a zeuio davedon,
hag an hini a zeu davedon,
nann, ne daolin ket anezañ er-mêz.

³⁸ « Rag diskennet on euz an Neñv,
evid ober, n'eo ket va bolontez,
med bolontez an hini e-neus kaset ahanon.

³⁹ « Ha bolontez an hini e-neus kaset ahanon eo
ne gollfen nikun
euz ar re e-neus roet din,
med ma savfen anezo a varo da veo,
d'an deiz diweza.

- 40 Rag bolontez va Zad eo
 m'e-nefe ar vuez peurbaduz
 kement hini a wél ar Mab
 hag a gréd ennañ;
 ha me a adsavo anezañ a varo da veo
 d'an deiz diweza ».
- 41 Ar Juzevien a hrosmole diwar e benn, ablamour
 m'e-noa lavaret; « me eo ar bara diskennet euz
 an Neñv ». Hag e lavarent :
- 42 « Ha n'eo ket eñ Jezuz, mab Jozef, a anavezom e dad
 hag e vamm? Penaoz e hell lavared :
 « Euz an Neñv on diskennet » ?
- 43 Jezuz a respontas dezo :
 — « Na hrosmolit ket kenetrezo.
- 44 « Dén ne hell dond davedon
 nemed ha sachet e ve
 gand an Tad e-neus va haset,
 ha me a zavo anezañ da veo
 d'an deiz diweza.
- 45 « Skrivet eo er brofeted :
 « *Oll e vezint kelennet gand Doue* ».
 Kement hini e-neus selaouet an Tad
 ha resevet e gelennadurez
 a zeu davedon.
- 46 « N'eo ket e-nije nikun gwelet an Tad,
 nemed an hini a zeu a Zoue ;
 Henez hepkén e-neus gwelet an Tad.
- 47 « E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh :
 an hini a gred ennon
 e-neus ar vuez peurbaduz.
- 48 « Me eo bara ar vuez ».
- 49 « Ho Tadou o-deus bet ar mann
 da zebri er goueleh
 hag ez int marvet.

- ⁵⁰ « Evel-hen eo ar bara a ziskenn euz an Neñv :
an neb a zebro anezañ
ne varvo ket.
- ⁵¹ « Me eo ar bara beo buezeg
diskennet euz an Neñv :
An neb a zebro euz ar bara-mañ
a vevo da viken.
Hag ar bara a roin eo
va horv roet evid buez ar béd » (23).
- ⁵² Neuze e savas tabut gand ar Juzevien etrezo hag e
lavarjont :
- « Penaoz e hell hemañ rei deom e gorv da zebri? »
- ⁵³ Ha Jezuz a lavaras dezo :
- « E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh :
Ma ne zebrit ket korv Mab an Dén,
ha ma ne evit ket e wad
n'ho-pezo ket ar vuez ennoh.
- ⁵⁴ « An neb a zèbr va horv
hag a év va gwad
e-neus ar vuez peurbaduz
ha me a zavo anezañ da veo
d'an deiz diweza.
- ⁵⁵ « Rag gwir vagadur eo va horv
ha gwir evaj eo va gwad.
- ⁵⁶ « An neb a zèbr va horv
hag a év va gwad
a jom ennon
ha me ennañ.
- ⁵⁷ « Hag evel m'eo beo buezeg va Zad
e-neus kaset ahanon,
ha m'am-eus buez dre va Zad,
evel-se ive, an neb a zèbr ahanon,
hennez ive e-no buez drezon.

⁵⁸ «Setu aze
 ar bara diskennet euz an Neñv;
 disheñvel diouz an hini a zebras ho Tadou;
 int-i a varvas,
 med an hini a zebro euz ar bara-mañ
 a vevo da viken».

⁵⁹ Setu aze ar gelennadurez roet gand Jezuz er zinagog e Kafarnaom.

⁶⁰ Goude beza e glevet kalz euz e ziskibien a lavare:

— «Kaled eo ar gomz-ze da gleved, ha piou a hell he zelaou?»

⁶¹ Jezuz, o houzoud ennañ e-unan edo e ziskibien o hrosmolad kenetrezo, a lavaras dezo:

— «Skoillet oh gand an dra-ze?

⁶² «Ha ma welfeh Mab an Dén o pignad
 d'al leh m'edo diagent?

⁶³ «Ar spered eo a ro buez,
 ar horv ne dalv da netra.
 Spered ha buez (24) eo ar homzou am-eus lavaret
 deoh.

⁶⁴ «Bez' ez eus a-vad, en ho-touez, ha ne gredont ket».

Rag goud a ouie Jezuz abaoe ar penn kenta pere e oa ar re diskredig, ha piou a dlee e werza.

⁶⁵ Hag e lavaras dezo c'hoaz:

— «Setu perag em-eus lavaret deoh
 ne hell nikun dond davedon
 nemed ha gand va Zad
 e vefe bet roet dezañ d'ond».

⁶⁶ Diwar neuze, kalz euz e ziskibien a yeas war o hiz hag a baouezas da vond d'e heul.

⁶⁷ Jezuz neuze a lavaras d'an Daouzeg:

— «Daoust ha c'hwi ive ho-peus c'hoant da vond
 kuit?»

⁶⁸ Simon-Pèr a respontas dezañ :

— « Aotrou, da gavoud piou ez afem? Ganit emma komzou ar vuez peurbaduz. ⁶⁹ Evidom-ni a gréd, ha ni a oar ez out-te Sant Doue ».

⁷⁰ Jezuz a respontas dezo :

— « Daoust ha n'eo ket me am-eus ho tibabet, c'hwi, ho taouzeg? Ha koulskoude, unan ahanoh a zo eun diaoul ».

⁷¹ Komz a ree euz Judaz, mab Simon Iskariot, hennez, an hini a oa o vond d'e werza, eñ, unan euz an Daouzeg!

Pennad VII

BREUDEUR JEZUZ, TUD DISTER O FEIZ

¹ Goudeze e kerze Jezuz dre Vro-Halilea, c'hoant e-béd dezañ da vond da Vro-Judea, el leh e klaske ar Juzevien e lakaad d'ar maro. ² Hogen, tostaad a ree gouel ar Juzevien, gouel an Teltennou (25).

³ E vreudeur (26) a lavaras dezañ :

— « Kerz kuit a-hann. Kee da Vro-Judea evid ma hello da ziskibien ive gweled an oberou a rez.

⁴ Rag ne reer ket an traou e kuz pa glasker beza anavezet; peogwir e rez oberou ar seurt-se, en em ziskouez d'ar béd ».

⁵ E gwirionez e vreudeur o-unan ne gredent ket ennañ.

⁶ Neuze e lavaras Jezuz dezo :

— « N'eo ket deuet va amzer c'hoaz; evidoh-c'hwi a-vad e vez bepréd an amzer. ⁷ Ne hell ket ar béd ho kasaad; evidon-me a-vad kasoni e-neus ouzin, ablamour ma roan testeni ez eo fall e oberou. ⁸ Pignit eta d'ar gouel-se; evidon-me, ne bignin ket, rag va amzer n'eo ket deuet c'hoaz ».

⁹ Goude beza komzet evel-se e chomas e Bro-Halilea. ¹⁰ Med pa oa eet e vreudeur d'ar gouel en em lakeas en hent eñ ive, heb en em ziskouez ha dam dre guz.

JEZUZ E GOUEL AN TELTENNOU

¹¹ E-pad ar gouel e klaske ar Juzevien anezañ hag e lavarent:

— «E peleh ema eta?»

¹² E-touez an dud e oa kalz a dabut diwar e benn: — «Eun dén mad eo, a lavare lod; ar hontrol eo, a lavare darn all, touella a ra an dud».

¹³ Koulskoude ne grede dén komz gand asurañs diwar e benn gand aon rag ar Juzevien.

¹⁴ Pa oe dija hanteret ar gouel, e pignas Jezuz d'an Templ hag eh en em lakeas da gelenn. ¹⁵ Souezet braz e oa ar Juzevien, hag e lavarent: — «Penaos eo eñ kén desket, eñ ha n'eo ket bet war ar studi?».

¹⁶ Jezuz a respontas dezo:

«N'eo ket ahanon e teu va helennadurez,
med euz an hini e-neus kaset ahanon.

¹⁷ «Ma fell da unan bennag ober bolontez Doue
e ouezo ma teu ar gelennadurez
euz a Zoue
pe ma komzan ahanon va unan.

¹⁸ «An hini a gomz euz e berz e-unan
a glask e hloar dezañ e-unan;
an neb a glask
gloar an hini e-neus kaset anezañ,
hennez kepkén a zo gwirion,
ha n'eus ket a haou ennañ.

¹⁹ «Ha n'eo ket Moizez an hini
e-neus roet deoh al Lezenn?
— Ha padal, nikun ahanoh ne wir al Lezenn —
Perag e klaskit va laza?»

- ²⁰ An dud a respontas:
— « E dalh eun droug-spered emañ.
Piou a glask da laza? »
- ²¹ Jezuz a gomzas adarre hag e lavaras:
— « N'am-eus greet nemed eun oberenn,
ha setu c'hwi oll souezet.
- ²² « Moizez e-neus roet deoh an « amdroh »,
ha c'hoaz e teu euz ar Batriarked
ha n'eo ket a-berz Moizez,
hag eh « amdrohit » da zeiz ar zabat.
- ²³ « Neuze eta, ma hell eun dén
beza « amdrohet » eun deiz sabat
hep na ve torret Lezenn Voizez,
perag e kemerit droug ouzin
ablamour m'am-eus roet ar pare, d'eun deiz sabat,
da gorv eun dén en e-béz? »
- ²⁴ « Na varnit ket hervez an doareou,
barnit hervez ar justis. »
- ²⁵ Tud euz Jeruzalem a lavare:
— « Daoust ha n'eo ket hemañ an hini a glaskont
lakaad d'ar maro? Setu eñ o prezeg a-wél d'an oll ha
ne vez lavaret netra e-béd dezañ.
- ²⁶ « Daoust hag e vije deuet ar Pennou-Braz da anaoud
eo eñ ar Hrist? ²⁷ Hemañ, koulskoude, e
ouezom euz a beleh ez eo. Ha pa zeuio ar Hrist
ne ouezo dén euz a beleh ez eo (27) ». »
- ²⁸ Neuze Jezuz hag a oa o kelenn en templ a zisklerias a
vouez uhel:
— « Va anaoud a rit!
Ha gouzoud a rit euz a beleh ez on!
Ha koulskoude n'on ket deuet euz va ferz va-unan.
An hini e-neus kaset ahanon a zo gwirion,
Eñ ha na anavezit ket.

²⁹ « Me a-vad a anavez anezañ,
rag ma teuan dioutañ,
ha m'e-neus kaset ahanon ».

³⁰ Klask a rejont neuze kregi ennañ, med ne zeuas nikun a-benn d'henn ober, rag ma n'oa ket deuet c'hoaz e eur.

³¹ E-touez an dud a-vad, kalz a gredas ennañ, hag e lavarent:

— « Ar Hrist pa zeuio, hag ober a raio muioh a zinou eged m'e-neus greet hemañ? »

³² Ar Farizianed a zeuas da gleved ar pezh a veze kontet a vouez izel diwar e benn gand an dud, ha neuze e kasas Priñsed ar Veleien hag ar Farizianed gwarded da gregi ennañ.

³³ Jezuz a lavaras:

— « Ganeoh emañ c'hoaz evid eun nebeud amzer,
hag ez an daved an hini e-neus kaset ahanon.

³⁴ « Va hlask a reoh
ha ne gavoh ket ahanon;
rag el leh emañ-me,
c'hwi ne hellit ket dond ».

³⁵ Neuze e lavaras ar Juzevien an eil d'egile:

— « Da beleh eta emañ o vond e doare ne hellfem
ket e gavoud? Daoust ha mond a raio daved ar re
a zo strewet e-touez ar Hresianed ha mond da
gelenn ar Hresianed? »

³⁶ « Petra 'dalv ar gomz e-neus lavaret:

« Va hlask a reoh,
med va havoud ne reoh ket,
hag el leh m'emañ-me,
c'hwi ne hellit ket dond? »

PROMESA AN DOUR BEO

³⁷ D'an deiz diweza euz ar gouel — a oa ive an hini brasa—edo Jezuz en templ, hag e lavaras a vouez uhel:

« An neb e-neus sehed,
d'ezañ da zond d'am havoud,
Hag an neb a gréd ennon,
d'ezañ dond da eva.

³⁸ « Evel ma lavar ar Skritur-Zakr:
« *Euz e greiz e tarzo steriadou dour buezeg* ».

³⁹ Kement-se a lavare euz ar Spered e-noa da reseo ar re a zeufe da gredi ennañ — rag n'oa ket bet roet c'hoaz ar Spered, o veza n'oa ket eet c'hoaz Jezuz en e hloar — » (28).

TABUT DIWARBENN AR HRIST

⁴⁰ E-touez an dud o-doa selaouet e gomzou, lod a lavare:
— « E gwirionez, hemañ eo ar profet ».

⁴¹ Lod all a lavare:
— « Ar Hrist eo hennez ».

Re all c'hoaz a lavare:

— « Daoust hag euz Bro-Halilea e hellfe ar Hrist dond?
⁴² Ha hen ne lavar ket ar Skritur e vo euz ligned David hag euz Betleem, ar gêriadenn-se e oa deuet David anezi? »

⁴³ Dizunaniez a zavas eta e-touez an dud diwar e benn.

⁴⁴ Unanou c'hoaz o-doa c'hoant kregi ennañ med ne lakeas dén e zorn warnañ. ⁴⁵ Ar warded a zeuas eta en-dro da gavoud Priñsed ar veleien hag ar Farizianed, hag e lavaras ar re-mañ dezo:

— « Perag n'ho-peus ket e zigaset deom? »

⁴⁶ Respont a reas ar warded:

— « Biskoaz dén n'e-neus komzet evel ma komz an dén-se ».

⁴⁷ Ar Farizianed a lavaras dezo: « Daoust hag e vefeh bet desevet c'hwi ive? ⁴⁸ Daoust hag eun unan euz ar Pennou-Braz pe euz ar Farizianed e-nefe kredet ennan? ⁴⁹ N'eus netra

nemed an dud-se ha ne anavezont ket al Lezenn, tud villiget anezo! »

⁵⁰ Med unan euz ar Farizianed, an Nikodem-se hag a oa bet diagent o weled Jezuz, a lavaras :

⁵¹ — « Daoust hag e teufe hol Lezenn da gondaoni eun dén heb beza e glevet hag heb gouzoud petra e-neus greet? »

⁵² — « Petra, emezo, daoust hag eus Bro-Halilea e vefeste ive? Klask mad hag e weli ne zav profet e-béd euz Bro-Halilea ». ⁵³ Hag ez eas peb hini d'ar gêr.

Pennad VIII

AR VAOUEZ AVOULTRÉRÉZ

¹ Jezuz a oa eet d'ar Menez Olivez. ² Kerkent ha gouloudeiz e tistroas d'an Templ. Hag o veza ma tirede an oll d'e gavoud, eh azezas evid rei e gelennadurez.

³ Ha setu ar Skribed hag ar Farizianed o tigas dirazañ eur vaouez bet tapet oh ober avoultriez; lakaad a rejont anezi e kreiz, dirag an oll. ⁴ Hag e lavarjont da Jezuz :

— « Mestr, setu amañ eur vaouez bet gwelet oh ober avoultriez. ⁵ El Lezenn, Moizez e-neus gourhemennet deom labeza ar seurt merhed-se. Ha te, petra 'lavarez? »

⁶ Evel-se e komzent evid e baka, dezo da gaoud tro d'e damall goudeze. Med Jezuz, daoubleget, gand e viz a skrive war an douar. ⁷ O veza ma kendalhent da ober goulennou outañ e savas e gein, hag e lavaras dezo :

— « An hini ahanoh a zo dibeh, dezañ da daoler outi ar mên kenta ».

⁸ Hag eet adarre en e zaoubleg, en em lakeas da skriva war an douar. ⁹ Ar re all, goude beza e glevet, a denne kuit an eil goude egile, ar re gosa da genta, kén na jomas mui nemed Jezuz hag ar vaouez en he zav dirazañ.

¹⁰ O veza savet e gein, e lavaras Jezuz dezi:

— «Maouez, e peleh emaint eta? ¹¹ Dén e-béd n'e-neus da gondaonet?»

— «Dén e-béd, Aotrou, emezi».

— «Me kennebeud, eme Jezuz, ne gondaonin ket ahanout. Kee eta, ha diwar vremañ, na beh mui».

JEZUZ SKLERIJENN AR BED

¹² Jezuz a lavaras dezo eur wech c'hoaz:

— «Me eo sklerijenn ar béd:

An hini a zeuio d'am heul

ne gerzo ket en deñvalijenn,

med bez' e-no sklerijenn ar Vuez».

¹³ War-ze e lavaras dezañ ar Farizianed:

— «Te a ro testeni dit da unan; n'eo ket gwirion da desteni».

¹⁴ Jezuz a respontas dezo:

— «Evid din rei testeni din va-unan,

gwirion eo va zesteni,

rag gouzoud a ran euz a beleh on deuet

ha da beleh ez an;

e-leh c'hwi, n'ouzoh ket a beleh e teuan

na da beleh ez an.

¹⁵ «C'hwi a varn hervez ar horv;

Me ne varnan dén.

¹⁶ «Pe ma teu din barn,

gwirion eo va barnedigez,

rag n'emaon ket va-unan:

ganin ema an hini e-neus kaset ahanon.

¹⁷ «Skrivet eo en ho Lezenn

eo gwirion testeni daou zén.

¹⁸ «Hogen, da rei testeni din emaon

me hag an Tad e-neus kaset ahanon».

- ¹⁹ Lavared a reent dezañ:
 — «E peleh ema da Dad?»
 Jezuz a respontas:
 — «Ne anavezit na me na va Zad;
 Ma 'h anavezfeh ahanon
 eh anavezfeh ive va Zad».
- ²⁰ Ar homzou-ze a lavaras Jezuz p'edo o kelenn e porz
 an templ, ha ne grogas dén ennañ, rag n'oa ket
 digouezet c'hoaz e eur.

JEZUZ O REI DA ANAOUD E OA TOST AR HIMIAD

- ²¹ Jezuz a lavaras c'hoaz dezo:
 — «O vond kuit emañ;
 Va hlask a reoh,
 hag e varvoh koulskoude en ho pehed;
 D'al leh ez an-me,
 c'hwi ne hellit ket mond».
- ²² Neuze e lavaras ar Juzevien:
 — «Daoust hag en e zoñj e vefe en em laza? pegwir
 e lavar: «D'al leh ma 'z an, c'hwi ne hellit ket
 mond?»
- ²³ Jezuz a respontas dezo:
 — «C'hwi a zo euz an traoñ,
 me a zo euz an neh;
 c'hwi a zo euz ar béd-mañ,
 ha me n'on ket euz ar béd-mañ».
- ²⁴ «Setu perag am-eus lavaret deoh
 e varvoh en ho pehejou;
 rag ma ne gredit ket «Ez On»
 e varvoh en ho pehejou».
- ²⁵ Int-i neuze:
 — «Piou out-te?»
 Jezuz a respontas:
 — «Ar pezh ne baouezan ket
 da lavared deoh abaoe ar penn kenta.

- 26 «Evid ar pez a zell ouzoh
em-eus kalz da lavared
ha da gondaoni.
Med gwirion eo an hini e-neus kaset ahanon;
hag ar pez am-eus klevet gantañ,
an dra-ze eo a lavaran d'ar béd»,
- 27 Ne gomprenjont ket e-noa komzet euz e Dad.
- 28 Neuze e lavaras Jezuz dezo:
— «P'ho-pezo savet Mab an Dén,
Neuze e ouezoh «Ez On» (29)
ha ne ran netra ahanon va-unan;
Lavared a ran
ar pez a zo bet desket din gand va Zad.
- 29 «Ganin ema an hini e-neus kaset ahanon;
N'e-neus ket va lezet va-unan,
rag ma ran bepréd ar pez a blij dezañ».
- 30 E-pad ma komze evel-se e kredas kalz tud ennañ.
- 31 Jezuz eta a lavaras d'ar Juzevien o-doa kredet ennañ:
— «Ma talhit d'am Homz,
ez oh, e gwirionez, va diskibien,
- 32 «hag eh anavezoh ar wirionez.
Hag ar wirionez a roio deoh ar 'frankiz».
- 33 Respont a rejont dezañ:
— «Ni a zo lignez Abraham, ha n'om bet biskoaz
sklavour da zén; penaoz eta e hellez lavared e
teuim da veza tud libr?»
- 34 Jezuz a respontas dezo:
— «E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh:
an neb en em ro d'ar pehed
a zo sklavour d'ar pehed.
- 35 «Ar sklavour ne vez ket dalhmad o chom en ti.
Ar mab, eñ, a zo o chom eno atao,
- 36 «Neuze m' e-neus ar Mab ho frankizet
e vezoh e gwirionez tud libr.

- 37 «Gouzoud a ran ez oh lignez Abraham,
med c'hwi a glask va lakaad d'ar maro,
rag ma ne antre ket va Homz ennoh.
- 38 «Me a lavar ar pez am-eus gwelet gand va Zad,
ha c'hwi a ra ar pez ho-peus klevet a-berz ho tad».
- 39 Respont a rejont dezañ:
— «Abraham eo on tad».
Ha Jezuz dezo:
— «Ma 'z oh bugale da Abraham,
grit oberou Abraham.
- 40 «Ha bremañ e klaskit va lakaad d'ar maro,
me hag am-eus lavaret deoh ar wirionez
am-eus klevet a-berz Doue.
An dra-ze Abraham n'e-neus ket greet.
- 41 «Med c'hwi a ra oberou ho tad».
Respont a rejont dezañ:
— «N'om ket ganet diwar ganedigez vil; n'on-eus
nemed eun tad: Doue!»
- 42 Jezuz a respontas dezo:
— «Ma vije bet Doue ho tad,
ho-pije karet ahanon,
rag euz Doue on tarzet hag e teuan.
N'on ket deuet ahanon va-unan;
Eñ eo e-neus kaset ahanon.
- 43 «Perag ne intentit ket ar pez a lavaran?
Ablamour n'oh ket gouest da zelaou va Homz.
- 44 «An diaoul eo ho tad.
Hag e fell deoh ober ar pez a blij d'ho tad.
Muntrer eo bet azaleg ar penn kenta,
ha n'e-neus ket gellet chom er wirionez,
rag n'eus ket a wirionez ennañ.
Pa zeu gevier gantañ
e komz hervez ar pez ma 'z eo,
rag gaouiad eo, ha tad ar gaou.

- 45 « Evidon-me, ma n'am hredit ket,
eo ablamour ma lavar an ar wirionez.
- 46 « Piou ahanoh a hell tamall, e gwir,
eur pehed bennag din?
Ma lavar an ar wirionez,
perag n'am hredit ket?
- 47 « An hini a zeu euz a Zoue
a zelaou komzou Doue.
En abeg ma n'oh ket euz a Zoue eo
n'am zelaouit ket ».
- 48 Ar Juzevien a respontas dezañ :
— « Ha n'ema ket ar wirionez ganeom pa lavarom
ez out eur Zamaritan hag eun dén dalhet gand an
droug-spered? » (30).
- 49 — « N'eo ket gwir, eme Jezuz,
n'on ket eun dén dalhet gand an droug-spered,
med enori a ran va Zad
ha c'hwi am dizenor.
- 50 « Evidon-me ne glaskan ket va gloar :
Unan a zo hag a ra an dra-ze hag a varn.
- 51 « E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh :
An hini a vir va Homz ne welo biken ar maro ».
- 52 Neuze e lavaras dezañ ar Juzevien :
— « Bremañ a welom out dalhet gand an droug-
spered!
Abraham a zo maro. Ar brofeted ive, ha te a lavar :
« An hini a viro va Homz ne welo biken ar maro ».
- 53 « Ha brasoh e vefes eged on tad Abraham hag a zo
maro? Maro ive ar brofeted. Evid piou eh en em
gemerez-te? »
- 54 Jezuz a respontas dezo :
— « Ma rofen gloar din va-unan,
ne dalvezfe netra va gloar,

Va Zad eo a ro gloar din,
Eñ hag a lavarit ez eo ho Toue.

⁵⁵ «C'hwi n'ho-peus ket e anavezet,
e-leh me a anavez anezañ.
Ma lavarfen n'henn anavezan ket
e vefen eveldoh eur gaouiad;
med henn anaoud a ran,
ha mired a ran e Gomz.

⁵⁶ «Tridal a ree Abraham ho tad
gand an esper da weled va deiz.
E welet e-neus,
hag eo bet karget a levenez» (31).

⁵⁷ Neuze e lavaras dezañ ar Juzevien;
— «N'out ket hanter-kant vloaz c'hoaz
hag ez-peus gwelet Abraham?»

⁵⁸ Jezuz a lavaras dezo:
— «E gwirionez, e gwirionez, m'hel lavar deoh,
a-raog ma oa Abraham anezañ,
«Ez On-me».

⁵⁹ Neuze e kemerjont mein evid o stlepel outañ, med
Jezuz en em dennas hag a yeas er-mêz euz an templ.

Pennad IX

PARE AN DEN DALL (32)

¹ En eur dremen, Jezuz a welas eun dén ganet dall. ² E
ziskibien a houlennas outañ:

— «Rabbi, piou e-neus pehet, eñ pe e dud, evid ma ve
ganet dall?»

³ Jezuz a respontas:

— «Nag eñ, nag e dud n'o-deus pehet. C'hoarvezet eo
an dra-ze, evid ma vo diskouezet oberou Doue a-wél d'an oll.

⁴ « Réd eo deom seveni oberou an hini e-neus va digaset keid ha m'eo deiz.
Ema an noz o tond
pa ne hell dén labourad.

⁵ « Keid ha m'emaon er béd.
ez on sklêrijkenn ar béd ».

⁶ Goude ar homzou-ze e tufas Jezuz d'an douar, e reas eun tamm pri gand e halo hag e ledas ar pri-ze war zaoulagad an dén. ⁷ Lavared a reas dezañ:

— « Kee bremañ da walhi da zaoulagad e lenn Siloe, — ar pez a zinifi: kannad — ».

Mond a reas eta d'en em walhi, ha pa deuas en-dro e wele sklêr.

⁸ E amezeien hag ar re a oa boazet d'e weled a-raog — rag bez'e veze o houlenn an aluzenn — a lavare:

— « Ha n'eo ket hemañ eo a veze azezet o houlenn an aluzenn? »

⁹ Lod a lavare: « Eñ eo! » ha re all: « N'eo ket, med unan all heñvel outañ ». ¹⁰ Eñ a-vad a lavare: « Me eo! »

¹¹ Hag e oe goulennet outañ: « Da zaoulagad, penaoz int bet digoret dit? »

Respont a reas:

— « An dén a anver Jezuz e-neus greet pri ha ledet anezañ war va daoulagad ha lavaret din: « Kee da lenn Siloe d'en em walhi ». Neuze ez on eet di, en em walhet em-eus, ha deuet on da weled sklêr ».

¹² Neuze e lavarjont dezañ:

— « E peleh ema? »

— « Ne ouzon dare », emezañ.

¹³ Kaset e oa neuze d'ar Farizianed an hini a oa bet dall.

¹⁴ Eun deiz sabat e oa, p'e-noa Jezuz greet pri ha digoret dezañ e zaoulagad.

¹⁵ D'o zro, setu ma houlenas ar Farizianed outañ penaoz e oa deuet dezañ ar gweled. Respont a reas :

— « Lakeet e-neus pri din war va daoulagad, eet on d'en em walhi, ha bremañ e welan sklêr »,

¹⁶ Lod euz ar Farizianed a lavaras :

— « Ne zent ket an dén-se ouz Lezenn ar zabat ; n'eo ket eta a-berz Doue ».

Lod all a-vad a lavare :

— « Med penaoz e hellfe eur peher ober seurt burzudou ? »

Dizemgleo a oa eta etrezo.

¹⁷ Neuze e rejont adarre goulennou ouz an hini dall.

— « Ha te, petra ' lavarez euz an dén-se e-neus digoret dit da zaoulagad ? »

— « Eur profet eo », emezañ.

¹⁸ Med ar Juzevien ne 'fellas ket dezo kredi e oa bet an dén-se dall hag e-noa kavet ar gweled, kén n'o-defe galvet e gerent da zond dirazo.

¹⁹ Goulenn a rejont outo :

— « Ha bez' ez eo hemañ ho mab a lavarit e oa ganet dall ? Penaoz neuze e wél sklêr bremañ ? »

²⁰ Respont a rejont :

« Gouzoud a reom eo hemañ or mab, hag e oa ganet dall.

²¹ Med penaoz eo deuet da weled sklêr bremañ ? N'ouzom ket. Ha piou e-neus digoret dezañ e zaoulagad ? N'ouzom ket muioh. Goulennit outañ e-unan, oad a-walh e-neus ; dezañ da respont evitañ e-unan ».

²² Evel-se e komze e dud, ablamour m'o-doa aon rag ar Juzevien, o-doa divizet kenetrezo taoler er-mêz euz ar zina-gog kement hini a anavezfe Jezuz evid ar Mesiaz. ²³ Ablamour da-ze o-doa lavaret e dud : « Oad a-walh e-neus, goulennit outañ e-unan ».

²⁴ Evid an eilved gwech, ar Farizianed a halvas dirazo an dén bet dall, hag a lavaras dezañ:

— «Ro gloar da Zoue! Ni 'oar, ni, eo an dén-se eur peher».

²⁵ Respont a reas dezo:

— «Hag eñ a zo eur peher? N'ouzon ket. Eun dra a ouzon: dall e oan, ha bremañ e welan sklêr».

²⁶ Lavared a rejont dezañ c'hoaz:

— «Petra 'neus greet dit? Penaoz e-neus digoret dit da zaoulagad?»

²⁷ Hag eñ a respontas:

— «Lavaret am-eus deoh dija, ha n'ho-peus ket selaouet. Perag e fell deoh klevet eur wech c'hoaz? Ha c'hoant ho-pefe, c'hwí ive, da veza diskibien dezañ?»

²⁸ Taoler a rejont malloziou warnañ, ha lavared:

— «Te eo a zo diskibl dezañ. Ní a-vad a zo diskibien da Voizez. ²⁹ Ni a oar e-neus Doue komzet da Voizez, mède hemañ n'ouzm ket euz a behel ez eo».

³⁰ An dén a respontas:

— «Souezuz eo kement-se ne ouezfeh ket euz pehel ez eo, goude m'e-neus digoret din va daoulagad. ³¹ Doue, her gouzoud a reom, ne zelaou ket ar beherien, med selaou a ra kement hini a enor Doue hag a ra e volonte. ³² Biskoaz n'eus bet klevet lavared e-nefe unan bennag digoret e zaoulagad d'eun dén ganet dall.

³³ «Ma ne vije ket hemañ a-berz Doue ne hellfe ober netra».

³⁴ Respont a rejont dezañ:

— «N'eus nemed pehed ahanout abaoe m'out ganet, hag e rez skol deom!»

Hag e taoljont anezañ er-mêz...

³⁵ Dond a reas Jezuz da glevet o-doa e daolet er-mêz, ha neuze e teuas d'e gavoud, hag e lavaras dezañ:

— «Ha kredi a réz-te e Mab an Dén?»

³⁶ Hag eñ ha respont:

— «Ha piou eo, Aotrou, ma kredin ennañ?»

³⁷ Jezuz a lavaras dezañ:

— «Mad! E weled az-peus, eñ eo a gomz ouzit».

³⁸ An dén a respontas:

— «Kredi a ran, Aotrou»

Hag e stouas dirazañ.

³⁹ Neuze e lavaras Jezuz:

— «Me'zo deuet er béd-mañ evid dougenn ar varnedigez-mañ: ma teuio ar re ne welent ket da weled, hag ar re a wéle da veza dall».

⁴⁰ Klevet e oe e gomzou gand lod euz ar Farizianed a oa gantañ, hag e lavarjont dezañ:

— «Ha ni, daoust ha dall e vefem-ni ive?»

⁴¹ Jezuz a respontas dezo:

— «Ma vefeh tud dall n'ho-pefe ket a behed, med peogwir e lavarit: ni a well sklêr, ho pehed a jom» (33).

Pennad X

PARABOLENN AR MESAER

¹ — «E gwirionez, m'hel lavar deoh,
an hini n'e d-a ket e kraou an deñved
dre an nor,
med a bign dre eul leh all,
hennez a zo laer ha ribler.

² « An hini a ya dre an nor eo pastor an deñved.

³ « Ar porzier a zigor dezañ,
hag an deñved a zelaou e vouez.
An deñved a zo dezañ
a vez galvet gantañ pep hini dre e ano,
hag e kas anezo er-mêz.

⁴ « P'e-neus kaset oll e re er-mêz,
e kerz en o-raog.
An deñved a ya d'e heul,
rag anaoud a reont e vouez.

⁵ « Ne d-aint ket da heul eun dén all,
med tehed a raint dioutañ,
rag ne anavezont ket mouez ar re all».

⁶ Setu ar barabolenn lavaret gand Jezuz d'ar Farizianed,
med ne gomprenjont ket ar pezh a lavare dezo. ⁷ Ha Jezuz a
lavaras dezo adarre:

— « E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh,
Me eo dor an deñved.

⁸ « Laeron ha tud fall eo
ar re oll a zo deuet em-raog;
med an deñved n'o-deus ket o zelaouet.

⁹ — « Me eo an nor:
An neb a antreo drezon a vo salvet;
mond ha dond a raio euz ar hraou d'ar mêz,
ha kavoud a raio da beuri.

¹⁰ « Al laer a-vad ne zeu nemed evid laerez,
laza ha distruja.
Me 'zo deuet evid rei ar vuez d'an dud
ma vezint beo-buezeg.

¹¹ « Me eo ar Pastor Mad.
Ar Pastor Mad a ro e vuez evid e zeñved.

¹² « An hini n'eo nemed ar mevel,
ha n'eo ket-eñ ar pastor,
pa n'eo ket an deñved e re dezañ,

a jom dizober da zelled
 pa wél ar bleiz o tond,
 a zilez an deñved
 hag a deh kuit.
 Hag ar bleiz a skrap anezo
 hag a ra dezo mond amañ hag ahont.

¹³ « Ar mevel a deh kuit,
 pegwir n'eo nemed mevel,
 ha n'eo ket chalet gand an deñved.

¹⁴ « Me eo ar Pastor Mad:
 Anaoud a ran va re,
 ha va re am anavez,

¹⁵ « evel ma 'h anavez an Tad ahanon,
 ha ma 'h anavezan, me ive, an Tad.
 Ha va buez a roan evid va deñved.

¹⁶ « Deñved all am-eus c'hoaz (34),
 ha n'emaint ket er park-deñved-mañ.
 Ar re-ze ive am-eus da ren.
 Kleved a raint va mouez,
 ha ne vo nemed eun tropell
 hag eur pastor hepkèn.

¹⁷ « Ma kar an Tad ahanon,
 eo ablamour ma roan va buez
 evid he hemer en-dro.

¹⁸ « Dén e-béd ne denn anezi diganin,
 med me eo
 a ro anezi ahanon va-unan;
 Galloud am-eus d'he rei,
 ha galloud am-eus d'he hemer en-dro.
 Kement-se a zo bet gourhemennet din da ober a-
 berz va Zad ».

¹⁹ Ar homzou-ze a lakeas en-dro dizunaniez etre ar
 Juzevien. ²⁰ Meur a hini anezo a lavare:

— « Dalhet eo gand an droug-spered; kollet e-neus e
 benn; perag e selaouit enezañ? »

²¹ Med re all a lavare:

— «N'eo ket aze komzou eun dén dalhet gand an droug-spered. Daoust hag eun droug-spered a hell digeri daoulagad tud dall?»

VA ZAD HA ME NE REOM NEMED UNAN

²² Edod o lida e Jeruzalem gouel an Dedi (35). Ar goañv a oa. ²³ Jezuz a oa o vond hag o tond en templ, dindan porched Salomon. ²⁴ Ar Juzevien en em zastumas en-dro dezañ hag a lavaras:

— «Beteg pe vare e lezi ahanom en arvar? Ma 'z out ar Hrist, hel lavar deom sklêr».

²⁵ Jezuz a respontas dezo:

— «Hel lavaret am-eus deoh
ha ne gredit ket.

An oberou a ran en ano va Zad
a ro testeni din,

²⁶ «med ne gredit ket
dre ma n'oh ket euz va deñved.

²⁷ «Va deñved a zelaou va mouez;
Me o anavez
hag int-i a zeu d'am heul.

²⁸ «Me 'ro dezo ar vuez peurbaduz;
ne d-aint biken da goll,
ha nikun n'o diframmo euz va dorn.

²⁹ «Va Zad e-neus roet anezo din,
hag Eñ a zo brasoh eged an oll.
Kement am-eus bet digand va Zad
a dalv muioh eged pep tra all,
ha dén ne hell diframma netra euz dorn va Zad.

³⁰ «Va Zad ha Me
n'om nemed unan».

- ³¹ Eur wech muioh e tastumas ar Juzevien mein evid e labeza.
- ³² Neuze e lavaras Jezuz dezo:
 — «Greet em-eus dirazoh
 kalz a oberou kaer
 hag a zeu euz va Zad;
 evid pehini anezo
 e fell deoh va labeza?»
- ³³ Ar Juzevien a respontas dezañ:
 — «Neo ket evid eun oberenn gaer eo e fell deom
 da labeza, med evid eul le-doued, o veza m'en em
 lakez Doue, te hag a zo eun dén».
- ³⁴ Jezuz a respontas dezo:
 — «Daoust ha n'eo ket skrivet en ho Lezenn:
 «*Lavaret am-eus, c'hwī 'zo doueed*».
- ³⁵ «Ma teu ar Skritur da rei an ano a Zoue
 d'ar re a zo bet embannet dezo komzou Doue
 — ha ne hell ket ar Skritur beza kaset da 'fall —
- ³⁶ «penaoz neuze e lavarit
 d'an hini a zo bet santelleet gand an Tad
 ha kaset gantañ d'ar béd:
 blasfemi 'rez,
 war zigarez m'am-eus lavaret:
 «Mab Doue on?»
- ³⁷ «Ma ne ran ket oberou va Zad,
 chomit hep kredi ennon.
- ³⁸ «Med ma ran anezo,
 ha goude ma ne gredfeh ket ennon,
 kredit en oberou-ze,
 hag evel-se e ouezoh,
 hag e ouezoh muioh-mui,
 ema an Tad ennon
 evel m'emaon en Tad».
- ³⁹ Neuze e klaskont eur wech c'hoaz kregi ennañ med
 tehed a reas a dre o daouarn.

⁴⁰ Jezuz a zistroas en tu all d'ar Jordan, el leh m'edo Yann o vadezi er penn kenta, hag e chomas eno.

⁴¹ Kalz tud a zeue davetañ hag e lavarent:

— «Yann, gwir eo, n'e-neus greet burzud e-béd, med gwir e oa kement e-neus lavaret diwar-benn an dén-ze».

⁴² Ha niveruz e oant eno ar re a gredas ennañ.

Pennad XI

DASORH LAZAR

¹ Bez' e oa eun dén klañv, Lazar, euz Betania, bourhadenn Mari hag he hoar Marta.

² Mari eo ar vaouez-se he-doa skuillet louzou c'hwez-vad war an Aotrou ha sehet dezañ e dreid gand he bleo. He breur Lazar eo a oa klañv.

³ An diou hoar a gasas kelou da Jezuz:

— «Aotrou, an hini a garez a zo klañv».

⁴ P'e-noa klevet, e lavaras Jezuz:

— «Ar hleñved-se ne gaso ket d'ar maro. Talvezoud a raio evid gloar Doue, rag diwarnañ e vo rentet gloar da Vab Doue».

⁵ Karantez e-noa Jezuz evid Marta ha Mari he hoar ha Lazar.

⁶ Koulskoude, goude beza klevet e oa klañv Lazar, e chomas c'hoaz daou zevez er memez leh.

⁷ Goudeze hepkén e lavaras d'e ziskibien:

— «Deom en-dro da Vro-Judea».

⁸ Hag an diskibien a lavaras dezañ:

— «Mestr, nebeud 'zo e klaske ar Juzevien labeza ahantout, hag ez ez en-dro du-ze?»

⁹ Respont a reas Jezuz:

— «Daoust ha n'eus ket daouzeg eur en deiz? An neb a gerz ouz sklêrijenn an deiz ne bako ket lamm, ablamour ma wél sklêrijenn ar béd-mañ.

¹⁰ «Med, ma vale en noz, e pako lamm dre ziouer a sklêrijenn ennañ».

¹¹ Goude ar homzou-ze, e lavaras Jezuz dezo:

— «Or mignon Lazar a zo kousket. Mond a ran en hent d'e denna euz e gousk».

¹² Hag e lavaras dezañ e ziskibien:

— «Aotrou, mar d-ema o kousked e pareo».

¹³ Hogen euz e varo eo e-noa komzet Jezuz, hag int a zoñje dezo e oa euz ar housk pemdezieg. ¹⁴ Jezuz neuze a zisklerias frêz dezo:

— «Maro eo Lazar. ¹⁵ Hag ablamour deoh ez on laouen o veza n'edon ket war al leh, evid ma teuoh da gredi. Bremañ a-vad deom beteg ennañ».

¹⁶ Neuze Tomaz — a reer ar Gevell anezañ — a lavaras d'an diskibien all:

— «Deom ive, ma varvim asemblez gantañ».

¹⁷ Pa zigouezas, e kavas Jezuz Lazar er béz abaoe pevar devez.

¹⁸Tost ema Betania da Jeruzalem: war-dro eun hanter eur vale (36). ¹⁹ Deuet e oa kalz Juzevien da weled Marta ha Mari, da ober dezo gourhemennou a gañv evid o breur.

²⁰ Marta, pa glevas edo Jezuz o tond, a yeas a-benn hent dezañ, e-pad ma chome Mari azezet en ti.

²¹ Lavared a reas Marta da Jezuz:

— «Aotrou, ma vijes bet amañ, ne vije ket marvet va breur. ²² Med bremañ c'hoaz, her gouzoud a ran, kement tra a houlenni digand Doue, Doue henn roio dit».

²³ Jezuz a lavaras dezi:

— «Sevel a raio da vreur a varo da veo».

²⁴ «Gouzoud a ran, a respont Marta, e savo da veo d'an deiz diweza, pa zavo da veo an oll dud varo».

²⁵ Jezuz a lavaras dezi:

— «Me eo an adsav da veo hag ar vuez (37); an neb a gréd ennoñ — ha pa ve marvet — a vevo; ²⁶ ha kement hini a vev hag a gréd ennon, sur ne varvo ket da vikén. Ha kredi a rez kement-se?»

²⁷ — «Ya, Aotrou, emezi, kredi a ran ez out ar Hrist, Mab da Zoue, an hini a zo o tond er béd».

²⁸ Neuze ez eas da helver he hoar Mari, ha sioulig e lavaras dezi:

— «Ar Mestr a zo aze, hag a halv ahanout».

²⁹ O klevet kement-se, Mari a zavas dioustu hag a yeas d'e gavoud. ³⁰ Jezuz n'oa ket antreet c'hoaz er vourhadenn, chomet 'oa el leh m'he-doa Marta kavet anezañ. ³¹ Ar Juzevien a oa chomet gand Mari en tí, hag e klaskent he frealzi. O weled anezi o sevel trumm evid mond er-mêz, ez ejont d'he heul. Soñjal a reent edo o vond d'ar béz evid leñva.

³² Pa zigouezas Mari el leh m'edo Jezuz, ha pa welas anezañ, e kouezas e-harz e dreid, hag e lavaras dezañ:

— «Aotrou, ma vijes bet amañ, ne vije ket marvet va breur».

³³ Jezuz neuze, o weled anezo o ouela, hi hag ar re a oa ouz he heul, a yeas drezañ skrij ha strafuill.

³⁴ Goulenn a reas:

— «E peleh ho-peus lakeet anezañ?»

— «Aotrou, emezo, deus ha gwél».

³⁵ Jezuz a zeuas an dour en e zaoulagad, ³⁶ hag ar Juzevien a lavare:

— « Gwelit pebez karantez e-noa evitañ! ».

³⁷ Med lod all a lavare:

— « Digoret e-neus e zaoulagad d'an hini dall, ha ne helle ket mired ouz an dén-mañ da vervel? »

³⁸ Jezuz a skrijas adarre hag a yeas d'ar béz, eur heo anezañ gand eur mên d'e stanka. ³⁹ Lavared a reas Jezuz:

— « Tennit ar mên kuit! »

Ha Marta, c'hoar an hini maro, a lavaras dezañ:

— « Aotrou, c'hwez a zo gantañ... Rag ar pevare devez eo... ».

⁴⁰ Respont a reas Jezuz dezi:

— « Ha n'am-eus ket lavaret dit: ma kredez e weli gloar Doue? »

⁴¹ Tennet e oe ar mên kuit: ha Jezuz, e zaoulagad savet war-zu an Neñv, a lavaras:

— « Tad, trugarez dit d'am beza selaouet! ⁴² Me a ouie e selaouez ahanon atao, med ablamour d'ar bobl tud a zo amañ en-dro din, em-eus komzet, evid ma kredint eo Te az-peus va digaset ».

⁴³ O veza komzet evel-se, e krias a vouez kreñv:

— « Lazar, deus er-mêz! »

⁴⁴ Hag e teuas er-mêz an hini a oa bet maro, lurennet e dreid hag e zaouarn, eul liñser en-dro d'e benn. Jezuz a lavaras dezo:

— « Distagit dezañ e lurennou ha lezit anezañ da vond ».

AB JUZEVIAN A LAK EN O FENN LAZA JEZUZ

⁴⁵ Kalz euz ar Juzevien deuet da gavoud Mari hag o-doa gwelet ar pez e-noa greet Jezuz a gredas ennañ. ⁴⁶ Med re all a yeas da gavoud ar Farizianed ha da gonta dezo petra e-noa

greet Jezuz. ⁴⁷ Ar Veleien-Vraz hag ar Farizianed a vodas eur Huzul hag a lavaras:

— « Petra 'reom? An dén-se a ra kalz burzudou!⁴⁸ Ma lezom anezañ da genderhel evel-se e kredo an oll ennañ hag e teuy ar Romaned da zistruja hag on leh santel hag or broad ».

⁴⁹ Unan anezo, Kaifaz, hag a oa Beleg-Braz er bloavez-se a lavaras dezo:

— « Ne intentit netra! ⁵⁰ Ne zoñjit ket zokén e ve gwel-loh deoh e varvfe eun dén hebkén evid ar bobl ha n'ez afe ket da goll ar vroad a-béz ».

⁵¹ N'eo ket anezañ e-unan e lavaras ar homzou-ze, med o veza m'oa Beleg-Braz er bloavez-se e tiouganas e ranke Jezuz mervel evid ar vroad. ⁵² Ha n'eo ket hebken evid ar vroad, med evid dastum en unaniez bugale Doue strewet amañ hag ahont.

⁵³ E deiz-se end-eün e oe divizet ganto e lakaad d'ar maro.

⁵⁴ Jezuz, diouz e du, a jomas heb mond a-wél d'an oll e-touez ar Juzevien; en em denna' reas en eur vro tost d'ar goueleh, en eur gêr anvet Efraïm, hag e chomas eno gand e ziskibien.

⁵⁵ Koulskoude, e oa tost Pask ar Juzevien; ha da zerhent ar Pask-se, e pignas kalz tud euz ar vro-ze da Jeruzalem, evid beza glaneet. ⁵⁶ Klask a reent Jezuz; hag en Templ, el leh m'edont, e lavarent kenetrezo:

— « Petra 'zoñj deoh! Ha dond a raio d'ar gouel?

⁵⁷ Priñsed ar veleien hag ar Farizianed o-doa roet urz: an neb a ouezfe e peleh edo, dond d'e ziskuilla evid ma vefe kroget ennañ.

Pennad XII

LEIN E TI MARTA HA MARI

¹ C'hweh devez a-raog ar Pask e tigouezas Jezuz e Betania, el leh m'edo Lazar, an hini e-noa adsavet a-douez ar re varo. ² Eur préd a oe roet en e enor; Marta a oa o servicha, ha Lazar unan euz ar re a oa ouz taol gand Jezuz.

³ Mari a gemeras eul luriad louzou c'hwez-vad, eoul nard pur a briz bras; her skuilla a reas war dreid Jezuz hag o zeha gand he bleo. Karget e oa an ti a-béz gand ar frond.

⁴ Neuze e lavaras Judaz Iskariot, unan euz e ziskibien, hennez end-eün hag a dlee e werza:

⁵ — « Perag n'eo ket bet gwerzet al louzou c'hwez-vad-se tri hant diner, ha roet ar priz d'ar beorien? »

⁶ Komz a reas evel-se, n'eo ket a-vad en abeg ma oa chalet gand ar beorien, med en abeg ma 'z oa laer; karget e oa euz ar yalh, hag e oa troet da laerez ar pez a veze lakeet enni.

⁷ Hag e lavaras Jezuz:

— « Lez anezi, dezi d'her mired evid an deiz ma vin sebeliet. ⁸ Peorien ho-po bepréd en ho touez, me a-vad n'ho-peus ket ahanon ganeoh evid atao ».

⁹ Koulskoude eun niver braz a Juzevien o-doa klevet edo Jezuz eno hag e teujont, n'eo ket hebkén ablamour da Jezuz e-unan, med ive evid gweled Lazar e-noa savet a-douez ar re varo. ¹⁰ Neuze e tivizas Priñsed ar veleien lakaad Lazar ive d'ar maro, ¹¹ peogwir e oa en abeg dezañ e kuitee anezo kalz Juzevien, hag e kredent e Jezuz.

DEVEZ AR BLEUNIOU

¹² Antronoz, ar bobl tud deuet evid ar gouel a glevas edo Jezuz o tond da Jeruzalem. ¹³ Ha ganto skourrou gwez-palmez, ez ejont en arbenn dezañ en eur grial:

«Hozanna!

«Benniget an hini a zeu en ano an Aotrou,

«Roue Israël!»

¹⁴ O veza kavet eun azenig, Jezuz a azezas warnañ evel m'eo skrivet:

¹⁵ «N'ho-pet ket aon, merh Sion;

setu da roue v' tond

azezet war azen yaouank eun azenez».

¹⁶ Er penn kenta, ne gomprenas ket an diskibien petra 'hoarveze, med goude m'e-noa Jezuz resevet gloar, e teuas da zoñj dezo e oa bet skrivet kement-se diwar e benn, hag an dra-ze end-eün eo a oa bet greet dezañ. ¹⁷ Koulskoude e roe testeni dezañ an dud a oa gantañ p'e-noa galvet Lazar er-mêz euz ar béz hag e zavet a-douez ar re varo. ¹⁸ Hag en abeg ive m'o-doa klevet e-noa greet ar zin-se e oa deuet an dud en arbenn dezañ. ¹⁹ Ar Farizianed a lavaras kenetrezo:

— «Gweled a rit, ne hounezit netra, setu ma'z a an oll d'e heul».

AR HLOAR HAG AR GROAZ

²⁰ Bez' e oa Gresianed e-touez an dud pignet da Jeruzalem da geñver ar gouel (38). ²¹ Dond a rejont da gavoud Filip, hag a oa euz Betsaïda e Bro-Halilea, da houlenn outañ:

— «Aotrou, ni 'garfe gweled Jezuz».

²² Filip a yeas da lavared da Andre, hag o-daou e lavarjont da Jezuz.

²³ Jezuz a respontas evel-henn:

— «Deuet eo an eur (39)

ma tle Mab an Dén reseo e hloar.

²⁴ «E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh:

Ar hreunenn winiz taolet en douar,

ma ne varv ket,

ne zoug netra.

- Ma varv a-vad,
e tougo frouez e-leiz.
- 25 « An neb a gar e vuez
a gollo anezi;
an neb a zispriz anezi er béd-mañ
a viro anezi evid ar vuez peurbaduz.
- 26 « An neb a 'fell dezañ va zervicha
ra zeuio d'am heul,
hag el leh ma vin,
e vo ive va zervicher.
An hini a vo servicher din
a vo enoret gand va Zad.
- 27 « Bremañ ez on strafuillet.
Petra 'lavarin?
Tad savete ahanon euz an eur mañ.
Ha koulskoude evid an eur-mañ end-eün eo ez on
deuet.
Tad, ro gloar d'az ano! »
- 28 Dond a reas neuze eur vouez euz an Neñv:
« Gloar am-eus roet dezañ
ha c'hoaz e roin gloar dezañ ».
- 29 Ar bern tud a oa eno o-doa klevet ar vouez, hag e lava-
rent e oa bet eun tarz-kurun. Med lod all a lavare:
— « Eun El eo e-neus komzet outañ »,
- 30 Jezuz a gomzas a-nevez:
— « N'eo ket evidon eo deuet ar vouez-se
med evidoh-c'hwi.
Bremañ ez a ar béd da veza barnet.
- 31 « Bremañ, Mestr ar béd (40)
a vo taolet er-mêz.
- 32 « Ha me pa vin savet uhel diouz an douar,
me a zacho an oll davedon ».
- 33 Kement-se a lavare evid rei da intent peseurt maro
e-noa da houzañv.

- ³⁴ Respont a reas an dud dezañ:
— «Desket on-eus dre al Lezenn e tle ar Hrist
chom da viken. Perag 'ta e lavarez e tle Mab an
Dén beza uhel-savet? Piou eo eta ar Mab an Dén
-se?»
- ³⁵ Jezuz a respontas dezo:
— «Ar sklêrijenn a zo c'hoaz en ho-touez
evid eun nebeud amzer.
Kerzit eta,
e-keid ha m'ho-peus ar sklêrijenn,
gand aon na vefeh paket gand an deñvalijenn.
An nep a gerz en deñvalijenn
ne oar ket da beleh ez a.
- ³⁶ «E-keid ha m'ema ar sklêrijenn ganeoh,
kredit er sklêrijenn,
evid dond da veza tud a sklêrijenn».

Goude beza komzet evel-se ez eas Jezuz kuit da guzad
outo.

DISKRED AR JUZEVLEN

- ³⁷ Daoust dezañ beza greet kemend-all a zinou dirazo
ne gredent ket ennañ. ³⁸ Hag e teuas evel-se da wir
komzou ar profet Izaiaz:
*«Aotrou, piou e-neus kredet
«ar pez e-neus klevet euz or perz?
«ha da biou eo bet roet da anaoud
«galloud an Aotrou?»*
- ³⁹ An hevelep Izaiaz e-neus diskleriet perag ne hellent ket
kredi:
- ⁴⁰ *«Dallet e-neus o daoulagad
«ha kaledet o halonou,
«evid na welint ket gand o daoulagad,
«na intentint ket gand o halonou,
«na zistroint ket ouzin,
«rag pareet am-befe anezo».*

⁴¹ Izaiaz a lavare kement-se rag m'e-neus gwelet e hloar ha komzet diwar e benn.

⁴² Koulskoude, e-touez ar Pennou-Braz o-unan, kalz a gredas ennañ, med ablamour d'ar Farizianed, ne gredent ket henn diskleria, gand aon da veza taolet er-mêz euz ar zinagog.

⁴³ Rag gwelloc'h e kavent ar hloar a zeu a-berz an dud eged ar hloar a zeu a-berz Doue.

⁴⁴ Jezuz a zavas e vouez hag a lavaras :

— « An hini a gréd ennon
n'eo ket ennon eo e kréd,
med en hini e-neus kaset ahanon.

⁴⁵ « Hag an hini am gwél
a wél an hini e-neus kaset ahanon.

⁴⁶ « Me eo ar sklêrijenn
a zo deuet er béd
evid na jomo ket en deñvalijenn
an neb a gréd ennon.

⁴⁷ « Ma 'z eus unan bennag
hag a glév va homzou
ha n'o mir ket,
n'eo ket me eo a varno anezañ,
rag n'on ket deuet evid barn ar béd
med evid salvi ar béd.

⁴⁸ « An nep am distaol
ha na zigemer ket va homzou
e-neus e varner :
ar Gomz am-eus lavaret
her barno d'an deiz diweza.

⁴⁹ « Ha me n'eo ket ahanon va-unan am-eus komzet,
med an Tad hag e-neus kaset ahanon
e-neus gourhemennet din
ar pez am-boa da lavared ha da gelenn.

⁵⁰ « Ha gouzoud a ran
eo e hourhemenn buez peurbaduz.

Ar pezh a lavaran eta,
hel lavared a ran
evel m'e-neus an Tad hel lavaret din ».

Pennad XIII

JEZUZ A WALH O ZREID D'E ZISKIBIEN

¹ A-raog Gouel Pask, Jezuz o houzoud e oa deuet evitañ an eur da dremen euz ar béd-mañ daved e Dad, Eñ hag e-noe karet e dud hag a oa er béd, o haras beteg penn.

² E-pad eur préd, p'e-noa dija lakeet an diaoul e kalon Judaz, mab Simon Iskariot, ar zoñj d'e werza, ³ Jezuz, o houzoud e-noa e Dad laket pep tra etre e zaouarn, hag e oa deuet euz Doue hag e tistroe daved Doue, ⁴ a zav diouz taol, a denn e vantell, a gemer eul lienenn hag a lak anezi en-dro d'e zargreiz.

⁵ Neuze e skuill dour en eur vasin hag en em ro da walhi treid e ziskibien, ha d'o zeha gand al lienen a oa en-dro dezañ.

⁶ Dond a reas evel-se beteg Simon-Pèr hag hemañ a lavaras dezañ:

— « Te Aotrou, gwalhi din va zreid? »

⁷ Respont a reas Jezuz dezañ:

— « Ar pezh a ran ne intentez ket bremañ, med diwezatoh e ri ».

⁸ Pèr a lavaras dezañ:

— « Gwalhi va zreid din-me?, nann, ne walhi biken din va zreid! »

Ha Jezuz dezañ:

— « Ma ne walhan ket ahanout, n'az-po perz e-béd ganin ».

⁹ Lavared a reas neuze Simon-Pèr dezañ:

— «Neuze, Aotrou, n'eo ket hepken va zreid med ive va daouarn ha va 'fenn».

¹⁰ Lavared a reas Jezuz dezañ:

— «An dén e-neus en em walhet n'e-neus ezomm e-béd mui da veza gwalhet, glan eo penn-da-benn.

«Ha c'hwi a zo glan; n'eo ket an oll ahanoh a-vad».

¹¹ Rag gouzoud a ree piou a dlee e werza. Setu perag e-noa lavaret: «N'eo ket an oll ahanoh a zo glan».

¹² Goude beza gwalhet dezo o zreid, e wiskas adarre e zillad, ez eas a-nevez ouz taol hag e lavaras dezo:

— «Hag intent a rit-hu ar pez am-eus greet deoh?

¹³ «Va envel a rit Mestr hag Aotrou,
ha gwir a lavarit,
rag bez' ez on.

¹⁴ «M'am-eus-me, ho Mestr hag hoh Aotrou,
gwalhet deoh ho treid,
c'hwi ive a dle gwalhi ho treid an eil d'egile (41).

¹⁵ «Eur skwer am-eus roet deoh,
evid ma reoh, c'hwi ive,
evel m'am-eus greet deoh.

¹⁶ «E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh,
n'eo ket ar zervicher brasoh eged e vestr,
nag ar hannad brasoh eged an hini e-neus e gaset.

¹⁷ «Anaoudeg euz an traou-ze
e vezoh eüruz,
da vihana ma vevit hervezo.

¹⁸ «N'eo ket evidoh oll eo e komzan;
— anaoud a ran ar re am-eus dibabet —
med evid ma teuio da wir ar Skritur:
«An hini a zebre ar bara ganin
«e-neus savet e zeul a-eneb din».

- ¹⁹ « Hel lavared a ran deoh bremañ,
a-raog ma tigouezo,
evid ma kredoh « Ez On-me »
pa zigouezo.
- ²⁰ « E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh :
An neb a zigemer an hini a gasan
am digemer me va-unan,
hag an neb am digemer
a zigemer an hini e-neus kaset ahanon ».

JEZUZ A RO DA ANAOUD AN TRUBARD

²¹ Goude beza komzet evel-se, e oe Jezuz strafuillet er spered, hag e tisklerias frêz :

— « E gwirionez, e gwirionez, unan ahanoh a zo o vond d'am gwerza ».

²² Selled a ree an diskibien an eil ouz egile, o houlenno enno o-unan euz piou e komze.

²³ Unan euz an diskibien, an hini end-eün a oa karet gand Jezuz, a oa astennet harp ouz Jezuz. ²⁴ Simon Pêr a dennas e evez :

— « Goulenn 'ta euz piou ez eus ano gantañ ».

²⁵ An diskibl a zoublas war vruched Jezuz hag (42) a houlennas outañ :

— « Piou eo Aotrou? »

²⁶ Jezuz a respontas :

— « An hini a ginnigin dezañ an tamm am-bo soubet ».

Ha Jezuz kemered an tamm e-noa soubet hag e rei da Judaz Iskariot, mab Simon. ²⁷ D'ar mare-ze, p'e-noa kinniget an tamm-se dezañ, eh antreas Satan ennañ.

Jezuz a lavaras neuze :

— « Ar pez az-peus da ober, her gra buan ».

²⁸ Med nikun euz ar re a oa war al leh ne intentas perag e-noa lavaret kement-se. ²⁹ O veza m'edo ar yalh gand Judaz, lod a zoñjas e-noa lavaret Jezuz dezañ prena ar pez a oa réd evid ar gouel, pe c'hoaz rei eun dra bennag d'ar paour.

³⁰ Hag evid Judaz, kemeret gantañ an tamm, ez eas er-mêz raktal. Noz teñval e oa.

³¹ Pa oe eet Judaz er-mêz, e lavaras Jezuz :

— « Bremañ e-neus Mab an Dén resevet gloar, ha drezañ e-neus Doue resevet gloar.

³² « Doue a roio gloar dezañ, ennañ e-unan, hag hep dale eo e roio gloar dezañ ».

EMZIVIZ KENAVO

³³ « Va bugaligou,
n'emaon ganeoh nemed evid eun nebeud amzer ;
Va hlask a reoh,
ha m'am-eus lavaret d'ar Juzevien :
« D'al leh ma 'z an
ne hellit ket dond »,
deoh-c'hwi ive e lavaran bremañ kement-se.

³⁴ « Eur gourhemenn nevez a roan deoh :
En em garit an eil egile.
Evel m'am-eus-me ho karet
e tleit, c'hwi ive,
en em gared an eil egile.

³⁵ « M'ho-peus karantez an eil evid egile
e ouezo an oll ez oh diskibien din ».

³⁶ Lavaret a reas Simon Pèr dezañ :
— « Aotrou, da beleh ez ez? »
— « D'al leh ez an, eme Jezuz,
ne hellez ket dond d'am heul bremañ,
med dond a ri diwezatoh ».

³⁷ — «Aotrou, eme Bèr, perag ne hellan ket mond
d'az heul bremañ dioustu? Va buez a roin evidout».

³⁸ Jezuz a respontas:

— «Rei da vuez evidon!

E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar dit:

nann ne gano ket ar hillog

a-raog m'az-po va dinahet teir gwech.

Pennad XIV

JEZUZ EN HENT WAR-ZU AN TAD

¹ «Na lezit ket ho kalon da veza strafuillet.
Kredi a rit e Doue;
kredit ennon-me ive.

² «E ti va Zad ez eus meur a zemeurañs.
Ma ne vije ket bet evel-se,
daoust ha lavaret am-bije deoh
edon o vond da bourchas deoh eur plas?

³ «Ha pa vin eet d'e bourchas deoh,
me a zeuio en-dro d'ho kemer ganin,
evid ma vezoh, c'hwi ive,
el leh m'emaon-me.

⁴ «D'al leh ma 'z an,
c'hwi a oar an hent».

⁵ Tomaz a lavaras dezañ:
— «Aotrou, n'ouzom ket da beleh ez ez;
penaoz e ouezfem an hent?»

⁶ Hag e lavaras Jezuz dezañ:
— «Bez ez on-me an hent,
ar wirionez hag ar vuez (43).
N'ez a dén d'an Tad,
nemed drezon.

- ⁷ « Pegwir eh anavezit ahanon eh anavezit ive va Zad.
A-vremañ eh anavezit anezañ, hag ho-peus e welet ».
- ⁸ Neuze e lavaras Filip dezañ :
— « Aotrou, diskouez 'ta deom an Tad,
hag an dra-ze a zo a-walh evidom ».
- ⁹ Hag e lavaras Jezuz dezañ :
— « Keid-all a zo emañ ganeoh,
ha ne anavezez ket ahanon, Filip?
An hini a wél ahanon
a wél an Tad.
Penaos e hellez-te lavared :
« Diskouez deom an Tad? »
- ¹⁰ « Ha ne gredez ket emañ en Tad hag an Tad ennon?
Ar homzou a lavaran deoh,
n'eo ket ahanon va-unan eo e lavaran anezo.
An Tad, Eñ hag a zo ennon,
a ra e oberou dezañ e-unan.
- ¹¹ « Kredit ahanon :
Me a zo en Tad
hag an Tad a zo ennon ;
ha ma ne gredit ket ar pez a lavaran,
kredit ablamour d'an oberou-ze.
- ¹² « Ya, e gwirionez m'hel lavar deoh :
an hini a gréd ennon
a raio, eñ ive, an oberou a ran,
ha re vrasoh zokén,
pegwir ez an daved va Zad.
- ¹³ « Kement tra a houlennoh em ano,
henn ober a rin,
hag evel-se e vo roet gloar d'an Tad dre ar Mab.
- ¹⁴ « Ma houlennit eun dra bennag em ano,
henn ober a rin.
- ¹⁵ « Ma karit ahanon,
c'hwi a viro va gourhemennou ».

PROMESA AR SPERED-SANTEL

- 16 « Me a bedo an Tad
hag e roio deoh eur Skoazeller (44) all
hag a jomo ganeoh beteg fin ar béd.
- 17 Eñ eo Spered ar wirionez.
N'eo ket ar béd evid e reseo,
o veza ma n'her gwél ket
ha ma ne anavez ket anezañ.
Med c'hwi a anavez anezañ,
rag ennoh e chomo
hag ennoh e vezo.
- 18 « N'ho lezin ket emzivad;
distrei a ran davedoh.
- 19 « C'hoaz eur pennadig amzer,
hag ar béd n'am gwelo mui,
med c'hwi am gwelo beo
ha c'hwi a vevo ive.
- 20 « En deiz-se e ouezoh emañ em Zad
ha c'hwi ennon,
ha me ennoh.
- 21 « An hini a zalh d'am gourhemennou
hag a vir anezo,
hennez eo a gar ahanon,
hag an hini a gar ahanon
a vo karet gand va Zad;
ha diouz va zu, me a garo anezañ
hag en em ziskouezo dezañ ».
- 22 Jud — n'eo ket Judaz Iskariot — a lavaras dezañ:
— « Petra 'zo kaoz, Aotrou, ma 'z ez d'en em zis-
kouez deom ha n'eo ket d'ar béd? »
- 23 Respont a reas Jezuz dezañ:
— « An hini a gar ahanon
a zalho d'am Homz
ha va Zad a garo anezañ;

- dond a raim beteg ennañ,
hag on demeurañs a raim ennañ.
- 24 « An neb ne gar ket ahanon,
ne vir ket va Homz.
Hogen, ar homzou a glevit
n'eo ket va re-me int,
med re an Tad e-neus kaset ahanon.
- 25 « Kement-mañ am-eus lavaret deoh
e-pad m'emaon o chom ganeoh.
- 26 « Ar Skoazeller, ar Spered-Santel,
a vo kaset deoh euz va ferz,
hennez a roio deoh kemennadurez war bep tra,
hag a zigaso deoh da zoñj
euz kement am-eus lavaret deoh.
- 27 « Ar peoh a lezan ganeoh,
va 'feoh a roan deoh.
N'eo ket evel ma ro ar béd eo her roan deoh.
Na strafuill, nag aon eta en ho kalon.
- 28 « Klevet ho-peus ganin:
« Mond a ran kuit hag e teuan davedoh ».
Ma karfeh ahanon e vefeh laouen
ablamour ma 'z an da gavoud an Tad,
rag brasoh egedon eo an Tad.
- 29 « Hel lavaret am-eus deoh bremañ,
a-raog ma tigouezo,
evid ma krédfeh pa vo digouezet.
- 30 « Diwar vremañ ne gomzin nemeur ganeoh,
rag o tond ema Priñs ar béd-mañ;
e gwirionez, n'e-neus galloud e-béd warnon.
- 31 « Med dond a ra, evid ma ouezo ar béd
e karan va Zad
hag e ran hervez ar pezh e-neus gourhemennet din...
« Savit! Deom a-hann! » (45)

Pennad XV

JEZUZ AR WINIENN WIRION (46)

- ¹ Me eo ar winienn wirion
ha va Zad eo ar gwiniennour.
- ² «Kement skourr ennon ha ne zougo ket a 'frouez
a vo lamet kuit;
ha kement hini a zougo frouez
a vo nêteet gantañ ha krennet
evid ma tougo muioh a 'frouez.
- ³ «C'hwi adal bremañ a zo nêt,
ablamour d'ar homzou am-eus lavaret deoh.
Chomit ennon
ha me ennoh.
- ⁴ «Ne hell ket eur skourr
distag diouz ar winienn
dougenn frouez drezañ e-unan;
na c'hwi kennebeud,
ma ne jomit ket ennon.
- ⁵ «Me eo ar winienn,
c'hwi ar skourrou.
An hini a jom ennon
ha me ennañ,
hennez a zoug kalz frouez,
rag distag diouzin
ne hellit ober netra.
- ⁶ «An neb ne jom ket ennon
a vo stlapet kuit
evel ma reer d'eur skourr,
hag e seho;
dastumet e vo
ha taolet en tan da zevi.
- ⁷ «Ma chomit ennon
ha ma chom va homzou ennoh,

c'hwi a houlenno ar pez ho-po c'hoant,
hag e vo roet deoh.

⁸ « Kement-mañ eo a roio gloar d'an Tad:
ma tougit frouez e-leiz
ha ma vezit diskibien din.

⁹ « Evel m'e-neus va Zad karet ahanon,
me ive am-eus ho karet;
Chomit em harantez.

¹⁰ « Ma virit va gourhemennou
e chomoh em harantez,
evel ma choman me e karantez va Zad
en eur vired e hourhemennou.

¹¹ « Kement-se am-eus lavaret deoh
evid ma vo ennoh va levenez,
ha ma vo leun-barr ho levenez.

GOURHEMENN JEZUZ

¹² « Hemañ eo va gourhemenn din-me:
En em garit an eil egile,
evel m'am-eus ho karet.

¹³ « N'eus ket brasoh karantez
eged rei ar vuez
evid ar re a garer.

¹⁴ « C'hwi 'vo mignoned din
ma rit ar pez a hourhemennan deoh.

¹⁵ « N'eo ket an ano a zervicher a roan deoh hiviziken,
rag ar zervicher ne oar ket petra 'ra e vestr.
Bremañ e roan deoh an ano a vignon,
rag kement am-eus klevet gand va Zad
am-eus roet deoh da anaoud.

¹⁶ « N'eo ket c'hwi eo ho-peus choazet ahanon;
med me eo am-eus ho choazet c'hwi,
ha roet karg deoh da vond

ha da zougenn frouez, ha frouez paduz.
Neuze, kement a houlennoh digand va Zad, em ano,
Eñ her roio deoh.

- 17 « Ar pez a hourhemennan deoh
eo en em gared an eil egile ».

KASONI HA PEHED AR BED

- 18 « M'e-neus ar béd kasoni ouzoh,
c'hwī a ouezo e-neus bet kasoni ouzin da genta.
- 19 « Ma vijeh euz ar béd,
ar béd e-nije bet karantez
ouz ar pez a vije dezañ.
Med n'oh ket euz ar béd;
me eo am-eus ho tispartiet diouz ar béd,
ha setu perag e-neus ar béd kasoni ouzoh.
- 20 « Dalhit soñj euz ar gomz am-eus lavaret deoh:
Ar zervicher n'eo ket brasoh eged e vestr.
M'o-deus gwall-gaset ahanon,
c'hwī ive a vo gwall-gaset ganto.
- 21 « An oll draou-ze a raint deoh
ablamour d'am ano,
rag n'anavezont ket
an hini e-neus kaset ahanon.
- 22 « Ma ne vijen ket deuet,
ha ma n'am-bije ket komzet outo,
n'o-dije pehed e-béd;
med bremañ n'o-deus digarez vad e-béd d'o 'fehede.
- 23 « An hini e-neus kas ouzin,
e-neus kas ouz va Zad.
- 24 « Ma n'am-bije ket greet en o-zouez an oberou-ze
ha n'e-neus dén all e-béd greet,
n'o-dije ket a behed.
Med bremañ, goude m'o-deus gwelet,
o-deus kasoni ouzin hag ouz va Zad.

- 25 « Ha kement-se evid ma teuio da wir
ar gomz a zo bet skrivet en o Lezenn:
« *Kasaet o-deus ahanon heb abeg* ».
- 26 « Pa zeuio ar Skoazeller
a gasin-me deoh a-berz va Zad,
Spered ar Wirionez a zeu euz an Tad,
Eñ a roio testeni diwar va 'fenn.
- 27 « ha c'hwî, d'ho tro, a roio testeni din, ablamour
m'emaoh ganin abaoe ar penn kenta ».

Pennad XVI

- 1 « An traou-ze am-eus lavaret deoh
evid ho mired da veza skoillet.
- 2 « Taolet e vezoh er-mêz euz ar zinagogou;
dond a ra zokén an eur
d'an hini ho lakaio d'ar maro,
ma kredo dezañ kinnig da Zoue eur zakrifis.
- 3 « Ober a raint kement-se
ablamour n'o-deus anavezet nag an Tad na me.
- 4 « Med lavaret am-eus deoh an traou-ze,
evid m'ho-po soñj, pa zeuio an eur,
am-boa o lavaret deoh;
n'am-eus ket o lavaret abaoe ar penn kenta
o veza m'edon ganeoh ».

OBEROU AR SPERED-SANTEL

- 5 « Med bremañ ez an daved an hini e-neus kaset ahanon
ha ne houlenn nikun ahanoh ouzin:
« Da beleh ez ez? »
- 6 « Hag ablamour m'am-eus lavaret an dra-ze deoh
eo bet leuniet ho kalon a dristidigez.

- ⁷ « Med me a lavar deoh ar wirionez:
Eun dra vad eo evidoh ez afen kuit,
rag ma ne 'z an ket kuit,
ne zeuio ket ar Skoazeller davedoh;
er hontrol, ma 'z an kuit,
e kasin anezañ deoh.
- ⁸ « Hag eñ a ziskouezo sklêr d'ar béd
ar pehed,
ar justis
hag ar varnedigez. (47).
- ⁹ « Ar pehed,
e kement ha ne gredont ket ennon.
- ¹⁰ « Ar justis,
e kement ha ma 'z an daved va Zad,
ha n'am gweloh mui.
- ¹¹ « Ar varnedigez
e kement ha m'eo bet barnet dija
priñs ar béd-mañ.
- ¹² « Kalz traou all am-eus c'hoaz da lavared deoh,
med n'oh ket evid o dougenn bremañ.
- ¹³ « Pa vo deuet ar Spered a Wirionez,
Eñ a reno ahanoh er wirionez penn-da-benn,
rag n'eo ket anezañ e-unan eo e komzo,
med kement a glevo a lavaro;
hag ar pez a zo da zond a zisklerio deoh.
- ¹⁴ « Gloar a roio din
rag kemer a raio euz ar pez a zo din
evid henn diskleria deoh.
- ¹⁵ « Kement a zo d'an Tad a zo din,
setu perag am-eus lavaret deoh:
« Kemer a raio euz ar pez a zo din
« evid henn diskleria deoh ».

GOUELVAN HA LEVENEZ

- 16 « C'hoaz eun nebeud amzer
 ha n'am gweloh mui,
 ha c'hoaz eun nebeudig amzer
 hag am gweloh ».
- 17 Neuze e lavaras kenetrezo lod euz e ziskibien :
 — « Petra 'lavar deom :
 « C'hoaz eun nebeudig amzer
 « ha n'am gweloh mui,
 « ha c'hoaz eun nebeud amzer
 « hag am gweloh ? »
 Pe c'hoaz :
 « Daved va Zad emañ o vond. »
- 18 Lavared a reent eta :
 « Petra eo « an nebeud amzer-ze » ; ne intentom ket
 petra 'fell dezañ lavared ».
- 19 O houzoud o-doa c'hoant da ober goulennou outañ,
 e lavaras Jezuz dezo :
 — « Klask a rit gouzoud kenetrezo,
 petra 'fell din lavared gand :
 « C'hoaz eun nebeud amzer
 « ha n'am gweloh mui,
 « ha c'hoaz eun nebeud amzer
 « hag am gweloh ».
- 20 « E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh :
 C'hwi a ouelo hag a hirvoudo,
 endra ma vo laouenedigez gand ar béd :
 C'hwi a vo glaharet,
 med trei a raio ho klahar e levenez.
- 21 « Eur vaouez, pa laka he hrouadur er béd,
 a zo en dristidigez,
 o veza m'eo deuet ar mare eviti.
 Med p'he-deus ganet he hrouadur,

- n'he-deus mui a zoñj euz he foan
gand ar joa he-deus
o veza ma 'z eus deuet eun dén er béd.
- 22 «Evel-se, c'hwi a zo bremañ en dristidigez,
med ho kweled a rin en-dro,
ha laouennaad a raio ho kalon,
hag al levez-se ne vo dén d'he lemel diganeoh.
- 23 «Hag en deiz-se,
ne reoh ouzin goulenn e-béd kén war netra.
E gwirionez, e gwirionez m'hel lavar deoh,
kement tra a houlennoh digand va Zad, em ano,
a vo roet deoh gantañ.
- 24 «Beteg-henn n'ho-peus goulennet netra em ano.
Goulennit hag e resevoh,
hag e vo leun-barr ho levez-se».

AN TREH D'AR BED

- 25 «Lavaret am-eus an traou-ze deoh
e parabolennou.
Med dond a ra an eur
ha ne gomzin ket ouzoh e parabolennou,
med komz a rin sklêr
diwar-benn va Zad.
- 26 «En deiz-se e houlennoh em ano,
ha koulskoude ne lavaran ket
e pedin an Tad evidoh,
- 27 rag an Tad e-unan ho kar
rag m'ho-peus va haret
ha m'ho-peus kredet ez on deuet euz a Zoue.
- 28 «Eet on er-mêz euz an Tad
ha deuet er béd.
Ha bremañ e kuitaan ar béd,
hag e tistroan da gavoud va Zad».

- ²⁹ E ziskibien a lavaras dezañ :
 — « Setu ma komzez didroidell bremañ hag e lezez
 a-gostez pep doare damguz. ³⁰ Bremañ e houzom
 eh anavezez pep tra, ha n'az-peus ket ezomm e
 rafe dén goulennou ouzit. Setu perag e kredom ez
 out deuet euz a Zoue ».
- ³¹ Ha Jezuz a respontas dezo :
 — « Kredi a rit bremañ !
- ³² « Setu ma teu an eur,
 ha deuet eo,
 ma vezoh strewet pep hini diouz e du,
 ha ma lezoh ahanon va-unan.
 Med n'emaon ket va-unan ;
 an Tad a zo ganin.
- ³³ « An traou-ze am-eus lavaret deoh
 evid m'ho-po ar peoh ennon.
 Er béd-mañ e kavoh trubuill,
 med ho pet fiziañs ;
 treh on bet d'ar béd ».

Pennad XVII

PEDENN JEZUZ (48)

- ¹ Goude beza komzet evel-se, e savas Jezuz e zaoulagad
 war-zu an Neñv hag e lavaras :
 — « Tad, deuet eo an eur :
 Ro gloar d'az Mab,
 evid ma roio da Vab gloar dit,
- ² « hag, evel m'az-peus roet galloud dezañ war bep dén,
 ma roio ar vuez peurbaduz,
 da gement hini az-peus roet dezañ.

- ³ « Hogen, ar vuez peurbaduz eo kement-man :
ma'h anavezint ahanout
Te ha n'eus Doue gwirion ebed nemedout,
ha ma 'h anavezint an hini az-peus digaset,
Jezuz-Krist.
- ⁴ « Roet am-eus gloar dit war an douar,
kaset am-eus da benn
al labour az-poa fiziet ennon.
- ⁵ « Dit eo bremañ, Tad,
da rei din en da gichenn
ar hloar a oa din en da gichenn
a-raog ma oa ar béd anezañ.
- ⁶ « Roet am-eus da ano da anaoud
d'an dud az-peus tennet euz ar béd
evid o rei din.
Dit e oent,
hag az-peus roet anezo din.
Miret o-deus da Gomz.
- ⁷ « Gouzoud a reont bremañ
eo diganit e teu kement az-peus roet din ;
- ⁸ « Hag ar homzou az-peus fiziet ennon,
am-eus roet dezo.
O digemeret o-deus
ha diskleriet ez eo gwir ez on deuet ahanout,
ha kredet eo gwir az-peus va digaset »,.

PEDENN JEZUZ EVID E EBESTEL

- ⁹ « Me a béd evito ;
Ne bedan ket evid ar béd,
med evid ar re az-peus roet din,
rag dit ez int.
- ¹⁰ « Kement a zo din a zo dit
ha kement a zo dit a zo din,
ha va gloar a gavan enno.

- 11 « N'emaon mui er béd,
 med int-i a zo er béd,
 endra ma 'z an davedout.
 Tad Santel, mir en da ano
 ar re az-peus roet din,
 evid ma vezint unan
 evel ma 'z om-ni unan.
- 12 « Keid ha m'on bet ganto,
 me eo a vire dre da ano
 ar re az-peus roet din;
 o diwallet am-eus,
 ha n'eus eet nikun da goll
 nemed ar mab a zaonidigez,
 evid ma teufe ar Skritur da wir.
- 13 « Med bremañ emañ o tond davedout
 ha kement-mañ a lavaran
 p'emaon c'hoaz er béd,
 evid ma vezint leun-barr
 euz va levenez en he féz.
- 14 « Da Gomz am-eus roet dezo,
 hag ar béd e-neus kemeret kas outo,
 ablamour n'int ket euz ar béd,
 evel m'a n'on ket, me kennebeud, euz ar béd.
- 15 « N'eo ket o zenna euz ar béd
 eo a houlennan diganit,
 med o diwall diouz an droug.
- 16 « N'int ket euz ar béd,
 evel n'on ket, me, kennebeud, euz ar béd.
- 17 « Gra ma vint gouestlet dit dre ar wirionez:
 gwirionez eo da Gomz.
- 18 « Evel m'az-peus kaset ahanon er béd,
 me a gas anezo er béd.
- 19 « Hag evito en em ouestlan dit,
 evid ma vint, d'o zro,
 gouestlet dre ar wirionez.

PEDENN JEZUZ EVIDOM

- 20 « Ne bedan ket evito hepkén,
med ive evid ar re a grédo diwar o Homz.
- 21 « Gra dezo beza unan hepkén ennon
evel m'emaout-te, Tad, ennon
ha me ennout;
Gra dezo ive beza unan hepkén ennon,
ma kredo ar béd
ez eo ganit on bet kaset.
- 22 « Ar hloar az-peus roet din
am-eus roet dezo,
evid ma vint unan hepkén
evel ma 'z om-ni unan,
- 23 « me enno ha te ennon,
evid ma vint unan da vad,
hag evid ma ouezo ar béd
eo ganit on bet kaset,
hag az-peus o haret
evel m'az-peus karet ahanon.
- 24 « Tad, ar re az-peus roet din,
me a 'fell din e vefent ganin
el leh m'emaon,
dezo da weled va gloar,
an hini am-eus bet diganit,
ablamour m'az-peus va haret
a-raog krouidigez ar béd.
- 25 « Tad just, gwir eo
n'e-neus ket ar béd anavezet ahanout,
med me am-eus da anavezet,
hag ar re-mañ o-deus anavezet
eo ganit on bet kaset.
- 26 « Roet am-eus dezo da anaoud, er-vad, da ano,
hag henn ober a rin c'hoaz,
evid ma vo enno

ar garantez az-peus evidon
ha ma vezin enno, me ive».

Pennad XVIII

JEZUZ LAKET HARZ WARNAN

¹ O veza komzet evèl-se, ez eas Jezuz, e ziskibien ouz e heul, en tu all d'ar froud Sedron. Eno e oa eul liorz hag eh antreas enni, Eñ hag e ziskibien.

² Judaz, an trubard, a anaveze ive al leh-se, rag meur a wech e oa bet Jezuz eno gand e ziskibien.

³ Judaz, o veza kemeret gantañ ar gompagnunez soudarded ha gwarded, roet dezañ gand ar Veleien-Vraz hag ar Farizianed, a zeuas di gand leterniou, torchadou-goulou hag armou.

⁴ Jezuz o houzoud kement a oa da erruoud gantañ, a yeas etrezeg enno.

— «Piou a glaskit?», emezañ dezo.

⁵ Hag int-i respont:

— «Jezuz a Nazared».

Jezuz a lavaras dezo:

— «Me eo!»

Judaz, an trubard, a oa ganto. ⁶ P'e-noa lavaret dezo: «Me eo!» ez ejont war a-dreñv hag e kouezjont d'an douar. ⁷ Eur wech c'hoaz e houlennas outo:

— «Piou a glaskit?»

Hag int-i lavared:

— «Jezuz a Nazared».

⁸ Jezuz a respontas:

— « Hel lavaret am-eus deoh, Me eo. Mar d-eo Me eo a glaskit, lezit ar re-mañ da vond kuit ».

⁹ Evel-se e teuas da wir ar pez e-noa lavaret Jezuz : « N'am-eus kollet nikun euz ar re az-poa roet din ».

¹⁰ Simon-Pèr a dennas ar hleze a oa gantañ, hag e skoas mevel ar Beleg-Braz, o troha dezañ e skouarn dehou ; Malkuz 'oa ano ar mevel-se.

¹¹ Med Jezuz a lavaras dezañ :

— « Lak da gleze er feur. Penaoz ! Daoust ha ne evin ket ar halirad roet din gand va Zad ? »

¹² Neuze ar gompagnunez gand he ofiser ha gwarded ar Juzevien a grogas e Jezuz hag e liammas.

E PALEZ AR BELEG BRAZ ANNAZ

¹³ Kas a rejont anezañ da genta da di Annaz ; hemañ a oa tad-kaer da Gaifaz, Beleg-Braz er bloavez-se. ¹⁴ Kaifaz eo an hini e-noa roet d'ar Juzevien an ali-mañ : « Gwelloh eo deom e varfe eun dén hepkén evid ar bobl ».

¹⁵ Hogen, da heul Jezuz e oa deuet Simon-Pèr hag eun diskibl all (49). An diskibl-mañ a oa anavezet gand ar Beleg-Braz. Antreal a reas gand Jezuz e porz ar Beleg-Braz.

¹⁶ Pèr a-vad a oa chomet e-tal an nor er-mêz ; an diskibl all, an hini anavezet gand ar Beleg-Braz, a yeas er-mêz, a gomzas d'ar borziérez, hag a reas da Bèr antreal. ¹⁷ Neuze, ar borziérez yaouank a lavaras da Bèr :

— « Ha n'out ket, te ive, unan euz diskibien an dén-ze ? »

Hag e respontas :

— « N'on ket ! »

¹⁸ Ar zervicherien hag ar warded a oa o tomma ouz eun tan glaou o-doa greet, rag yén 'oa an amzer. Pèr a oa ive ganto o tomma.

¹⁹ Ar Beleg-Braz a reas goulennou ouz Jezuz diwar-benn e ziskibien ha diwar-benn e gelennadurez.

²⁰ Respont a reas Jezuz dezañ :

— « Komzet am-eus sklêr d'ar béd, kelennet am-eus bepréd er zinagog hag en templ, el leh m'en em vod ar Juzevien, ha n'am-eus lavaret netra e kuz. ²¹ Perag eo ouzime e rez goulennou? Goulenn ouz ar re o-deus klevet ar pez am-eus lavaret dezo. Ar re-ze a oar mad ar pez am-eus lavaret ».

²² O kleved kement-se, unan euz ar zoudarded a oa war al leh a roas eur garvanad da Jezuz, en eur lavared :

— « E-giz-se eo e respontez d'ar Beleg-Braz? »

²³ Hag e respontas Jezuz dezañ :

— « M'am-eus komzet fall, diskouez perag ; med m'am-eus komzet mad, perag skei ganin? »

²⁴ Neuze e kasas Annaz anezañ, liammet, da Gaifaz ar Beleg-Braz.

PER A NAH E VESTR

²⁵ Hogen, Pèr a oa war al leh, o tomma. Lavared a rejont dezañ :

— « Ha n'out ket, te ive, unan euz e ziskibien? »

Nah a reas hag e lavaras :

— « N'on ket ! »

²⁶ Unan euz servicherien ar Beleg-Braz, kar d'an hini e-noa Pèr trohet dezañ e skouarn, a lavaras :

— « Ha n'eo ket te eo am-eus gwelet el liorz asamblez gantañ? »

²⁷ Hag adarre e nahas Pèr. Raktal e kanas ar hillog.

JEZUZ DIRAG PILAD

²⁸ Neuze e oe kaset Jezuz euz ti Gaifaz da di ar gouarnour, a-bréd diouz ar mintin. Ar re o-doa e zigaset ne antrejont ket gand aon da veza saotret, hag evid gelloud debri ar Pask (50).

²⁹ Pilad a zeuas eta er-mêz d'o havoud hag a lavaras:

— « Petra 'damallit d'an dén-ze? »

³⁰ Respont a rejont:

— « Ma ne vije ket eun torfetour n'or-bije ket e laket etre da zaouarn ».

³¹ Ha Pilad dezo:

— « Kemerit anezañ, c'hwi hoh unan, ha barnit anezañ hervez ho Lezenn ».

Ar Juzevien a lavaras dezañ:

— « N'on-eus ket a zroad da lakad eun dén d'ar maro » (51).

³² Evel-se e tlee dond da wir ar pez e-noa lavaret Jezuz da verka dre beseurt maro e tlee mervel.

³³ Neuze e tistroas Pilad e diabarz an ti-lezvarn. Gelver a reas Jezuz, ha lavared dezañ:

— « Ha bez' ez out-te roue ar Juzevien? »

³⁴ Respont a reas Jezuz:

— « Hag ahanout da unan e lavarez kement-se, pe re all o-deus hel lavaret dit diwar va 'fenn? »

³⁵ Respont a reas Pilad:

— « Daoust hag eur Juzeo on-me? Da bobl ha Priñsed ar Veleien o-deus da laket etre va daouarn. Petra az-peus greet? »

Ha Jezuz d'e dro:

³⁶ — «Va Rouantèlèz n'eo ket euz ar béd-mañ. Ma vije bet va Rouantèlèz euz ar béd-mañ, o-dije va zervicherien stourmet evid mired na vijen lakeet etre daouarn ar Juzevien. Med n'eo ket euz ar béd-mañ va Rouantèlèz».

³⁷ Hag e lavaras Pilad dezañ:

— «Neuze 'ta ez out roue?»

Respont a reas Jezuz:

— «Hel lavared a rez, roue on, ha ganet on, ha deuet er béd evid rei testeni d'ar wirionez, ha kement hini a zo dén a wirionez a zelaou va mouéz».

³⁸ Hag e lavaras Pilad dezañ:

— «Petra eo ar wirionez?»

³⁹ Goude ar homzou-ze ez eas er-mêz adarre da gavoud ar Juzevien, hag e lavaras dezo:

— «Ne gavan ennañ abeg e-béd d'e gondaoni. Med ar hiz a zo ganeoh e rofen e 'frankiz d'eur prizoniad da geñver ar Pask. Daoust ha plijoud a rafe deoh e rofen deoh roue ar Juzevien?»

⁴⁰ Neuze e stagjont adarre da grial en eur lavared:

— «N'eo ket hemañ, med Barabbaz».

Barabbaz a oa eun torfetour.

Pennad XIX

JEZUZ SKOURJEZET HA KURUNET A SPERN

¹ Neuze Pilad a gasas Jezuz gantañ hag e lakeas e skourjeza.

² Ar zoudarded a vlañsonas eur gurunenn greet gand spern hag he lakeas war e benn; gwiska 'rejont dezañ eur vantell ruz. ³ Tostaad a reent outañ hag e lavarent:

— «Salud, roue ar Juzevien!»

hag e stagjont da skei gantañ.

⁴ Pilad deuet er-mêz eur wech c'hoaz a lavaras d'ar Juzevien:

— «Sellit, e zigas a ran deoh er-mêz. Réd eo deoh gouzoud ne gavan ennañ abeg e-béd d'e gondaoni».

⁵ Neuze e teuas Jezuz er-mêz gand ar gurunenn spern hag ar vantell ruz. Hag e lavaras Pilad:

— «Setu an dén!»

⁶ Ouz e weled, Priñsed ar Veleien hag o zud a youhas:

— «Ouz ar groaz! ouz ar groaz!»

Pilad a lavaras dezo:

— «Kemerit anezañ, c'hwi hoh-unan, hag e stagit ouz ar groaz. Evidon-me, ne gavan abeg e-béd ennañ d'e gondaoni».

⁷ Ar Juzevien a lavaras dezañ:

— «Ni on-eus eul Lezenn, hag hervez al Lezenn-se, e tle mervel rag m'e-neus en em lakeet Mab da Zoue».

⁸ O klevet kement-se, e krogas muioh a aon c'hoaz e Pilad. ⁹ Antreal a reas adarre en ti hag e lavaras da Jezuz:

— «Euz a beleh out?»

Med ne roas Jezuz respont e-béd dezañ.

¹⁰ Ha Pilad, neuze dezañ:

— «Din-me eo e chomez heb lavared netra? N'ouzout ket eta am-eus galloud da rei dit da 'frankiz, ha galloud da staga ahanout ouz ar groaz?»

¹¹ Respont a reas Jezuz:

— «Galloud e-bed n'az-pefe warnon, ma ne vije ket bet roet dit euz an Neñv. Setu perag e-neus brasoh pehed an hini e-neus va lakeet etre da zaouarn».

¹² Diwar neuze e klaske Pilad an tu da rei dezañ e 'frankiz:

Med ar Juzevien a youhe:

— «Ma lezez anezañ da vale, n'out ket mignon da Zesar; rag kement hini en em lak da roue a ya a-eneb da Zesar».

¹³ O veza kleved kement-se e reas Pilad digas Jezuz er-mêz, hag eh azezas war e gador a varner, el leh anvet Lithostrotos, en hebreeg: Gabbatha.

¹⁴ Derhent ar Pask e oa, war-dro kreisteiz, hag e lavaras Pilad d'ar Juzevien:

— «Setu amañ ho roue!»

¹⁵ Med ar re-mañ a youhas:

— «D'ar maro! d'ar maro! ouz ar groaz!»

Ha Pilad a-nevez:

— «Ha red eo din staga ho roue ouz ar groaz?»

Priñsed ar veleien a respontas:

— «N'on-eus kén roue nemed Sezar».

¹⁶ Neuze e roaz anezañ dezo evid beza staget ouz ar groaz.

JEZUZ LAKEET D'AR MARO

¹⁷ Kemered a rejont eta Jezuz. Sammet euz e groaz, ez eas Jezuz er-mêz euz kêr, evid mond d'eul leh anvet «ar glo-penn», en hebreeg «golgotha». ¹⁸ Eno eo e oe staget ouz ar groaz, ha daou all gantañ, unan a beb tu dezañ, ha Jezuz e kreiz.

¹⁹ Pilad a reas ive eur skritell hag he lakeas ouz ar groaz, skrivet warni kement-mañ: Jezuz a Nazared, roue ar Juzevien.

²⁰ Lennet e oe ar skritell-se gand kalz a Juzevien, rag al leh ma oa bet staget Jezuz ouz ar groaz a oa harp ouz kêr. Ha skrivet e oa ar skritell-se en hebreeg, e latin hag e gresianeg.

²¹ Beleien-Vraz ar Juzevien a lavaras da Bilad:

— «Na skrivit ket «Roue ar Juzevien», med kentoh: «heman e-neus lavaret beza roue ar Juzevien».

²² Pilad a respontas:

— «Ar pezh am-eus skrivet, am-eus skrivet».

²³ Ar zoudarded, staget ganto Jezuz ouz ar groaz, a gemeras e zillad hag a reas peder lodenn anezo, unan evid pep hini.

Hag e chome ar zae, gwri e-béd enni, gwiadet en eur pezh penn-da-benn, azaleg an neh.

²⁴ Kenetrezo e lavaras ar zoudarded:

— «Arabad deom freuza anezi, med tennom anezi d'ar zord, evid gouzoud da biou e vo».

Evel-se e teue da wir komzou ar Skritur:

«*Lodennet o-deus va dillad kenetrezo, ha va zae o-deus tennet d'ar zord*».

Setu aze eta ar pezh a reas ar zoudarded.

MARI E-TAL AR GROAZ

²⁵ En he zav, e kichenn kroaz Jezuz, edo e vamm, ha c'hoar e vamm, Mari, gwreg Kleofaz, ha Mari-Madalén.

²⁶ O weled evel-se e vamm hag en he hichenn an diskibl a gare, e lavaras Jezuz d'e vamm:

— «Maouez, setu aze da vab».

²⁷ Goudeze e lavaras d'an diskibl:

— «Setu aze da vamm».

Hag azaleg neuze e kemeras an diskibl anezi en e di.

MARO JEZUZ

²⁸ Goudeze, Jezuz, o houzoud e oa kaset peb tra gantañ da benn, a lavaras, evid ma teufe da wir ar Skritur:

— «Sched am-eus».

²⁹ Bez' e oa eno eur pod leun a winègr; lakeet e oa e penn eur gorzenn hizop (52) eun tamm spoue, karget a winègr, ha tosteet ouz genou Jezuz. ³⁰ Kerkent ha m'e-noa kemeret ar gwinègr e lavaras Jezuz:

— «Peurhreet eo peb tra!»

Hag o veza soublet e benn, e rentas e spered.

AR GWAD HAG AN DOUR

³¹ Hogen ar Juzevien, o veza m'edod da zerhent ar zabat, evid na jomfe ket ar horvou ouz ar groaz da zeiz ar zabat — Ha braz e oa an devez sabat-se — a houlennas digand Pilad ma vefe torret dezo o diwesker ha ma vefent savet kuit.

³² Dond a reas ar zoudarded, terri a rejont e ziwesker d'ar henta ha goudeze d'an eil euz ar re a oa bet staget ouz ar groaz gand Jezuz.

³³ Pa oent digouezet dirag Jezuz, o weled e oa dija maro, ne dorjont ket dezañ e ziwesker.

³⁴ Med unan euz ar zoudarded a skoas eun taol lañs en e gostez; ha raktal e teuas anezañ gwad ha dour,

³⁵ An hini e-neus gwelet a ro testeni a gement-se, ha gwirion eo e desteni; hennez a oar e lavar ar wirionez evid ma kredoh, c'hwi ive.

³⁶ C'hoarvezet eo kement-se evid ma teufe da wir ar Skritur:

«Askorn e-béd dezañ ne vo torret».

³⁷ Ha c'hoaz en eul leh all e lavar ar Skritur:

«Selled a raint ouz an hini o-deus treuzet dezañ e gorr».

OR ZALVER LAKEET ER BEZ

³⁸ Goude an darvoudou-ze, Jozef a Arimatea, hag a oa diskibl da Jezuz, med e kuz, gand aon rag ar Juzevien, a houlennas digand Pilad e lezel da zavel kuit korv Jezuz. Aotre a roas Pilad.

Dond a reas eta Jozef ha kas gantañ korv Jezuz. ³⁹ Dond a reas ive Nikodem, eñ hag a oa bet dija, en noz, o weled Jezuz. Digas a reas gantañ eur hemmesk mir hag aloez, eur hant lur bouez bennag.

⁴⁰ Kemer a rejont eta korv Jezuz, her gronna gand lurenou, ha skuilla warnañ louzeier c'hwez-vad, hervez an doare sebelia gand ar Juzevien.

⁴¹ El leh ma oa bet staget Jezuz ouz ar groaz e oa eul liorz, hag el liorz-se eur béz nevez ne oa bet lakeet dén e-béd ennañ c'hoaz.

⁴² Eno eta, o veza ma oa derhent pask ar Juzevien ha peogwir edo tost ar béz, e lakejont Jezuz.

Pénnad XX

AR BEZ GOULLO

¹ D'an deiz kenta euz ar zizun, da houlou-deiz, pa oa teñval c'hoaz, ez eas Mari Madalen d'ar béz, hag e welas e oa lamet kuit ar mén diwarnañ.

² D'ar réd e tistro da gavoud Simon-Pèr hag an diskibl all, an hini a oa karet gand Jezuz, hag e lavaras dezo:

— «Lamet o-deus an Aotrou euz ar béz, ha n'ouzon ket e peleh o-deus e lakeet».

³ Neuze ez eas Pèr hag an diskibl all er-mêz, hag ez ejont d'ar bêz.

⁴ Redeg a reent o-daou asamblez med redeg a reas buan-noh an diskibl all, hag eh erruas da genta er bêz.

⁵ Soubla a reas da zelled hag e wél al lurennou lakeet eno. Med chom a ra hep mond tre.

⁶ D'e dro war e lerh, eh erruas ive Simon-Pèr, hag ez eas e-barz ar bêz.

Gweled a reas al lurennou lakeet eno ⁷ hag al lienenn bet lakeet war ar penn, med houmañ e-leh beza gand al lurennou, a oa rollet brao en eul leh a gostez.

⁸ Neuze eo eh antreas d'e dro er bêz an diskibl all, an hini a oa digouezet da genta. Gweled a reas hag e kredas.

⁹ Beteg neuze n'o-doa ket c'hoaz komprenet ar Skritur pa lavare e tlee Jezuz sevel a-douez ar re varo.

¹⁰ Goudeze e tistroas an diskibien d'ar gêr.

MARI-MADALEN A WEL AN AOTROU

¹¹ Mari a-vad a oa chomet er-mêz, e-tal ar bez, hag a ouele. E ser gouela e soublas e diabarz ar bêz, ¹² hag e welas daou El, gwisket e gwenn, azezet el leh m'oa bet astennet korv Jezuz, unan ouz ar penn hag egile ouz an treid.

¹³ — «Maouez, emezo dezi, perag e ouelez?»

Hi a respontas:

— «Kaset o-deus ganto va Aotrou, ha n'ouzon ket e peleh o-deus e lakeet».

¹⁴ E-ser komz evel-se, e tistro hag e wél Jezuz a oa eno, med ne ouie ket e oa Jezuz.

¹⁵ Jezuz a lavaras dezi:

— «Maouez, perag e ouelez? Piou a glaskez?»

Hi hag a grede dezi e oa al liorzour, a lavaras dezañ:

— «Aotrou, m'az-peus kaset anezañ ganit, lavar din e peleh az-peus e lakeet, ma 'z in d'e gerhad»

¹⁶ Jezuz a lavaras dezi:

— «Mariam!»

Distrei a reas-hi ha lavared en hebreeg:

— «Rabbouni!» da lavared eo: «Mestr».

¹⁷ Jezuz a lavaras dezi:

— «N'ez a ket da douch ouzin, rag n'on ket c'hoaz pignet daved va Zad; med kerz da gavoud va breudeur, ha lavar dezo: «Pignad a ran daved va Zad hag ho Tad, daved va Doue hag ho Toue».

¹⁸ Mari-Madalen a zeuas da gemenn d'an diskibien:

«Gwelet am-eus an Aotrou, ha setu amañ ar pezh e-neus lavaret din».

AN DISKIBIEN A WEL AN AOTROU

¹⁹ D'an deiz-se ive, hag a oa deiz kenta ar zizun diouz an noz, ha goude ma oe bet, gand aon rag ar Juzevien, prennet doriou an ti el leh m'edo an diskibien, e teuas Jezuz.

Chom a reas en e-zav en o-zouez, hag e lavaras dezo:

— «Ar peoh ra vezo ganeoh!»

²⁰ E-ser kaozeal, e tiskouezas dezo e zaouarn hag e gostez. O weled an Aotrou e oe laouen-braz an diskibien.

²¹ A-nevez e lavaras Jezuz dezo:

— «Ar peoh ra vezo ganeoh! Evel m'e-neus va Zad kaset ahanon, me ho kas d'am zro».

²² Goude ar homzou-ze, e c'hwez warno en eur lavared:

— «Resevit ar Spered-Santel.

²³ « Ar re ho-po pardonet dezo o 'fehejou, e vezint pardonet dezo, hag ar re ho-po o dalhet outo e vezint dalhet outo ».

FEIZ TOMAZ

²⁴ Tomaz a-vad, unan euz an diskibien, an hini anvet Gevell, n'edo ket ganto pa oa deuet Jezuz.

²⁵ An diskibien all a lavaras dezañ :

— « Gwelet on-eus an Aotrou ! »

Med eñ a lavaras dezo :

— « Ma ne welan ket en e zaouarn ar merk euz an tachou, ma ne lakan ket va biz e toullou an tachou ha va dorn en e gostez, nann me ne gredin ket ».

²⁶ Eiz devez goude, edo adarre an diskibien en ti ha Tomaz a oa ganto. Jezuz a zeuas ; an oll doriou a oa serret ; hag eñ, en o-zouez, a lavaras dezo :

— « Ar peoh ra vezo ganeoh ».

²⁷ Goudeze e lavaras da Domaz :

— « Lak da viz amañ, ha gwél va daouarn, tosta da zorn ha lak anezañ em hostez ; paouez da veza diskredig, deus da veza dén a feiz ».

²⁸ — « Va Aotrou ha va Doue ! » eme dezañ Tomaz.

²⁹ Jezuz a lavaras dezañ :

— « Ablamour m'az-peus va gwelet az-peus kredet. Eüruz ar re o-deus kredet hep beza gwelet ».

³⁰ Stank eo ar burzudou all bet greet gand Jezuz dirag e ziskibien, ha n'int ket skrivet el levr-mañ.

³¹ Ar re-mañ a zo bet skrivet ablamour deoh da gredi eo Jezuz ar Hrist Mab Doue, ha ma helloh, o kredi, kaoud ar vuez en e ano (53).

Pennad XXI

JEZUZ EN EM ZISKOUEZ WAR RIBL LENN TIBERIAD

¹ Goudeze en em ziskouezas adarre Jezuz d'e ziskibien war ribl mor Tiberiad; ha setu amañ penaoz e tremenas an traou.

² Simon-Pèr, Tomaz lesanvet ar Gevell, Natanael euz Kana e Bro-Halilea, mibien Zebede, ha daou ziskibl all a oa asamblez.

³ Lavared a reas Simon-Pèr:

— «Da besketa emañ o vond».

Ar re all a lavaras dezañ:

— «Mond a reom, ni ive».

Hag ez ejont er-mêz, ha pignad er vag; med e-pad an nozvez-se ne bakjont netra.

⁴ Deuet e oa dija ar mintin pa zeuas Jezuz war an aot; an diskibien a-vad ne ouient ket e oa eñ.

⁵ Lavared a reas dezo:

— «Paotred, n'ho-peus ket a besked?»

— «Nann» emezo dezañ.

⁶ Lavared a reas dezo:

— «Taolit ar roued en tu dehou d'ar vag hag e kavoh».

E daoler a rejont, hag e oa kement a besked, ma ne oent ket evid o zacha ganto.

⁷ Neuze e lavaras da Bèr an diskibl karet gand Jezuz:

— «An Aotrou eo!»

O kleved e oa an Aotrou, e wiskas Pèr eun tamm dillad — rag en noaz edo — hag e lammas er mor. ⁸ An diskibien all a zeuas gand ar vag, o stleja ar roued leun a besked; n'edont

ket gwall bell diouz an douar: eur hant metrad bennag. ⁹ Pa oent diskennet en douar, e weljont eun tan glaou beo, ha warnañ pesked ha bara.

¹⁰ Jezuz a lavaras dezo:

— «Digasit euz ar pesked emaoñ o paouez paka».

¹¹ Simon-Pèr a bignas en-dro er vag hag a zachas d'an douar ar roued leun a besked braz, a oa anezo kant tri hag hanter kant; ha daoust dezo da veza ken niveruz ne oa ket roget ar roued.

¹² Jezuz a lavaras dezo:

— «Deuit d'ho tijuni».

Nikun euz an diskibien na grede goulenn outañ:

— «Piou out?»

Med gouzoud a reent mad ez oa eñ an Aotrou.

¹³ Neuze e teuas Jezuz, e kemeras bara hag her roas dezo, ha kement-all a reas gand ar pesked.

¹⁴ An trede gwech a oa da Jezuz d'en em ziskouez d'e ziskibien abaoe m'oa savet a-douez ar re varo.

AL LABOUR FIZIET E PÈR

¹⁵ Goude ar préd, e lavaras Jezuz da Zimon-Pèr:

— «Simon, mab da Yann, ha kared a rez ahanon muioh eged ar re-mañ?»

Respont a reas:

— «Ya, Aotrou, te a oar e karan ahanout».

Ha Jezuz dezañ:

— «Bez pastor va deñvedigou».

¹⁶ Evid an eilved gwech, e houlennas Jezuz outañ:

— Simon, mab Yann, ha kared a rez ahanon?»

Respont a reas:

— «Ya, Aotrou, te 'oar e karan ahanout».

Hag e lavar Jezuz, dezañ:

— «Bez pastor va deñved».

¹⁷ Evid an trede gwech, e lavaras:

— «Simon, mab Yann, ha kared a rez ahanon?»

Pèr a oa glaharet, o veza m'e-noa Jezuz goulennet outañ evid an trede gwech (54): «Ha karet a rez ahanon», hag a respontas dezañ:

— «Aotrou, te anavez peb tra; goud a houzoud mad e karan ahanout».

Hag e lavaras Jezuz dezañ:

— «Bez pastor va deñved».

¹⁸ «E gwirionez, e gwirionez, m'he lavar dit: pa oas yaouank, e lakees da-unan da houriz en-dro dit, hag ez ees d'al leh ma karez; med pa vi deuet koz, eh astenni da zaouarn, hag unan all a lako dit da houriz, hag a gaso ahanout d'al leh ne fell ket dit».

¹⁹ Kement-se e lavaras Jezuz evid rei da intent dre beseurt maro e tlee Pèr renta gloar da Zoue. Ha goude ar homzou-ze, e lavaras c'hoaz:

— «Deus d'am heul».

TESTENI AN DISKIBL KARET GAND JEZUZ

²⁰ O veza distroet, Pèr a welas o tond war e lersh an diskibl karet gand Jezuz, an hini e-noa, e-pad ar goan, soublet war e vruched ha goulennet outañ: «Piou eo an hini a zo o vond da werza ahanout?»

²¹ P'her gwelas e lavaras Pèr da Jezuz:

— «Hag evid hemañ, petra 'zigouezo gantañ?»

²² Jezuz a respontas :

— « Ma fell din e chomfe beteg ma teuin en-dro, petra 'ra an dra-ze dit? Evidout-te, deus d'am heul ».

²³ Diwar ar gomz-ze e savas ar vrud e-touez ar vreudeur ne varvfe ket an diskibl-se. E gwirionez, n'e-noa ket lavaret dezañ ne varvfe ket, med : « Ma fell din e chomfe beteg ma teuin en-dro, petra 'ra an dra-ze dit? »

²⁴ An diskibl-se a ro testeni euz an traou-ze, hag e-neus o skrivet, ha gouzoud a reom eo gwirion e desteni.

²⁵ Kalz traou all a zo bet greet c'hoaz gand Jezuz, ha ma vefent skrivet hini hag hini, ne hellfe ket ar béd a-béz, a gav din, rei plas d'al levriou a vefe réd skriva.

Notennoù aviel Sant Yann

(1) Al latin a lavar « Verbum » da lavared eo « Komz Doue ». Doue n'e-neus nemed eur « Gomz » hag eo e Vab. Dre ar Gomz-se Doue e-neus krouet ar béd (kement tra a zo). Dre ar Gomz-se e ro sklêrijenn da galon an dén. Ar Gomz-se eo a zo deuet da veza dén e Jezuz-Krist. E nebleh e-béd ne gaver eur seurt taolenn euz Mister Doue hag an Dasprenedigez. Marteze eo bet an dra-mañ, da genta, eur veulgan evid ar gristenien genta.

(2) Re all a dro: Ar re a gréd en e ano, eñ ha n'eo ket ganet euz ar gwad..., med euz Doue.

(3) Eñ n'eo ket Eliaz, emezañ; bez' ez eo koulskoude evel eun eil Eliaz. Jezuz eo hel lavar (Mark 9, 13).

(4) Ar Profet Izaiaz e-noa komzet euz eur « zervicher da Zoue » hag a en em leze da veza kaset d'ar maro evel eun oan, warnañ oll behejou ar béd? (Iz. 53, 7).

(5) — « ... An degved eur »: Peder eur diouz an noz.

(6) Sant Yann, en e Avel, a gomz aliez euz « va eur ». An eur-ze eo eur e varo hag e adsao da veo, an eur ma tle kas da benn ar pezh m'eo deuet da ober. En eur drei an dour e gwin, Jezuz a roio eur « sin », eur skeudenn, euz ar jeñchamant a zeuio er halonou dre halloud ar Spered-Santel hag a vo frouez e Zakrifis.

(7) Daou-ugent litrad pe wardro en eur muzuliad.

(8) Pa ra Sant Yann ano euz ar Juzevien, eo, aliez, euz ar re a nah komzou Jezuz.

(9) « An avel » hag « ar Spered »: an daou hér-mañ a zo ar memez hini er yéz a gomze Jezuz, evel ma oa ive e gresianed hag e latin.

(10) Gweled notenn 12 e Sant Vaze.

(11) An naer: skeudenn eun naer, bet savet gand Moizez er goueleh, pa zortias pobl Israel euz an Ejipt, a roe ar yehed d'ar re a zelle outi gand feiz. Evel-se ive Jezuz, staget ouz ar groaz.

(12) Muioh c'hoaz eged an avielerien all, e tiskouez Sant Yann ema erruet dija Rouantêlêz Doue. An neb a gréd a zo dija salvet. A hini ne gréd ket a zo kondaonet.

(13) Bro-Zamaria, etre Bro-Halilea ha Bro-Judea, a oa bet, seiz kant vloaz a-raog, hanter zalhet gand ar bayaned. Ablamour da ze, ar Zamaritaned, evid ar Juzevien, a oa hanter bayaned. Adori a reent ar memez Doue hag ar Juzevien, med war Menez Garizim, just a-zioh Puñs Jakob.

(14) En eur gomz gand ar Zamaritanez, Jezuz a ra dezi pignad a nebeudou euz prederiou an douar da Vister ar Spered-Santel a zeu e kalon an dén, hag a laka da ziwan ennañ ar Vuez peurbaduz.

(15) «Ar zeizved eur»: eun eur goude kreisteiz.

(16) Moarvad, ar pennadou 5 ha 6 a zo bet eilpennet evid eun abeg bennag. Rêd e vefe neuze lenn da genta ar pennad 6 a-raog ar pennad 5. Evel-ze e komprener gwelloc'h an hent heuliet gand Jezuz. Klota gwelloc'h a ra ive evel-se gand an avielerien all.

(17) «Ha bremañ eo dija»: Ar re a gréd e Jezuz a zo dija, koulz lavared, savet a varo da veo (Gweled not. 12).

(18) Doue an Tad eo a ro testeni da Jezuz, er Skritur-Zakr, hag ive dre ar burzudou a ra dre e halloud, ha dreist-oll e kalonou an dud a 'fell dezo selaou e vouez.

(19) Gand burzud ar bara kresket, Jezuz a ro dija eur skeudenn euz ar pezh e vo Pask Nevez ar gristenien: ar gwir vara a vuez, a gomzo anezañ goude d'ar Juzevien.

(20) «Lenn Jenezared»: Gweled not. 16 e St-Mark!

(21) «Eur stad»: Daou hant metr pe war-dro.

(22) Jezuz e-unan eo ar bara a ro ar Vuez peurbaduz. Kredi ennañ a zo debri euz ar bara-ze. Hag ar bara-ze eo a gaver e Sakramant an Aoter.

(23) «Va horv evid buez ar béd»: E gorr staget ouz ar groaz, hag e gorr prezant e Sakramant an Aoter en eun doare misterius.

(24) «Spered ha buez»: Kement-se ne hell c'hoarvezoud nemed dre halloud ar Spered-Santel, ha ne hell beza komprenet nemed ouz Sklêrijenn ar Spered-Santel.

(25) Tri houel braz ar Juzevien 'oa: Pask, ar Pantekost hanter kant devez diwezatoh, ha Gouel an Teltennou e Miz-Here... Evid ar Gouel-mañ, an dud a ree lochennoù gand bodou hag a veve enno e-pad eiz devez, e koun euz o dieubidigez diouz daouarn an Ejiptianed hag an amzer tremenet dindan teltennou e-kreiz ar goueleh.

(26) «E vreudeur»: Da lavared eo e gendirvi.

(27) «... dén ne ouezo»: Hervez eur gredenn hag a gaved e-touez tud a oa.

(28) Ar Spered-Santel ne dlie beza kaset d'an dud, nemed goude ma vefe peurechu e labour gand Jezuz, ha goude ma vefe pignet da azeza en tu dehou d'an Tad.

(29) «Ez On»: Ouspenn beza «Mab an dén» Jezuz a zo Doue. Bez' ez eo an hini a lavare da Voizez: «An hini a zo eo ez on».

(30) Beza Samaritan ha beza dalhet gand an diaoul a zo daou zismegañs grevuz war vuzelloù ar Juzevien.

(31) En e feiz, Abraham a oa leun a joa, ablamour d'ar promesaou e-noa Doue greet dezañ da venniga e ziskennidi.

(32) «Pare an dén dall» : Sant Yann e-neus skrivet an danevell-mañ gand nerz ha fent. Eun dudi eo he lenn. Ar gentel a-vad a zo pouezuz : ar sklêrijenn wirion ne deu nemed euz Doue.

(33) Ar pehed eo kredi e weler sklêr, hag evel-se nah reseo ar wir sklêrijenn digaset gand ar Hrist.

(34) «Deñved all am-eus» : Ar poblou payan hag a vo, d'ezo ive, prezeget an Aviel.

(35) «Gouel an Dedi» : hag a veze lidet e Miz-Kerzu, e koun euz an deiz, daou hant vloaz a-raog, ma oa bet sakret an Templ a-nevez, goude beza bet dizakret gand ar bayaned.

(36) «15 stad» : war-dro 3 km.

(37) «Me eo an adsav da veo» : Marta a grede e dasorh ar re varo da 'fin ar béd. Jezuz a respont dezi eo Eñ e-unan dija dasorh ar re a gréd ennañ.

(38) E-touez an diavêzidi, e oa meur a hini hag a oa gounezet da 'feiz ar Juzevien, hag o-doa zokén digemeret o giziou e-keñver ar Relijion.

(39) Jezuz a ouie mad e oa deuet e eur da zavetei ar béd, dre e varo war ar groaz, evid gloar Doue e Dad.

(40) An diaoul, an hini ma sent outañ ar béd dre ar pehed.

(41) «Gwalhi ho treid an eil d'egile» : Da lavared eo rei servich an eil d'egile gand izelègèz ha kalon vad.

(42) Hervez giz koz ar Juzevien an diskibien a oa astennet ouz taol war dorchennou, ha Yann moarvad a oa en tu dehou da Jezuz.

(43) An Hent da vond da Zoue ; ar Wirionez a-zivoud Doue ha Mister ar Zilvidigez ; ar Vuez peurbaduz evid ar re a gréd ennañ.

(44) «Eur Skoazeller» : Ar gêr gresianeg amañ eo «Paraclet». Jezuz a oa dija eur «Skoazeller» evid e ziskibien.

(45) «Deom a-hann» : amañ e tle beza moarvad geriou diweza Jezuz da lavared kenavo. Ar pez a zeu war-lerh a dle beza bet lavaret a-raog.

(46) Heñvel a-walh eo houmañ ouz eur barabolenn. An dén a gav pep tra e Jezuz : ar bara, ar sklerijenn, an hent, ar wirionez, ar vuez, an dasorh. Bez' ez eo ive ar winienn wirion a ranker reseo diganti ar vuez da helloud dougenn frouez.

(47) «Ar varnedigez» : Ar Spered-Santel a ziskouezo eo pehed chom hep kredi er Hrist, eo justis d'ar Hrist beza savet en tu dehou d'an Tad, hag eo Satan kondaonet hiviziken.

(48) « Pedenn Jezuz » : Jezuz a béd e Dad evitañ e-unan, evid e ziskibiñ a neuze hag ar re da zond, hag evid ma vo unanet kenetrezo ha gand Doue ar re oll o-deus feiz. Ar bedenn-mañ eo kaerra tra a gaver en Testamant-Nevez.

(49) « Eun diskibl all » : Yann moarvad. Pe marteze Mark, rag anavezet e oa an dén-ze gand ar Beleg-Braz.

(50) Difenn o-doa da antreal e ti eur payan. Prederiet e oant da zenti ouz ar poent-se euz al Lezenn, hag e keid-se e kondaonent eun dén just!

(51) Ar pennadureziou roman hepken a helle kondaoni d'ar maro. Ar gwir-ze 'oa o hini, ha war ar poent-se ne varhatent ket. Pilad a oar mad kement-se. N'eus ennañ a-vad nemed disprij evid ar Juzevien. Med souezet ha skoet eo gand Jezuz. Re a laoskentez a zo ennañ koulskoude, ha dre-ze eo e teuo ar Juzevien a-benn anezañ.

(52) « Eur gorzenn hizop » : Lod a lavar kentoh troad eur goaf, eul lañs, ar pezh a zo êsoh da gredi.

(53) « Kaoud ar vuez en e ano » : Evid an dra-ze eo ez eo deuet Jezuz; ha setu aze Rouantéléz Doue en he-féz... Amañ eo ema klozadur genta Aviel Sant Yann. Ar pezh a zo war-Ierh a zo bet laket ouspenn, nebeud diwezatoh.

(54) « Evid an trede gwech » : Pèr e-noa nahet teir gwech e Vestr. Jezuz a ra dezañ anzav teir gwech ive e garantez evitañ.

Achévé d'imprimer
sur les presses
de l'Imprimerie Régionale
29114 Bannalec
le 15 septembre 1982
Dépôt légal: 3^e trimestre 1982

Prix: 63 F.

